

KANNADIG IMBOURC'H

Niverenn 1

Genver 2000

Er C'hannadig...

- Notennoù Politikel
- Nevezintioù e buhez an Emsav hag ar broioù keltiek
- Obererezhioù kristen brezhonek (kemennoù, rentaoù-kont)
- Studiadennoù berr a zivout ar feiz ha buhez an liz
- Lennadurioù
- Korn al lizhiri
- Ha traoù all c'hoazh !

KOMZOÙ DOM HELDER CAMARA

"Dont a ra ur poent ma tle un den bezañ kalonek a-walc'h, ha zoken laouen a-walc'h, d'en em aozañ e pep sioulder, da zilestrañ e "Ti an Tad". Goulennomp ha degemeromp gras ar marv mat. Met kent-se goulennomp - ha degemeromp - ar c'hras da goshañ mat, eleze koshañ diouzh an diavaez hep koshañ diouzh an diabarzh. Krediñ a ran eo pouezus-kenañ reiñ testeni eus ur marv bevet evel derou ar vuhez wirion."


Dom Helder Camara, a oa aet da anaon d'ar 27/8/99 en e navgont vloaz. Lezanvet e oa bet "an eskob ruz" dre ma klaskas ivez lakaat ar re baour d'en em sevel ouzh ar re binvidik.

P.K.

Un tennad-hent nevez...

Gant Youenn Olier

P'emaomp bremañ er bloaz 2000 em eus soñjet e oa erru poent reiñ d'ar gelaouenn "Imbourc'h" ul lusk hag ur gefridi nevez. Ar menoz-se a oa o widilañ em spered abaoe un nebeut mizioù, ha meur a wech em boa klasket un atebeg nevez evit an dastumadenn-mañ. Abenn ar fin, goude bezañ soñjet kenderc'hel gant ar gelaouenn e-pad bloaz pe zaou, em eus goulennet gant Tepod Gwilhmod, bet skoliad da Bol Kalvez, ha bet o kenlabourat gantañ ha ganin-me abaoe ugent vloaz bennak, - a zo ur pennad amzer, - va amsaviñ e penn ar gelaouenn, nemet ne vo mui, diwar vremañ, ur gelaouenn a studi, hogen ur gelaouenn hollek a geleier hag a addisplegerezh d'an darvoudoù o tennañ da stourm an emsav brezhon hag an emsavioù keltiek, un addisplegerezh, avat, renet diouzh ar spered kristen a vez gant "Imbourc'h" abaoe an derou. Moulet e vo er gelaouenn, hiviziken, pennadoù harr liesseurt, a c'hello bezañ dedennus d'un niver a lennerien brasoc'h eget na c'helle bezañ ar gelaouenn a studi hon eus pledet ganti e-pad tregont vloaz.



Kannadig Imbourc'h bep pemzetez en ho pouest-lizhiri

Kannadig Imbourc'h, a vo talbenn ar gelaouenn ha dont a raio er-maez an aliesañ ar gwellañ : bep miz da vihanañ, a gredomp, hep re a zale. Tizhout muioc'h a emsaverion a vbennomp ober, ha kement-se en ur ziogeliñ ur vezañs kristen er stourm brezhon. Fiziañs hon eus e ray berzh ar renerezh nevez er par-se, en ur zispenn roudoù ar stourmerion gristen vrogar o deus dalc'het sonn banniel ar feiz en emgann evit ar vroadelezh hag ar yezh a-c'houde amzer Yann-Vari Perrot, warlerc'h Loeiz ar Floc'h, Per Bourdelles, Marsel Klerg, Armañs ar C'halvez, Gwilherm Dubourg, Youenn Souffes, savet ha renet ganto kelaouennoù hag oberennoù a bep seurt, *Studi hag Ober*, *Ar Bedenn evit ar Vro*, *Breuriezh Sant Erwan*, *Skol*, *An Unvaniezh Speredel*, *Oaled Sant Erwan*, *Emglev an Tiegezhioù*, *Barr-Heol*, evit menegiñ hepken ar re bennañ.

Tu a vefe, moarvat, da zezrevell istor ar strolladoù, an oberoù kristen emsavel hag ar c'helaouennoù brezhon kristen all o deus kemeret perzh en Emsav abaoe un hanter-kant vloaz bennak, ha peurgent, istor "*Kristenion Breizh*", "*Breuriezh Sant Ildud*", "*Unvaniezh Koad-Kev*" o deus kemeret lec'h ar strolladoù kristen a oa bet en o raok ; istor "*Imbourc'h*" ha "*Keneiled Imbourc'h*" e-unan a vefe da ober ivez, met ur mell labour e vefe kas hevelep trevell da benn er mare-mañ.

Pezh a lavarinn hepken eo arabat soñjal ez eo echu ervenn "*Imbourc'h*" evel kelaouenn a studi. Hor soñj, gant sikour Doue, eo trevekaat, diwar vremañ, ar c'hevala hon eus dastumet a-hed tregont vloaz, oc'h adembann, e stumm levrennoù, oberennoù bet embannet a bennadoù distag er gelaouenn "*Imbourc'h*", re hor c'henlabourerion evel Jil Ewan; Yann Mikael, F. Kerrain h.a., hep kontañ an "Notennoù Politikel", ha kement-se war-bouez moulañ peder levrenn a zaou-c'hant pe a zaou-c'hant hanter-kant pajennad bep bloaz ; e-touez al levrennoù-se e vo ka-

(gwelout pajenn 2)

(diwar ar bajenn 1)
vet lod bloavezhioù eus ma "Deizlevr", skridaozet betek
ar bloavezh 1965 (ar bloavezhad 1960 a zo deuet er-maez
en deizioù-mañ), koulz hag adembannadurioù oberoù all
evel Enez ar Vertuz pe Posaniou-Spered an Tad GwazDoue.
An niverennoù arbennek-se a zeuio er-maez evel stagadennoù
d'ar gelaouenn ordinal "Kannadig Imbourch" hag a vo
kaset da izili "Emglev an Tiegezhioù" o devo paet ur skodenn
a 250 lur. Ne vo ket mui a adskodennoù enta evit ar
stagadennoù: pep komananter a resevo ar c'hannadig hag
ar stagadennoù.
Moaivat e kompreno an emsaverion pegen pouezus eo al
labour a zo da seveniñ c'hoazh: Arabat e ve dinerzhet ar
strivadenn a zo bet renet ganecomp e-pad un drederenn
gantved.
Youenn OLIER

Meret eo IMBOURC'H a-benn bremañ
gant "EMGLEV AN TIEGEZHIOÙ".
Skodenn : 250 lur war anv "EAT" Kergre-
ven 29800 Trelevenez.
http://www.egroups.com/group/
brezhonegeniliz/
Niverusoc'h-niverusañ eo an dud o deus ur chomlec'h elektro-
nek. Ur c'hlaoustre ouzhpenn eo ar Genrouedad evit an Emsav :
un dachenn-emgann ouzhpenn ! Ur chañs eo ivez evit lod ac'h-
hanomp dre ma c'heller kaout dre ar Genrouedad darempredoù
liesseurt e brezhoneg ha krouiñ evel-se ur meni buhez kevredigezhel
d'hor yezh. A bep seurt traoù a c'heller ober enta adal
bremañ e brezhoneg war ar genrouedad : komz a rimp diwaez-
hatoe'h eus se a bennadigoù er C'hannadig.
Nevez 'zo hon eus diazezet ul lec'hienn evit brudañ muioc'h ar
pezh a vez graet e brezhoneg war-dro ar vuhez kristen : ret eo
mont e-barzh servijoù an « Egroups » ha goulenn
« Brezhonegeniliz » : alc'hwez hol lec'hienn eo, tra maz eo
« Petranevez » hini ar « forum » brezhonek brasañ war ar gen-
rouedad.
Penaos ez a en-dro ? Lakait ho chomlec'h elektronek ha kaset e
vo deoc'h keleier a denno d'ar vuhez kristen e brezhoneg : ofe-
rennoù, embannadurioù, bodadegoù, kendivizoù etre darempre-
derien al lec'hienn, hag all... Tu a zo ivez da leuniañ deiziatier
al lec'hienn ha goulenn digant an urzhiataerez kas keloù da izili
al lec'hienn un nebeut devezhioù a-raok an darvoudoù...

DARVOUD PENNAÑ DI-
BENN AR C'HANTVED
Boaz eur er mare-mañ da sellout ouzh an
amzer dremenet abalamour d'ar bloaz
2000 a zo o kregiñ. An neb a garo a
c'hello skrivañ deomp da lavarout pe
hini eo an darvoud pennañ eus ar c'hant-
ved. Diskar moger vBerlin, a zo unan
anezho d'hor soñj, a ziskouezas anat pe-
naos e voe penn-kaoz an Iliz da zrouzi-
wezh an URSS drezo :
1978 : dilennidigezh die'hortoz a-grenn
ur Pab poloniat;
1980 : emsavadeg, micherourien
Gdansk, harpet gant an Iliz ;
1989 : dismantridigezh al liammoù etre
URSS hag hec'h adrioù da diskar ar
Voger ;
1990 : adunvanidigezh Alamagn .
1991 : diwezh ar gomunouriezh en
URSS.

LA MARCHE DU SIECLE
Ur pennad mat a amzer zo tremenet
aboae a oa e bal, a-hervez, ober brud
d'ar yezhoù tebet rannvroel. Bodet e oa
bet, a-gevret war al leurenn, tud a bep
seurt, stourmerion evel Lena Louarn hag
ur beleg euskarat, housarded ar Republik
Gall ha Santel, Unan ha Dirannadus evel
Gallo, Seguin hag unan bennak all...
Kaer e voe gortoz ne zivanas mennozh
spañn ebet diwar ar vreurtedeg-se, dreist-
holl digant ar re a oa sañset difenn ar
yezhoù 'bihan'. Ne oa ket kendrec'hus ar-
guzennoù ar beleg euskarat, diouzh un
tu, dre ma n'eo ket mui stank implij ar
yezhoù 'bihan' er C'hwec'hkogn, abala-
mour d'ar stad m'emañ : toc'hor, er-
maez a implij, koulz-lavaret. N'hellomp
ket mui en em harpañ war seurt arguzen-
noù.
Diouzh un tu all, unan eus housarded ar
Republik a stignas mat ar gudenn, a gav
deomp : Hollveziadelezh ar yezh Chal-
lek a empleg hini ar C'hultur gall, hag
hini istor Bro C'hall enni (An derc'ha-
viant -pe ar c'hultur ma karit- a zo
frouezh an istor).
An Dispac'h Gall eo ar barr ubelañ eus
an Istor-se, gant "Diskuliadur Gwiriou
Mab-Den", bet embannet gant diazeze-
rion ar Republik Gall kentañ.
Aes e oa respont koulskoude da sarnon
vertuzas Monsieur Gallo. Ne oa nemet
kregiñ e levr Roparz Hemon ha lenn di-
rak an dekmilionoù a C'hwec'hkogniz,
peget o fri ganto ouzh skramm ar skin-
well, ar pennad "Breizh hag ar Bed" da
ar Filozofañ, hermañ o vezañ ar gwir
ar Filozofañ. Setu aze dres ar gudenn :
Ned eo ket ar galleg yezh ur "vroad"
hepken, unan ordinal lakaomp, met yezh
ar vroad dilennet nevez, an hini a zo bet
fzriet enni ar wirionez, hini Doue ar Filo-
zofañ.
Ar galleg a zo yezh ar "Filozofañ", yezh
ar re a venn ansavijñ Templ Jeruzalem a
wechall gozh : kemer lec'h ar relijion
gozh ha c'hoari ar roll a aotrouniezh spe-
redel a oa gwechall hini an Iliz er gevredigezh.
Moaivat, gouez da Gallo', e c'hellfed
reññ un tamm deskamant elfennel eus ar
yezhihoù lec'hel, met arabat e ve mont re
bell ganti abalamour ma vefe ar vugale e
H.K.

Kenskrivit !
Skridaozerezh ha koumanantoù :
Imbourc'h, Kergreven, 29800 Trelevenez.
Pellgomz : 02 98 25 10 72
Postel : imbouch@wanadoo.fr.
Plr : 02 98 25 18 87 (gervel a-raok kas)
Skodennoù 250 lur ar bloaz, kannadig ha
stagadennoù. Kasit deomp anvioù ha
chomlec'hioù an dud a garfec'h e veje kaset un
nebeut niverennoù dezho. Ar pennadoù ne
enouestlont nemet o aozerien. Meret eo
Imbourc'h gant Emglev an Tiegezhioù a zo ezel
eus Kuzul ar Brezhoneg.
Rener ar gelaouenn : T. Gwilhmod
CPPAP : 50015 Diskleriet hervez lezenn.
EMVOD-VEUR EMGLEV AN TIEGEZHIOÙ
ROSTREN, 19 A VIZ KERZU 2000
Emglev an Tiegezhioù a zo ur ge-
hent ar feiz, hini ar Vro hag ar
vredigezh a zo bet savet gant Yann
yezh. Setu ar burev a zo bet dilen-
Ar Beg, Job Morvan, Youenn net :
Souffes hag Alan Al Louarn e
Kadoriad : Yann Talbot
1970. Mennad ar gevredigezh a oa
Sekretour : Yann-Erwan Haspot
Sikour an tiegezhioù da sevel o bu-
Teñzorerezh : Nadine Gwilhmod
gale gant ur spered kristen hag e
Da heul Emvod-Veur EAT e oa ao-
brezhoneg. Labour vat a zo bet
zet un Oferenn vrezhonek, a voe
graet ganti d'ur poent ma ne oa ket
kenilidlet ganini, an Aotrou Blan-
c'hoazh eus DIWAN. Obererezh ar
chard hag an Aotrou Motrev, da
gevedigezh a zo aet war-zu ar
beññ evit an dud o deus stourmet
c'hatekizañ e 1988 dre ma santet
an ezhomm war ar poent-se. D'ar
drezhoù ar bloaz 2000 eo bet divi-
kous euz ar bri a zougomp da skouer
an Aotrou Perrot.
zet eta gant EAT ober war-dro IM-
BOURC'H ivez, a vo hiziviken ke-
gavet an dud, un ugent bennak, e
laouenn ar gevredigezh, ur ge-
laouenn a geleier hag a breder, ul
bital Rostren, da varvailhat hag es-
lienn etre ar vrezhonegerien gris-
kemm war geleier an Emsav.
Renner ar holl dud " a volentez
Yann Talbot
vat " a glask mont war-raok war

BLOAVEZH
MAT DEOC'H
HA D'HO TUD !
Bodadenn miziek Breuriez Sant Ildud a vo evel boaz da
drede sul ar miz e Kistinid d'ar Sul 16 a viz Genver. Oferenn da 11 eur.
Evit ar pred e ranker lakaat e anv o pellgomz d'an 02.97.39.71.15.

"STOURM A RAN WAR BEP
TACHENN"
Daoust ha lennet hoc'h eus al levr
kaer-se a zo bet moulet gant
"Mignoned Añjela" ?
Talvoudus em eus kavet anezhañ rak
klask a ra an aozerien anezhañ
diskouez deomp personelezh ar
varzhwez-mañ a Vro Dreger.
Ar personelezh-se he deus dispaket
deomp dre he barzhonegoù, a dra-sur,
met ivez ha da gentañ-penn dre he do-
are da vezañ gant an dud
he deus kejet ganto, goude
bezañ adkavet "teñzor ar
yezh", ur benveg bet kem-
pennet a-zevri gant Roparz
Hemon hag embregret gant
ampartiz gant barhez
Traoù an Dour.
"Stourmet he deus di-
baouez evit lakaat hec'h
oberoù da glotañ gant he
menozioù ha kavet he deus
eürusted o reiñ he buhez d'ar re all..."
eme Ronan ar C'hoadig deomp e
deroù e studiadenñ bish diwar-benn ar
vaouez-se ken priziet gantañ, hi hag a
skrivas da skouer :
"C'hwi 'oar mat Aotroù pere eo ar
pallioù a glaskan tizhout, peogwir eo
C'hwi hoc'h eus o diskouezet din : ar
Feiz, ar Vro, Douar ar Vro."
Na kaerat diverra eus he buhez !
Kreñv e oa feiz kristen
Añjela, ur feiz bet dege-
meret war varlenn he
mamm, he deus donaat a-
hed he buhez hag a zo e
diazez kalz eus he
barzhonegoù. Setu amañ
unan anezho .
Derc'hent an 12
Kerzu
Emaon amañ er c'hlañdi,
en-dro din klemmoù
Endro din anken ha displi,
rec'h ha huanadoù
Emañ amzer an Azvent
Er-maez e yud ar gwent
Kantren a ra va spered terzhiennek
e gwenedennoù an evnor
En Hentoù don Sant Kaourintin
M'hoc'h eus gounezet kurunenn
ar Verzhierint.
O, Breizhad Meur, ho pet soñj
Eus hor souldarded toullbac'het
Gant ar gwasker a-viskoazh
O fec'hed a zo ken bras ???
Kredout c'hoazh karout Breizh
Kredout c'hoazh strivañ
gant o ijin hag o nerzh
d'He dieubiñ !
D'he digabestrañ da vat
ma vezimp mestr er gêr
Hor sikourit Tad mat
Da gaout Spi en Trec'h
Gant skoazell Itron-Varia Koad-Kev
Amen



NOTENNOÙ POLITIKEL

Trouz a-walc'h a zo bet graet gant paotred ar Wask en-dro da skrapedigezh tonennadoù danvez-tarzh e Plevin e Kreiz-Breizh, ha lakaet e voe an dra-se war gont an ARB hag an ETA. N'eo ket evit abegoù politikel e ranker bezañ a-du pe a-enep ar feulster en degouezh-mañ - daoust ma ranker notañ siwazh ez eo efedus ar feulster a-wechoù... - hogen evit abegoù divizek ha relijiel ivez, evel ma ra Kembreiz a-benn ar fin.

Souezhus eo ne ra ket ar yoc'hstlenn an diforc'h etre an ARB hag an IRA pe an ETA : ar re-mañ o deus sevenet drouklazoù stank tra m'o deus diwallet mat betek-hen ar strolladoù breizhat a lazhañ pe a c'hloazañ. Kement-se a zo a-bouez-bras d'hor soñj, zoken ma ne vez ket merzet gant an darn vuiañ eus an dud ar preder-se a vez gant paotred ar strolladoù dirgel brezhon abaoe an derou.

Daoust hag eñ en deus ar Stad C'hall diskouezet, na pa vefe nemet ur wech, un tamm bri ouzh an dra-se ? Tamm ebet ! Ar Stad C'hall e-unan n'he deus tamm divyez ebet : ret eo dezhi lakaat an dud da grediñ - nebeut pe nebeutoc'h ! - he deus unan, met evit gwir n'he deus hini ebet. Gwallfeuket e c'heller bezañ da skouer gant doareoù divalvañ ar gerreizh politikel c'hall a harz hag a vac'h an "diskredidi" hep prouenn ebet, evel ma veze graet en amzer an Dispac'h Gall. Ar gwazerezhioù stadal evel an DNAT a denn a-walc'h d'ar "GAL", nemet eo kuzhet gwelloc'h o doareoù betek-hen. Paddal, n'int ket disheñvel bras diouzh re ar strolladoù dispac'hel ez int mennet da enebiñ outo (gwelout afer ar "Paillettes" da skouer). Ar Stadoù o-unan ne zalc'hont da reolen divizek ebet, na zoken d'al lezenn : aze emañ ar wirionez.

Ret-mat eo avat d'ar Stad C'hall kas d'hor milin un nebeut bruzhunoù da valañ rak tamallet garv e vefe neuze ma ne c'hellfe ket prouñ d'ar bed he deus klasket saveteiñ ha gwareziñ hor yezh hag hor sevenadur. Ya : reiñ a ra deomp bruzhunajoù : skoaziadoù a bep seurt, 'keta, a zo dreist-holl evitañ un digarez d'hor c'habestrañ gwelloc'h dre an arc'hant a "ro" deomp hag ar reolenadurioù-stag, diniver, a fed kontouriezh, tellou ha taosoù, sevel teuliadoù da c'houlenn an aluzenn, hag all...

Manifestiñ ha goullenn, aspediñ ha... spiañ atav a reomp dalc'hmat "Galvaden Garac" a zo unan eus an taolioù arnod niverus a ra an Emsav a-benn hejañ ar yev pouner a zisparti ac'hanomp diouzh ar c'hedveno. Lennet hoc'h eus war ar c'habetennoù, dres a-raok bac'hidigezhioù an DNAT (afer an ARB) keloù mat an intrudu-mañ a vod, ur wech ouzhpenn - ret eo lavarout - holl gostezennoù an Emsav a-benn pouezañ war ar gouarnamant ha ma vefe graet ar pezh a nac'h abaoe keit-all. Diaes eo kompren penaos ne c'hoarvez ket ar memestra e Breizh hag er broioù all : Kembre, Skos, Euskadi... e-lec'h ma kaver unvaniezh a-walc'h etre ar c'hostezennoù emsavel, ha se en un doare padus, a-benn gouñid ur plas a-bouez paz aer war ar renk evit ar votadegoù.

Setu amañ anv ar re o deus roet lañs d'an afer : GRALL Charlie, AR BEG Loeiz, JACQ Angele, PERAZZI Jean-Charles, JAKEZ Fulub, KERNEIS Yann-Fañch, BERNARD Jakez, BOCCOU pascal, ROBIN Jean-Dominique, KERVELLA Riwanon, GAUTIER Gérard, POIRIER Claudie, TROADEG Christian, KERNALEGNET Daniel, MELL Fulub, LAVANANT Andreu, BOCQUENET Loeiz, GRANVILLE Emile, MEVEL Jean-Yves. Mat e vo d'an holl degas e anv eta ha kas e anv da : Bretoned evit an

Demokratiezh, BP 103, 29833 KARAEZ Cedex. Met soñjit ervat er sturienn-mañ : «Ober pep tra evit dont a-benn, hep gortoz re daoust da se», rak a hend all ne viot ket pell da zigalonekaat !

Mont a reomp faezh gant seurt argerzh : gwelloc'h e vefe ma rafe ar Stad C'hall brezel deomp en un doare digor hag anat. Skoazell a zeufe deomp a bep tu eus an estrenvro ha kalz a dud e Breizh a savfe o c'heñ evit klemm ha reiñ d'hor bro ar pezh a zo dleet dezhi.

Un nebeut devezhioù goude ma oa bet lakaet Lena Louarn a-wel d'an holl evel «Breizhadez ar bloaz» e voe bac'het holl vurev politikel Emgann ha kemeret urzhiaterez pennañ ar gelaouenn Bremañ. Evit gwir, politikerezh ar Stad C'hall a zo lezel hor yezh da zizeriañ bepred, hantervougañ hor skolioù dre a-bep seurt doareoù ober, broudergadiñ an Emsav evit hor c'has da ober fazioù (evel seveniñ gwalldaolioù). Met e degouezh Emgann ha Bremañ e verzer mat emaoimp atav dindan reolenn al "lettre de cachet" evit herzel pa vez anv a herzel stourmerion 're' oberiant hag a garfed diskar. N'eo ket peogwir e oa bet savet Ofis ar brezhoneg ne oa mui a enebiezh ouzh "paotred ar brezhoneg". Ar c'hontrol e oa : seul vui ma c'hounez an Emsav un tamm tachenn e oa : levezon war ar gevredigezh e Breizh.

Daoust da gement-se holl ez eo arabat deomp mont war hent ar feulster, rak diwar vremañ ned eo nemet un trapad a zo stignet deomp gant mistri ar galloud. Betek ar bloavezhioù 80 e oa tu c'hoazh d'an unan kredif e vije kavet marteze e-touez renkad ar gouerion - a reuzie ouzh un enkadenn armerzhel ha n'eo ket chomet a-sav betek-hen - danvez emgannerion stank a-walc'h, seul vui ma oant c'hoazh ur c'halz anezho chomet disheñvel mat c'hoazh diouzh ar patrom gall, dre o stuzegzh g'ouzat-kristen hag dre o yezh, e komog ar vro da vihanañ. Er bloavezhioù 60 - 80 eta e oa broudet ar vroadelourion gant degouezh ha skouer an emsavadeg aljeriat. Ouzhpenn-se -ha se a glever c'hoazh !!!- e kreded ez afe ar brezhoneg da get a-grenn ma steuzfe ar rannyezhoù dirak lanv ar galleg : ar sevenadurezh poblek a seblante da lod bev-buhezek, ar relijion gatolik en hor bro o vezañ un elfenn hollbouezus anezhi.

Deizlevr Youenn Olier er bloavezhioù 60 a verk mat e kreded neuze e oa ret-holl - ha didec'hus e oa sañset - implij ar feulster evit tizhout paliou an Emsav. Hogen adal ar bloavezhioù 80 ez eo bet sklaeroc'h-sklaerañ bemdez e kolle ar stourm dre ar feulster e ster dre ma oa bet kollet emgann ar rannyezhoù a oa barnet d'ar marv. Hor yezh n'eo ket mui "yezh ar bobl". E keit-se e oa o fizeñañ ivez ar feiz kristen a lakae un diforc'h don etre gwerin Vreizh hag ar bobl bolitikel gall.

Ne chom ganeomp hiziv eta nemet ur bobl politikel brezhon da adsevel. Kement-mañ avat n'en devo ur ster nemet ma kemerer da ziazez an talvoudoù ma oa diazezet warno ar veriner a ergentaou. Ar brezhoneg a rank dont da vezañ yezh ur gevredigezh nevez o'n em sevel e Breizh : dre ret e ranko bezañ disheñvel diouzh an hini gall, dre he zalvoudoù...

War bouez un implij arouezel eus ar feulster eta - evel tarzhadenn monumant ar Vezh e 1932 -, un implij 'zo eus ar feulster a zo atav war var da wariañ mennadoù an Emsav e-unan, da vihanañ ar mennadoù a glot gant ar feiz hag an g'ouezuriezh kristen.

Yann Mangevan

KANNADIG IMBOURC'H

Niverenn 2

C'hwevrer 2000

8 pajennad

En niverenn-mañ :

Kentoc'h eget dont er-maez bep pennezet evel ma oa bet kemennet en niverenn gentañ e kavomp gwel kreskiñ niver pajennoù ar c'hannadig.

Lennadenn vat deoc'h !

NEVEZ-DEUET
ER-MAEZ : « 15 kant-ved a vuez kristen e Penn-ar-Bed »

Ul levrenn 130 pajennad - skeudennaouet kaer-tre evel-boas, nevez embannet gant Minihé Levenez 29800 Trelevenez (75 lur). De-zrevell buan-ha-buan istor eskopti Kemper ha Leon adalek ar Vvet kvd betek hiziv eo pal al levr. Ul levr-istor all a zo deuet er-maez c'hwec'h miz 'zo : doare brezhonek levr-istor Loeiz Elegoed. Al lennerien a garo a c'helllo kas deomp o evezhadennoù goude bezañ o lennet.

AL LANV DU : ADARRE !

Kregiñ fall a ra ar milved : 22 vloaz war-lerc'h afer an Amoko en em gavomp adarre gant ul lanv du a saotr ar mor hag hon aodou... ha gant ur Stad atav ken dic'houest da gemer an disenteziou ret. Gwelet hon eus pegen diefedus eo bet an dro-mañ c'hoazh... Gwelet e vo ar bloaz-mañ avat pegen barrek e vez evit en em zizober eus arc'hadurioù hon emsav : war ar c'harfoù evel « Diwan » hag ar Garta da skouer. E keit-se, dre e'hras Doue, ez a an traoù war-raok war dachennoù 'zo, evel hini ar skinwel, gant raktres TV BREIZH a vo sur-mat an darvoud a-bouez ar bloaz-mañ.



Al lanv-du e Baz-

T.G.

AR GORVENTENN VEUR

Den ne oa en gortoz er C'hwec'hkogn moarvat, eus ar seurt drouziwezh a zo c'hoarvezet e kornogeuropa etre Nedeleg ha deiz kentañ 'r bloaz, deroù - sañset - an trede milved.

Moarvat e vefed tentet a-walc'h da zevezañ ar seurt kevergoll evel ur gemennadenn a-ziwar-laez. Arabat eo d'ar festerion berrboell ha divore'hed kredif emañ an Aotrou Doue o kousket en Neñvou, 'keta ?! War ar marc'had e c'hello unan en em c'houlenn ha dleet eo d'an dargouezh rik troioù 'zo eus ar chevergoll-se : gwastet liorz-veur ar Roue Loeiz XIV, mekaet bolz Panteon ar c'hallaoued, skubet kuit milin Valmy a arouezie gourzrec'h an Dispac'h gall (un emgann tasmanoù hag a zleas e zisoc'h d'ur c'henemgleg kuzh etre frankasoned, war a gonter), hag all...

Hogen ne lavaromp ket ez eo bet kastizet ar c'hallaoued : kalz gwashoc'h - a fed kevergoll - a zo en em gavet e Turkia hag e Venezuela nevez 'zo. Evit

Kevergoll : catastrophe

(gwelout pajenn 2)

(diwar ar bajenn 1)

gwir ne gredan ket e kastiz Doue met hepken ez eus aze ul lakadenn war ziwall, unan dizrouk e-keñver ar pezh a zo c'hoarvezet hag a c'hoarvezo c'hoazh : arabat d'ar riezoù magañ re a lore'h diwar o galloud.

O chom e rez an douar ez eus evelato meur a gentel da dennañ eus ar gortventenn he deus espermet Breizh ar wech-mañ : aet eo ar c'hallaoued tre en un hent dall o klask kreizennañ ar gremm penna-denn d'ar Stad piaouet ganto, evel m'o doa a ziagent kreizennet o amaezhierzh.

Bresk eo e gwirionez ar c'hreizennou-kenderc'h gremm nukleel. Ken bresk all eo ar rouedad-dasparzhañ anezhañ. Ra soñjor pegen aes eo bombezañ ha distrujañ kreizennou a seurt-se en ur brezel (diskiant e vefe, lakaomp, met ur brezel en amzer da zont a vo renet gant tud foll rak enebour ebet ne zlefe c'hoantaat ren war ur gouelech !) Hogen petra a c'hellfed ober a-enep d'un enebour a c'hellfe seizañ pourchasadur ar gremm o kas da get un nebeut kreizennou-kenderc'hañ ha -dasparzhañ evel ma reas ar gortventenn... dall ?

Moarvat, peogwir emaoamp e kreiz ar peoc'h e vo tu da wellaat d'an drasterezh buan a-walc'h. Hogen pezh a zlefe reiñ da gompren an drouzivezh-mañ eo ez eo hor sevenadur ken diasur he c'hempouez hag hini ur biramidenn diazezet war he beg, evel ma lavar Jil Ewan. Ret e vo, e Breizh da vihanañ, klask andonioù gremm nevez a vo dazlec'hiet penn-da-benn d'ar vro ; e Kernaou da skouer ez eur krog da ziorren ur reizhiad avelrodoù a zlefe pourveziñ da ezhommoù tredan ar boblañs ; dre ar plakennoù voltaek e c'heller ivez kenderc'hañ tredan ; eleze, ar muiañ ma c'heller e tleer diouerñ ar servijoù a zo reoliet gant ar Stad pe veurembregerezhioù hollvedel.

Ur gentel diwezhañ. An emsaverien ne zlefe ket dibenniñ o obererezh diouzh ar skorenoù a vez damaouet gant ar Stad... a c'hell o mougañ neuze pa gar, dre o nac'hañ outo. Deuent eta da vezañ moulerion o-unan ; savent ha kempennet o-unan o ziez, o stalioù ha me'oar' me. Dav eo deomp kemer hor frankiz armerzhel hon unan hep gortoz damant hor mistri a ra van d'hor boueta a-benn hol lezel da zizeriñ betek ar marv pa vo deuet, d'o soñj, ar mare.

Y.O.

KEMENNOÙ A BEP SEURT :**Niverennoù kozh Imbourec'h**

Marteze e karfec'h klokaat ho tastumadenn « Imbourec'h, Kelaouenn a Studi » ?

Skrivit deomp da c'houlenn an niverennoù a ra diouer deoc'h.

Levrioù a liderezh BARR HEOL : Fiziet eo bet ennomp nevez 'zo skouerennoù eus al leksona-lioù evit ar bloavezhioù A, B, C, ha levrioù-liderezh all bet troet gant Klerg. Ar re a garfe kaout skouerennoù anezho n'o deus nemet hel lavarout deomp : ar mizoù-kas o do da baeañ hepken.

Emvod miziek E.A.T. ha B.S.I. : D'ar Sul 20/02 e Kistreberzh e ti Y. Olier da 14 eur 30. Lakaat e anv o pellgomz d'an niverenn 02.97.26.11.13. **D'an 20 ivez, Oferenn e brezhoneg gwened** da 11e 30 e chapel Sant Matelin (trede sul bep miz).

« **Petra din-me ?...** » Unan eus hor c'houmananterien a c'houlenn penaos e vefe lavaret, da skouer : « Cet homme est un des *espoirs* de l'équipe de France » e brezhoneg. Gortoz a reomp kinnigoù.

Un nebeut reizhadennou d'an "Deizlevr 1945, miz Genver", embannet war niverenn 356 "Imbourec'h, kelaouenn a studi".

En ur adembann, goude bezañ he c'hempennet, testenn an deizlevr-mañ deuet er-maez evit ar wech kentañ e 1975, ez eus bet silet un nebeut fazioù a garfemp reizhañ diouzhtu evit lennerion ar gelaouenn-mañ.

War ar bajenn 3, en traoñ, ez eo meneget an **Aotrou Lepetit**. E gwirionez e ranker lenn Arthur, unan eus renerion an "Ouest-Eclair" e-pad ar brezel. Dimezet e oa an Aotrou Lepetit avat gant ur verc'h Arthur ; a orin elzasat e oa an aotrou Lepetit, daoust d'e anv, hag alamaneger avihanik. Ur stael en doa en un embregerezh a vetalouriezh elzasat, ma ne fazian ket, dezhi burevioù e Roazhon, hag eno e oa bet gopret va c'hoar Claire evel sekretourez e-pad ar brezel.

P.50.E-lec'h "he merc'hig" e ranker lenn "he mabig". Anv a zo en arrouden-mañ eus "Yann", trede mab Jord ar Mee ha Mari Milin. En destenn orin eus 1975, e oa merket "gwidoro'h", am eus deveizet war an taol hep teurel evezh. Merc'h diwezhañ Jord ar Mee ha Mari Milin e oa Nannig,

(Lenn pajenn 5)

ISTOR AR JENERAL PINOCHET**Gant Y. Olier**

Abaoe daou vloaz bennak emañ ar Jeneral Pinochet dalc'het prizoniad e Bro-Saoz, ha bep amzer e veze anv a zaskoriñ anezhañ da varmerion spagnat a venne ober e brosez evit an holl dorfedoù a oa bet kaset da benn e Chile dindan e ren, goude m'en devoe kemeret ar galloud dre un taol-strap e 1973. un dispac'h en doa graet trouz d'ar mare-se.

Disul 16 a viz Genver e sellen ouzh ur film - saoz, a gav din, - a oa gouestlet d'e vuhez ha d'e bersonelezh, ur film a oa diuntuek a-walc'h da welout, hep mont betek lavarout ne c'helled tamall netra d'ar jeneral. Displegañ a raed dreist-holl ne oa ket bet mennet nag urzhiet an dispac'h-hont bet kaset da benn neuze, gant Pinochet e-unan ; ne oa bet eus ar jeneral, en degouezh-se, nemet labourer an unnekvet eur, rak da gentañ e oa rnanet feal ouzh an Arlevier sokialour Allende, tost betek an diwezh ; nemet, dres, evit mirout, marteze na ve tamallet dezhañ e glouarded kentañ, hag a-benn chom hep en em gavout sujet d'ur c'hedvilour bennak, en doa ar jeneral en em zifretet en ur stumm ouesk hag akuit a-walc'h evit skrapañ, en e c'hounid, an hollc'halloud er Stad. O tiskouez bezañ taeroc'h eget an iriennerion o-unan a oa bet e deroù an dispac'h, e oa deut a-benn da zistroadañ e gevezerion ha da virout evitañ ur veli bersonel. Diazezet en doa ur Gerreizh-Diogelroez politikel, an "DINA" a dizhas ur gwallvrud eus ar spouronusañ, un aozadur-moustrañ braouac'hus, nemet efedus-dreist, akedet ganti skarzhañ kuit an danvez-eneberion eus ar gostezenn gleiz varksat dre an drouklazherezh, oc'h arverañ ingal ar bouevierezh gant ur c'hreizder gradus ha vil, ur c'hreizder a zo azonus. A-hend-all, eus ar brezelioù-diabarzh a zo c'hoarvezet abaoe deroù ar c'hantved-mañ etre sokialourion varksat ha mirourion hengounelour, diwar goust an eil kostezenn pe eben a bep eil. Ho pezet soñj eus implij ar bouevierezh gant an arme c'hall e-pad brezel Aljeria, ha penaos e oa ar jahinerezh reolet gant al lezenn en Israel betek nevez 'zo

Ken pell ez eas an DINA war hent ar muntrezezh, ma kredas oberiñ war diriegezh ar Stadoù-Unanet, ken e c'houlennas levrierion ar Riez-se e ve divodet an aozadur-moustrañ dirgel-se. Ret eo lavarout e plegas ar jeneral Pinochet da arc'hadenn ar gouarna-

mant amerikan en drovezh-se ; gwir eo ivez e oa bet skoazellet a-zevri gant ar Stadoù-Unanet da gemer ar galloud ha da adurzhiañ ar vro warlerc'h an dispac'h.

Pinochet avat ne oa bet harpet hepken gant an Amerikaned - heskinet o freder bepred gant gwalldasmant Castro, - hogen ivez gant ar Saozon o doa gelllet kontañ war e sikour da geñver brezel an Inizi malvinat. Forzh penaos, ne oa ket eus ar jeneral un dispac'her gwirion, dezhañ mennadoù start da seveniñ war hir amzer, ha termenet gantañ ur gelennadurezh politikel. N'ouzon ket hag embannet en deus biskoazh un obereñ m'en dije klasket enni displegañ e vennoziou politikel. Dre zegouezh e oa en em gavet e penn ur galloud enepmarikat, ha n'en doa graet e levrierezh, a-c'houdevezh, nemet lakaat er pleustr damkaniezhoù an armerzhourion amerikan frankizour, gant berzh awalch, peogwir ez eo bet diorreadur ar vro, herc'ez ar pennaennoù frankizour-se, ur seurt dedalvezadur skouerel anezho.

A-benn ar fin e vo bet roll ar jeneral Pinochet e Chile par a-walc'h da hini ar jeneral MacMahon e 1871, e Bro-C'hall, da geñver emsavadeg ar "Gumun" ; gouez da aozer ar film gouestlet dezhañ, n'en doa lazhet nemet tri mij a dud da geñver kemeridigezh ar galloud ! Un disterdra evit ur Groñsrener ! N'en doa ket graet kalz gwashoc'h eget ar renad bourc'hiz gall eus 1871 a flas-tras ar "Gomunarded" kantregont vloaz 'zo (nemet ne vouevias ket paotred an arme c'hall neuze an emsavid, evel ma rejont dindan urzhioù ar pevare hag ar pempvet Republik pevarugent vloaz warlerc'h da vare ar brezelioù treva-dennel). Forzh penaos, ne c'heller ket keñveriañ ar sir-se ouzh ar 80.000.000 a re varv dleet da lanvezh ar gomunouriezh dre ar bed, hervez "Levr Du ar gomunouriezh" bet embannet daou vloaz 'zo bennak, a gav din.

An harluidi, a oa o c'hortoz un arvestus a brosez abaoe daou vloaz bennak, a vo kersket moarvat ma tiniñ ar jeneral en-dro da Chile, yac'h ha salv. Hogen daoust hag e politikerezh e c'hell bezañ euzhvidel ? Evel m'em eus merket meur a wech, diouzh an degouezh e tro lod stourmerion da vouevion ha dam dall da varzhon. Er film gouestlet da redadenn bolitikel ar jeneral e tis-

(Lenn pajenn 4)

(diwar ar bajenn 3)

kouezed un den aet war an oad, deuet da vezañ un tad-kozh kardek ha jentil, hag anzav a raed e oa an tad kozh-se karet en e vro gant ul lodenn vras eus ar boblañs.

Setu en em c'houlenn a ran ha barn a c'heller un den politikel diouzh ur savboent divezel : en anv pe-seurt divezezh ha peseurt gwirionez, paz eo dleet da zargouezh an emgannoù, evit ar stourmerion, bezañ jahiner pe jahinad ! Seul vui ma vez pleustret atav ar bourevierezh er Stad spagnat, e-lec'h ma vez ar gerreizh bepred o voureviañ ar vrogarourion eus-karat a gouezh etre o c'hrabanoù, betek hiziv ? Ha kement-se a bad abaoe hanter-kant vloaz er riez-se, dindan an holl renadoù (soñj ez eus ag ar GAL !) ! Neuze, perak kement a vertuz gant barnerion ar riez-se ?

Glask a rin hepken stigmañ ur gudenn. Evit digareziñ ar jeneral Piloche e tisklierer en defe saveteet ar feiz kristen e Chile o tiskar ur renad marksat (pe un danvez renad marksat).

Moarvat ez embann an den kozh-mañ hiziv ez eus ur c'hristen anezhañ. Marteze, ivez, e vije aet primoc'h an digristenadur war-raok e Chile mar bije bet diazezet ahont ur renad a seurt gant hini Castro e-lec'h maz eo ar varkadegezh ur relijion.

Hogen pezh en deus degaset gantañ ar c'hilistourm enepsokialour deuet da vat Chile (evit se hepken e oa bet empennet), ez eo ur berzh armerzhel dreist-par, hag ur fonnusted sebezus a vadoù. Netra ken eveljust, ha netra, kennebeut, da welout gant eorizh an Aviel a denn da ziazezañ Rouantelezh Doue war emled an Iliz erverzet evel ur bobl a-ziforc'h diouzh kement kevredigezh politikel a zo.

Moarvat, e Bro-C'hall ivez ez eo bet klasket, en amzer De Gaulle, er bloavezhioù '60, klenkañ an Iliz... c'hall e framm ar gevredigezh c'hall arnevez, ha goveliet e oa bet, da skouer, al Lezenn Debré evit saveteiñ ar "skolioù kristen". Gwir eo n'o deus ket gouezet mat ar gloer er riez-se biskoazh hag o gwir Iliz a oa an Iliz, hini Roma, pe... ar Stad c'hall endeeun. Hogen pezh a zo sur eo ez eo bet tizhet, diwar-bouez al Lezenn-se, un disoc'h kontrol d'an hini a oa gortozet gant frammoù an Iliz c'hall a neuze : deuet eo ar skolioù emanvet katolik er c'hwec'hkogn

da vezañ skolioù led-stadel ha led-laik, dreist-holl, er skolioù, oc'h implijout an hevelep domlevrioù istor, skiantoù-natur, skiantoù ar Geoded, hag ar skolioù stadel o-unan. Ned eo mui ar C'helennerzh katolik nemet ur boutik, evel an Iliz c'hall dre vras, a glask dreistveañ, hep gouzout re vat perak e tefe ober. D'ar re a garfe bezañ titouret war an doare ma vez 'kelennet' sañset ar relijion er skolioù emanvet katolik e c'hellfen pourchas, evel dielloù, testennoù ar c'hentelioù a 'relijion' a vez laketa etre daouarn ar skolidi er skolioù katolik-se.

Ar "Front National" ivez e Bro-C'hall a venne, sañset, saveteiñ ar relijion gristen. Hep Iliz katolik ebet diwar vremañ, n'ouzon ket penaos en dije graet. Hogen n'en devo mui biken an emsav-se chañs ebet da brouiñ e efedusted er par-se. E devoud, an disrann a zo c'hoarvezet warlene en e greiz en deus roet dezhañ taol ar marv... politikel. Gwir eo n'en deus ket graet ar "Front National" biskoazh kalz berzh e Breizh, evit abegoù a vefe tu da zezrannañ. Hogen an drouziwezh a zo nevez c'hoarvezet gantañ d'an 12 a viz Kerzu 1999, e-tal Roazhon, e Bruz, a ziskouez mat ez eo deuet an emsav-se da vezañ arlezelad a nevez. Evel ma oa kaer gortoz, edo an daou strollad bet askoret diwar rannadur an emsav o kevezañ e kelc'hparzh-mouezhiañ Bruz, ar "Front National" end-eeun, istorel, a c'hellfed lavarout, hag ar "Mouvement National Républicain", hini Mégret -, an hini kentañ n'en deus tizhet nemet 2,61 % eus ar mouezhioù, hag egile 0,61, ar pezh a dalvez o deus an dehouelourion c'hall er bastellvro-se tapet a-boan 2 %, e-lec'h ar 5 % o deveze peurvuiañ er mouezhiadegoù kent ; n'eus bet enta nemet 453 voter o sevel a-du gant tezennoù ar gostezenn dehouelour gall e kreisteiz Roazhon, diwar 24.500 enskrivad bennak.

Dre se emañ kadarnaet an dezenn am boa difennet daou vloaz 'zo bennak pa'm boa diogetlet em "Notennoù Politikel" e oa ar stourm a oa bet renet a-enep d'ar "Front National" gant lod emsaveurion d'ar mare-se ur seurt traped, peogwir n'en doa da heuliad nemet stagañ spered an emsaveurion vrezhon ouzh kudennoù ar politikerezh diabarzh er C'hwec'hkogn, e gounid ur strollad sokialour gall a glask implijout a-wechoù an em-

(leun pajenn 5)

(diwar ar bajenn 4)

sav evit tizhout e balioù politikel, nemet a zo, dre zindan, enebet-krenn ouzh ar stourm a zo renet gant an emsav. Atav e ranker diwall diouzh maklavellegezh hag itrikoù ar bolitikerion c'hall, hogen dreist-holl diouzh re ar gostezenn sokialour. F. Mitterand eo en doa roet an tu d'ar "Front National" d'ober berzh e dilennadegoù ar C'hwec'hkogn, gant ar soñj, da gentañ penn, da daliñ ouzh ar gostezenn dehou gall klasel, o rannañ ar mouezhioù a yae dezhi agentaou pa oa ar C'haoulourion o-unan-penn o ter-c'houezañ ar gostezenn dehou.

Drouziwezh ar "Front National" a oa aes da rakwelout, forzh penaos, ha se hor boa diskouezet a-walc'h er pennadoù hor boa gouestlet d'an emsav-se. Ne oa unvaniezh kealiadurezh ebet er strollad e par ar gelennadurezh, daoust d'al luganoù boutin etre an izili anezhañ ; ha re gozh e oa al levier 'karismatek' anezhañ evit gellout dere'hel e roll betek ar penn. Dreist-holl, abenn ar fin, diwar-bouez diazezidigezh un Europa enframmet, ha dizeriadur an Iliz hag hini ar feiz kristen, e kave an tezennoù difennet gant an emsav-se nebeutoc'h-nebeutañ a heklever er c'hendereoù ma tutaer ar strollad en o c'hreiz e zanzvez stourmerion.

Arabat disoñjal : ne c'hell emsav Breizh en em dermenañ nemet en e geñver e-unan, hervez e istor piaouel, ha n'eo ket e-skoaz da ne vern pe emsav pe luskad gall. Hemañ a zo unan eus pennvonioù Em-sav Breizh adal an deroù.

(diwar ar bajenn 2)

ha n'ouzon penaos ez eo tec'het diwar va spered e oa bet ganet e dibenn 1946 pe e deroù 1947, goude ma oa bet divac'het he zad, peogwir ez eo nevez aet da anaon e dibenn 1999, hep bezañ tizhet tri bloaz hag hanterkant.

13/11/99
P.57, notenn. Menegiñ a ran **Charlez Gaonac'h**, ha lavarout a ran e oa marvet dek vloaz 'zo. Remont Delaporte, rener "Strollad Broadel Breizh" eo a vefe marvet eizh pe zek vloaz 'zo (embannet hon eus un emziviz gantañ ha lizhiri digantañ er gelaouenn-mañ). Kavout a ra din ne oa ket gouest-tre da intent pennadoù ar gelaouenn. Hogen marvet eo daou vloaz 'zo hepken, ha meneg eo bet e dremenvan war "Al Liamm". C'hoariet en doa ur roll a-bouez e renerzh "Strollad Broadel Breizh" e-pad ar brezel. Ra vimp digarezet evit ar faziou-se.

KELEIER RELIJIJEL

RUSIA

Ur skol-veur brederouriezh a zo bet savet e Moskov gant ar Jezuided. Digorlidet eo bet gant ar C'hardinal Sodano, sekretour Stad ar Sez-Santel, d'an 13 a viz kerzu 1999. Kroget he deus da vont en-dro gant 70 kelenner ha 300 bennak a studierion, kalz anezho laiked, lod mat anezho eus an Iliz Reizhvriek.

ALBANIA

Er vro gentañ o vezañ en em ziskleriet "dizoueat" emañ bremañ ar Feiz kristen o kreskiñ en un doare souezhus. En Iliz Reizhvriek da skouer ne chome ken nemet 5 beleg kozh er bloaz 1991 : hiziv emaint 110 hag int-yaouank ; adsavet ez eus bet 200 iliz bennak, ha 72 all a c'houlenner. Bro c'henedik al leanez santel brudet, Mamm Tereza, ez eo, ha setu perak marteze !

AR GWIR DA GEMM RELIJIJON

Degemeret eo bet ar Pab e New-Delhi, kêrbenn India, gant pennoù relijiel ar vro, o slakkañ o daouarn dezhañ. Gant an Hindouad e voe meulet e labour evit ar peoc'h ; ar Boudaad a bouezas war ar gevalladed etre ar c'hrazezhioù...Pa zeuas e dro e krogas ar Pab gant ar pezh a zo boutin d'an holl relijionoù disheñvel-se : petra ez eus goude ar marv, klask ar peoc'h, difenn an talvoudoù divezel. Hag eñ neuze, tamall ur wech ouzhpenn an implij a vez graet eus ar relijion evit reizha-begañ ar feulster. Hag en diwezh, lavarout sklaer ha kreñv : Stad ebet n'he deus ar gwir da reoliañ, ez-eeun pe dieeun, mennozhioù relijiel un den, na mirout outañ a ziskouez hag a bleustriñ e feiz a-ouez d'an holl. Ar frankiz-se a c'houlenn e ve kedanavet da bep den ar gwir da gemm relijion hervez e goustiañs. Gant ar c'homzoù diwezhañ-mañ ez embanne ar gwir evit pep den e pep bro da zibab donet da vezañ kristen.

YANN-BAOL II E TBILISI (JORJIA)

"Laouen ez on, emezañ, o tegouezhout en ho pro da geñver 10vet deiz-ha-bloaz diskar moger Berlin...Dizalc'hidigezh Jorjia a zo bet ivez ur c'hammed bras war-raok...Ur roll a-bouez hoc'h eus bet en darvoudoù-se, eme ar Pab d'ar prezidant Chavardnaze (a oa neuze ministr an aferioù diavaez gant Gorbachev)." "Na c'hw' ta !, a respontas hemañ".

P.K.

Lizhiri :

- A-Berzh Yann Mikael, a-zivout Dom Helder Camara (gw. Kannadig. Imbourc'h. niv.1) « An Eskob Ruz ».

« ...Ne fell ket din abegñ war garantez Dom Helder Camara e-keñver ar re baour, met kentoc'h war ar brud en doa tapet da vezañ un « eskob ruz », ar pezh ne oa ket marteze hep abeg gwirion. (...)

E 1935, Raymond Le Bourre, sekretour Paul Vailant-Couturier ha Jacques Doriot, a voe kaset d'e 23 bloaz da Skol ar Sternioù e Moskov dre ma oa unan eus danvez renerien ar strollad kevour (PCF). A-gevret gant dumenn ar gevourion yaouank e oad diogel war o divoud e voe kaset du-se. Pal ar staj-se, a skriv A. Figueras (Monde & Vie 02/1981), a oa termeniñ ar gadoniezh evit ensilañ en liz izili eus ar Strollad.

Ha piv a oa gantañ en e-gichen ? Ar c'hloareg Helder Camara.

E 1950 e venegas R. Le Bourre kement-se d'an Aotrou 'n Eskob Montini, pro-sekretour-Stad ar pab Pius XII ha d'an Aotrou Kardinal Tisserant, me hini ebet anezho ne fellas dezhañ derc'hel kont eus an dra-se. »

- A-berzh Merwen Runpaot, beleg, hon eus bet ul lizher hir-tre da heul pennadoù T. Gwilhmod ha Y. Olier e niverenn miz Ebrel 1999. Setu amañ darn eus e lizher :

AN ESPERANTO, YEZH ETREVROADEL

(...)An esperanteg a zo ur yezh skoazell, un adyezh, ur genyezh, a zo bet savet evit seveniñ ul labour na c'hell ket bezañ graet gant ar yezhoù all. An holl yezhoù o deus, pep unan anezho diouzh o doare, o zalvoudegezh hag o c'haerded dibar ; bez ez int, pep hini anezho, an arouez donañ hag heverkañ eus o fobl, o broad (...). Met evit kendivizout gant tud estren, disheñvel o yezhoù, eo ret-mat ober gant ur yezh hepken. Ha neuze e sav ur wallgudenn : pehini implijout ?

(...) En Unvaniezh Europa, pep bro a venn komz he yezh hag ar re all o deus c'hoant da gompren an traoù en o yezh ha chom hep bezañ "sujet" da yezh ar pobloù all. Kement-se a zo kaoz da zispignoù spontus : da begement e sav goprouñ an holl jubenne- rion-se, meur a gantad anezho, ar mizoù moulañ, an

ardjivinkoù evit treiñ war-eeun ha me 'oar-me ? Penaos e vo dirouestlet ar gudenn pa soñjer e savo da 27 niver ar broioù emezelet en U.E. a-benn nebeut ? Ar saozneg eo, dre vras, a vez implijet er mare-mañ evel yezh an darempredoù, ha n'eo ket hep diasterioù a bep seurt. Met, evel ma skriv Youenn Olier, kemerout ar saozneg da genyezh a vefe sujañ ar pobloù kornogeuropat, hag ar re all, da levezon sevenadurel hag armerzhel ar Stadoù Unanet.

Bremañ ivez e vez an dud o veajiñ, ha mui-ouzh-mui. An douristelezh he deus tizhet ur barr-tuhel hag a-benn dek vloaz, war a zegemener deomp, e vezo tric'hementet. N'heller ket deskiñ yezh kement bro a sav c'hoant ennomp gweladenniñ. Ha padal, evit beajiñ gant plijadur ha tennañ splot eus ar beajoù e pep keñver eo dav bezañ gouest da rannañ komzoù gant tud ar vro ; en tren, er c'harr-nij, war ar straed, er staliou, en tiez-debriñ, en ostalerioù, ... anez-se ne reer ket anaoudegezh gant ar vro da vat.

E-keñver an embann hag ar ouezoniezh dre vras e vefe un araokadenn vras evit ar sevenadurezh dre ar bed ma vefe troet pep tra en esperanteg ivez, ha n'eo ket hepken en un nebeut yezhoù hepken... pa vez graet ! Pebezh gounid e-keñver niver al lennerion (hag ivez, adarre, e-keñver dispign-arc'hant) ma vefe troet er genyezh ivez.

An esperanteg a zo bet savet evit respont d'an holl c'houlennoù-se, d'an holl ezhommou-se.

An esperanteg n'eo liammet ouzh bro ebet ; n'emañ e dalc'h riez ebet ; bez ez eo peadra kement den a venn ober gantañ, ha netra ken. E berzhioù a genyezh a zo dispar :

- aes eo da lenn ha da skrivañ. Skrivet e vez evel ma vez komzet ha komzet evel ma vez skrivet ; n'eus gantañ eta kudenn skritur ebet.
- Aes eo da zistagañ pa n'eus ennañ nemet vogalennoù ha kensonennoù boutin d'an holl yezhoù. Ar pouez-mouezh en em gav atav war silabenn ziwvezhañ ar gerioù.

-Aes eo da zeskiñ. Ar reolennoù a ereadurezh a zo eeun-tre. Ar gerioù a zo tennet diouzh al latin, ar gresianeg ha yezhoù pennañ Europa. Di-

(lenn pajenn 7)

(diwar ar bajenn 6)

babet int evit ma vo aes d'ar muiañ niver a dud o c'hompren. C'hwezek reolenn hepken a zo trawalc'h d'an esperanteg a-hend-all da reiñ korf d'ar yezh etrevroadel.

Ar genyezh-se, bet savet gant Zamenhof, a vodas 688 den e 1905. E 1987 da geñver kantvet deiz-ha-bloaz krouidigezh an esperanteg e voe tolpet 5946 den e-pad ur sizhunvezh. Emdod Montpellier a 1998 a vodas 3133 den hag ar bloaz-mañ e voe tro Berlin gant 2712 den. E Tel-Aviv eo e voe dalc'het kendalc'h an esperantegerion ar bloaz-mañ. (...)

Da geñver ur veaj d'ur vro estren pe e degouezhioù all eus ar vuhez e c'hoarvez e vefe ezhomm da gaout titouroù a bep seurt diwar-benn tra pe dra. Bep tra e vez esperantegerion a youl vat a zo prest da respont deoc'h. Embannet e vez bep bloaz ul LEVR-BLOAZ gant o anvioù, niverenn pellgomz, hag all. 1959 den a oa hevlene el lev-se, ingalet etre 100 bro dre ar bed a-bezh.

E Breizh e kaver kentelioù e Kemper, Naoned, Roazhon, Sant Brieg, Ploueg ar Mor hag an Henbont ha marteze e lec'h all c'hoazh. Daou levra a zo bet moulet e brezhoneg : evit deskiñ esperanteg (Hor Yezh 1993) hag evit deskiñ brezhoneg dre an esperanteg (Pêr Denez, Buan hag aes, 1997). Diwar ar brezhoneg e c'heller lenn div oberenet bet troet gant Ar Magadur, unan diwar bluenn P.J. Helias, eben, "LA HERBO DE LA VIRGULINO" bet skrivet gant Jakez Riou (Geotenn ar Werc'hez). (...)

Erfin ar vrezhonegerien, dre studi an esperanteg, a oar ober ken brav gant e rakgerioù, e dilostgerioù ha gant str resis an araoennoù evit sevel gerioù nevez hag esteurel arlivioù ar soñjoù, a vo degaset dre an esperanteg, da welout kalz splannoec'h ar gounidoù ha splotoù a c'hellfent tennañ eus pinvidigezhioù ha dibarderioù o yezh. (...)

Evit kompren holl dud ar bed Evit bezañ c'hwit hoc'h-unan Ha keodedad an hollved, Komzit div yezh : Hini ho pro Hag Esperanto.

Mervenn Runpaot

JOA

Tri seurt joaioù a c'hell bezañ d'un den war an douar : ar joa o tont eus ar bed, ar joa o tont eus eus an unan, ar joa o tont eus an Aotrou Doue. Diwar bere'hennañ an traoù e teu an hini gentañ; diwar goustiañs vat an unan, evel da heul ul labour kaset da benn vat, e teu an eil ; diwar dañva ar vuhez peurbadel e teu an drede.

Kentoc'h eget mont er-maez da glask joaioù o tont eus ar bed, kentoc'h eget chom bac'het er joaioù o tont ac'hanout da-unan, "deus-tre e joa da Aotrou". Hugues de Saint-Victor, +1141

"BREIZH" DIOUZH AR C'HIZ

Mui-oc'h-mui e kaver ar ger "Breizh", ha n'eo ket "Bretagne", en anvioù strolladoù a bep seurt, kenwerzhel, sportel, boestoù-noz, h.a. "

- Club Breizh-Nihon" da skouer, lec'h emvod evit an embregerion a ra kenwerzh etre Breizh ha Japan, pe an embregerzhioù japanat staliet e Breizh (Canon e Liverieg)

- "Paotred Breizh" : anv ur strollad tri faotr eus Bro-Naoned o kemer perzh, evel Bretoned er redadeg kirri ha mirc'hed-tan etre Dakar (Senegal) ha Kaero (Egipt). E Kêr-an-Naoned o deus diskouezet o marc'h-tan d'an dud, ha dreist-holl d'ar vugale, ha gwerzhiet 400 bennak a dT-shirtoù gant o anv ha banniel Breizh warno.

- "Les Amis Breizh du doyenmé" : strollad yaouankizoù kristen o vodañ kristenien yaouank e kreisteiz Bro-Roazhon (Baen)

LOUARNIG :

ur gelaouenn nevez evit ar vugale



War-lerc'h WANIG-HA WENIG, CHOLORI ha TALABAO, setu aze ur strivadenn ne-

vez evit ur gelaouenn d'ar vugale. Bez e c'heller goullenn an niverenn "mann" ouzh Keit 'vimp Bev; 29520 LAZ. Gortoz a reer 400 koumananter evit ar bloavezh kentañ, ar pezh a vo ur c'hlaouster diaes da dizhout moarvat. 300 lur eo ar c'houmanant evit 12 niverenn. An niverenn gentañ a zeuio er-maez e miz Ebrel

Kenskrivit

!

Kelaouenn diabarzh Emlgev an Tiegezhioù, kevredet e Kuzul ar Brezhoneg, eo Imbourc'h. Ar skridoù, kemenoù, lizhiri ha skodennoù a zo holl da gas da : "Imbourc'h"

Kergreven, 29800 Trelevenez.
Pgz : 02 98 25 10 72, Plr : 02 98 25 18 87
(gervel a-raok kas) eat@libertysurf.fr.

250 lur eo ar skodenn vloaz ordinal, a ro ar gwir da resev ar c'hannadig hag ar stagadennoù trimiziek..

Sevel ar ra da 100 lur evit ar re a garfe resev ar c'hannadig nemetken.

Ar pennadoù ne enouestont nemet o aozerien. Merour : T. Gwilhmod.
Diskleriet hervez lezenn.
ISSN : 1144 357X CPPAP : 50015.

TRO BREIZH 2000 : GWENED - KEMPER

Ar bloaz-mañ en em gavo pirc'hirined an Dro Vreizh e Kemper. E 1994 e oa loc'het ur pemp kant bennak anezho diouzh "Iliz-Kador Kaourintin". Graet an Dro Vreizh ganto en ur ober seizh vloaz en em gavint en-dro e Kemper eta abenn seizh miz, kresket mat an niver anezho avat ! D'ar 5 a viz Eost en em gavo "Prosesion vrasañ Istor Breizh", eme Philippe Abjean, atebeg an aozadur. Lakaet en deus sevel ur banniel nevez gouestlet d'ar seizh Sant, ha gortoz a ra 500 banniel all ha 2000 Gwenn-ha-du.



An Dro Vreizh e straedoù Gwened e miz Eost tremenet

Banniel Emlgev an Tiegezhioù

Respont a raio E.A.T. d'ar bedadenn-se : banniel ar gevredigezh o skeudenniñ Santez Anna, ar Werc'hez har ar mabig Jezuz war an daou du - ur banniel a zo bet graet war aked Youenn Souffes moarvat - a raio ar brosesion vras-se. Muioe'h-mui a (nevez-)vrezhonegerien a gemer perzh bep bloaz : kavout a ra dezho ez eo un dro vat evit ober anaoudegezh, war zigarez kerzhout ha pediñ a-gevret e-pad c'hwec'h de-

vezh.

Poent eo lakaat e anv

Deist-holl ma vennit lojañ er salioù-sport eo poent-bras lakaat hoc'h anv, rak ne vo ket plas evit an holl,

- evit displegañ petra eo mennadoù Imbourc'h
- evit brudañ ar c'hannadig hag ar stagadennoù ;
- evit sellout ouzh an niverennoù kozh .

A-ZIVOUT AR STAGADENNOÙ DA ZONT :

Marteze, ha ni erru gant an eil niverenn-mañ eus ar c'hannadig, eo mat distreiñ war an disklêriadurioù a zo bet roet en niverenn gentañ anezhañ.

Hiniennou, moarvat, e-touez ar re a oa boas da gas ur skodenn a 250 lur evit ar bloaz, eus Genver da Gerzu, a garfe gouzout ha talvezout a ra ar boan kas ar sammad-se evit degemer ken treut ur c'hannadig hepken. Ret eo resisañ adarre e vo kaset ouzhpenn ar c'hannadig hag evel stagadennoù, oberennou klock a bep seurt a gloto niver o fajennoù gant hini an niverennoù ordinal embannet bep bloaz dindan talbenn "Imbourc'h, kelaouenn a Studi".T.G.

Ur CD gant pemzek kantik brezhonek, bet enrollet e-kerzh an Dro Vreizh warlene a zo e gwerzh e ti Mille et une films 11 straed D. Papin, 35000 Roazhon, evit 132 lur. Peder gwech e oa chomet pirc'hirined war-lerc'h ar veilha-deg da ganañ ar c'hantikou-se dindan renerezh F. Morvanou. Deuet int brav daoust ma ne glever ket peder linenn-gan disheñvel : kanet eo en un doare poblek ha setu holl, evel ma vefe bet klevet en ur barrez e kornog ar vro ugent pe dregont vloaz 'zo.


KANNADIG IMBOURC'H

BREZHONEG EN TI BANK DIOUZHTU !

Setu aze ur stourmadeg hag a c'hell an holl kemer perzh ennañ. Roet ez eus bet lañs dezhañ gant «Ni Hon Unan», a ginnig pegsunioù bihan evit netra : da skignañ en-dro deomp a-benn pouezañ war renerien an tiez-bank. O goulenn a c'heller digant «Ni Hon Unan», BP 76927 29269 Brest Cedex.

WAR RAOK BEPRED :

- « STUR » a ginnig meizantou d'ar vrezhonegerien, da skouer :
- un « Difazier » ;
- roll ar c'humunioù e brezhoneg hag e galleg



STUR, 6 straed Lapicque
22000 Sant Brieg

BEVET ROPARZ HEMON !

Poent eo kas an dorch d'ar gêr d'ar re a damall ouzh Roparz Hemon bezañ bet «paet gant an Alamaned», evel ma voe klevet d'an 13 a viz C'hwevrer e-pad abadenn « Red an Amzer ». An hini a lavar an dra-se avat a anzav ne vije ket bet a vrezhoneg war ar gwa-gennoù war-lerc'h ar brezel panevete oa bet kroget dindan renad Vichy. Diouzh un tu all n'en deus degaset prouenn ebet (rak n'eus ket !) e vije savet R. Hemon a-du gant an Nazied. Youenn Olier en e « Notennoù a-bep seurt » a ro deomp e sav-boent a-zivout an irienn-se a-enep da rener « Skol Walam ».



Yann Mikael ha Roparz Hemon e Dulenn e 1967

Kannadig Imbourc'h a zo ur gelaouenn a stourm evit ar brezhoneg, ha peurgetek war dachenn ar mennozioù. Salv ma vimp skoret a-walc'h gant hol lennerien evit gellout o sikour da glask ar wirionez ho-unan, hep plegañ dindan Diktat ur Skol-Veur hag a chom, ret eo lavarout, suj d'ar Stad C'hall, forzh penaos.

T.G.

AN ILIZ O C'HOULENN PARDON

Komz a reer adarre eus mennad ar Pab da c'houleñ pardon evit torfedoù an Iliz a-hed an istor. Ouzh piv avat e rafe avat : ouzh Doue pe ouzh ar bed ? 'M eus aon ez eo dirak ar bed ha n'eo ket dirak Doue e c'houlenno pardon moarvat, evit plijout ent-anat da strolladoù dirgel 'zo, enebet d'ar feiz kristen.

Notomp da gentañ n'he deus ket graet an Iliz anglikan a embannadenn, nag iliz protestant all ebet, nag iliz reizhkredennek ebet, daoust maz eo c'hoar-vezet gant hini pe hini eus an ilizoù-se bezañ kemeret perzh e torfedoù 'zo a-hed an istor.

Lakaomp bremañ he defe an Iliz katolik da c'houleñ pardon, ne rafe biken evit gwir nemet dre nevedurzhaz an Iliz, en ur c'houlakaat ez eo an Iliz ur

(gwelout pajenn 2)

NIVERENN 3	KANNADIG	PAJENN 2
<i>(diwar ar bajenn 1)</i>		
<p>gevredigezh politikel evel ar re all ha netra nemet se, gant beleion karget d'he ren. Hogen, ret-mat eo stadañ ez eo bet an torfedoù a lakaer e kont, sevenet a-hiniennoù ha dre hiniennoù, e lec'h pe lec'h, gant gronnadoù relijiel 'zo, met atav dindan un atebegzh hiniennel ha lec'hel en anv ur feiz kempouezet fall, ma karer, met gwech ebet dindan ur renadurezh kreizennet gant ar Pab e Roma.</p> <p>War ar marc'had n'eus bet tu da gas da benn an torfedoù-se hep kenwallerezh ar Stadoù. Janed Ark a zo bet barnet gant an eskob Cauchon evit arbennoù politikel. Kemer a ran ar skouer-se peogwir ez eo anavezet gant an holl. Hogen o studiañ istor an aozadur led-politikel a reer anezhañ an Iliz – evel Rouantelezh Israel a-agentaou – e veizer diouzhtu ez eo dindan levezon bonner ar galloudoù politikel o deus tud an Iliz graet gaou ouzh gwirioù Mab-den (evel devoded an dibennerezh e Bro-C'hall). Evit ur pec'hed hepken e rankfe nevedurzhaz an Iliz enta goulenn pardon : bezañ atav doujet re ar veleien hag ar galloud politikel, rouezezhioù ha republikoù, ha bezañ kempleget d'o stuzegezh dizenel, estren ouzh an Aviel ; en ur ger bezañ gwalleget ober eus gwerin ar gristenien, a zo gwerin dre natur, ur bobl emren ha dishual; en ur ger adarre, bezañ kenlabouret gant ar bed, ur bed diaoulek dre natur ivez. Farsus ha trist eo gwelout kloer 'zo o tianaout ar fed diazez-mañ hag o c'houlenn pardon ouzh ur bed en devo frammet anezhi. Rak adarre ar goulenn maza-viant a vo graet dirak ar bed. Rak mar bje bet graet dirak Doue ne oa ket dav skeiñ war an taboulin evit lakaat an arvesterion c'hogetis da estlammiñ ha da c'hoapaat. Ne vo ket gounezet un ene – na pa ve nemet unan ! – gant ar sark-se. Pe e tlefe an danvez izili dec'houloupat dirak diskibion gent Hitler, ma teufent o-unan da c'houlenn pardon !</p> <p>N'eus forzh penaos – ha war ar c'hraf-se e tleomp distreiñ atav, n'eus ket a bobl gristen bolitikel a-hed ar c'hantvedoù, ha n'eus ket anv e ve unan anezhi en dazont. N'eus nemet ur werin gristen, maz eo louzet hec'h enor hag hini he Doue dre ar goulennoù maza-viant gourbannet gant amaezhidi diatebek pe rediet d'henn ober gant enebourion ar feiz kristen</p>		
<p>Y.O.</p>		
<p>Nevedurzhaz : hiérarchie</p>		
<p>KEMENNOÙ A BEP SEURT : Emvod miziek B.S.I. e Kistinid : D'ar Sul 19 a viz meurzh Oferenn e brezhoneg gwened da 11e 30 e e chapel Sant Matelin (trede sul bep miz). E Gwidel d'ar 5/3 (sul kentañ ar miz) Chapel Sant Mazhev. Bibl ar Vugale : 5600 skouerenn eus Bibl ar vugale e brezhoneg a oa bet lakaet da voulañ e 1985 gant « Skoazell d'an Iliz en Dienez ». Ul levrig 64 pajennad eo, skeudennet kaer, ennañ « un dibab a destennoù eus ar Bibl » : ar re bouezusañ da anavezout eta, bet tennet eus an Testamant kozh hag eus an Testamant Nevez. Evit 20 lur franko e c'heller pourchas unan e ti Imboure'h.</p>		
<p>« Petra din-me ?... » "Cet homme est un des <i>ex-poirs</i> de l'équipe de France" : "Unan eus ar re varrekañ evit an dazont e strollad Bro-Frañs eo an den-se" a zo kinniget gant K.B. Penaos e vez lavaret "<i>serre-tête</i>" e brezhoneg : ur seurt hanter-gelc'h a servij d'ar merc'hed evit derc'hel o blev. Gortoz a reomp kinnigoù ... ha goulennoù all.</p>		
<p>KORSIKA : A-du eo hogos holl dilennidi Gorsika evit ma vefe kelennet o yezh dre ret da holl vugale an enezenn. N'int ket a-unvouezh avat evit reiñ d'ar c'horsikeg un dezvad a yezh kefridiel par d'ar galleg evit an darempredoù gant an amaezhierzh. O vreaataat emaint ivez evit ma vefe anavezet ar "bobl gorsikat" er c'hwec'hkogn. War-raok ez a eta an traoù e Korsika. Moarvat ez eo dleet berzh an Emsav du-se da bennegezh an emsaverien war an dachenn ha n'eo ket hepken abalamour d'ar bombezennoù ha d'al lazhadegoù !</p>		
<p>NAONEGEZH DRE AR BED " Evit he lakaat da gilañ, klikit war ar genroued ! Marc'hadourion vras a ginnig reiñ boued war gweladennit o sez : www.hunger site.com."</p>		
<p>PLANTAÑ KLEUZIOÙ Drastet eo bet an endro e meur a lec'h e Breizh adalek ar bloaz 1960. Diwar-goust kement-se e c'heller gwelout hiziv-an-deiz pegen fall e oa an doareoù-se evit an douar, an dour, al loened hag an dud. Abalamour da se emeur bremañ da skouer o plantañ 36 kilometrad kleuzioù 'koste Loudieg.</p>		

NIVERENN 3	KANNADIG	PAJENN 3
<p>NOTENNOÙ POLITIKEL Youenn OLIER</p>		
<p>A-zivout an dorfedourion bolitikel Adkregiñ a ran gant an "Notennoù"-mañ e dibenn miz Genver 2000. Karout a rafen ouzhpennañ ur ger bennak da afer Pinochet. Eveljust ez eo un dra vat e klaskfed 'atebekaat' dalc'herion ar galloud er riezoù dirak un "Uhel-lez Etrevroadel". Hogen, siwazh, n'eus, evit ar mare, gwir veliezh etrevroadel ebet kedanavet gant ar riezoù hag embannet ganti lezennoù degemeret gant an holl Stadoù. Dre se e oa renet afer Pinochet gant barnerzhioù lec'hel, dindan levezon strolloù-gwaskañ, e Spagn koulz hag e Beljik, gouleviet enta gant gronnadoù dirgel a arver hevelep prozezoù war-wel ur pal politikel, a-benn herouezañ ur gealiadurezh politikel o klotañ gant mennadoù ar re a ra dave d'ar "politically correct", hep ober anv zoken eus al "Lezenn Naturel" a zo eztaolet en "Dek Gourc'hemenn". Dre se e rank paotred ar yonez etrevroadel ober gant ar gwallnerzh hag ar feulster evit kastizañ un torfetour politikel bennak, evel ma rae Israheliz pa hemolc'hent ha pa skraper, dre ar bed a-bezh, an nazied a oa kiriek d'ar c'hevanlosk, pe gentoc'h, ar re o doa kemeret perzh ennañ en ur sentiñ ouzh urzhioù o gouarnamant. Moarvat e oa reizh ar mennad, met an hent d'e seveniñ a oa andezvel-rik, er-maez, e gwirionez, a bep lezenn</p>		
<p>A zo gwashoc'h. N'eo ket eeun ur barnerzh tidel a seurt-se ha na c'hell ket tizhout ar c'hoñsrenerion a chom peg-mat en o galloud.</p>		
<p>Kemeromp degouezh Castro. An holl a oar, -levrioù a-walc'h a zo bet embannet war an divoud-se, - ez eus bet anezhañ ur mac'homer eus ar gwashañ seurt, kiriek d'ar jahinerzh a zo bet pleustret, hag a vez pleustret bepred dindan e atebegzh a-enep da eneberion e renad, peurvuiañ komunourion digemplegat nemetken, nemet enebet ouzh e veliezh personel, prizoniñ bet mignoned d'ar groñsrener a-wechoù, hag hemañ mennet hepken ivez da dennañ dial diouto evit o zebet trubarderezh.</p>		
<p>Mat. Daoust da se ez eo bet erverzet Castro atav evel ul levierstad dereat hag enorus ; degemeret eo bet e Bro-C'hall, gant kalz a zigoroù hag a bompadoù. A zo feukusoc'h c'hoazh, a c'helfied la-</p>		
		<p>varout: ar Pab e-unan en deus kejet hag emzivizet gantañ.</p>
		<p>Kemeromp ur skouer all, hini aloubidigezh Tchetchenia hag an distrujidgezh anezhi, ur vroad vihan 'ta flastret gant ur galloud politikel impalaerel divent en he c'heñver. Daoust hag ar re a zo bet kiriek d'al lazhadeg ha d'an distrujideg ne zlefen ket bezañ barnet evel torfedourion-vrezel, peogwir o deus distignet ur walenn spouronus divuzul, e-skoaz an digarez a zo bet roet dezhi ?</p>
		<p>Setu, a-benn ar fin, en em gaver en ur saviad damheñvel ouzh hini brezel Serbia, bet renet, sañset, a-enep d'ur groñsrener hepken: o klask kastizañ lod trozeourion bolitikel, ne reer nemet ensembl ur sponterezh a-enep d'ur sponterezh all, ur sponterezh hep danvez ebet a-wechoù dezhañ, zoken, evel e degouezh Pinochet, peogwir ne zialzalc'he ar prosez a venned kas da benn nemet ur groñsrener aet war e leve, hanter gabac'h ha deuet da vezañ dizifenn, ur prosez ha na vije bet talvoudus nemet d'ober ur c'hoariva a skouer vat, o lakaat da dremen evit tud santel paotred ar galloud a aoz ar pezh-c'hoari, paz int, evel an holl, hêred d'ur steudad dizivezh a vuntrerion hag a jahinerion.hag int o kinnig embreger ur barnerzh reizh, nemet likoes, peogwir ez evod o barnerzh eus ur galloud en deus pleustret, evel ma verken, a-hed e istor, ar mac'homerezh, ar jahinerzh, hag al lazherzh. Perak ur c'hristen a zistaol, dre benmaenn. Istor ar Bed ha kement a denn dezhañ, a zlefe en em santout kengred gant oberiadennoù a seurt-se, renet gant azeulerion Istor ar Bed, a sellont evel an Istor Santel nemetañ.</p>
		<p>Kavañil enep-breizhat devoded ha devodez an dibennerezh c'hall santel</p>
		<p>Nevez 'zo e lennen war "Ouest-France", d'ar 26 a viz Genver, a gav din, pennadoù embannet war ar bajenn a zo gouestlet, peurvuiañ, d'ar stourm sevenadurel ha politikel e Breizh, - unan 'ta gant ur c'helenner eus skol-veur Roazhon II, studiet gantañ, a gredan, istor an emsav ; hag unan all gant Alain Guellec, a roe ur renta-kont eus un dalc'h gant "<i>Kuzul an armerzh hag ar gevredigezh</i>" ensavet a-berzh "Rannbarzh Breizh", e sigur ur steuñv en deus da amkan lakaat en e</p>
		<p><i>(Lenn pajenn 4)</i></p>

(diwar ar bajenn 3)

blom ur gwazerezh a bellwelerezh breizhat prevez. Diaes eo din barn un embregadenn ha n'eo ket bet kaset da benn evit c'hoazh. Hogen taolet em eus evezh ouzh ersav ha diskleriadenn dileuridi ar c'hweluniad F.O., meneget er pennad-se, pere o doa mouezhiet a-enep d'ar mennad. Betek-henn e kave din e oa kerreizh ha dinoazh a-walc'h, neptu e-keñver politikerezh, ar c'hweluniad-mañ. Goude lenn ar pennad avat e ranken em e c'houlenn ha n'eo ket an aozadur-se traken nemet un evodadur eus ar "Grand-Orient de France", un aozadur a frankvasoned c'hall, a zo da renkañ, war a gomprenan, e-touez binimusañ enebourion an emsav. N'ouzon ket perak o deus an enebourion-se da Vreizh kemeret ar riskl da ziwiskañ o maskloù, abaoe m'en deus ar sekretour-meur eus F.O., Blondel, e anv, a gav din, gourbannet *Urbi et Orbi* e oa anezhañ un ezel eus aozadur brudek ar "Grand Orient de France".

War a seblant, enta, e vefe mennet devoded ha devodezed an dibennerezh c'hall santel, a save-teas gwechall ar Republik gall, war a lavarout o-unan, (efedus-dreist e vije bet an ardivink-dalazhañ euzhus-se) da ren ur stourmadeg chivous ha pilpous, gaouiat ha kasonius, a-enep d'an emsav, ur stourmadeg a zo kevadeget, war a hañval, ouzh argadadeg ar gerreizh politikel c'hall a-enep da lod stourmerion bolitikel vrezhon a zo an aesañ dezho da dizhout, o kemer da zigarez **skrapadenn an danvez-tarzh e Pleven** e derou ar goañv.

N'eo ket hepken da *Delerama* e vez skrivet evit labezañ **Roparz Hemon** ha lousañ an emsav dre vras, hogen da gelaouennoù liesdoare, da "Ouest-France" zoken, da skouer. Er gazetenn-mañ, n'eus ket pellzo, e lennen ur skrid savet gant un devodez entanet d'ar Republik gall, ha n'am eus ket mui soñj eus hec'h anv, a oa mennet d'ober goap, - ur goap amzere ha blazet fall, - ouzh preder lod brogarourion vrezhon, a zo nec'het gant ur steuñv a-berzh "Terkezeh an Diriegezh", a dennfe da ober eus **tachenn-emgann Sant-Albin-an-Hiliberenn** un atredva divent ; hag ar skrivagnerez, en degouezh-se, o kemer digarez diwar eneberezh ar vrogarourion-se evit o c'heñveriañ ouzh... pobl villiget **Serbiz** (den n'en deus komprenet c'hoazh perak e oa Serbiz, evel

pobl, a-hed ar c'hantvedoù, gwashoc'h eget nep pobl all er hed a-bezh, nemet dre ma vefe manet ur c'homunour en he fenn abaoe maz eo echu prantad ar gomunouriezh ?)

Gouzout a reer ez eo sujet eñvor **Roparz Hemon** d'ur stourmadeg-wallyvrudañ drouk hag amoret, awenet, hep mar, gant pennsturienn vrudet ar skrivagner gall Voltaire, (a zo kehelet evel ur sant gant ar C'hallaoued-se), hag a lavare, e-giz ma oar an holl,

"*Livit gevier, livit gevier : atav e chomo un dra bennak diout !*".

Anavezet eo gant an holl, ha gant labezerion Roparz Hemon ez eo ivez, n'eus ket da lakaat war gont rener "Gwalarn" ur frazenn a oa bet skrivet e gwirionez gant ur **Roger Herve** e-barzh ke-louenn **Olier Mordrel**, "Stur", gwechall gozh e-pad ar brezel. Daoust da se o deus kendalc'het, gant abeurterezh hag ur feiz fall flaeius, d'ober meneg eus ar frazenn-se evit divrudañ ar brogarour brezhon.



Xavier Langleiz

Hogen n'eo ket Roparz Hemon hepken a zo taget ha ha dispen-net e vrud gant an devoded c'hall. Nevez 'zo ivez ez eus bet klasket teurel an diskred war **Langleiz**, a zo bet unan eus ar vrogarourion vrezhon ma tle an emsav ar muiañ anaoudegezh dezhañ, dre m'en deus oberiet ar muiañ evit unvaniñ hor yezh lennek, un arod a

zeuas da vat gant sinadur feur-emglev an 8 a viz Gouere 1941, nemet a oa bet boulc'het gantañ adal ar bloavezhioù 1935-1936. Mat. Ret eo kredañ ez eo bet dispiljet strollad an devoded gant an diskouezadeg a zo bet dispaket nevez 'zo e Mirdi Roazhon evit enoriñ e eñvor, rak kavet en deus unan bennak eus ar devoded-se an tu da enskrivañ, er c'haier lakaet an arver ar weladennerion er Mirdi, un tamall lous bennak a-enep da Langleiz, oc'h ober anezhañ, bepred, un enepyuzevad touet, e skeud ma vije bet embannet e-barzh ar gazetenn "**La Bretagne**", er rummad "**Ar Seizh Avel**", ur

(lenn pajenn 5)

(diwar ar bajenn 4)

o reiñ da soñjal e oa ar skrivagner un diskibl d'ar Gall **Drumond**, bet mestr da **Hitler** er par-se. N'hon eus ket gwelet ar skrid kavet abeg ennañ, met gouzout a reer a-walc'h e oa "Ar Seizh Avel" ur sinadur boutin ha dizanv da nouspet skrivagner o deus embannet an tammoù skridoù-se a-hed pevar bloavezh. Penaos enta diskouez Langleiz evel ur seurt torfetour evit ur pennad eus 150 ger d'ar muiañ ha na c'hellor diskouez biken ez eo bet skrivet gantañ?

Ar pezh a zo iskis er stourmadeg-mañ ez eo an arvez angerzel ("Passionnel") diskiant anezhi, a denn da hini an dudigoù yaouank a ya da enskrivañ graffiti e pep lec'h, hag int entanet gant ur feiz politikel nevez-flamm. Eveljust e ouzon hon eus afer ouzh devoded ha devodezed, hogen souezhet e c'heller bezañ evelato gant ur gred ha na vez dia-vaezet peurvuiañ, evel ma lavaren, nemet gant tudigoù yaouank e derou o redad politikel, boas 'ta da lezel graffiti e pep lec'h evel testeni d'o c'hendrec'hadurioù politikel. Eveljust e c'heller soñjal ez eo chañs da lod gellout chom yaouank betek en o oad-gour pe en o c'hozhni !

Ar gwashañ, evelkent, ez eo ar stourmadeg a-enep da **Roparz Hemon**. Ha lavarout a ran diouzhtu n'eus ket anv evit an emsaverion a ble-gañ e stumm ebet da baotred ha merc'hed ar "**Réseau Voltaire**" a zo o teurel fank ha loustoni war eñvor Roparz Hemon, Ret-mat eo gouzout emañ an emsav sevenadurel broadel diazezet war e oberenn « *Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh* » ; dre se, diskar Roparz Hemon a vefe ivez diskar an emsav penn-da-benn ; ha se a oar, moarvat, an enebourion o deus graet o soñj lousañ e vrud.

Evit tizhout ar pal-se e venn enebourion an emsav reiñ da gredañ e oa eus Roparz Hemon ur seurt faskour hollvelour stadelour. Hogen kement a zo skrivet, dres, en oberen rakveneg e ya a-enep d'an dezenn-se. Kontañ a ra Roparz Hemon war an intrudu prevez evit adsevel Breizh, evit krouiñ hor skolioù hag hon ensavadurioù. Nac'hañ a ra ivez ober eus ar Stad hag ar Galloud un idolenn - pezh a ra, er c'hontrol, devoded ha devodezed ar Republik gall, - evel ma nach ivez ober eus ar vroad ur seurt liz (pezh a ra, er c'hontrol, devoded ha devodezed ar vroad c'hall repu-

blikan). Evit bezañ sur eus kement-se n'eus nemet lenn dibenn ar pennad a zo e dalbenn "Breizh hag ar Bed". Menegiñ a ran komzoù Roparz Hemon e-unan diwar embannadur e oberen e 1972 gant "**Al Liamm**".

"*Evit Breizh, ya ! Met ivez evit ar pezh a zo kant gwech talvoudusoc'h, kant gwech santeloc'h eget Breizh, evit ar wirionez, Dieubomp ar Spred, ha dieubet e vo pep tra...*"

Anat a-walc'h eo ne c'helle ket ur frankizour a seurt gant an hini en em ziskouez el linennadou-mañ bezañ goubet an disterañ d'ur riezvelouriezh idolennek par d'an hini a zo kolezet, er c'hontrol; gant e damallerion a hiziv.

A-hend-all, e respontin war ur c'hraf hepken d'an tamalloù gaouiat a zo bet graet da Roparz Hemon gant e enebourion diskiant, - penaos e oa en em gavet e penn **Radio Breizh** e-pad ar brezel.

Da gentañ, dav eo lavarout perak en deus Roparz Hemon asaniet da sammañ ar garg-se. Kem-poell e voe e ziviz neuze gant ar bennaenn a oa displeget gantañ en ur pennad-digeriñ da unan eus niverennoù "**Gwalarn**" embannet dres a-raok ar brezel hag a venegomp e-lec'h-all ; e n'eus forzh peseurt kendegouezh politikel e tle un emsaver kenderc'hel gant ar stourm evit e vro hag he yezh. Hogen, dres, er garg-se eo e soñje da Roparz Hemon e c'helle ren ar stourm-se gant ar muiañ a e-fedusted d'ar mare m'en deus sammnet anezhi.

Bremañ, komzomp eus ar garg hec'h-unan. Ur servij foran evel ar Skol e oa ar Radio d'ar c'houlz-se, evel ar Wask end-eeun, pe ar bitailherezh, da skouer. Hogen an holl servijoù-se a oa realet dre ret gant an Alamanned ha gouarnamant Vichi war un dro. Daoust ha barnet eo bet an holl skolaerion o doa peget ouzh mogerioù o c'hlasoù poltred ar Marichal Pétain evel ma oa gourc'hemennet dezho ober, pe lakaet o skolidi da ganañ kanouennoù en enor da rener ar Stad c'hall a neuze ? Daoust ha tamallet eo bet an ensellerion a-berzh Akademiezh, a rae o micher evel an holl hag a lakae ar skolaerion-se da sentiñ ouzh kemennadurioù gouarnamant Vichi ? Daoust ha kemuzet eo bet dirak al lez-vern goude ar brezel an holl re o doa kenlabouret da zerc'hel en he sav ur

(libenn pajenn 8)

LEVR AR SALMOÙ

Ar Salmeg (pe Levr ar Salmoù) a vez kavet e kreizenn-reizh ar Bibl. Ar muiañ lennet eus levrioù an Testamant Kozh eo al levr-se moarvat. Ar Yuzevien hag ar Gristenien o deus kavet ennañ a-hed ar c'hantvedoù ur magadur speredel evit bezañ frelzet, diboniet, kreñvaet en o feiz. Gant hon Tud neñvel eo bet roet deomp ar Salmoù evit startaat hor fiziñs en e garantez. Tostik-tost da Zoue e vez kavet ur surentez burzhudus; ar Salmoù eo a sikour ac'hanomp da dostaat ouzh Doue ha, dre-se, da verzout ar peoc'h na c'hell ket bet kavet e lec'h all.

Posubl eo hiziv da gavout teir droidigezh eus ar Salmeg e brezhoneg:
a/ "Ar Bibl Santel" troet gant Maodez Glanndour: rann-levr "Ar Salmoù" (Al Liamm). Troidigezh resis hag aes da lenn war un dro.
b/ "Ar Bibl" troet gant Pêr ar Gall ha Job Lec'h-vien: rann-levr 4 "Ar Salmoù hag ar Skridoù all" (An Tour-Tan). Troidigezh rik kenañ, en ur yezh un tamm diaesoc'h eget testenn M. Glanndour c/ "Kanennoù Santel diwar ar Salmoù" gant J. Kergrist (An Tour-Tan). N'eo ket un droidigezh gwirion; diwar bep Salm, e savas J. Kergrist ur varzhoneg vray e brezhoneg, aes da ganañ.

En hebraeg eo bet skrivet Levr ar Salmoù evel-just. "Seph Tehillim" eo e anv hebraek, da lavarout eo "Levr ar Meulvedoù". Eus ar gresianeg "Psalms" e teu ar ger "Salm" hag a zo ur varzhoneg skrivet evit bezañ kanet gant eilad ur benveg-seniñ dre gerdin. Setu c'hwec'h titour evit sikour ac'hanoc'h da lenn ha da gompren ar salmoù.

1/ Diouzh o anv e ouzer eo ar Salmoù barzhonegoù skrivet evit bezañ kanet, an eilad avat a c'hell dont eus binvioù-seniñ a bep-seurt (alies dre gerdin, met a-wechoù binvioù all). Bez eus Salmoù a zo meneget ar benveg-seniñ aliet enno. Stumm ar varzhoniezh hebraek eo hini ar Salmoù: war ar mentadur eo diazezet, da lavarout eo war niver ar silabennoù pouezmouezhiet a zo er frazenn. Disheñvel eo ar varzhoniezh-se diouzh hon hini a zo diazezet war ar c'hlotennoù. N'eo ket aes restetrel ar mentadur en hon troidigezhioù; kavet e vez koulskoude troidigezhioù mat a zeu a-benn da lakaat ul lusk enno.
2/ Bez eus eus 150 Salm er Salmeg. E 5 levrenn eo

rannet ar Salmeg: Levrenn gentañ: Salmoù 1 da 41; Eilvet levrenn: Salmoù 42 da 72; Teirvet levrenn: 73 da 89; Pedervet levrenn: 90 da 106; Pempvet levrenn: 107 da 150. Ar Salm berrañ eo an niverenn 117 (2 werzad) hag an hini hirañ eo an niverenn 119 (176 gwerzad). Ar Salm 119 a zo ur veuleudi dediet da Lavar Doue.

3/ Skrivet eo bet ar Salmeg gant meur a oberour, e meur a vare.
-Moizez (13et kantved kent HS) en deus skrivet ur Salm (niv. 90)
-Ar roue David (war-dro ar bloaz 1000 kent HS) en deus skrivet 73 Salm; eñ eo an hini en deus skrivet an darn vrasañ eus ar Salmeg (niv. 3 da 41, 51 da 72, 138 da 145 hag ur re bennak all).
-Ar roue Salomon, mab David, en deus skrivet 2 Salm (niv. 72 ha 127).
-Azaf en deus savet 12 Salm (niv. 50 ha 73 da 83), Kempred gant David, Azaf a oa ren an azeuladeg e gefridi.
-Mibien Kore o deus skrivet 12 Salm ivez (niv. 42 da 49, 84, 85, 87, 88). Un tiegezh kiniaded e oa. Mibien Kore a vevas war-dro ar bloaz 850 kent HS.
-Hanter-kant Salm, pe-dost, a zo bet skrivet gant oberourien n'int ket anavezet. Marteze ez eus bet savet darn anezho gant unan eus ar re veneget. A-wechoù eo bet skrivet ar Salm gant un oberour, hag an ton savet gant unan all (d. s. niv.88).

4/ E-barzh ar bempvet levrenn e kavomp un dastumad a 15 Salm (niv. 120 da 134), a vez graet "Salmoù ar Pignidigezhioù" anezho. Kanet e vezent gant ar bobl en ur bignat trema Jeruzalem da vare ar pirc'hirindedoù hag ar gouelioù.

5/ Diwar-benn o stumm lennegezh eo posubl kevrennañ ar Salmoù e pemp lodenn.
-Kanaouennoù-meuliñ e-keñver Doue (d. s. niv. 8, 24, 29, 47, 105, 113); e-keñver ar Roue eouliet gant Doue [Jezuz-Krist] (d. s. niv. 2, 72, 110); e-keñver Jeruzalem, kêr Zoue, skeudenn Jeruzalem neñvel an Diskuliadur (d. s. niv.84, 87, 122).
-Pedennoù o tisplegañ ar c'houzañvded (d. s. niv. 3, 5, 6, 7, 13), ar morc'hed (d. s. niv.32, 38, 51, 130), ar fiziñs (d. s. niv. 4, 11, 16, 23),

(lenn pajenn 7)

KELEIER RELIJIEL

UNANAAT AN ILIZ

E Damask (Siria) ez eus meur a Rannilz kristen. En em glevet eo an eskob katolik hag an eskob reizhvriat (ortodoks) evit sevel a-gevret ur greizenn nevez, enni un iliz ha savadurioù evit ar skol, ar c'hatekiz, an obererezh kevredigezhel, h. a., hag a servijo d'an div gumuniezh.
E Roma, d'an 18 a viz genver, Prezidant-bed al Luterianed (Rannilz savet da heul LUTHER, +1546), Prezidant-bed an Anglikaned (Rannilz savet da heul HENRY VIII, roue Bro-Saoz, +1547), a-gevred gant ar Pab Yann-Baol II, o deus digoret, e Pennilz-veur Sant-Paol-Maez-Kêr, unan eus an Dorojoù Santel evit aroueziañ digoridigezh ar Bloavezh-a-C'hras 2000. Evit al lid-se o doa kaset un tregont bennak a Rannilzoù kristen dileuridi a renk uhel, en o zouez kalz a Ilizoù reizhvriat; dileuridi ebet avat eus ar Rannilz kalvinat (KALVIN +1564).

"En abeg da reuzioù an Istor "bedel" eo ez omp bet disrannet, eme ar Pab; hogen mennen a-grenn ez omp da labourat evit unaniezh Iliz Jezuz Krist... E-kerzh va beaj e Roumania e hu-che ar bobl: "Unitade! Unitade! Hag-ñ e c'hellomp-ni huchal bremañ: Unaniezh! Unaniezh!" E-pad ar pred da heul, e roas penneskob koptat reizhvriat Alexandria an emgav dezhañ evit dibenn miz c'hwervrer e Bro-Egipt hag er Sinai. Eno e voe ivez furmet Pobl ar Yuzevion (1700-1200 kent hor Salver).

P.K.

PIRC'HIRINED E ROMA

"Gant Roma on bet kelennet kalz muioù e get gant bloavezhioù hir a studi, rak diskouezet he deus din pegen aner eo kement a dremen. Padal, kalz traoù brav-kenañ am eus gwelet: arvestet em eus ouzh kaerderioù marzhus an arz hag ar relijion; dreist-holl avat em eus taolet va zroad war an hevelep douar hag an Ebstel santel, an douar a zo bet skuilhet gwad ar verzhonion war-nañ, ha kresket eo bet va spered o kejout gant an traoù santel.

Santez Tereza ar Mabig Jezuz
(Diwar Emgounadur
santez Tereza,
Imbourc'h 1984)

(diwar ar bajenn 6)

trugarekadennoù (d. s. niv. 103).

-Barzhonegoù kelennus, deskadur (d. s. niv. 1, 139)
-Diougennoù, lavarioù profedel (d. s. niv. 50)
-Meur a stumm mesket er memes Salm: neuze hon eus un azeulerezh gwirion rentet da Zoue ma vez kavet meuldeudigezh, diougennoù, ha pedennoù (d. s. niv. 118).

6/ A-benn ar fin, an dra bouezusañ: kalz a ziougennoù mesiazel a zo kuzhet e-barzh ar Salmoù. E meur a hini e vez anv eus an Aotrou Jezuz. Nag a blijadur bep gwech ma kavomp unan anezho! Salmoù 'zo a ziskouez Jezuz-Krist en e ren kloduz (d. s. niv. 2, 21, 45, 72, 110); Salmoù all a ziskouez Jezuz o c'houzañv evidomp war ar groaz (d. s. niv. 22, 69); reoù all a ra anv eus eil donedigezh Jezuz a zo an Iliz ouzh e c'hortoz (d. s. niv.98). An holl ziougennoù-se a zo bet skrivet meur a gantved kent donedigezh kentañ Jezuz.

Esperout a ran ho po c'hoant da lenn hag adlenn ar Salmoù evit klask ha kavout an teñzorioù kuzhet enno. Arroudoù ar Salmoù a zo meneget 186 gwech en Testamant Nevez, ar pezh a ziskouez penaos eo bet implijet ar Salmeg gant ar Spered-Santel, evit levezonañ skrivagnerien an Testamant Nevez.

Lukaz BERNIKOD

-Lizher: a-berzh S. an Tieg, evezhiadennoù a zivout Deizlevr Y. Olier diwezhañ: Reizhadenn war reizhadenn, na pegen dipitus! (...) gwelet em eus en ur lenn Deizlevr 1975 e veze mesket R. Delaporte ha Ch. Gaonac'h. Hemañ a zo marvet ur bloaz 'zo nemetken ha n'eo ket daou vloaz! d'an 19 01 1999 da 89 bloaz, ha R. Delaporte d'ar 7 11 1990 da 83 bloaz. Bez e oan en o obidoù er C'hastell Nevez ar Faou. O-daou a oa o chom er C'hastell Nevez. Doue d'o fardono... Ha da Jermen Breton ivez a oa e obidoù e Sant Nazer d'an 2/2/2000. Eñ a oa ginidik eus Sant Tegoneg ha oaget a 93 vloaz. Bez e oa unan eus diazezerien ar c'hampoù brezhonek a-raok ar brezel (...)

Un emziviz hir gant Jermen Breton a zo bet embannet war Imbourc'h Niv. 217 1988 (p. 1-40). Er memes niverenn e c'heller lenn ur vurutelladenn a-zivout meskadur Fréville etre « Roger Herve » ha « Roparz Hemon ». Niverennoù kozh Imbourc'h a c'heller goulenñ ouzomp evit 20 lur franko, 50 lur ha 16 lur mizoù kas pa vez oberennoù klok.

Kenskrivit !

Kelaouenn diabarzh Emglev an Tiegezhioù, kevredet e Kuzul ar Brezhoneg, eo Imbourc'h. Ar skridoù, kemennoù, lizhiri ha skodennoù a zo holl da gas da : "Imbourc'h"

Kergreven, 29800 Trelevenez.
Pgz : 02 98 25 10 72, Plr : 02 98 25 18 87
(gervel a-raok kas) eat@libertysurf.fr.

250 lur eo ar skodenn vloaz ordinal, a ro ar gwir da resev ar c'hannadig hag ar stagadennoù trimiziek... Sevel ar ra da 100 lur evit ar re a garfe resev ar c'hannadig nemetken.

Ar pennadoù ne enouestlont nemet o aozerien. Merour : T. Gwilhmod.
Diskleriet hervez lezenn.
ISSN : 1144 357X CPPAP : 50015.

**LIAMMOÙ BREZHONEK WAR
LEC'HIENN IMBOURC'H**
<http://perso.libertysurf.fr/kannadig> :

listenn-skignañ « brezhonegeniliz » ; eskopti Evry ; Ar vuhez war-lerc'h ar marv ha pajennoù all kinniget gant kumuniezh an Emmanouel ; Langleiz hag ar Seizh Breur.

**UR BENVEG MOULAN NEVEZ EVIT
IMBOURC'H : TALVOUDEGEZH
180 KOUMANANT...**

Emañ Emglev an Tiegezhioù o vont da brenañ ur benveg evit moulañ Kannadig Imbourc'h : 45.000 lur a vo postet da brenañ ul listennerez a c'heller imboudañ war-eeun war un urzhiaataez. Evel-se e vo digresket mizoù-moulañ ar gelaouenn. Talvoudegezh 180 koumanant eo ar benveg nevez-se avat. Laouen e vefemp eta ma kasfe hol lennerien o skodenn evit ar bloaz 2000 an abretañ ar gwellañ.
Bennozh Doue dezho !

T. Gwilhmod

(diwar ar bajenn 5)

reizhiad a oa rolet e devoud gant ar galloud-gouzere'hel alaman neuze ? Perak, neuze, rebech ouzh Roparz Hemon pezh na rebecher ket ouzh kantadoù ha miliadoù a gargidi c'hall, a oa sujet, en desped dezho, da reolerezh an hevelep galloud-gouzere'hel ?

Kement-mañ a venagan hepken evit diskouez n'eus diazez ebet d'ar gevier dihoell a zo e diazez ur stourmadeg a zo awenet hepken gant ar spont hag ar gasoni a zo o sammañ spered an devoled hag an devozeded o verzout a-benn ar fin emañ templ o idolenn o kouezhañ en e boull.

Dianskrid.

Evit echuiñ ar pennad-mañ e rankan lavarout ez on bet souezhet ha kerseet gant abafant an emsaverion o respont da dagadennoù devoled ar Republik gall. Met se n'eo ket nevez. Seulabred, en ur stroll evel **ESB**, e dibenn ar bloavezhioù '60, dreist-holl goude 1968, eveljust, en un amzer, koulskoude, ma lavare an izili anezhañ e oa broade-lourion anezho, e tiiskouezed bezañ leun a zoujañs evit troc'herion-bennoù an Dispac'h Meur Gall. Ha ne gomzan ket eus ur strollad rannvroelour breizhat bennak, a zo o krakveañ abaoe tregont vloaz, maz eo prest an izili anezhañ a-hed ar wech d'en em flastrañ kerken ha ma ra van d'o gourdrouz un ezel bennak eus ar strolladoù gall emanvet kleizad.

Daoust ha ne vefe ket poent, koulskoude, luskañ war-raok, e par ar C'hwec'hkogn end-eeun, ur stourmadeg denelour hollek evit ma vefe kemmet deiziad gouel broadel ar galloud gall, a zo ar 14 a viz Gouere, hag evit ma vefe lamet a-ziwar mogerioù "*Bolz ar Gourzrech*" e Pariz anvioù an dorfedourion-vrezel c'hall o deus kemeret perzh e gouennlazh Vañdeiz daou-c'hant vloaz 'zo ?

Y. O.

OFERENN HA YEC'HED

Pelloc'h e vev ar re a ya d'an Oferenn !!! 28% bihanoc'h e vez ar feur-mervel en o zouez. Setu ar pezh a verzer diwar un enklask graet gant mezeien er Stadoù-Unanet.

BUTUN

1 sigaretenn nebeutoc'h = 11 munutenn muioc'h da vevañ war an douar, hervez ur studiaden neneget war "*British medical journal*", da heul un enklask war feurmervel ur boblañs a 34000 mezeg heuliet e-pad 40 vloaz ; 6 vloaz hanter berroc'h eo buhez ar vutunerien. Hervez un enklask all, ar sigaretennoù, ijinet 150 vloaz 'zo, o dije lazhet abretoc'h 150 milion a dud er bed, 60000 bremañ bep bloaz er "C'hwec'hkogn", dek gwech muioc'h eget ar gwallzarvoudoù karr-tan, ha kant gwech muioc'h eget saotradur an aer a-hend-all.

P.K.

KANNADIG IMBOURC'H

UR SKOL-VEUR VREZHONEK E KARAEZ DIZALE !

Bemdez e kinnig an Télégramme keleier niverus e brezhoneg war ar genrouedad, gant skoazell Ofis ar brezhoneg ha setu unan anezho : «Degemer a raio Karaez-Plougër ur skour eus Skol-veur Brest adal an distro-skol a zeu, hervez doare. Prientiñ a raio 25 studier un diplom skolveurel war ar brezhoneg. Ur c'helenner titlet a raio war dro ar stummadur-se a sell ouzh an deskarded divrezhonek dreist-holl. Skoazellet e vo gant adkelennerien (pevar moarvat), a vo tutet etouez Diwan. Ar C'hennlabour nevez-se etre ur Skol-veur Stad hag ur framm kelenn prevez a c'hellfe reiñ tro, war verr dermen, da grouiñ ur c'helc'hiad skolveurel klok. »

UN DRO VREIZH e brezhoneg a zo kinniget gant « Minihé Levenez » 29800 Trelevenez, eus an 9/7 d'ar 6/8 : 650 km e 29 devezh. Lakaat e anv a-raok ar 15/5.

LUN FASK 2000

An holl dud kar-o-bro a zo pedet da zont evel bep bloaz da gemer perzh e koun-lid marv euzhus an Aotrou Beleg Yann-Vari PERROT, saver ar Bleun-brug, rener " Feiz ha Breiz ", brouder kentañ adsav manati St-Wenole Lann-devenneg, skivagner brezhonek, rener an emsav speredel breizhek-kristen, drouklazhet d'ar sul 12 a viz kerzu 1943 en abeg d'e labour diehan evit Doue ha Breizh.



Yann-Vari Perrot, beleg hag emsaver

Al lid a zle bezañ peoc'hus ha doujus hep kasoni na trididigezh... Klaskit dont d'al lid penn-da-benn, mar geller, pe d'ul lodenn hepken.

O tont da Skrigneg an deiz-se, n'eo ket hepken envor an Aotrou Perrot eo a fell deomp lidañ, hini an holl dud « marv evit ar Vro », an holl dud o deus labouret, doare pe zoare evit ar Vro ha peurgent evit ar brezhoneg. Bep bloaz e vez klasket menegiñ roll an dud aet da anaon abaoe bloaz.

Doue d'o fardono !

T. Gwilhmod

(Emañ roll an devezh pajenn 6
ha renta-kont obererezh Unvaniezh Koad Kev p. 7)

AN ILIZ O C'HOULENN PARDON (2)

En niverenn diwezhañ hon eus graet anv endeo eus mennad an Iliz da c'houleñ pardon (un divankadur a zo da ober linenn 20 p. 2 eus an niv. 3 : lenn beliezh e-lec'h belecion).

Distreiñ a ran war graf ar gouleñ mazaviant a-berzh an Iliz katolik gourbannet gant ar Pab d'an 12 a viz Meurzh. Adarre e lavarin ez on feuket ha brouezet gant ar gouleñ-se - evel, forzh penaos, gant an holl embannadennoù graet *Urbi et Orbi* gant kloer diatebek ha netra ken - Ha ken hegaset

(gwelout pajenn 2)

(diwar ar bajenn 1)

all ez on gant un disklériadenn graet nevez 'zo gant tud a Iliz e Korsika, dre ma tegouezh an disklériadiour-se kalz re ziwzehat, paz eo echu an emgann ha peogwir ne glot ket da vat zoken gant mennadoù ar vroarourien en enezenn. Em soñj-me ez eo roll ar Pab termeniñ ha mirout feiz an ebestel.

An dastumenn nemeti a denno an arvester eus c'hoariva an disklériadenn gant ar Pab eo ez erru houmañ kalz re ziwzehat, d'ur c'houlz m'emañ an Iliz katolik o vont da get er C'hornog, hag hi o tiar-c'hañ an adanv-se - 'katolik'- p'emañ skarzhet pep stêr dioutañ.

Ma he deus an Iliz faziet ken grevus en tremened, penaos mirout fiziañs enni evit an amzer-da-zont ? Ma n'eo ket harpet ha diwallet gant Doue diouzh ar fazi, penaos e c'hellho an danvez kristen gortoz ar wirionez diganti en amzer-da-zont ? Neuze e vefe ar wirionez hepken gant ar rannizoù protestant (a seurt gant ar re o deus graet berzh e Kembre d'ur mare, ha n'int ket bet gwallvesket morse gant ar galloud politikel), an dishualidi, da skouer, a vefe avielekoc'h eget an Iliz katolik.

A-hend-all, ma fell d'an Iliz goulnenn pardon, me 'lavar deoc'h n'he deus ket echu ober rak , o vezañ ma ne c'houlenn pardon nemet digant ar pobloù trec'h - evel ar yuzevion -, 'm eus aon he devo da c'houlenn pardon ivez digant pobloù all a bep seurt deuet da vezañ trec'h en amzer-da-zont. Moarvat n'he deus ket harpet a-gefridi ar yuzevion a glasked distrujañ e-pad ar brezel, hag he zamall a zlefed evit se daoust ma vefe da zere'hel kont ivez eus an dañjer a heskinerezh a vije bet sammet war ar gristenion gwitibunan a-berzh ar galloud naziat. Hogen daoust ha warc'hoazh n'he devo ket da c'houlenn pardon evit bezañ chomet hep he skoazellañ en he stourm koulz hag ar pobloù bihan all e-leiz dre ar bed ? Daoust ha n'o defe ket gellat ar gloer katolik en hor bro saveteñ ar brezhoneg en 19vet kantved m'o defe karet ? Daoust ha ne zlefe ket an Iliz goulnenn bepred pardon evit bezañ chomet hep skoazellañ ar gwerinoù kristen - hini hor bro da gentañ - lazhadeg evit difenn kealladurezh digristen ar republik bourc'hiz gall, hep enebañ an disterañ ouzh ar brezelioù impalaerel renet gant ar galloud-se hag ar galloudoù politikel all arnevez diwanet eus ar rouantelezhioù savet war zismantroù ar gristeniezh . Ha perak ivez n'he deus ket an Iliz anglikan goulnenn pardon evit bezañ sammet war gatoliged Iwerzhon e-pad kantvedoù un dezvad a istud ha ne c'hell-

OFERENNOÙ BREZHONEK

2/4 Gwidel (sul kentañ ar miz) Chapel Sant Mazhev, 10 eur 30.

9/4 Melrann 10 eur

15/4 Kistinid oferenn eured 11 eur

16/4 Kistinid 11e 15 oferenn Sul ar Bleuniou e chapel Sant Matelin (trede sul). **Emvod Breuriez Sant Ildud**

24/4 Skrignag : Lun Fask, Oferenn e Koad Key da 11 eur 30 **Emvod Unvaniezh Koad Key** (gwelout ivez p. 6-7)

30/4 Keranna-Wened : **Pirc'hirinded ar vrezhonegerion** 10 eur 30 Oferenn, 14 e 30 Chapeled ha gousperoù.

1/5 : **Pardon Sant Gwenole Landevenneg** da 10 e 30. Goude merenn e vo klevet Laz Kanañ Penn-Ar-Bed.

E Trelevenez : bep sadorn d'abardaz da 20 e 30 e vez un oferenn e brezhoneg **e-doug ar bloaz**. E-pad ar **sizhunvezh santel** e vo ofisoù da 20 e 30 ivez d'ar Yaou Gamblit ha da Wener ar Groaz. Nozvezh Fask a vo lidet da 22 eur.

ler keñveriañ outañ nemet an hini sammet war ar yuzevien gant an Trede Reich ?

Maz eo bet ken fall an Iliz hag ar gloer, daoust ha n'he doa ket ar Republik gall ar gwir da zistrujañ ar gristenion gwitibunan betek an hini diwezhañ, evel ma klaskjont ober er Vande ? Ha kemend-all na c'hellfed ket lavarout a-zivout an holl gristenion heskinet dre ar bed a-hed an amzerioù ?

Ya, mat e rae ar yuzevion o heskinañ ar gristenion hag o klask distrujañ ar skarenn gristen ? Ya, mat e rae an impalaerel roman o handeñ ar gristenion a zo bet kiriek da ziskar o galloud, evel ma oar pep hini ?

Ha bremañ maz eo deuet an Iliz katolik da vezañ modernour ha sklerijennet mat, daoust ha ne zlefe ket goulnenn pardon evit bezañ spontet a-hed ar c'hantvedoù ar gristenion gaezh kouezhet dindan he c'hraban gant sorc'henoù droch spouronus evel hini an Ifern, pa ouzer forzh penaos n'eus dreistbuhez ebet da c'hedal d'an den en tu all d'ar bez ha pa n'eus mui diwar vremañ pec'hed ebet da vezañ sevenet gant nep hini, pa ouzer eo hollgenveriek pep divezouriezh, ar pe-

(lenn p.8)

ARMAND KERAVEL

gant Youenn OLIER

Aet eo ar stourmer-mañ da anaon e dibenn ar bloaz tremenet ha daoust ma n'en deus ket kemeret perzh e stourm an emsav broadel bodet en-dro da "Guzul ar Brezhoneg" ez eo dav, a gav din, rannañ ur ger diwar e benn.

Ganet e oa e 1910 ; da lavarout eo, e oa eus rummad Maodez Glanndour kentoc'h eget eus hini Roparz Hemon, a oa deuet d'ar bed dek vloaz a-gent.

Eus Terrug, e ledenez Kraozon, e teue tiegezh ar stourmer-mañ, met n'en deus ket betvet e Breizh-Izel war ar maez en e vugaleerezh. E dad a oa klañvdiour er Verdeadurezh, e servij ar Stad enta ; ar vamm a oa kemenezer. A-raok dont da vezañ da Vrest, enta, ez eo bet divroet an danvez-stourmer-mañ, ha, moarvat, ez eo bet an harlu evitañ, evel evidon, un tu da emouezañ ouzh e vreizhadelezh.

Ar pezh a zo da verkañ ivez eo ne oa ket e diegezh eus an tu kleiz (n'oa ket kalz tiegezhioù a seurt-se e Breizh e derou ar c'hantved, nemet e-touez bourc'hizion e kêr). Hervez **Kerlann**, a zo bet e vignon, e vije bet gredus evit ar feiz kristen en e yaouankiz, hag evit gounit e vara eo en doa mennet mont da skolaer a-berzh-stad, hep tremen dre "Skol ar Vistri" avat ; hag hervez Kerlann atav, e vije aet da gentañ en Deskadurezh Vroadel gant an dezvez d'ober abostolerezh kristen, ur mennad a steuzias prim ha dillo diwar e spered, moarvat, rak a-barzh pell e voe eñ e-unan gounezet d'ar gealladurezh sokialour, enebet ouzh an Iliz evel framm, nemet nes hec'h uhelvennadou da zarn eus eorizhoù an Aviel. Diwar e vugaleerezh kristen en doa dalc'het skiant ur vuhezgezh uhel, awenet gant an emröusted d'an uhelbal en doa lakaet de vuhez. Dont a reas tre en Deskadurezh Vroadel c'hall enta evel en ur seurt Iliz, nemet o chom a-hend-all, ur yezhkarour entanet. Skrivañ a ran 'yezhkarour', rak, d'e soñj, edo Breizh er-maez eus an istor, ha n'he doa planedenn ebet evel broad. Trivliadel, angerzel, mar karit, e oa e 'garantez' evit ar brezhoneg.

Daoust ma oa bet Armand Keravel, evel Yann Sohier ha Kerlann, e darempred gant Roparz Hemon hag an emsav broadel e derou ar bloavezhioù '30, ne oa ket aet da heul Kerlann p'en doa hemañ divi-

zet kenderc'hel gant ar stourm foran goude ma oa bet aloubet ar vro gant al lueoz alaman. Do-noe'h e oa, moarvat, e gendre-c'hadurioù kleizour ha sokialour eget re diazezer "Skol Blistin", bout maz eo bet tetet, en derou holl, - evel ar gomunourion c'hall o-unan, a-hend-all, - da vont gant an hent en doa kemeret Kerlann. Hogen, evel ma verken, un den a feiz e oa Armand Keravel, hag en e venoz, emichañs, e oa dreist talvoudoù 'zo da re ar vroarouriezh end-ecun, petra bennak ma oa al lañs ganto e pep lec'h en Europa d'ar c'houlz-hont.

Padal, ne c'heller ket lavarout e voe oberiant er stourm dre an armoù a-enep d'an Alamanned e-pad bloavezhioù ar c'houlz-c'hidigezh, evitañ da gaout neuze, evel lod izili eus "**Strollad Broadel Breizh**", forzh penaos, darempredoù personel tost a-walc'h gant resistañserion 'zo e Breizh. N'en doa ket, a-hend-all, evit kelou se, torret pep liamm gant an emsav peogwir en doa bet tro da vont, a-gevret gant **Kreston**, war skoazell **Roparz Hemon** e 1941, pa oa bet drastet rannidi ar skrivagner e Brest da geñver ur vombezadeg gant ar c'hirri-nij saoz. Pezh a fell din lavarout eo ne voe ket anat a-walc'h roll hag obererezh ar yezhkarour-mañ er resistañs gall evit mirout na vije harzet - evel broadelour brezhon ! - e miz Du 1944, e sigur skrapadeg ar general Allard. Lavaromp ouzhpenn e kendalc'has Armand Keravel da bleustrin hinienoù eus izili en emsav brezhon broadelour goude ar brezel, - da skouer, gant **Yeun ar Go**, ma c'houlenne digantañ alioù evit skrivañ e brezhoneg yac'h ha c'hwec'h. N'eo ket enta da lakaat war an hevelep pazenn gant ur **Per-Jakez Helias**, da skouer.

Bezef pe vezet, servijus e voe dezhañ evelato an darempredoù en doa skoulmet e-pad ar brezel gant stourmerion eus ar gostezenn gleizour gall, pa voe freuzet an emsav broadel da heul an darvoudoù e 1944. Moarvat e soñjas dezhañ d'ar mare-se ne oa nemetañ a gement a vije bet gouest da adsevel emsav ar yezh, da vihanañ, er prantad diaes-hont. Karet en defe, a gav din, bodañ an emsaverion a oa chomet war an dachenn dindan e renerezh. Pa oa bet embannet enta an niverenn "0" eus ar gelaouenn **An Avel**, krouet gant **Yann ar Gall** e miz Gwengolo 1945, enni ur pennad skridaozet ganin er skritur peurunvan,

(lenn pajenn 4)

(diwar ar bajenn 3)

hep din ober a-ratozh, forzh penaos (n'anavezen skritur all ebet), em boa degemeret a-berzh rener **Ar Falz** ul lizher berr, domskrivet kaer gant pluenn-dir skolidi ar c'hentañ derez, ha liv limestra, war ar marc'had, nemet o c'hourc'hemenn din grofs - ne oan nemet un denig yaouank a zaou vloaz warn-ugent, - dilezel war an taol ar skritur-se a oa bet fardet dindan urzhioù an Alamaned. Biskoazh n'em boa klevet anv eus an istor-se, a hañvalas din bezañ ur vojenn pa ne oa roet din diskleriadur ouzhpenn ebet war ar marc'had.

Gellet em bije, eveljust, sentiñ ouzh gourc'hemenn Armand Keravel, ken asur e seblante bezañ en e lavar. Hogen n'em boa ket graet, ha da gentañ, peogwir ne ouien ket re vat piv e oa ar c'henskriver a gase din ken taer malad. Hogen, n'eus forzh penaos, e oa ur broadelour brezhon ac'hanon, ha d'am soñj neuze, e ranked bezañ gall evit bezañ ebet ouzhan Alamaned. Dilezel ar skritur peurunvan evit an abeg a roed din a vije bet, evidon, dilezel ar vroadelouriezh vrezhon, asantiñ d'ar c'heal e oa Breizh parzh kevanus da Vro-C'hall, ur c'heal am boa distaol adal va seitek vloaz. Soñjet em boa enta e oa arabat din plegañ da urzh dizamant va c'henskriver, dre ma c'helle ar vroadelouriezh vrezhon hepken reiñ ur ster d'ar stourm evit ar yezh, pezh na grede ket Armand Keravel, war a seblant; hogen evit gwir, ne glaskas ket ar stourmer-mañ biskoazh, (pezh a reas Roparz Hemon, da vihanañ,) reizhabegañ hervez ur poell bennak an emgann renet gantañ evit ar brezhoneg.

Setu penaos e oan deuet da embann en niverenn "unan" eus ar gelaouenn "An Avel" ur pennad ma oa meret ennañ kudenn ar yezh peurunvan diouzh sellboent ar vroadelouriezh vrezhon, ur pennad a voe kendrec'hus, peogwir e voe darboellet gantañ ar stourmerion a blede gant "Tir na Nog", "Al Liamm", eus Pariz, ha "Studi **hag Ober**" a oa bet dilezet ar "zh" ganto pe n'o doa graet gantañ morse. Va savlec'h, er pennad-se, eveljust, a oa politikel-rik, ha ne c'helle ket bezañ a-hend-all, peogwir e oa bet stignet ar gudenenn e par ar politikerezh gant va c'henskriver, ha me oc'h ober eus ar yezh peurunvan arouez ar vroadelouriezh vrezhon.

A-raok mont pelloc'h, e fell din respont d'an ta-

mall a zo bet graet alies gant Armand Keravel da Roparz Hemon ha d'an emsaverion o deus kendalc'het gant ar stourm e-pad ar brezel. Un dra a ranker lavarout atav: an holl emsaverion - ar re en emganne a-zevri evit ar yezh etre an daou vrezel, - o deus heuliet an hent-se d'ar mare-se, ha kavout a ra din ez eo bet Armand Keravel an hini nemetañ, etouez ar stourmerion bet oberiant en emsav broadel ar yezh renet adal neuze gant **Roparz Hemon**, o chom a-gostez d'ar c'houlz-se. Un dornlevr evel hini **Visant Seite**, *Me a zesk Brezhoneg*, zoken, a zo bet embannet d'ar mare-se. Gwir eo ez eo bet diaezet ar stourm 'lezennel', mar karit, evit anaoudegezh ar yezh gant ar Stad er bloavezhioù warlerc'h; ha ken start ha da Armand Keravel e-unan, e voe evidomp adkreiñ gant an emgann, ha startoc'h c'hoazh, zoken, moarvat, ha danjerusoc'h, ivez; rak ne felle ket deomp harpañ heskerion ar vroadelouriezh vrezhon, dre ma ouiem, adarre ha bepred, ne c'helle ar stourm evit ar yezh gwiskañ ur ster, hag entañ dre se, an danvez stourmerion, nemet e diabell-veled ur vroad vrezhon adsavet, diforc'h hec'h istor hag he zonkad diouzh re ar vroad c'hall.

Aes eo kompren ne voe ket prizet nemeur emzalc'h Armand Keravel goude ar brezel gant ar remziad yaouank a oa erru war dachenn an emsav e 1945 - n'eo ket hepken dre ma lame e savlec'h rannvroelour ha rannyezhelour, 'plouezelour', war ar marc'had, e boell diouzh ar stourm brezhon, hogen ivez dre ma ne glaskas ket rener **Ar Falz** herzel ouzh ar gwallziforc'herezh a voe embreget diwar goust an emsav sevenadurel broadel gant al luskad 'adreizhelour' ma oa dastumet en e greiz aozadurioù a bep seurt, "**Bleun-Brug**", "**Kendalc'h**", "**Ar Falz**" hag "**Emgleo Breiz**" (an daou strollad-mañ o vezañ reolet dreist-holl gant Armand Keravel). O nac'hañ ouzhan emsav broadel pep skoazell diwar gef "**Devezh ar brezhoneg**", da skouer, e venne an talbenn rannvroelour rediañ stourmerion "**Kuzul ar Brezhoneg**" da zilezel war un dro, bepred, yezh peurunvan ha broadelouriezh vrezhon. C'hwervoni a savas, eveljust, diwar an handecrezh-se a-enep d'an emsav a spered broadel. Hogen derc'hel kont a ranker ne voe ket Armand Keravel kiriek e-unan-penn d'ar gwallziforc'herezh a voe renet a-enep da "Guzul ar Brezhoneg": ar re a ziskouezas bezañ ar muiañ chivous en degouezh-

(lenn pajenn 5)

(diwar ar bajenn 4)

se a voe stourmerion a oa bet oberiant en emsav broadel end-eun e-pad ar brezel, hag, a-wechoù, izili eus "Strollad Broadel Breizh". Hogen ret eo lavarout e tistizie ar stourmerion vroadelour diouzh Armand Keravel dreist-holl, en abeg d'e ziskleriadennoù, ken e oa prest hiniennou en o zouez d'e lakaat kenwall gant amaezhierzh gall an Deskadurezh Vroadel pa oa bet berzet gantañ ouzh lod broadelourion yaouank reiñ kentelioù brezhoneg el Liseoù - kentelioù er-maez eus roll-kelenn hollek eveljust; ouzhin-me, da skouer, e oa bet difennet kelenn brezhoneg e Lise Pondivi, abred a-walc'h goude ar brezel, e deroù 1949. A-c'houdevezh, a-hend-all, e oan deuet da soñjal, forzh penaos, ne oa diazez ebet d'an diskred-se, - ha klasket em boa gwennañ ar stourmer-mañ en ur pennad bennak a voe embannet war **Ar Vro**. Evit ur wech ma klasken bezañ jentil ouzh ur rannvroelour ne ris ket berzh nemeur. E-barzh un niverenn eus **Fisele Groñvel** eus dibenn 1961 e voe rebechet c'hwerv ouzhin gant an hini am boa klasket difenn bezañ sachet warnañ disfiz an "**Deskadurezh Vroadel**" o reiñ da soñjal ez itrike dre zindan gant enebourion villiget ar Republik Gall Santel.

Ma ne oan ket evit degemer savboent politikel Armand Keravel e par an emsav dre ma tistruje ar poell anezhañ, oc'h ober eus ar brezhoneg ur yezh rannvroel, miret da viken d'ur renkad kouerion - a zo aet da get hiziv an deiz, forzh penaos, - ne oan ket evit degemer e leviadurezh e meur a geñver all, pa felle dezhañ stagañ tonkadur hor yezh ouzh hini ar rannyezhoù okitanek, a oa, d'am soñj, suroc'h c'hoazh barnet d'ar marv eget hor yezh-ni hon-unan, ul leviadurezh a oa hini ar **Falc'hun** ivez, hag hini ar rannvroelourion a oa strollet e-barzh "**Emgleo Breiz**" ha "**Kendalc'h**" dre vras zoken, ul leviadurezh 'ta a voe difennet e-pad ugent vloaz bennak, betek deroù ar bloavezhioù '70, maz eas al luskad-se da get, amsavet gant ul luskad nevez amparet gant stourmerion ur remziad yaouank a venne bezañ kleizat, nemet a zege-merc, a-hend-all, led-vroadelouriezh an **UDB**.

Daoust m'en doa ranket Armand Keravel kuitaat renadur aozadur **Ar Falz** d'ar mare-se, en doa kendalc'het gant al labour bruderezh en doa renet adal an deroù e metou ar gostezenn gleizour gall e

Breizh, a oa ret hag a zo bet talvoudus, moarvat, hogen hep gellout disoc'hañ war un emsav gwirion, dre ma chome gall a spered ar re a asante reiñ un tammig lec'h d'hor yezh e skolioù an Deskadurezh vroadel.

Ar pezh a c'hellfed hepken kavout abeg ennañ en emzoug Armand Keravel e-keñver an emsav sevenadurel broadel goude ar brezel eo ar gredenenn a seblante embann dalc'hamat hag e pep lec'h, e oa tu hag e vije bet mat d'an emsaverion paouez a labourat hag a ren obererezh digor ebet e-pad ar brezel, pa oa ar galloud alaman o c'houzerc'hel ar vro. Ar gredenenn-se evit gwir n'he deus diazez fetis ebet, ha ne zalc'h kont ebet eus istor an emsav etre an daou vrezel. Hogen lakaomp e vije bet divizet gant Roparz Hemon paouez a embann "**Gwalarn**", chom hep embann "**Arvor**", chom hep ober war-dro ar skingomz brezhonek nag ar "**Framm Keltiek**" - ne vije bet "Framm Keltiek" ebet panevetañ, se a zo anat, - penaos en dije gelllet an emsav broadel addiwanañ war-lerc'h ar brezel? Daoust ma oa bet heskinet kriz ar stourmerion vroadelour goude 1944, e oa chomet evelato n'ebet anezho war an dachenn, bet degaset d'an emsav dre obererezh broadel Roparz Hemon e-pad ar brezel; ha paneveto, ne vije bet adsav ebet d'ar vroadelouriezh vrezhon goude ar brezel ken e vije en em gavet hiziv an 'emsav' evit ar yezh er stad m'emañ hini an okitaneg e deroù ar c'hentañ kantved warnugent; e-lec'h 5.000 a dud o tibanañ evit difenn hor yezh e Keraez, ne vije bet nemet ur 500 bennak evel ma oa e Mar-silho bloaz pe vloaz hanter 'zo. Ne vije bet, ken-nebeut, skol "**Diwan**" ebet, ha ne vije ket arvezet na diorreet hor yezh. Se a zo sklaer. Ha me va-unan, evel an holl stourmerion o deus dasorc'het an emsav a-c'houde 1945, ne vijen biskoazh deuet da vezañ ur broadelour brezhon ma n'em bije ket kejet gant Roparz Hemon e-pad ar brezel. Se a zo sklaer ivez.

Hogen pelloc'h e ranker mont. Politikerezh an emsav brezhon e-pad ar brezel a oa unan retvezek evel hini an emsav euskarat e-pad brezel Spagn etre 1936 ha 1939. Kristenion a oa eus an darn-vuiañ a oa e penn an emsav-se e deroù ar brezel-diabarzh. Daoust da se, n'eo ket bet posubl dezho kemer an diviz d'en em gevrediañ gant **Franco**

(libenn pajenn 8)

ITRON MOLE A CHAMPLATREUX

D'ar 5 a viz Meurzh tremenet e voe skignet gant ar chadenn pellwel Frañs 2, en abadenn Le Jour du Seigneur, an oferenn lidet e chapel Seurezed Karitez Sant-Loeiz e Gwened. Diazezet eo bet an urzh relijiel-se, Seurezed Karitez Sant-Loeiz, gant an Itron Molé a Champlatreux



(ganet Marie-Louise-Elizabeth de Lamoignon, intañvez an Ao. Molé a Champlatreux, bet dibennet e Pariz, da Sul Fask 20 a viz Ebrel 1794, gant ar Republik Gall) deuet da Wened e 1802, da heul an Aotrou Eskob a b-Pancemont a e-houlenne ganti ober war-dro ar beorion.

Ur c'hanved a-raok an Dispac'h gall e oa bet diazezet e Gwened gant an Itron Janed Keleñn a v-Mondeville ur gumuniezh merc'hed a zo o c'hefridi azeuliñ Jezuz kuzhet er Sakramant, e manati An Tad Peurbadel e-tal porzh Gwened. Dibere'hennet an urzh relijiel-se gant ar Republik dizoue, e voe lakaet he madou e gwerzh diwezhatoc'h. An Itron Molé a brenas neuze ar manati hag an dachenn. Eno eo bet diazezet kenveureiezh Seurezed Karitez Sant-Loeiz. Eno e varvas an Itron Molé. Eno emañ c'hoazh ti-mamm ar genveureiezh.

E miz Eost 2 000 en em gavo e Gwened, seurezed o tont a 150 ti bet savet ganto er bed a-bezh (1). Betek ar bloavezhioù 60 e veze dalc'het c'hoazh gant ar seurezed, ur c'hlañvdi, klañvdi Sant-Loeiz, deuet da vout bremañ, en tu arall d'ar porzh, Klañvdi ar Park.

Abaoe pell amzer dija e oa e sonj renerezed ar genveureiezh lakaat da anaout gant Roma, vertuzioù diazezeurezed o urzh. An tad jezuit, an Ao Barral (+ 1966) a voe goulennet outañ sevel un doser-enklask evit an Eskopti. Breutaet en doa evit difenn un doser-enklask heñvel, hini seurez Mari Ivona Garet a Jezuz (renerez an Aogustinezed e Malestreg e-pad an eil brezel-bed). D'ar 26 a viz mae 1960 e voe anavezet gant ur medisinour ha gant an Iliz, relegoù an Itron Molé. Kuitaet o doa ar vered evit bout enoret er bez savet e chapel an ti-mamm.

Pand eo bet kaset enni en ur c'harr sachet gant 12

jav d'ar 4 a viz meurzh 1825 e voe an enor brasañ a zo bet rentet dezhi. Souezhet gant he largetezioù hag he oberoù a garitez e lare he gwaz dezhi : "Larout a reer e ya tre er Baradoz gant ur c'harr 6 jav, ar re zo bet brokus ha karantezus evit o nesañ. Evidoc'h c'hwî, kement a garantez a ziskouezet d'ar re baour, ne viot ket kaset gant ur c'harr 6 jav, gant unan 12 ne laran ket!"

Gwelet e vez c'hoazh en ti-mamm, e Gwened, traoù, dilhad, levrioù a oa d'an Itron Molé, ar gwele e-lec'h ma varvas. Goulenn ouzh ar Seurezed a ranker ober evit o gwelout.

M.G.

(1) Emañ 800 o labourat war tachennoù ar c'heleñn, ar yec'hed, er Stadoù Unanet, Kanada, Haiti, Madagaskar, Italia, Bro Saoz, Italia, Mali, Senegal, Breizh ha Bro-C'hall. Chomlec'h an Ti-Mamm : 18, Plasenn Teodor DECKER 56000 GWENED.

ROLL AN DEVEZH E SKRIGNEG D'AR 24 A VIZ EBREL (Lun Fask)

- 10 eur mintin : lid ha pedenn e dismantrou chapel St-Kaourantin Toull ar groaz, ma lidas Y.V. Perrot e ziwec'haf oferenn.

- 10 eur 30 : lid-eñvor dirak kroaz ar Verzerenti. Evel boaz, e vo lavaret anvioù an emsaverion marvet abaoe Lun-fask diwezhañ.

- 11 eur : lid berr dirak bez Y.V. Perrot e Koad-Kez, ha diouzhtu goude, bodadenn-vloaz U.K.K.

- 11 eur hanter : oferenn dirak chapel Koad-Kez

- Kreizteiz hanter : pred hervez c'hoant pep hini, pe leton-bred war an dachenn, ma vo kavet eno dour tomm, pe pred e ti-debriñ Keneked, priz wardro 80 lur. (Skrivañ pe pellgomz da Fanch Colliou, 37 rue des Girondins 29000 Quimper/Kemper Pg. 02.98.55.24.90)

- ha da glozñ ur gaozadenn diwar-benn an Aotrou Perrot e ti-debriñ Keneked.

Notenn a-bouez : - Goulennet e vez groñs ouzh an dud dont hep panelloù na skritelloù estreget bannielloù Breizh.

BUHEZ UNVANIEZH KOAD KEV E 1999

Un 60 bennak a dud o doa kemeret perzh el lidoù da Lun Fask 1999. Muioc'h a dud a c'hortozomp ar bloaz-mañ abalamour ma oa bet dister ar bruderezh warlene.

En em vodet eo ar c'huzul merañ div wech hag asantet en deus T. Gwilhmod bezañ anvet kadoriad skoazeller ha Denez Goasguen a zo bet anvet sekretour.

Da Ouel Maria Hanter Eost ne oamp ket c'hoazh ur bern izili a-unan gant kerent Yann-Vari Perrot, ur seizh bennak hepken, a gav din. Koulskoude ez eo an hent da skoulmañ ar peoc'h gant tud ar barrez a zo gloazet gant drouklazh an Aotrou Perrot hag an darvoudoù a zo deuet da heul.

D'ar bemp a viz Here en em gavas adarre ar c'huzul-merañ e ti Aogustinezed Gouarez hag e kemerjomp perzh en un Oferenn deiz-ha-bloaz en eñvor d'an Aotrou Bourdellez, en deus kemeret perzh en Emsav goude an Aotrou Perrot (er CELIB peurgent).

Da Ouel Sant Kaourantin, bet da sul ar bloaz-se, hon doa lakaet lidañ un Oferenn e Koad-Kez, evit ar wech kentañ, a gred deomp. Ne oa deuet nemet daouzek den d'an Oferenn-se dre ma ne oa ket bet tro da gas lizhiri d'an izili ha dre ma ne oa ket bet moulet ar c'hemennoù a oa bet kaset d'ar c'hazetennoù... Tri beleg a oa o kenlidañ, un dominikan yaouank en o zouez.

Hiviziken e vo klasket lidañ un oferenn e Koad-Kez bep bloaz d'AR SUL A-RAOK GOUEL KAOURANTIN da 15 eur. Oferennoù all a zo bet lidet en eñvor an Aotrou Perrot : e Treogad, Plougerne ha Rostren.

Gant ar blijadur d'ho kwelout eta a-benn al Lun Fask da zont,

Y. Craff Kadoriad Unvaniezh Koad Kev, 145 str. Talbodeg 29300 BE1 02.98.96.80.44

NB : ar skodenn evit an Unvaniezh a sav da 50 lur bepred. Da gas da F. Colliou (chomlec'h uheloc'h) pe da reiñ dezhañ e-pad al lid e-tal ar groaz. An izili a zo kouviet da gemer perzh en dilennidigezh evit izili ar c'huzul-merañ evit tri bloaz. An emginnoù hag ar galloudoù da votiñ a rank bezañ kemennet d'ar prezidant pe d'ar sekretour (Denez Goasguen 10 str an Ti-Post 29410 Plouencour-Menez).

-Lizher : a-berzh J.Pennec : « Anv Roparz Hemon a zefe bezañ roet d'ur Skol-Veur breizhat (...). **Télérama** a ra dave d'ur pennad skrivet gant R. H. e-barzh **ARVOR** niv. 81 eus ar 24/7/42. Ret eo anavezout ennañ un « dizampartiz » da heul – hep mar ebet – ar samm labour pe ar vuangezh (...). » *Trugarekaat a reomp hor c'henskriver evit an titour-se na brou netra ebet pa seller pizh ouzh an destenn, evel ma lavar e-unan. Diwar hanter lavarennoù silzigit evel-se, er-maez eus ar gendestenn, e c'heller lakaat forzh piv da ziskleriañ forzh petra. Anat eo hon eus aze un taol fulor a-berzh R.H. da heul diviz ar rektor Akademiezh da chom hep kavout mat levri Yann Sohier « Me a lenno ». N'heller tamall netra ouzh R.H. diwar arguzennoù ken dister. Ar c'hontrol eo : enebourien R. H. a rank implij seurt frazennoù kamm... dre ma n'o deus netra a-fed proumennoù.*

MUTOUEST :

Ur skouer bihan a arallekadur dilaur

Betekhen e oan plijet gant MUT 29 : prizioù izel a-walc'h, servijoù dereat... ha brezhoneg war ar responterezh da lakaat an dud da c'hortoz pa bellgomzed dezho, ar pezh a zo rouez-tre e bed an embregerezhioù er-maez eus metou an Emsav.

Met n'ouzon ket dre just petra a zo c'hoarvezet nevez 'zo e bed ar c'hilezennoù e Breizh. Ar pezh a zo sur eo bet dilezet anv MUT 29 evit Pennar-Bed evit sevel ur gilezenn vrasoc'h, MUTOUEST hec'h anv, e liam gant MATMUT eus ar Mañs. MUTOUEST a bled hiviziken gant pevar departamant Breizh mac'hagnet. Daoust maz en ezel eus ar MATMUT hag eus MUT 29 n'eo ket bet goulennet va ali ouzhin. Me 'gave din e oa ur spered demokratel gant ar gilezennoù.

Ma !

Y. Maneguen

°Arallekadur dilaur : aliénation (ster marksat) sans douleur ; °Kilezenn, -ouriezh : Mutuelle.

Emeur o klask **tud a voul vat evit treiñ** e galleg pennadoù bet skrivet gant Langleiz «AR SEIZH AVEL» er gealouenn « La Bretagne ». 137 testenn a zo da dreiñ. Pennadoù aes a-walc'h ez int.

Dont e darempred gancomp. Trugarez d'ar re a c'hello sammañ al labour-mañ : seul-vui ma vo tud oc'h en em ginnig, seul skañvoc'h ar bec'h !

Kenskrivit !

Kelouenn diabarzh Emglev an Tiegezhioù, kevredet e Kuzul ar Brezhoneg, eo Imbourc'h. Ar skridoù, kemennoù, lizhiri ha skodennoù a zo holl da gas da : "Imbourc'h"

Kergreven, 29800 Trelevenez.
Pgz : 02 98 25 10 72. Plr : 02 98 25 18 87
(gervel a-raok kas) eat@libertysurf.fr.

250 lur eo ar skodenn vloaz ordinal, a ro ar gwir da resev ar c'hannadig hag ar stagadennoù trimiziek... Sevel ar ra da 100 lur evit ar re a garfe resev ar c'hannadig nemetken.

LEC'HIENN IMBOURC'H :

http://perso.libertysurf.fr/kannadig

Ar pennoù ne enouestlont nemet o aozerien.

Merour : T. Gwilmod. Diskleriet hervez lezenn. Moulerezh prevez.

(diwar ar bajenn 2 An iliz o c'houlenn pardon)

c'hed nemetañ o vesañ chom hep plegañ da lezennoù ar Stad difaziuz ?

Perak he defe an Iliz da reiñ kentel da nikun diwar-benn sioe'hanañ, oc'h ober un torfed anezhañ, en ur nac'hañ evel-se gwirioù ar merc'hed ?

Eveljust, gouzout a ran, o c'houlenn pardon a-berzh ur framm, e roer pouez d'ar framm e-unan. Hogen adarre, iliz ebet, nag an Iliz katolik kennebeut, n'he deus da gomz en anv ar gristenion pa n'eus bet bis-koazh a ziazezh politikel demokratel d'an aozadur-se.

Laosk a bep hent eo hepken hevelep goulenn mazaviant pa ouzer ervat ez eo graet gant tud trec'het ha peurdre'het, mennet da gentañ, daoust d'ar pezh a gontont, da c'hounit grad-vat ar re a zo o mistri diwar-vremañ. Skouerius ha dellidus e vije bet moarvat hevelep goulenn mar bije bet graet gant ar gloer en amzer ma oa c'hoazh en he sav ur gristeniezh reolet gant an Iliz. Pellzo avat n'eus ket mui anezhi. Y. O.

*Mazaviant : pardon

(diwar ar bajenn 5)

evit herzel ouzh ar gomunouriezh dizoue, dre ma nac'he an darsavidi renet gant ar jeneral-se kedanaout broadelezh Euskadi e stumm ebet. Ar braz eus ar stourmerion vrezhon o deus kendalc'het da stourm e-pad ar brezel a oa ivez kristenion anezho, kristenion frankizour eus ar c'hreiz, ma oa o feiz hag o menozioù dre vras e dislavar gant ar gealladurezh a oa oc'h awenañ ar renad pagan dizenel a oa en e greñv en Alamagn d'ar c'houlz-se. Evel Euskariz, koulskoude, o deus soñjet ar stourmerion-se ne c'hellent ket skoazellañ enebourion ar vroadelezh vrezhon da greñv en-dro en ur galloud a servijfe dezho e Breizh da gas da get hor yezh hag hor c'heneh.

Moarvat ez eo bet kiriek da emzalc'h Armand Keravel, evel da hini ar **Falc'hun**, ur seurt abafed speredel. Re vat, war a seblant, e oa enframmet ar stourmer-mañ en "Deskadurezh Vroadel", evel ma oa Frañsez Falc'hun ivez enframmet re vat e Iliz eskopti Kemper, hag eñ o vennout bezañ deol kement da Janed Ark ha da sant Erwan ! Dre se ez eo manet enouestladur Armand Keravel er stourm evit ar yezh e par an drivliadelezh, hag eñ stag ouzh koun ur gevredigezh a oa barnet da vont da get entanat adal bloavezhioù kentañ ar goudevezh-brezel diwezhañ. Serret e oa ar stourmer-mañ enta en un hent dall.

Kement-se n'en deus ket miret outañ a en em gannañ pennek ha kalonek, hep chanañ, a-hed e vuhez, betek ar penn, hag anzav a ran em eus bet atav un tamm estlamm outañ en abeg d'ar youl a ziskoueze en e striv, anezhañ ur seurt *bos suetus aratro*, o sachañ bepred an alar, stag e sell ouzh an ervenn toullt gantañ ha na verze ket an dibenn anezhi. Bez' e c'heller lavarout en deus kfeleumiet e gefridi feal ha leal, dilaziek a-grenn, a-hed ar bloavezhioù. Moarvat e verite kalz muioc'h eget **Per-Jakez He-lias**, da skouer, e vije bet deroet dezhañ *Kolier an Ermignig*. Marteze n'en doa ket c'hoant kennebeut, rak ne gav ket din e vije bet e chal gant an enorioù. Un den parfet a oa anezhañ a bep hent, hag en ur c'hantved all, emichañs, gant an dro-spered more'hedek a oa dezhañ, e vije bet, marteze, ur person devriek hag emroet holl d'e zlead e Bro-Leon.

Y.O.

Nevez deuet er-maez : « Breizh visions d'Histoire »

gant R. Caerleon ha H. Caouissin.

Dreist-holl e kaver el levr ment A4-mañ 24 skeudenn vras kaer-tre gant Xavier-V. Haas. (60 p.).

E gwerzh 120 lur e ti Brittia BP 305 22193 Plerin cedex.

KANNADIG IMBOURC'H

Mael 2000

Niverenn 5

"AN HANTER EUS YEZHOU AR BED A YELO DA GET ER C'HANT VLOAZ A ZO O TONT"

Setu aze da vihanañ ar pezh a gont David Crystal, ur yezhonour er gelaouenn "Courier International. War ar 6000 yezh bennak a gonter hiziv an deiz, ez eus unan a ya da get bep eil sizhun.

3000 anezho a vez komzet gant nebeutoc'h eget 10000 a dud; pemp kant yezh o deus nebeutoc'h eget kant komzer hag e miz c'hwevrer 1999 e konted, hervez ar Summer Institute of Logistics eus Skol-veur Hantemoz an Dakota) 51 yezh komzet gant UN den hepken !

LEVR AN EIL MIL-VED eo "An Divina Comedia", gant Dante (1265-1321), hervez un enklask bet graet e Bro-Saoz gant ar Sunday Telegraph. Troet eo bet e brezhoneg gant an aotrou beleg Pêr Bourdellez, hag embannet gant Imbourc'h. Diviet eo avat : da dembann ?

AN HU WAR AN EMSAV

E-kreiz ar sizhunvezh santel eo em gavet keloù mantrus tremenvan ur plac'h 28 bloaz da heul tarzhadenn ur vombezenn a lakaer war gont an ARB. Da Wener ar Groaz eo bet gwelet 500 a dud o vanifestiñ a-enep d'ar gwalldaol-se.

Kement-mañ a oa da c'hortoz, deiz pe zeiz. Souezhus eo zoken ne vije ket c'hoarvezet pell 'zo dija, pa sel-ler ouzh ar gwalldaolliou niverus bet sevenet gant ar strolladoù dirgel brezhon abaoe 1932.

Eveljust e c'heller en em c'houlenn ha kaset eo bet da benn evit gwir ar gwalldaol-se gant an ARB rak gwall vuan eo bet tennet splot eus an darvoud gant **L. Jospin** ha **Kofi Yamgnane**, enebour anavezet mat **J.Y. Cozan** e pastell-vro Kastellin. Ha da vilin biv e kas dour an istor-se ? Daoust ha graet e vefe bet ar gwalldaol gant barbouezet ? Savadurioù foran eo a dage an ARB betek-hen ha n'eo ket stalioù-kenwerzh, amañ unan oc'h aroueziañ an "impalaerded amerikan", 'keta, ha n'he deus netra da welout war-eeun gant kudennoù an emsav (Breizh pemp departamant, ar yezh...). Souezhus eo ar c'hemm-se oc'h en em gavout war-un-dro gant tremenvan euzhus ur plac'h yaouank diantek eta.

Ma n'eo ket sur - daoust d'ar pezh a gontar - e vije an ARB penn-kaoz d'an darvoud eo anat d'an holl e c'hell an obererezh pleustret gantañ lakaat buhez ar re all en arvar, ha se abaoe ar penn kentañ. Ar fed nevez eo ne oa ket c'hoarvezet betek-hen, a drugarez Doue. Soñj hon eus avat e oa marvet **Herve ar Bihan** e Gwengamp ha **Yann-Kêl Kernalegenn** e Dineol, int o-daou diwar bombezennoù bet degaset ganto o-unan. Lod a lavar zoken e vefe distroet Yann-Kêl war al lec'h m'en doa lakaet e vombezenn dre m'en doa merzet e oa tud tostik alese, en arvar eus o buhez. Kollet o doa o buhez, int ivez, evel **Laurence Turbee**, nemet int a ouie e oant en arvar eus o buhez hag a gemere ar riskl-se warno.

Er c'hontrol, aze, e oa ur plac'h diantek a-grenn : ur vreizhadez evel milio-
noù all a vreizhadezed, pell-bras moarvat he freder diouzh prederioù an em-
sav, ha pelloc'h c'hoazh moarvat diouzh dieubiñ ar vro dre an armoù.

Ha maz eo an ARB en deus graet an taol, n'eus ket fellet dezho **lazhañ a
voul-gaer** ar vaouez-se, sur eo. Se a zo pouezus-tre : n'eus ket gwir vuntre-



Ar vrezhonez heuzet gant ar gwalldaol gwadec e Kever (2)

(diwar ar bajenn 1)

rien eus paotred an ARB, da vihanañ en doare ma vez roet da gompren gant ar yoc'hstlenn.

Ne vo ket meret amañ ar c'hudennoù a denn da efdusted stourm an ARB hag eus pengadouriezh an emsav dre vras en e zarempredoù gantañ, nann. Graet e vo diwezhatoc'h, hag ur wech ouzhpenn ! Menegomp hepken e respont an ARB d'ur feulster all kalz soutilloc'h, a-berzh ar Stad ha n'emañ ket e stourmerien e tailh da enebit en un doare efdus outañ, anat eo.

Bezot pe vezot, ar pezh a zo da rebechiñ ouzh an ARB en afer-se da vihanañ, bepred maz eo bet sevenet gant tud a lavarfe bezañ en « ARB », eo bezañ sevenet gwalldaolioù hep mestroniañ ar c'halvezerezh a bledont gantañ peogwir ez eus ur plac'h diantek he deus kollet he buhez en abeg da se. Diatebek a-grenn eo an emzalc'h-se : n'eus ket ar gwir da ober forzh peseurt fazi war zigarez kas da benn gwalldaolioù arouezennek zoken. N'eus ket ar gwir da zustrajañ buhez an nesañ, zoken dre zievezhded. Abalamour da se e ranker kondaoniñ a-grenn darvoud Kever.

Bezot pe vezot, al lun war-lerc'h, **Lun Fask** 'keta, en em gavis gant brogarourien all evel bep bloaz e Skrignag e-harz kroaz drouklazh an Aotrou Perrot hag e teuas da soñj din eus komzoù bet lennet e-barzh kazetennig "Yaouankiz" ar bloavezh 1959 (niv.5), d'ur poent ma ne oa ket bet c'hoazh a zisrog "diremed" etre paotred an tu kleiz ha paotred an tu dehou e-touez ar vroadelourion vrezhon. E-barzh an niverenn-se am boa lennet ur pennad diwar bluenn **Yann-Bêr Piriou** a-zivout **Yann-Vari Perrot**. Ober a rae anezhañ "Sant Yann-Vari Perrot" zoken, hag e roe alioù fur d'e geniled yaouank eveltañ d'ar poent-se (**Erwan Evenou**, **Gwenole Ar Menn** hag all, ur rummad a zo degouezhet, daou-ugent vloaz war-lerc'h, d'ar poent ma kemerer e leve, na petra 'ta !). N'hellan nemet lavarout ar memestra : an hent gwellañ evit gouind ar vretoned da stourm an emsav n'eo ket hini ar feulster. Hent an Unaniezh hag ar Garantez eo an hent gwellañ hag a rankfe bezañ anat d'an holl ha pleustret a-zevri gant an holl en emsav, el lec'h m'emañ, gant an donezonou a zo gant pep hini. Gerioù-stur **Unvaniezh Koad Kev** eo ar gerioù-se. Moullet int bet, war aked **Alan Al Louarn**, a gav din, atebek d'ar poent-se eus **Emglev An Tiegezhioù** - kevredigezh-merañ **Imbourc'h** diwar-

OFERENNOÙ BREZHONEK

Miz Mae... « Miz Mari » : Un ofrenn vrezhonek a vez lidet **bep sul er Folgoad da zek eur**. Ar « Pemp Sul » a vez graet eus Miz Mari ar Folgoad.

7/5 Gestel 10 eur Ofrenn ar barrez.

14/5 Plouc'ha 10 eur 30. Ar re a zeuio gant o boued a c'hello debrñ a-gevret war-lerc'h an Ofrenn.

14/5 Gwidel, chapel Sant Mazhev, 10 eur 30. Goude e vo ur pred hag ur c'hermes.

21/5 Kistinid 11e 15 ofrenn e chapel Sant Matelin (trede sul). Emvod Breuriez Sant Ildud.

28/5 Malane Sant Eganton (Gwengamp)

KAMP KATEKIZ EMGLEV AN TIEGEZHIOÙ E Rostren (skol an Itron Varia) eus al lun 21 d'ar sadorn 26 a viz Eost. Titouroù hag enskrivadurioù : Yann Talbot, Presbital, 22 110 Rostren

RETRED VIHAN GANT BREURIEZH SANT ILDUD : e Kistinid eus ar sul 16/7 d'ar Meurzh abardaez. Titouroù : Y.E. Haspot, 12 bis Hent Beauregard 44500 Sant Nazer.

vremañ - war ur follennig e embanned gwechall evit dere'hel soñj eus hor re varv : **UNVANIEZH - KARANTEZ**.

C'hoarzhed neb a c'hoarzh o lenn seurt gerioù a seblant lu ha diamzeret da veur a hini er gevredigezh a vremañ. Ha padal anat eo e vefe kalz efdusoc'h an emsav ma vefe muioc'h a unvaniezh ennañ, ma vefe muioc'h a zoujañ ouzh dibabou pep hini - kristen pe get ; eus an tu kleiz pe a-zehou pe me 'oar 'me !- ha kavet an nerzh hag ar skiant da vont a-gevret war an dachenn emgann, na pa vefe nemetken war hini ar politikerezh hag an dilennadegoù.

Efdusoc'h ha gwirionoc'h e vefe ivez pa fell d'an Emsav sevel e Breizh ur gevredigezh disheñvel diouzh an hini a ginnig deomp ar Stad C'hall.

Kontañ a ra deomp **Youenn Olier** en niverenn-mañ an darempredoù personel en deus bet gant ur stourmer kembreat. An dra boucusañ, a gav din, a oa etre **Youenn Olier ha D. Dafis** eo ar vignoniezh, ar c'hengred, an diforc'h splann a raent o-daou etre ar mignon - dellezek evel den da vezañ karet ha doujet evitañ e-unan - hag ar menozioù, a chom menozioù, a c'heller tuñ outo pe get : se a zo un afer all. War ar pep pennañ en em glevant : ar (lenn pajenn 8)

DAFYDD DAFISgant **Youenn OLIER**

E deroù ar bloaz-mañ ez eo aet da anaon **Dafydd Dafis**, anezhañ ur c'hembread broadelour ha katolik a anavezen a-viskoazh desket mat gantañ ar brezhoneg hag a zo bet a-viskoazh ivez ur mignon da Vreizh ha d'an emsav.

E miz Eost 1947 em boa kejet gantañ evit ar wech kentañ, ha graet anaoudegezh gantañ e skol-hañv "Plaid", en ur gêr vihan eus biz Kembre, Dinbych. Bez e oa anezhañ un den yaouank evelдон, yaouankoc'h evelato, a gav din. Mentet bras hag hirvoan e oa d'ar c'houlz-hont.

Ur broadelour taer a oa anezhañ, ur seurt republikan kembreat, a gave dezhañ e oa gwak "Strollad Kembre", hag a venne dispartiañ groñs Kembre diouzh ar riez saoz. Setu ar pezh en doa displeget din e-kerzh an emzivizoù hir am boa dal'het gantañ e-kerzh an devezhioù gor-hont a Eost 1947, ha me o tont eus Dulenn d'an ampoent-se, goude bezañ kemeret perzh e kendalc'h etrekeltiek kentañ ar goudevezh brezel diwezhañ gant ar soñj da wela-denniñ an **Eisteddfod** ha da bleustriñ war-un-dro dres ivez, skol-hañv "Plaid Cymru".

Soñj am eus e tremme hor mignon a-zevri neuze ouzh diazezdigezh ur strollad republikan kembreat. E-devoud e voe savet unan a c'houdevezh, er bloavezhioù '60 a gav din (n'oufen ket resisaat ar bloaziad), hogen ne gredan ket ez emzelas hor mignon biskoazh ennañ.

En un doare iskis a-wale'h e voe dav din gortoz tost tregont vloaz a-raok kejou gant **Dafydd Dafis** adarre. Hogen e-pad bloavezhioù hir hor boa kenskrivet, e kembraeg da gentañ, ha goude-se e brezhoneg. Evit gwir ne voe implijet a-benn ar fin nemet hor yezh en hor c'henskriverezh.

Ne ouzon ket re vat perak na penaos ez eo deuet D. D. da dommañ ouzh ar brezhoneg. Pa oan en em gavet gantañ e Dinbych ne oa bet nemet kembraeg etrezomp-ni ha ne gredan ket em boa pouezet war-nañ evit ma teske hor yezh. Me an hini eo avat en doa e ditouret diwar-benn ar stourm a rene an emsav en tu-mañ da Vor Breizh, hogen n'eo ket ganin en deus kroget da zeskiñ ar brezhoneg : kentoc'h avat gant **Armañs Ar C'halvez** e-kerzh ar bloavezhioù '50. Bod en doa kavet gant rener Skol Sant Erwan ha gantañ, a gav din, en deus en em c'hourdonet da gomz hor yezh. Deuet e oa ivez da vezañ mignon da **Ivona Marzhin**, m'en doa kejet ganti

pa oa-hi o vevañ e Kembre d'ur mare. Gant an emsaverz-mañ e voe padusoc'h e zarempredoù eget gant **Armañs Ar C'halvez** rak gouzout a reer e varvas hemañ abred-kenañ e deroù ar bloavezhioù '70.

N'ouzon ket ha klasket en doa D.D. skoazell ar C'halvez dre ma oa ur beleg, hag en deuet da vezañ ur c'hatalik d'ar c'houlz-se. Rak, dres, ur metodistad e oa hor mignon a orin, ur metodistad a-viskoazh, evel e c'hourdadou abaoe daou gantved bennak.

Ret eo din lavarout e oa bet anv etrezomp e Dinbych eus relijion e-touez kudennoù all, hag e tiskoueze D.D. ur seurt ranellder e-keñver ar relijion gatolik, hep na vije anat diwar e gomzou e oa dennet a-zevri gant ar «Babistiezh», evel ma

lavare ar protestanted er vro-se betek nevez 'zo. Setu, gant souezh e oan deuet da c'houzout e oa bet hor c'henil kanttroet ouzh ar feiz katolik, hogen ne petra, n'em boa goulnnet biskoazh outañ em lizhiri, peseurt arbenn en doa bet da gemm kravez. Diwezhatoc'h hepken, a-nebeudou, e c'hellis kompren penaos e oa c'hoarvezet an darvoud-se. Hogen evit-se dres ez eo ret dezrevell e vuhez penn-da-benn.

Triwech vloaz bennak e oa **Dafydd Dafis** pa 'm boa graet anaoudegezh gantañ e Dinbych peogwir e oa bet ganet e 1929. C'hwech vloaz bennak a oa etrezomp enta. Lavaret em eus e tiskoueze bezañ ur broadelour taer, disrannour ha me 'oar-me. N'ouzon ket peseurt studioù en doa graet a-hend-all, hogen e-lec'h mont d'ar skolveur, ha kement-se evit chom hep bezañ enluet en arme saoz, en doa goulnnet ober ur seurt servij keodedel er mengleuzioù. An dibab-se a oa kinniget d'ar vroadelourion gembreat a nac'he mont da soudarded e servij ar rouanez saoz (kadwaznac'herezh eta, hervez ar ger almanek), war zigarez e oa peoc'helourion anezho, un arbenn a goustiañs eta, a oa degemeret gant al ezenn saoz.

Dont a reas eta da vezañ mengleuzier-glaou e kreisteiz Kembre, en e rannvro c'henidik, ha

(Lenn pajenn 4)



D Dafis, stourmer kembreat

(diwar ar bajenn 3)

chomet e oa da labourat eno e-pad seizh bloaz a gav din. N'ouzon ket avat ha ne voe ket drastus evit e yec'hed a-c'houdevezh ar seurt galeoù e oa bet barnet dezho gant al lezenn saoz. Bezet a vezo, un niver a iwerzhoniz deuet d'ober o annez da rannvro Morganog a oa o labourat er mengleuzioù abaoe dibenn an 19^{vet} kantved hag e tiegezh unan anezho e kavas hor mignon danvez e wreg hag houmañ, na petra, ur gatolikez. N'ouzon ket ha kantreñ a reas hor mignon da relijion e wreg en abeg d'e zimeziñ. Kavout a ra din kentoc'h e voe degaset d'henn ober da heul ur seurt burzhud a oa c'hoarvezet en e diegezh pa oa bet saveteet unan eus e vugale, ur mab a oa war var da goll e vuhez da heul ur gwallzarvoud. Setu pezh a gomprenfen a-walc'h. Pezh a zo sur eo e voe hor c'heneil diwar neuze ur c'hatolik gredus, o heuliañ pervedh lezenn an iliz katolik, o kemer perzh a-zevri en he buhez, en ur vro e-lec'h m'he doa kollet he gwirzioù abaoe ma oa bet sammet war gembreiz an adreizh protestant gant ar rouaned saoz.

N'ouzon ket mui penaos on deuet da c'houzout kement a zisplegan amañ. Moarvat eo bet kontet din gant va mignon pa grogis d'e zaremprediñ endro adal deroù ar bloavezhioù '80, e-kerzh beajou etrekeltiek voe aozet gant ar stroll "Kristenion Breizh". E 1981, da skouer, e oan aet div wech da Gembre, e miz Ebrel hag e miz Eost, ar wech kentañ gant **Marsel Klerg**, a-gevret gant un daou-ugent bennak a bir'hirined eus Breizh, brezhonegerion tutaet gant person Bulien, ha me en o zouez, a-benn kevarc'hañ ar Pab a oa o veajiñ e Breizh Veur d'an ampoent hag a lidas an oferenn e Caerdydd. En degouezh-se en doa Dafydd Dafis root din bod en e di, nepell diouzh tikêr Maesteg. Edo e wreg o paouez mervel d'ar c'houlz-se, yaouank a-walc'h c'hoazh, ha c'hoarvezout a rae gantañ neuze rannañ ur ger bennak diwar he fenn. Ne oa ket deuet a-benn da zeskiñ mat kembraeg, a-walc'h avat evit ober gant ar yezh-se er gêr, hogen, emezañ, diwall a rae mat e ve implijet nemeti gant he bugale, en o darempredoù gant o zad ha kenetrezo. Evit gwir e oa deuet e vugale da vezañ kembraegerion ampart dre m'o doa graet o holl studioù er skolioù kembraek a oa bet krouet er vro daou ugent vloaz 'zo. Dafydd Dafis a oa bet e-touez harperion c'hredusañ ar skolioù-se e Maesteg hag en-dro d'ar gêr-se, hanter-hent etre Caerdydd hag Abertawe, un tolead a

zo bet kembraek a yezh penn-da-benn betek dibenn an 19^{vet} kantved. Genidik e oa hor mignon eus Pontrhyd, e parrez Llangynnyd ("Langonned" ?) en un ti ma oa bet ganet ennañ ur saver imnoù kembraek. Miret e oa bet er rannvro ur rannyezh arbennik eus Morganog ma oa hor mignon stag-tre outañ. Soñj am eus e tamalle lod skolaerion gembraek, a ziskoueze disprizout ar rannyezh-se. Evit-se hag e keñverioù all e oa eus hor mignon ur gwir breizhizelad : ne gompren ket penaos e oa aet perzhidi beaj kentañ Kristenion Breizh e Kembre betek Llandrindod, war harzou Bro-Saoz, en un tolead digembraek abaoe meur a gantved, ur seurt Breizh-Uhel, 'keta. Ur wech all e komprenis e-kerzh un diviz ne zouge ket kalz bri d'ur c'hembraeger all dre ma oa anezhañ un nevez-kembraeger, pe a orin saoz zoken ! Paotr e gornbro e oa D.D. enta, ha bourret en doa ouzh va lakaat da weladenniñ mirdi ar vengleuz m'en doa labourret enni a-raok dezhañ dont da vezañ darlizhour war an armerzhouriezh en ur skolaj en Abertawe, hag eñ douget da istor kozh e rannvro c'hennidik eus Morga-

nog.
A-hend-all, e-giz m'em eus merket, e oa un ezel gredus eus e barrez katolik. Soñj am eus eus an iliz, a denne kalz, e par an adicladerezh, da n'eus forzh peseurt chapel emdennat eus Kembre. Kaset en doa ac'hanon neuze da bir'hirinañ e-tal ur feunteun e-lec'h m'edo en he sav un delwenn eus ar Werc'hez, e lein ur menez ma tizhed diwar al lein anezhañ un taol-sell kaer war greisteiz Kembre hag ul lec'h-pediñ gouestlet da **Itron Varia Penrhys**. Bamet e oan bet o tizoleiñ ar feunteun hag al lec'h-pediñ-se en enor d'ar Werc'hez e-kreiz ur vro bet gounezet d'ar brotestantiezh pevar kantved a-ziagnet.

Evit gwir e oa eus hor mignon ur c'hatolik deol, ha douget zoken d'ur seurt hengounelouriezh a glote gant un dehouelouriezh, evel ma verzis o tegemer digantañ lod kelaouennoù saoznek en doa daveet din. Me 'laka e oa e savboentoù awenet gant tezen-



Itron Varia Penrhys

noù ar frankembregerezh, a oa difennet gantañ, moarvat, en e gentelioù er skolaj ma kelenne ennañ en Abertawe. Er c'helaouennoù-se e tifenned ur meni mirelouriezh e par ar gravez hag ar gevredigezh. Mat e kave arvezioù 'zo eus leviadurezh ar gentañ vaodiernez **Thatcher**, a-du gant ar c'hembraeg. En aferioù diavaez ivez, da skouer da geñver brezel an inizi malvinat. Klemm a rae a-zivout tuadurioù sokialour ar 'Plaid', hep kentañ ar strollad saoz 'Labour', en ur anzav e oa e vugale-eh douget er c'hontrol d'ar sokialouriezh.

E 1992 e komprenis un tamm e savboent, diouzh maz erzerche ur c'hoant da griañ talvoudegezh kristen ur gevredigezh henvoazel o steuziñ dindan e zaoulagad. Un tamm souezhet e oan a-wechoù pa gleven anezhañ o tifenn menozioù 'zo hogen na petra, n'em boa-me ali ebet war gafañ 'zo, a denne da saviad Kembre ha emsav Kembre e-unan.

E deroù ar bloavezhioù '90 en doa prenet un ti nevez. Bourrañ a rae en e annez, a zisplege din, ha plediñ a rae gant obererezh an emsav kembraeger eus e gornbro, o kenskrivañ e kelaouenn e gornbro **Yr Hogwr** e-lec'h ma kaven e sinadur e-traoù lod pennadoù. Gouzout a raen a-hend-all e rae war-dro ur c'hevredad da wareziñ al loened. Un den mat e oa e gwirionezh hag ur mignon feal ha gant glac'har e teuis da c'houzout un tremenvan a reas dezhañ adkavout, miret er bed all, ar Gembre gristen gembraek m'en devoa mennet stourm eviti a-hed e vuhez.

Y. O.

Darlizhour : Gg Conférencier. Chapel emdennat : Ranniliz protestant en em dennet diouzh beli an iliz anglikan stadel. Erzerche : Gg manifester, er ster oredoreriezhel. Kriañ : saveteiñ

ATODENN D'AR PENNAD A-ZIVOUT A. KERAVAL

Unan eus an arbennoù a reas din disteurel emvenn A. Keravel ha F. Falc'hun war e lerc'h da ren an emgann evit ar yezh e-lec'h Roparz Hemon e voe, moarvat, an diouer a breder a-zivout ar ster hag ar pal a oa da lakaat dezhañ a-berzh an daou zenmañ. Kavout a ra din n'o deus nag an eil nag egile skrivet biskoazh an disterañ pennad n'o defe disklriet ennañ peseurt talvoudegezh a oa d'ar yezh, na peseurt dazont a c'helle bezañ eviti. Da nebeutañ en doa Roparz Hemon displeget e soñj war ar c'hrafoù-se e-barzh "*Ur Breizhad oc'h*

adkavout Breizh". An eil hag egile, koulz ha Visant Seite pe F. Meveleg, o deus graet van da grediñ betek an diwezh e oa tu da saveteiñ ar yezh poblek war ar maez. En em c'houlenn a ran avat ha ne oa ket azvanek adal an deroù ar feiz a ziskoueze kaout A. Keravel e dazont ar yezh poblek. E 1961, da skouer e kinnige hemañ -erlec'hiañ ar brezhoneg ouzh al latin e kelennerzh eilderez ar skoloù hag al liseoù, en un emvod eus "Kendalc'h" a oa renet en Oriant er bloaz-se. Da lavarout eo, sellout a rae A. Keravel ouzh ar brezhoneg evel ouzh ur yezh varv adal ar mare-se, sonnet er stumm rannyezhel dizunvan a oa dezhi war ar maez gant an diwezhañ komzerion. Ne gave ket dezhañ kennebeut e c'helled ren ar stourm evit ar yezh er-maez eus tachenn nemeti ar skolioù roelet gant ar Stad, da lavarout eo, reolet gant un amezhierezh enebet a-viskoazh ouzh hor yezh.

Y. O.

Lizher a-berzh Loig Kervoas : Dedennet-meurbet ez on bet gant pennadoù Youenn Olier diwarbenn an iliz o c'houlenn pardon. (...) a-zivout enzalch'an iliz e-keñver plegenn griz ar yuzevion e-pad an eil Brezel-Bed.

Da gentañ, piv a ouie petra ?

Eveljust, an holl a ouie e veze heskinet ar yuzevion gant Hitler en doa c'hoant da skarzhañ anezho diouzh kement bro m'en doa lakaet e grabanoù warno, evel ma veze heskinet ar gomunourion, ar rezistanted hag all...

Met piv a ouie e veze lazhet ar yuzevion avilionoù e mougerezhioù greantel evel re Auschwitz, Treblinka, Sobibor hag all... ? Daou pe dri renta-kont digant yuzevion achapet alesont o doa tizhet an aozadurioù yuzev etrevroadel ha gouarnamantoù ar Re Gevredet war-dro 1942-43 met da grediñ a zo ne grede den enne. Implijet eo bet ar stlennadennoù-se, gwir eo, evit kreñvaat ar moederezh-brezel, met d'am meno, evit an dud e karg, ne oa anezho nemet kelachoù diwir (evel daouarnioù troc'het ar babigoù belgiat e-doug ar Brezel-Bed kentañ) rak a-hend-all, n'eo ket Doue posubl n'o dije graet NETRA da lakaat un termen d'an euzh-se, betek fin ar brezel.

Da eil, evit ar pezh a sell ouzh an iliz hag ar Pab, ret eo derec'hel soñj e oa Bro-Bologn en amzer-se evel bremañ ur vro gatolik-rik hag e oa du-hont

(diabarzh pajenn 8)

SEIZH LEVR WARN-UGENT, NAV SKRIVAGNER, UR C'HELOU MAT

Ar Bibl, a ouzoc'h, a dalvez ul levraroeg gwirion a gaver enni div lodenn : an Testamant Kozh hag an Testamant Nevez. 39 levr, skrivet dreist-holl en hebraeg (pennadoù zo en arameeg), a ya d'ober an Testamant Kozh, gant 8 levr ouzhpenn e gresianeg er Bibl katolik (n'o c'haver ket er Bibl protestant). 27 levr a ya d'ober an Testamant Nevez, skrivet e gresianeg penn-da-benn.

Ar Bibl a zo bet skrivet gant daou-ugent skrivagner, pe se. **Nav skrivagner** o deus skrivet an Testamant Nevez. Emaomp o vont da gomz diwar-benn an nav den-mañ, o deus resevet ur ministrerezh uhel-kenañ digant an Aotrou: lakaat dre skrid **keloù mat** ar Silvidigezh e Jezuz Krist.

Ret eo lavarout da gentañ, ez eus, e gwirionez, un oberour nemetañ en deus skrivet ar Bibl en he fezh : ar Spered-Santel eo hemañ. Ar skrivagnerien emaoamp o vont da venegiñ, a oa binviñ etre daouarn ar Spered-Santel (n'ouzon ket hag en e c'hellan ober anv eus daou dorn ar Spered Santel, met o vezañ maz eo bet krouet an den diwar skeudenn Doue, e kredan implijout an dro-lavar-se). David, Izaia, Daniel (evit an Testamant Kozh), Paol, Pêr, Yann (evit an Testamant Nevez), hag an holl re all, a oa ministred Ger Doue. Dont a ra "ministr" eus al latin "minister", a c'hell bezañ troet gant "servijer, mevel". Oberourien ar Bibl eta a zo bet servijerien dibabet gant Doue evit diskriñ e C'her. Renet int bet gant Spered Doue evit kas da benn al labour priziuz-se.

Setu neuze an nav den o deus roet an Testamant Nevez deomp, hag al levrioù skrivet gant pep hini.

MAZHEV 1 Aviel
MARK 1 Aviel
LUKAZ 1 Aviel + levr Oberou an Ebestel
YANN 1 Aviel + 3 Lizher + an Diskuliadur
PAOL 13 Lizher (Romaned, 1Korintidi, 2Korintidi, Galated, Efezidi, Filipidi, Koloseidi, 1Tesalonikidi, 2Tesalonikidi, 1Timozeoz, 2Timozeoz, Titoz, Filemon)
JAKEZ 1 Lizher
PÊR 2 Lizher

JUD 1 Lizher
un den dianav 1 Lizher (Hebreed)

MAZHEV

Daou anv a oa dezhañ rak Levi a veze graet anezhañ a-wechoù ivez. Servijañ a rae ar gouarnamant roman en ur ober ur vicher ispisial: tailhanter e oa. Edo Mazhev-Levi war e labour pa voe galvet gant Jezuz. Diouzhtu e tilezas e garg evit heuliañ anezhañ. Evel Yann ha Pêr, Mazhev a oa unan eus an Daouzek abostol dibabet gant Jezuz evit bezañ dalc'hmat gentañ e-pad e vinistrerezh war an douar.

MARK

Anavezet eo evel ur c'hristen gredus; sikouret en deus Paol ha Pêr e labour ar mision. Moarvat e veze e darempred gant Pêr dreist-holl. Mark a seblant bezañ bet ul lesanv, rak Yann e oa e anv gwirion. Meur a wech e vez komzet anezhañ en Oberou an Ebestel, evel "Yann lesanvet Mark". N'ouzer ket hag en deus anavezet Jezuz e-pad m'edo o vevañ war an douar, met n'edo ket Mark e-touez "kelc'h" an Daouzek. Hervez darn vrasañ an deologourien eo testiñ Pêr a zo bet skrivet gant Mark en e Aviel.

LUKAZ

Lukaz, medisin a vicher, a oa un den desket bras. En hepken, a-douez an daou-ugent skrivagner bennak a zo bet skrivet ar Bibl ganto, ne oa ket yuzev. Beajet en deus gant Paol ha moarvat hen anavezet mat. N'ouzer ket peur e oa deuet Lukaz da vezañ kristen. Pouezañ a ra en e Aviel war ar parañsoù burzhudus graet gant Jezuz, ar pezh n'eo ket souezhus a-berzh ur medisin. Boemet eo bet sur a-walc'h gant ar stumm-se eus oberenn ar C'hrist.

YANN

Yann hag e vreur, pesketaerien a vicher, a voe galvet gant Jezuz e-pad ma oant oc'h addressañ o rouedoù e-kichen o zad. Unan eus an Daouzek e oa Yann. Jakez e vreur, ha Pêr o deus kemeret perzh e darvoudoù speredel dispar, evel treuz-neuziadur Jezuz. Pa oa war ar groaz, Jezuz a roas da Jezuz kefridi da Yann da gaout preder ouzh Mari. Aviel ha lizhiri Yann a bouez war galloudegezh karantez hor Salver. Skrivet eo bet

(lenn pajenn 7)

(Diwar ar bajenn 6)

ivez gentañ an Diskuliadur, hag a zo al levr profedel nemetañ eus an Testamant Nevez.

PAOL

Istor Paol a zo anavezet mat. Ober teliennou e oa e vicher. Da gentañ e stourmas a-enep an Iliz, dre lakaat ar gristenien da vervel. Saoul a veze graet anezhañ en amzer-se. Met an Aotrou Jezuz en deus dibabet anezhañ evit brudañ ar c'helou-mat e-touez ar baganed. Jezuz en em zispakas dezhañ er mare dereat (moarvat er bloavezh 32), ha Saoul a zeas da vezañ kristen, ha zoken un abostol meur. Cheñchet e oa bet e anv: ne voe ket anvet Saoul ken, met Paol. Unan eus ar visionerien vrasañ a zeas da vezañ, dre vrudañ an Aviel trema ar c'hornog. Trizek lizher skrivet gentañ a vez kavet er Bibl. Pleustrañ a reas enno war danveziou a bep seurt, evit sikour ac'hanomp da greskiñ e meur a dachenn: er feiz en Doue, e anaoudegezh personel an Aotrou Jezuz Krist, er gomunion gant ar Spered-Santel, e meizerezh ar silvidigezh "beurzougou", e santeladur hor buhez pemdezic.

JAKEZ

Ul lizher a zo bet skrivet gant Jakez, hogen ur gudenn : zo : pevar Jakez a zo meneget en Testamant Nevez, ha den ne oar pehini en deus skrivet al lizher-mañ. E deroù al lizher e vez kavet, evel kustum, ar saludoù, a gomz an oberour enno diwar e-benn. Berr eo ar frazenn: "Jakez, servijer da Zoue ha d'an Aotrou Jezuz Krist, ...". Jakez a gelenn stummoù pleustrek ar vuhez kristen. Alioù talvoudus a vez roet gentañ.

PÊR

Pêr, anvet ivez Simon, eo ar muiañ anavezet eus an Daouzek. Pêr a oa pesketaer a vicher evel Yann. Pêr a gare kalz an Aotrou; ar Bibl a ziskouez un den un tamm diboelek e derou e vuhez kristen, met un abostol bras heñchet gant ar Spered Santel e barr e vinistrerezh. Daou lizher skrivet gentañ a gaver en Testamant Nevez. Kavet e vez enno, evel e skridoù Paol, komzoù kreñv evit magañ enoù ar gristenien.

JUD

Jud en em ziskouez evel breur Jakez. Pe Jakez? ... Berr eo e lizher, hogen Jud a implij ennañ gerioù nerzhus evit diwall ac'hanomp diouzh an temptadur hag ar pec'hed.

UN DEN DIANAV

Skrivagner al lizher d'an Hebreed eo hennezh. An deologourien a sell peurvuiañ outañ evel ouzh ur c'henlabourer da Baol. Stumm-skrivañ e lizher a zo resis ha dezrannel. En ur lenn anezhañ, e komprenomp muioc'h al liamm etre an Testamant Kozh hag an Testamant Nevez. Ennañ eo, e vez kavet termenadur spis ar feiz (pennad 11, gwerzadoù 1 ha 6). Lukaz BERNIKOD

DIV BEDENN GANT YANN BAOL II O TENNAÑ DA GABLUSTED AR GRIS- TENIEN E-KEÑVER KENEL AR VRE- TONED DA SKOUER.

Aotrou Doue, hon Tad, krouet hoc'h eus an den, gwaz ha maouez, diouz ar skeudenn hag an hañvalidigezh ac'hanoc'h. **mennet hoc'h eus e vefe disheñvel ar pobloù e-barzh unanietz tiegezh mab-den**; hogen, a-wechoù, n'eo ket bet degemeret e oa par ho pugale an eil re d'ar re all, ha pec'het o deus ar gristenien dre ober astud eus tud'zo ha dre o lakaat er-maez eus ar gevredigezh, oc'h asantiñ d'o gwallziforc'hañ dre ma oant disheñvel dre ar ouenn pe ar genel. Pardonit-c'hwil dimp ha roit dimp ar c'hras da **barañ ar goulioù a zo anat c'hoazh er gevredigezh** en abeg d'ar **pec'hed-se**, en doare m'en em santimp holl ho pugale.

Aotrou Doue, mestr an hollved, Tad an holl dud, goulennet hoc'h eus ouzhip, dre ho Mab, karout hon enebourion, ober vad d'ar re hon c'hasa ha pediñ evit ar re hon heskin. Hogen, gwall alies, o deus ar gristenien dislavaret an Aviel, hag, o plegañ da boellegezh an nerzh, o deus gwallet gwirioù genelioù ha pobloù, en ur zispriuzout o sevenadurioù hag o hengounioù relijiel; diskouezit dimp ho pasianted hag ho trugarez, ha pardonit-c'hwil dimp. (tr. P. Kalvez)

ALIOU MAT IZIDOR

Gant ar pedennoù e vezomp glanaet, gant al lennadennoù e teuomp da vezañ desket; mat eo an eil tra hag egile, mar bez tu; ma ne vez ket tu, gwell eo ar pediñ eget al lenn. Neb a venn bout atav gant Doue, a zle pediñ alies hag ivez lenn alies. Rak pa bedomp ez eo ni a gomz ouzh Doue, ha pa lennomp ez eo Doue eo a gomz ouzhip.

Diwar lenn ha prederiañ eo e teu pep gwellaenn. Rak ar pezh na ouzomp ket a zeskomp diwar lenn, hag ar pezh hor bez desket a viromp dre ar prederiañ. (tr. Klerg, *Lennadurioù Kristen*)

Kenskrivit !

Kelaouenn diabarzh Emglev an Tiegezhioù, kevredet e Kuzul ar Brezhoneg, eo Imbourc'h.

250 lur eo ar skodenn vloaz ordinal, a ro ar gwir da resev ar c'hannadig hag ar stagadennou trimiziek. Sevel ar ra da 100 lur evit ar re a garfe resev ar c'hannadig nemetken.

Ar skridoù, kemennoù, lizhiri ha skodennou a zo holl da gas da :
Imbourc'h, Kergreven, 29800 Trelevenez
Pgz : 02 98 25 10 72 eat@libertysurf.fr
Plr : 02 98 25 18 87 (gervel a-raok kas).
<http://perso.libertysurf.fr/kannadig>

Moulerzh prevez. Merour : T. Gwilhmod
ISSN : 1144 357X CPPAP : 50015 .Ar pennadoù ne enouestont nemet o azerien. Diskleriet hervez lezenn.

(diwar ar bajenn 5) kantadoù a wezhourion guzh pe spioned evit ar Vatikan. Dibosubl e oa d'ar Pab chom hep gouzout petra a oa o c'hoarvezout. Ma n'en deus gouvezet netra, neuze e oa dalc'het mat ar sekred gant an Nazied.

Da drede, penaos kompren emzalc'h Rabin Meur Roma en deus dilezet ar yuzeverezh goude ar brezel evit en em dreiñ d'ar feiz katolik, estlamm ha kendrec'het ma oa bet o welout petra en doa graet Pius XII evit difenn ha savetaat ar yuzevion, ma vije bet ken diseblant ar Pab-se e-keñver tonkadur euzhus ar yuzevion ?

Da echuiñ, goude ma vez meneget stad truezus hag heskinerezh ar Yuzevion e-pad ar brezel, e levrioù enforennoù Eisenhower, Churchill ha De Gaulle, n'eus frazenn ebet, ger ebet enne war ar shoah pe ar mougerezhioù !

Daoust hag eñ ne gouezh ket se dindan darn al lezenn Gaysot, daoust hag eñ ne vefe ket mat berzan al levrioù azgwelour-se ha skarzhañ anvioù an dud veur-se diouz kement skritell-straed pe blasenn pe diwar kement lestr-brezel a zoug o anvioù ? L. K.

(diwar ar bajenn 2)

gwir evit o fobloù da virout o yezh ha da adkavout o frankiz politikel.

Peur e reno en emsav an aergele'h a vignoniezh wirion etre an holl stourmerien, en tu all d'ar menozioù a vag pep hini war doare ar gevredigezh a fellfe dezhañ pe dezhi sevel e Breizh en amzer da zont ? Kalz ne vern ! Ar vreted eo a zibabo p'en em gavimp d'ar poent-se.

Ar pezh 'zo sur eo n'eo ket miret al Lun Fask d'ar gristenien vrezhon hepken : evit an holl emsaverien eo an hent bet pleustret gant an Aotrou Perrot : hent ar garantez evit e vroadour a Vreizh, zoken ar re enebet ouzh e vennadoù a vroadour brezhon hag hent an unaniezh en Emsav (gwelout e zarempredoù mat gant Yann Sohier, rener Ar Falz, da skouer). Diouzh un tu all avat e kondaonas agrenn emzalc'h ar re a gredas sevel daoust da se ar "Bezenn Perrot" war-lerc'h e aberzh.

Salv ma servijo an darvoud-mañ eta da urzhiañ gwelloc'h mennadoù an emsaverien ha da zisteurel ur feulster gwaddek na ra nemet pellaat ar c'hedveno diouzhimp. T. G..

ROPARZ HEMON : SELL-BOENT AN ARZOUR

Biskoazh kemend-all. Rebec'h a rafé hiniennou d'hor skrivagner meur bezañ savet e oberennoù dre skrid ha dre gomz endra m'edo renad Vichy o kenlabourat gant an alouberton alaman. Droch-mik eo kement-se : Daoust ha rebec'h a rafé da Shakespeare ha da vMolière bezañ bet o labourat dindan ren rouaned kriz ha gav' ? !

Un abuzer pinvidik bennaket en defé tec'het da Vro-Saoz pe da Amerika d'ober "resistañs" ... Eñ avat a zo chomet amañ da oberiañ evit e bobl, da sevel lies oberenn eviti, da skañvaat e-giz-se he foanioù hag he zrubihoù er marevezh trist-se. En askont da se e vo douget bri dezhañ a-hed ar c'hantvedoù gant an holl re a vrezhoneg c'hoazh war an douar-mañ. Un dlead a vemor hon eus-ni, brezhonegerion a-vremañ, en e geñver. Leuniet ha peurluniet en devo Roparz Hemon e gefridi a arzour meur dre e oberennoù a-vil-vern hag a vil seurt : Piv o nivero pizh hep diankou ? Moarvat e vefe tu d'an emsaverion a-vremañ goulenn pardon (ar pezh a zo diouzh ar c'hiz meurbet evel a ouzoc'h) evit traou bet skrivet gant Roparz Hemon ha n'int ket "politically correct" hervez sorc'hennou al lobiou bedel. En em izelaat ne rafemp ken dirak enbourion douet hor feiz hag hor yezh. Fentus a-walc'h eo, avat, gwelout tud sañset da zifenn "gwirioù Mab-den" o kemer da arouez anv ur skrivagner gall (Voltaire) hag a denne e vevañs diouzh "kenwerzh an ebena", da lavarout eo sklavelezh Mab-den. Ha kentelioù a zegemerfemp digant tud a seurt-se ? !

Ra vezo adlennet, ha lennet evit ar re n'o defé tamm deskamant kristen ebet, parabolenn an treust hag ar blouzenn Ivon Morvan Mzh 7, 1-5).

KANNADIG IMBOURC'H

KENDALC'H UR C'HAVAILH

An holl a oar en deus ranket kadornad Diwan divadeziñ Skolaj Roparz Hemon.

An irien a-enep an Emsav n'eo ket chomet a-sav evit kelou-se : bremañ ez eus anv da zivadeziñ Kreizenn Roparz Hemon Gwengamp ha Skol Loeiz Herriou (Diwan An Oriant). Lod all a glask abeg e skridoù bet skrivet tri ugent vloaz 'zo evit divruañ tud evel Yann-Vari Perrot. Emsaverien vev a vez taget taer ivez : Martial Menard ha Per Denez zoken.

Kavet hon eus mat gouestlañ un tamm mat eus ar c'hannadig d'an aferioù-se abalamour d'ar pouez a vez roet dezho er yoc'hstlenn evit hon divruañ : ret-mat eo deomp prederiañ war ar pezh a c'hoarvez... hag e brezhoneg e fell deomp kas ar preder-se en-dro amañ.

EURIOÙ PASION AN AOTROU KRIST

Talvoudus eo al levr-se evit e skeudennou kaer diwar zorn F. Jobbé-Duval hag evit an testennoù anezhañ - e KLT, siwazh - bet kempennet gant Y.V. Perrot diwar brezhoneg ar XVIvet kvd.



310 lur eo an embannur keinet (115 p.) ha 90 lur eo evit an embannadur ordinal. Brittia BP 104 22191 Plerin cedex.

Skrivet en deus Roparz Hemon en un tu bennak e oa dav deomp sevel frammoù deomp-ni hon unan, « paet gant hon arc'hant-ni », hag en deus savet zoken, a gav din, ar roll anezho, o tiskleriañ e vefe dieubet ar vro a-raok bezañ kaset da benn an hanter eus ar raktres-oberiañ-se war an dachenn sevenadurel. Roparz Hemon eta ne oa ket ur faskour nag un nazi anezhañ : un demokrat an hini e oa eta.

Ar gwir en doa, ar gwir hon eus da c'hoantaat en em zizober eus beli Pariz, rak en ur riezvroad a lavar bezañ demokratel emaoimp o vevañ : kement-mañ a vez anvet « Frankiz-estaoñ » ... Netra da welout gant ar sponterezh a lakaer da ren war dilennidi ha implijidi Diwan p'o lakaer da zinac'h o zad speredel, Roparz Hemon, diazezer hon emsav, ha pa ne gredont ket e zifenn a-zoare en abeg d'ar skorennoù a vefe nac'het neuze.

Anv Roparz Hemon a vo roet spi hon eus un deiz da ensavadurioù, straedoù ha plasennou niverus en hor bro ha se evit meur a abeg : Tad an Emsav sevenadurel a vremañ ez eo, ul labourer dispar eo bet, ur skrivagner hag ur yezhonour a gentañ troc'h eveljust ivez, met dreist-holl, ret eo henn diskleriañ divezh d'an holl ha dreist-holl er mare-mañ - anez ober ur groaz war paliou an emsav - abalamour ma oa ur brogrour feal da Vreizh hag un demokrat a zoare, doujus ouzh al lezennou.

Netra nemet abalamour da se e telleze anv Roparz Hemon bezañ roet d'ar skolaj brezhonek kentañ eus istor Breizh : eñ, da vihanañ a oa a-enep ar feulster !

T.G.

NIVERENN 6

AR BEDENN EVIT AR VRO eo anv ur c'hannadig a voe embannet etre 1953 ha 1972 gant Maodez Glanndour ha Madalen St Gal de Pons evit tud "Ar bedenn evit ar Vro" (tud o'e'h ober gant levrig-pediñ "Ar Bedenn evit ar Vro") ha kement hini a blijje dezhañ resev ar follennou-se, a zeue er-maez 2 pe 3 gwech ar bloaz. 101 follenn (202 pajenn da lenn) a zo bet kaset evel-se. Pennadoù a bep seurt a vez kavet enno.

Luc'hskeudennet eo bet ar follennou prizius-se, ha strollet e stumm ur c'haier.

Bez ez eus tu da gaout ar c'haier e daou stumm :
- luc'hskeudennet penn-da-benn (120 lur franko);

- gant ar follennou-orin a chome, klokaet gant luc'heilennou (85 lur franko).

Kaset e vo LEVRIG "AR BEDENN EVIT AR VRO" (en implij abaoe 1952) ha ROLL NIVERENNOU STUDI HAG OBER (a chom e gwerzh) da brenerien ar c'haier.

Ar re n'int ket evit prenañ ar c'haier met a garfe resev levrig "Ar Bedenn evit ar Vro" ha Roll niverennoù Studi hag Ober a c'hell skrivañ evit-se ha lakaat daou dimbr 3 lur)
Chomlec'h : Janed Queille, 20 straed Trotrev Bihan 22 200 Gwengamp

GOUELIAD ANNA VREIZH

Adal ar Sadorn 17 betek ar Sul 25 a viz Mezheven 2000 e vo dalc'het Goueliad Anna Vreizh e Blaen, Bro-Naoned, aozet gant Kevredigezh Sevenadurel Kreisteiz Breizh, o strollañ holl gelañ-hioù keltiek ha bagadoù sonerezh al Liger Atlantel. Goude bezañ bet e Gwenrann 1995, Klizun 1997, Porzhneizh 1997, Kastellbriant 1998, Enkiniz 1999, ez eo aozet ar gourfest-mañ evit dihuñ, anataat, ha kreñvaat, an Hennadelezh vreizhat el Liger Atlantel, gourdrouzet gant disrannadur an departamant-se diouzh peurrest Breizh. A-hed ar sizhun-se e vo diskouezadegoù, finyskeudennerezh, prezegnoù, beilhadeg konterion, lazoù-kanañ en iliz, fest-noz, ha d'ar sul vintin dibunadeg un ugent bennak a strolladoù dahserion ha sonerion dre straedoù ar vourc'h, evit echuiñ en endervezh e vo kenstrivadeg sonerion hag un arvest koroll ha sonerezh, e gourliorzh Kastell ar Groulaez, kastell kozh ar Roc'hanned. Da geñver ar goueliou-se e vo digorlidet straedoù nevez e Blaen, o tougen anv Nevenoc, Anna Vreizh, hag Herri II Duk Roc'hanned. Titouroù : Bure an Troiadouriezh, pelligomz 02 40 87 15 11 Y.M.

OFERENNOÙ BREZHONEK

4/6 Gwidel, Sant Mazhev, 10 e 30

Sul Gwenn 11/6 Mene Bre : evit tolead Gwengamp.

Sadorn 17/6 e Rumengol 18 e ofereñ « divyezhek » (sic)

Sul an Dreinded 18/6 Kistinid 11e 15 e chapel Lokmaria. Emvod Breuriez Sant Ildud.

Bemdez e Brest : ofereñ da 7 eur e ti ar veleien gozh Keraodren.

KAMP KATEKIZ EMGLEV AN TIEGEZHIOÙ

E Rostren (skol an Itron Varia) eus al lun 21 d'ar sadorn 26 a viz Eost. Titouroù hag enskrivadurioù : Yann Talbot, Presbital, 22 110 Rostren

RETRED VIHAN GANT BREURIEZH SANT ILDUD

e Kerien eus ar sul 16/7 d'ar Meurzh abardaez. Titouroù : Y.E. Haspot, 12 bis Hent Beauregard 44500 Sant Nazer.

Reun Kras, kadoriad Kalon Blouc'ha a zo aet d'an Anaon d'an 3/03/ 2000.

Ouzhpenn eizh kant den a oa en iliz Plouc'ha o kemer perzh en ofereñ-gañv, bet lidet gant trizek beleg. Mouezhioù kanerion al laz-kanañ "Avel Vor" ha mouezh dispar Anne Aulfret a oa fromus-tre. Dellezek eo Reun Kras eus ar meged-se. Gouestlet en deus an darn vrasañ eus e vuhez da sevenadur Breizh, awenet m'eo bet a-viskoazh gant karantez e vro hag e genvroiz. Ouzhpenn-se eo bet skoazellet meur a sonour gantañ ha gant e wreg Kolina. Savet eo bet gantañ, a-gevret gant Pêr Even ha Jean-Yves Philippe e 1969, kreizenn sevenadurel Roparz Hemon (Gwengamp). E-pad ugent vloaz bennak ez oa chomet e kuzul-merañ ar gevredigezh-se, ar pezh ne viras ket outañ da sevel e lec'h-mañ-lec'h strollou korollerion ha kelc'hioù keltiek.

Desket bras e oa ha barrek war al latin hag ar galleg. Ur c'hevarouzeur war an diskiblezhioù-se e oa evit gwir. Un nebeud bloavezhioù 'zo en em lakaas da studiañ e yezh da vat. E dibenn e vuhez e oa deuet da vout ur brezhoneger lennek ampart. Ur gentel vamus a galonegezh hag a vrogarantez eo a-berzh un den bet ganet e 1921.

M. K.

Megod : enor ; Kevarouzeur : expert

NOTENNOÙ POLITIKEL gant Youenn Olier

E gwirionez ez on bet souezhet gant ersav dreistmuzul an Tevezeg gall a oa o c'hedal an taol-se e Kever, a vije bet kredet a-walc'h, evit kendaoniñ an emsav penn-da-benn e sigur ur gwallzarvoud disteriek a-hend-all. Ha setu paotred an amaezhierzh gall, stad enno o c'hellout tagañ an emsav a drubuilh anezho, da c'hoari o sirk ordinal, - pa n'eus bet klasket lazhañ den e gwirionez, o tileuriañ bretoniourion a vicher a-berzh-stad karget a ziplotou, kefridiet a-berzh-stad da frealziñ an dud e kañv (me 'lavar deoc'h ne reont ket kement-all evit kement den a varv war an hentoù), reuziet o buhez gant ar sponterion fallakr, setu an dalc'h (moarvat hag adarre, me respont deoc'h o dije bet labour a-walc'h evit dihuzañ kerent ar milion hanter a c'hwec'hkogniz a gollas o buhez er brezel-bras, 1914-1918.) Eveljust, ar menoz a zo a-dreñv d'ar sinema-se a zo sklaer a-walc'h : Breizh n'eo ket ur vro : ar brezhoneg n'eo ket yezh vroadel Vreizh, ha dre se ne zellez ket silvidigezh hor yezh hag hor broadelezh marv ur c'hi zoken. Forzh penaos, ar seurt sinema a oa bet implijet endeo e meur a afer sponterezh, bepred evit lakaat splannoc'h e gwel krizder digalon ar stigneron vombezennou, hag a-wechoù ivez a-enep da ezel ur "sektenn" anterielour daou vloaz bennak a zo, kiriek dre e wallegezh da zroukvarv pevar den emsav d'ur sektenn ken noazus ha ken euzhus hag hini heulierion an Aotrou Lefebvre !

Rak anat eo : ar vrogarourion vrezhon eo a zo kiriek da walldaol Kever ; se a zo anat, 'keta, ha n'eus ket ezhomm d'henn diskouez, zoken ! A-walc'h eo lavarout ez eo bet implijet un danvez-tarzh a oa bet laeret e Plevin, hep menegiñ emañ e dalc'h ar gerreizh un donenn bennak eus an danvez-tarzh-se atoret ganto en o furchadennoù ! Un evezhiadenn bennak a rin bremañ. Perak e ra ar gouarnamant gall hag ar yoc'hstlenn kement a reuz en-dro da varv dre wallzarvoud ur vaouez yaouank, hep gouzout da vat - lavaromp se bepred, - piv a zo kiriek d'ar pezh a zo c'hoarvezet, paz eo manet difrom ha mut a-hed ar wech (koulz hag holl zevoded ar Republik hag an dibennerezh c'hall santel) dirak

ar muntrou diniver, sevenet a-ratozh e Korsika abaoe tregont vloaz bennak, hep kas neuze, gwech ebet, d'an dud e kañv an disterañ frealzer a vicher a-berzh stad. ? Perak ez eo bet ken prim, ken dreistreol ha ken dreistmuzul war un dro ersav an Tevezeg gall en degouezh-mañ, evit kendaoniñ un droukvarv dleet d'ur gwallzarvoud, e-giz pa vije bet en gortoz abaoe pell eus an dro-vezh-se evit eskumunugañ a-c'horre e uhelgador a Devezeg ar Republik gall an dorfedourion eus an emsav ha na oar den piv int ? Perak ez eo prest, avat, an hevelep Tevezeg da genvreutaat e Korsika gant ar re a zo kiriek da vuntrou stank graet a-ratozh, o toujañ dezho, o kouviñ anezho da azezañ ouz an hevelep taol gantañ da gevraouiñ diwar-benn dazont an enezenn, tra ma klask, a-hend-all, tremen hon emsav-ni d'ur sektenn danjerus a bep hent ?

Met, dres, en em c'houlennno unan, daoust ha doujañ a c'heller da dud a ra van d'ober sponterezh, a lez, a-ratozh, o danvez-tarzh war an dachenn hep ober dezhañ tarzhañ, hepken evit diskouez o nerzh hep kemer ar riskl da c'hloazañ den ebet ? Ar re-se, sur-mat, n'int ket sirius a-walc'h evit bezañ pedet da genvreutaat gant uhel-nererion ar Stad c'hall. Tro a gemerent enta diwar ur gwallzarvoud glac'harus evit louzañ an emsav penn-da-benn, evel ma ra bepred ar vroudargaderion e servij ar gerreizh a venn tremen ar vrogarourion vrezhon o deus kendalc'het da stourm e-pad ar brezel da vezañ bet harperion da gaealiadurezh diaoulek an Nazied. Daoust ha fellout a ra d'an dud-se ober d'ar stourmerion vrezhon pennfollañ ha treiñ da vat da zispac'herion a seurt gant re an IRA pe an ETA ?

Forzh penaos, ma fell d'an dud-se duañ an emsav ha pellaat ar boblañs dioutañ e sigur gwallzarvoud Kever e c'heller lavarout ez int faziet agrenn, rak ken prest eo an dud da estlammiñ ha da euzhiñ ouz ar feulster. Se a zo bet stadet meur a wech da geñver argerzhioù all a feulster e Breizh a oa kevadek ouzh emled an emsav sevenadurel, e deroù ar bloavezhioù seikont, da skouer. Ar vroudargaderion a dag an emsav gant ar spi d'e enkañ er feulster a zo war var enta d'en em gavout paket en traped stignet ganto o-unan. Atav e ranker kounañ ez eo ar galloud, en degouezh-mañ, penngeriek d'ar feulster. Gouzout a reer mat-tre e chom ar gouarnamantou gall mennet an eil war-lerc'h egile da zistrugañ aspadennou diwezhañ hor yezh hag hor broa- (Lenn pajenn 4)

(diwar ar bajenn 3) delez, (kounit disklêriadenn de **Monzie** e 1925) - ha ne reont nemet ober van oc'h astenn un aotreadenn bennak d'an emsav, gant ar soñj e vo houmañ dizanvez warc'hoazh dre m'en devo uzet, dre hir amzer, gred ha youl ar stourmerion. E-lec'h ober evel ar gouarnamantoù saoz pe italian o deus, eus o ferzh o-unan, hep bezañ bet rediet e stumm ebet gant ar feulster, deroet an emvelestre- rezh d'ar rannbarzhioù arallgenel en o riezoù ketep e kendalc'h mistri ar Stad c'hall da ober eus lstor Bro-C'hall un istor santel, eus ar "vroad c'hall" ar "bobl dilennet", hag eus ar Stad c'hall an Iliz santel ma rank an holl bezañ rediet da zont tre enni. An dogmennoù diot-se o deus devoudet kantmiliadoù a dud lazhet en **Aljeria** e-kreiz ar c'hantved-mañ. Moarvat n'eo ket a-walc'h c'hoazh al lazhadegoù-se d'ar varañeoù an embreg bepred o galloud e Pariz.

Ur wech lavaret se e tisplegin evelato perak ez on- me va-unan enebet ouzh arver nep seurt a feulster e Breizh, e par an emsav end-eeun. Pa oa ar bobl vrezhon ur bobl kristen unvan, ur bobl plouezet en he fennañ, e oa tu da zarbenn ar mennoz e c'helle ur bobl dreistpadout o kemm bep hanter-kant vloaz ar feiz he deus he awenet a-hed ar c'hantvedoù. Ar bobl vrezhon n'eo ket termenet hepken gant an di- riegezh ma vev enni, hogen ivez gant ar stuzegezh he deus miret a-hed ar c'hantvedoù.

Evit an hevelep abeg e soñjan ned eo endalc'het gall kristen ebet da vervel evit ur vroad renaviat a seurt gant ar vroad c'hall, kollet ganti, hiviziken, forzh penaos, he dizalc'hded, diwar he c'hevanadur ouzh Europa.

Diouzh an tu all, e soñjan e vefe poent d'an emsav en em zigevarzhañ da vat diouzh an holl strolloù a ra van d'arverañ ar feulster pa n'eus na ster na disoc'h d'hevelep pleustr er c'hendegouezh politikel a vremañ e Kormogeuropa m'emeur war-nes sevel enni ur riez nevez kevreadel.

Den ne oar, e gwirionez, en emsav gant piv eo broudet pe hentet ar strolloù dirgel a ro dezho o-unan an anv a garont, hag a zo, moarvat, ensilet ha gouleviet penn-da-benn gant gwazerezhioù ar ger- reizh c'hall. Mallus e vefe enta en em vodfe an amrzh kevrennoù politikel ha sevenadurel an em- sav e Karaz e pe en ur gêr all, evit ober ur c'hour-

bannadenn ganmoedel a beoc'helouriezh c'hroñs, a seurt gant an hini a voe graet d'ur mare gant **Plaid Cymru**, a-benn diogeliñ e tis- taolont a-grenn arver ar feulster evit an arben- noù a zivezelezh a oa bet graet dave dezho gant ar strollad kembreat un hanter-kantved a zo.

Daoust hag e vefe un emglev dre zindan a-hont etre broadelourion frankvason 'zo hag ar galloud gall a hiziv gouleviet gant ar "**Grand Orient de France**", Iliz santel ar Republik ? Koun a zo c'hoazh eus ar brud a zo bet graet er wask e ser ur gejadeg etre ar "Grand Orient de France" ha lod broadelourion gorsikat. Rak-se, marteze, e tiskouez al leviezezh sokialour gall bezañ ken damantus ouzh ar vroadelourion gorsikat, a zo erverzet gantañ, evelkent, evel tud sirius hag enorus, dre ma lazont tud a-razozh, war ar mar- c'had. En hor bro, er c'hontrol, e ra ar varmerion, pa vez tro, goap ouzh ar paour-kaezh emsave- rion yaouank berrboell hag a ra hepken gant *bombinettes*, e-giz ma lavare paotred o sae zu e-kerzh ur prosez penterion-banelloù e Gwengamp un nebeut bloavezhioù 'zo.

A-hend-all e rankan lavarout ez on lezet en am- zivin gant an tebet prouennoù degaset gant ar gerreizh. Abaoe afer **Iwerzhoniz Vincennes** e oar an holl ez eo ur c'hoari bugale plantañ dan- vez-tarzh pe armoù e koufr ur c'harr-tan, evel maz eo ur c'hoari bugale all aozañ un disketenn hag hec'h adkavout e-lec'h maz eus ezhomm. Forzh penaos, abaoe gobidell ar "**Rainbow Warrior**" hag hini ar "**Paillettes**", met a- viskoazh e gwirionez, en em c'houlenner petra a dalvez "**Etat de Droit**" e yezh ar C'hallaoued. Ret-mat eo stadañ ne vank an aferioù gwaguzh hag iriennek abaoe maz eo erru ar sokialourion c'hall e penn ar galloud gall : emlazoù bep seurt dreist-holl, hini **Pelat** hag **Hernu**, ha me 'oar-me. Bezomp reizh evelato ; n'eo ket gwel- l ar stal gant ar Saozon : godeliet o doa ar bolised en ur prosez du-se, e **Birmingham**, a gav din, falsprouennoù ma voe barnet, diwar o fouez, un hanter dousennad a lwerzhoniz divlam, paotred ha merc'hed, digiriek a-grenn, da zekvloavezh- hiadoù toull-bac'h. Hag eveljust, e c'hellfed komz eus afer **Roc'h Tredudon** tregont vloaz 'zo.

Ur goulenn a ranker ober : perak en deus ar gal- loud sokialour gall prientet an afer-mañ penn-da- benn ?

Moarvat ez eus meur a abeg, an hini pennañ o ve- zañ e teu an emsav, e soñj an devezeion a zo ouzh hor ren, d'ober re vras berzh ha da vezañ diatoradus war un dro. D'ur mare, da skouer, e kave d'ar re-se e oa tu da dennañ un dra bennak eus **UDB**. Hogen setu ar strollad-mañ o nachañ sujañ penn-da-benn d'ar PS. War un dro ez arnoder ivez danzen un doare talbenn politikel brezhon en-dro d'ar ge- laouenn **Breizh-info**... "**Diwan**", war ar marc'had, a ya atav war-raok, hep bezañ gall evit ur gweneg, hag en o kevezañ ouzh an "Deskadurezh Vroadel" c'hall santel e par al laikelezh, nemet o nachañ be- zañ sujet dezhi. Ret eo enta terrñ e vellgein, evel hini aozadurioù all an emsav.

Ouzhpenn-se emañ **Cozan** e Penn-ar-Bed o reñ poan-spered e-leizh da baotred ar "**Strollad Sokia- lour Gall**". A-enep dezhañ eo bet stignet afer c'hoarzhus ar geriadur hollvrezhonek deuet da ve- zañ un "**Dictionnaire blasphématoire**", a vije bet draihet ur skouerenn anezhañ, - war am eus kle- vet, - ha triplet warnañ, ouzhpenn, gant un ezel penn-araok eus ar "Strollad Sokialour Gall" bepred hag adarre, e Penn-ar-Bed, diwar ur vuanegezh san- tel, e-giz pa vije anezhañ ur geriadur *porno*, da la- kaat, evel barzhonegoù **Anjela Duval**, e lein uhelañ "Ifern" al levraouegoù, evit al "Lennerion avertiset", dres evel ma lavare ar mavdiern **Jack Lang** er "Palais Bourbon": "*Le ridicule tue...*" eme ar C'halla- oued, nemet pa vez anv eus Breizh, eveljust !

Moarvat e vefe poent da lod stourmerion paouez a glask luganoù ha patromoù stuzegezhel gant ar strolladoù gall eus ar c'hostezennoù gall kleizat, so- kialour ha komunour, a zo bet nevez diskouezet ganto ez eus anezho enebourion arloppet d'an em- sav, luganoù ha patromoù a zo aet teuc'h endeo, forzh penaos, abaoe maz eo aet da get ar c'healiadu- rezhioù eus an tu-kleiz, marksat ha leninour- stalour en Europa ar Reter hag e Rusia... Bez' e tlefe ar stourmerion yaouank enta distreiñ da fram- m ar broioù keltiek a zo un nor-zigor war an hollved a-bezh, ha kompren ez eo hent ar feulster, azvanel zoken, un hent-dall ha n'eus disoc'h ebet dezhañ. Se a ranker adlavarout atav.

Ur goulenn groñs o defe graet izili "Kuzul- Departamant Penn-ar-Bed" hag ar "C'huzul- Rannvro" da dennañ kuit **anv Roparz Hemon** a-ziwar gorre talbenn ar skolaj a zoug e anv er Releg abaoe un dek vloaz bennak, ma ne fazian ket, ha kement-se da heul ar stourmadenn doñjerus a zo bet renet a-enep d'an oberoer brezhon-mañ a-c'houde

meur a vloaz, nemet gant mui-ouzh-mui a nerzh hag a gilvezerezh er mizioù diwezhañ-mañ, gant kenlerion a vrezel diabarzh e Breizh. Ha na petra, raktal e klevan hiniennoù en emsav o kuzulikat eo furoc'h d'an emsaveurion en dro- mañ plegañ o glin dirak o mistri ha sentiñ outo evit bezañ lezet e peoc'h.

Diskleriañ a ran enta krenn-ha-krak e kavan-me gwel euz **Diwan** da get penn-da-benn, da c'hortoz adsevel, eget asantiñ d'hevelep disme- gañs a denn pep ster diouzh ar stourm a renomp. Da gentañ, ret eo kompren n'o deus ar fanatiked imbisil ha kasonius a gas war-raok ar stourma- denn-mañ degaset arguzenn nevez ebet evit reizh- habegañ ar goulenn a reont. Mistri int er yoc'h- tlenn gall, gwir eo, met setu holl ; adarre, n'o deus degaset fed nevez ebet ha na vefe ket ana- vezet a-viskoazh gant an holl ha, da gentañ, gant an emsaveurion, a ouie ervat piv 'oa Roparz Hemon p'o deus roet e anv da skolaj ar "Releg". Pezh a glask hepken enebourion an emsav ez eo adkreññ gant ur prosez bet skaret endeo tri- gent vloaz 'zo, atav hep degas fed nevez ebet. A-benn ar fin, petra a damaller ouzh Roparz He- mon ? Bezañ kendalc'het da labourat evit ar yezh hag ar vro etre 1940 ha 1944, evel ma reas etre 1925 ha 1940, hep derc'hel kont eus ar gal- loud a oa o ren e Breizh en eil prantad hag egile, evel ma reas an holl e Breizh war o micher, war o arz pe o galvedigezh er prantad-se ; evit em- bann zoken ul levr a zevasion e galleg e oa dav neuze kaout aotre pe asant ar pennadurezhioù- gouzere'hel !

Gouzout a reer a-walc'h a-hend-all, ha se hon diskleriet a-hed ar wech, ne oa eus Roparz He- mon nemet ur brogarour brezhon o stourm war dachenn ar yezh, ha ne felle dezhañ bezañ ne- met se. Ne oa ezel eus strollad ebet. Ne oa ket ezel, zoken, eus "Strollad Broadel Breizh". Un den dieub e oa e pep keñver.

Hesknerion an emsav a hiziv a damall anezhañ, a-benn ar fin, dre ma ne oa ket anezhañ ur pa- trioid gall, e-giz ma fell dezho bezañ. Daoust ha goulenn a reomp-ni digant ar re-se bezañ broga- rourion vrezhon ? Daoust hag o rediañ a reomp da ganañ ar "Bro Gozh" ? Ar re-se, avat, - ha se a gavan spontus rak ober a ra eus "Bro-C'hall" ur relijion stadal e-giz ma 'm eus lavaret atav, - a garfe hor rediañ da ganañ ar "Marseillaise" ! Daoust hag o rediañ a reomp, ni, da stouñ dirak ar "Gwenna-Du" ? Int avat a fell dezho hor re-

dian d'henn ober dirak ar banniel trilih ! Padal, ma plegfemp da c'houllenn diskiant enebourion an emsav - rak enebourion int, ha netra ken, - daoust ha ne gollfemp ket hon enor oc'h en em zougen a-cnep d'hor c'houstonians ? Ma teufemp, ni, emsaverion, o tinac'hañ hêrezh Roparz Hemon da zilezel an uhelvennad-se, ne vefemp mui tud en o sav, gouest da daliñ ouz o enebourion, hogen sklaved o krenañ dirak ar vistri voure'hiz o deus mac'homet a-viskoazh Gwerin dizifenn Breizh.

Moarvat en doa Roparz Hemon menoziou politikel, hag ar re-se o klotañ gant ar frankizouriezh dre vras, evel ma vo anat da neb a studio pervezh e obere, evel ma'm eus graet er studiaden am eus gouestlet d'e skridou (1). Hogen, a-hend-all, ne oa Roparz Hemon nag ur stourmer politikel nag ur stourmer relijiel. Ur brogarour rik e oa, ur broadelour, mar karit, maz intenter dre ar ger-se e krede en ur vroad vrezhon ma tlee he zonkad bezañ difore'h diouzh hini Bro-C'hall. E stumm ebet avat ne felle dezhañ bezañ un harper d'ar galloud a oa o reolfin Breizh d'an ampoent-se. Ober a rac dioutañ evel ma rac an holl re ha na oant ket er Resistans, da lavarout eo, 99% eus ar boblañs e Breizh hag er C'hwec'hkogn neuze.

Ret eo lavarout n'eo ket nevez ar c'haderezh a zo implijet a-enep d'an emsav hiziv. E 1945 endeo e venned e vije bet distaotlet gant an emsaverion ar skritur peurunvan war zigarez e oa bet divizet da vat ar stumm diwezhañ anezhi e-pad ar brezel. Na c'het em boa neuze dere'hel kont eus tamalloù na zalc'hent kont ebet eus youl ar Vrezhonek da gaout ur yezh unvan evit o fobl, hag a oa dezho ur ster politikel na c'helle ket bezañ degemeret gant an emsaverion, empleget enno ar soñj diboell e oa ar vroadelouriezh vrezhon ur pec'hed a-enep d'ur Vro-C'hall par da Zoue, a rankje bezañ azeulet gant an holl sujidi anezhi. Setu pezh a fell da Enkeiserion-veur ar Vro C'hall-Iliz hor rediañ da zarbenn adarre hiziv an deiz dre o heskinerezh chivous.

Anzav a ran ez on sebezet gant baranegezh ar re a zo o klask, gant un aheurtierezh diaoulek distrujañ an emsav (rak n'eus emsav ebet er-maez eus an hini a zo bet krouet diwar hêrezh Roparz Hemon marvet seulabred ugent vloaz 'zo), dre louzañ brud ar skri-vagner hag ar stourmer-mañ kalonek-dreist.

Seul heugusoc'h eo ar soñj e tlefe an emsaverion en em zaskoniñ d'o enebourion hag en em flastrañ dirazo ma ne zerc'houez ar re-se nemeto o-unan. An holl a oar peseurt kiriegezh o deus ar Strollad sokia-

lour gall hag ar rouedadoù dirgel stag outañ ("Réseau Voltaire", ha me 'oar-me) en afer-mañ. Ar gudenn eo gouzout enta ha dileout a reomp dere'hel kont eus ur c'havañh ha na c'helle ket ar vruderiezh anezhañ kas gwall bell war-raok diwar vremañ.

Hogen distreiñ a ran bremañ da graf "Diwan". Awenet eo bet aozadur "Diwan" betek-henn gant ar spered broadel, ha bremañ, evel e diwezhañ ar brezel, evel ma'm eus nevez-verket, ned eo taget Roparz Hemon nemet dre maz eo bet ha dre ma chom e diazez an emsav broadel.

Pezh a fell d'hon enebourion enta ober, ur wech ouzhpenn, eo hol lakaat da zilezel ar spered broadel a zo bet oc'h awenañ striv ar stourmerion o deus kaset war-raok an emgann evit ar yezh abaoe ar brezel diwezhañ, en ur sujañ da veli fanatiked ar Republik gall a gendalc'h da soliañ o c'healiadurezh diaoulek war ar Meurberzh-diazezañ ez eo bet evito ar prantad euzhus hag heugus a reont anezhañ an Dispac'h Meur Gall, en deus servijet da batrom da holl renadoù hollvelicour Europa hag ar Bed a-c'houde ouzhpenn daou-c'hant vloaz, bet kiriek da zistruji-gezh kant milionou a vuhezioù-tud, adalek m'o deus kroget d'en em ledañ e derou ar c'hantved diwezhañ.

Ouzh daou ziskoulm e c'hell dremmañ Diwan : Pe nac'hañ plegañ d'ar sponterezh kefredel a zo embreged gant enebourion an emsav. Neuze e vefe mat studiañ da skouer penaos adsevel ar skolaj e Kembre pe en Iwerzhon, hag ober anezhañ ur skolaj a drede-derez europat brezhonek ha keltiek.

Pe neuze, e soñj da atebion Diwan n'eus ket tu evit ar mare da gas da benn hevelep steuñv ; hogen ret eo dezho embann e plegont d'ar goullenn a reer outo evit mirout ar peoc'h keodedel en hor bro, hep degemer evit kelou se ez eus un diazez d'an tamalloù gaouiat ma klasker drezo louzañ envor un den ha ne venne stourm nemet evit ar vammvro vrezhon.

Ret eo ivez da enebourion an emsav gouzout e chom ar brogarour brezhon-mañ e-unan anavez- zet hag enoret betek en Iwerzhon e-lec'h m'en deus bevet e-pad tregont vloaz. Ur blakenn a zo bet staget e Dulenn a-berzh-stad ouzh talbenn an ti m'en deus bevet ennañ.

N'hon eus ket muioc'h abeg da bleagañ d'hon enebourion varanek eget tri-ugent vloaz 'zo. Gwir eo en deus bet an emsav da c'houzañ di-

war an dibab en doa graet neuze ; c-pad ugent vloaz ez eo bet nac'het outañ an disterañ skorenn ; evelato en deus dreistvevet ha trec'het a-benn ar fin.

Gwir eo hon eus afer ouzh ur galloud mafiack, gouleviet gant strollou dirgel prest d'implijout ar sponterezh e pep doare, ampart da sabatuiñ, gouest da skouer, da arverañ ar "Front National" a-enep da Chirac ha d'e gevezerion eus an tu de- hou, ha d'e ziskar - dre zevoudañ disrog Mégrét a zo tost-tre d'an riezourion-se, - pa n'en deus ket bet mui ezhomm anezhañ. An hevelep tonkad a zo bet miret ivez gant mistri ar galloud d'an emsav, a zo bet implijet ganto e-pad ur mare, hag a glaskont bremañ distrujañ pa n'o deus ket mui ezhomm anezhañ kennebeut.

Hogen daoust ha n'omp ket, ni, emsaverion, kiriek d'an dismegeñs a zo taolet warnomp ? N'omp ket gouest da embann fraezh ha sklaer an uhelvennad a zo d'an emsav : krouiñ dre hor yezh ur sevenadur denel nevez, dieubet eus mac'homerezh lore'hus ha didreuz ar riezou bour'hiz anezez.

Daoust hag o tilezel ar feiz kristen n'hon eus ket graet ur c'hoari disteriek eus an emsav ? Padraig MacPiarais, e derou ar c'hantved tremenet a c'houllenne digant ar vrogarourion iwerzhonat goveliañ dezho o-unan un ene uheloc'h eget hini mistri o fobl. Daoust ha n'hon eus ket ankounac'haet e annougadenn o tilezel speredelezh a-viskoazh hor pobl evit gwiskañ unan a zo heñvel-rik ouzh hini hor mac'homerion ?

Y. O.

(1) Istor Hol Lennegezh « Skol Walarn », div levrenn 1. Roparz Hemon 2. Ar skrivagnerien all. 161 lur franko.

Gerioù nebeut anavezet : Ersav : comportement ; Tevezeg (-eion) : chef de gouvernement ; Bredoniour : psychiatre ; Anterinelour : intégriste ; Ato-riñ : récupérateur (diatoradus : irrécupérable) ; Ke- vreaouiñ : négocier ; Argerzh : processus ; Arallge- nel : (d'ethnie) allogène ; Ketep : respectif ; bara- neg (-eion) : fanatique ; Erverzout : considérer ; Azvanel : illusoire ; Kilverzerezh : entêtement ; ke- niler : fauteur de (troubles) ; Enkeiser : inquisi- teur ; Annougadenn : exhortation.

Errata : pennad Y.O. en niv. 5 a-zivout D. Dafis : Lenn Mona Mazhe e lec'h Ivona Marzhin linenn diwezhañ pajenn 3. P.4 linenn 6 : pevar c'hant-

HOMELIENN :

« Me eo ar Pastor Mat »

Setu komzoù Jezuz en Aviel ar sul-mañ, ar sul a vez graet anezhañ gant an Iliz 'Sul ar vokasio- nou', "Sul an dud c'halvet", a lavarin gwelloc'h, rak vokasionou a zo ur ger latin lakaet e galleg o talvezout "ar re a zo galvet".

Piv a zo galvet, hag gant piv ez int galvet, hag evit-petra ez int galvet ? Setu ar pezh hon eus da welout bremañ, hag evit-se eo ret dimp kompren da gentañ petra eo ur pastor mat.

Ur ger all da lavarout pastor eo mesaer. An dud en oad, n' eus ket ezhomm da zisplegañ dezho petra eo ar mesaer, rak kalz anezho, moarvat, a zo bet o vesa al loened pa oant yaouank. Bremañ avat, gant orjalennoù ha tredan enno, e vez kentoc'h komzet eus paotr-saout elektrik Evit mesa an deñved, e lavarer ur bugul pe ur pastor, hag en Aviel, Jezuz a ziskouez dimp petra a ra ar pastor mat : anaout a ra e zeñved hag anavezet eo e vouezh ganto; kas a ra anezho war braden- nou glas, o diwall a ra diouzh al loened fall ha diouzh ar bleiz lonker- mont a ra da glask an dañvad diantket hag e zegas a ra en dro d'an tropell, lienañ a ra an hini a zo bet gloazet, hag er- fin e ro e vuhez evit e zeñved.

Met n'eo ket eus deñved gwirion eo e komz Je- zuz, eus tud eo e fell dezhañ reiñ dimp da intent ez eo eñ a zo bet lakaet gant e Dad da bastor warro, war an holl dud, zoken war ar re n'ouzont ket ez int galvet gant Doue da vezañ eus e dro- pell, eus e familh, eus e di, da vezañ izili eus an Iliz diazezet gant e Vab Jezuz Krist da gas ar C'helou mat dre ar bed holl. Ya, n'eo ket hepken ar velcien, ar venech, al leanezed, met an holl dud vadezet, hag ar re n'int ket c'hoazh eus an Iliz, a zo galvet da zegemer ar C'helou-se ha da vont e Rouantelezh Doue, hag garantez. Ken bras karantez en deus evit an dud m'en deus kaset e Vab er bed evit reiñ dezho da c'houzout pegement e kar anezho. Hag evit-se en deus Jezuz roet e vuhez war ar groaz.

Met ar vuhez roet gantañ evit hon saveteiñ en deus hec'h adkavet pa'z eo adsavet eus ar bez da veure Pask hag en deus kemennet d'an dud ez int galvet, int ivez, da gavout buhez nevez digantañ ha gantañ, ur vuhez na vo biken lemet diganto. Kalz a dud dre ar bed, n' o deus ket klevet c'hoazh ar C'helou Mat-se, ha Jezuz en (lenn p. 8) deus karget e ziskibienn, da lavarout eo

Kenskrivit !

Kelaouenn diabarzh Emglev an Tiegezhioù, kevredet e Kuzul ar Brezhoneg, eo Imbourc'h.

250 lur (38 €, 38 \$) eo ar skodenn vloaz ordinal, a ro ar gwir da resev ar c'hannadig hag ar stagadennoù trimiziek. Sevel ar ra da 100 lur evit ar re a garfe resev ar c'hannadig nemetken.

Ar skridoù, kemennoù, lizhiri ha skodennoù a zo holl da gas da :
Imbourc'h, Kergreven, 29800 Trelevenez
Pgz : 02 98 25 10 72 cat@libertysurf.fr
Pir : 02 98 25 18 87 (gervel a-raok kas).
http://perso.libertysurf.fr/kannadig

Moulerezh prevez. Merour : T. Gwilhmou
ISSN : 1144 357X CPPAP : 50015. Ar pennadoù ne enouestont nemet o aozerien. Disklriet hervez lezenn.

(diwar p. 7) ar gristenien, da embann dre ar bed-holl ez eo kement den o tont war an douar, n'eo ket hepken anavezet gant Doue, hon Tad, met ivez karet gantañ, ha galvet da vezañ eus e zeñved, ha da dañva, war-lerc'h ar vuhez-mañ, ar vuhez a bado da viken en e Rouantelezh.

Da bep hini ac'hanomp, va breudeur ha c'hoarezed, eo fiziet ar garg, ar gefridi-se, abaoe deiz hor badeziant. Setu hor vokasion, hor galvedigezh, ha n'eo ket hepken evidomp hon-unan, met ivez da gas ha da desteniañ en-dro dimp, ouzh en em reiñ d'al labour-se gant hon holl nerzh, a holl galon ha gant hon holl spered, daoust d'hor sempladurezh.

An Ebistel ne oant nemet un dornad, ha tud izel, labourerien en o bro, met bet e oant e skol Hor Salver. Hag o Mestr, a-raok mont kuit, en devoa prometet kas dezho e Spered, evit reiñ dezho e sklêrijenn hag e nerzh, hag evit degas soñj dezho eus e gomzoù, eus e gelennadurezh. Resevet hon eus, ni ivez, ar Spered Santel. Selaoomp eta ar pezh a lavare ar pap Gregor Meur da gristenien e amzer, er VI-

A-berzh Rafael Urien hon eus resevet til lizher hir-tre: « (...) En darvoudoù-se - aferioù Kever, ar Geriador Holl-vrezhonek, Roparz Hemon, hag all... - e klask tud 'zo dere' hel ur skeudenn « politically correct » d'an Emsav. (...) Ar gwir o deus d'emezellañ d'an MDC, d'ar PS pe d'an FN, m'o deus c'hoant. Ret eo avat d'ar re a venn stourm evit ar Vro hag he yezh gouzout ervat emañ o enebourien bennañ kalz tostoc'h dezho eget Pariz. (...) En hon touez emañ hon enebourien bennañ (...) Mard o defe graet ar re « a stourm » evit ar brezhoneg ur striv gwirion ha padus d'e zeskiñ e gwirionez, HA d'e implij e kement degouezh a zo e vefe bet gounezet dija un tamm mat a wirioù evit hor yezh.

Tud 'zo ivez en Emsav, a fell dezho en em ziskouez « feal » da Vro C'hall dre ma kav dezho e roio peoc'h deomp evel-se ar yoc'hstenn hag ar bolitikerien. Kement-mañ eo ar rakjedadenn fallañ a c'helle bezañ graet : o kregiñ gant dilezioù evel re istor ar geriadur pe hini ar skolaj int aet tre en un argerzh na vo ket tu da herzel outañ. Eus un dilez bihan d'eben e vo ret neuze asantiñ da zilezel hor stourm rik-ha-rik.

« Etre va mignoned hag ar wirionez, a lavare Aristoteles. « Etre ar skorennoù arc'hant ha dinac'h anv Roparz Hemon e seblant Diwan bezañ dibabet « ar soubenn ». (...) »

vet kantved hag a zo ken talvoudus evidomp er c'hantved nevez-mañ : "Gwelit, emezañ, hag-eñ emaoch e zeñved, - deñved hor Salver, eveljust - gwelit hag-eñ ec'h anavezit anezhañ, gwelit hag-eñ ec'h anavezit ar wirionez - hini an Aviel-. Anaout a rit, n'eo ket dre ar feiz met dre ar garantez. Anaout a rit, a lavaran, n'eo ket diwar grediñ, met diwar ober. Rak an hini a lavar ar c'homzoù-se, Yann an Avielour, a ro an testiñ-mañ : "Neb a lavar ec'h anavez Doue, ha na vir ket e c'houe'hemennoù, ur gaouiad n'eo ken". Ha gant gerioù all, un tamm pelloc'h, e lavar Jezuz kement-mañ : Va deñved a glev va mouezh.... ha dont a reont war va lerc'h.... ha reiñ a ran dezho ar vuhez peurbadus."

Bezomp holl aketus eta da selaou mouezh hor Salver Jezuz Krist ha da gerzhout war e lerc'h, ha neuze e vo roet dimp gantañ ar vuhez-se en e Varadoz, ha n'ankouamp ket pediñ ar Mestr, evel m'en deus gourc'hemennet dimp, ma kaso labourerien da hadañ an Aviel e park ar bed, ha ma ne vo ket e vugale o chom da gantreal evel deñved heb pastored. Amen.

J. Lec'hvien IV-vet Sul Fask - Oferenn e Plouc'ha

IMBOURC'H :
400 LEVRENN ABAOE 30 VLOAZ
KLOKAIT HO TASTUMADENN...

KANNADIG IMBOURC'H

**NAONED E
BREIZH :****NE VO MUI A « MISS
PAYS DE LOIRE »**

Divizet eo bet gant aozerien dilennadeg « Miss France » e vefe doujet hiviziken d'ar « rannvroioù hengounel ».

A-benn ar bloaz a zeu eta en em lakaio « Miss Loire-Atlantique » war ar renk da vezañ anvet « Miss Bretagne ».

**AVIEL
SANT MARK
AN AOTROÙ
COAT**

Unvaniezh ar Bibl en Anjou a zo o paouez adembann Aviel Sant Mark an Aotrou Le Coat e u s T r e m a e l (embannadur eus 1893). Er skritur peurunvan eo bet advoulet o kemm un nebeut gerioù, evel temptadur e-lec'h tentasion.

Kinnig a ra Unvaniezh ar Bibl en Anjou kas ur skouerenn evit netra d'ar re a c'houlenn diganti : "Bible en Anjou" B.P.3 49140 VILLEVEQUE.

FAZIOÙ ROPARZ HEMON ?

Mouezhiet eo bet a-unvouezh gant Kuzul-merañ Diwan divadezadur ar skolaj Roparz-Hemon er Releg-Kerhuon : « Spi en deus, eme ar C'huzul-Merañ, e vo tu da Ziwan dre anavezout fazioù Roparz Hemon da ober an diforc'h etrezo ha pouezusted e oberenn (...) ».

N'ouzomp ket avat eus peseurt fazioù ez eus anv : bezañ savet ar gelaouenn Gwalarn ? Bezañ savet ar Radio kentañ en hor yezh ? Ma n'en dije ket graet an traoù-se ne vefe ket eus Diwan hiziv. Moarvat e asant renerien Diwan plegañ d'hor mistri evit gellout kontañ war ar skorennoù o deus ezhomm evit dere' hel ar framm en e sav, ha setu holl.

Ne vo mui anv war lerc'h an hañv eus an istor trist-se ma rank ar mab lazhañ - pe hanter-lazhañ - e dad evit chom bev e-unan.

Notomp memestra n'eo ket kreñv a-walc'h hon enebourien evit rediañ penañ ensavadur an emsav da gemm skritur, « skritur an nazied », hervez gaouiadeg 'zo. Ha gwel a-se.

T. Gwilhmou

EMBANNADURIOÙ IMBOURC'H

Prometet hor boa embann pevar levr ar bloaz. Lod eus hol lennerieon a skriv deomp o c'houlenn hag eñ ne vefe ket bet disoñjet kas dezho ar stagadenn gantañ paz eo gwir omp degouezhet e miz Gouere. Kudennoù a bep seurt o deus miret ouzhimp a embann ar stagadennoù e poent hag e kentel.

Soñjal a ra deomp avat e teuimp a-benn da voulañ ar peder stagadenn a-raok dibenn ar bloaz-mañ, da lavarout eo ar pevar levr-se :

- Buhez Dom Mikael an Nobletz ;
- Buhez an Tad Maner ;
- Deizlevr Y. Olier ar bloaz 1961 ;
- Geriadur Brezhoneg-Galleg Jil Ewan.

Re all a zo war ar stern : da skouer strobad pennadoù Langleiz « Ar Seizh Avel », bet embannet gantañ er gelaouenn « La Bretagne » e-pad ar brezel.

DA GEÑVER KANTVLOAZ GANEDIGEZH R. HEMON !

Gwazh on eus an droug graet ouzh Roparz Hemon, da geñver kantvloaz e c'hanedigezh, evel pa ve ouzh *ma zad* e unan. Ned eo ket e fellfe din sellout Roparz Hemon evel ma zad, hogen dre benn ma'z eo karezet *post mortem* hep difenn ebet dezhañ, dres evel pa ve tamallet d'am zad-me e "genlabour" gant ar *Stationswajen* e Gwened. Peogwir en doa ma zad labourer e greanti Roc'h an e Gwened a oa e dalc'h an Alamaned ha p'en deveze ivez e follennou gopr gant siell ar *C'hommandantur* warne, evel kantadoù a reoù all amañ ha kement all e lec'h all sur mat a oa ret dezhe gouint o buhez, brezel pe get. Eveljust ned on nag istorour na politiker. Lakaet e ve gwasho-c'h kenlabour Roparz Hemon, da betra tagañ ur *skrivagner brezhonek* hepken ?

Pa venner lazhañ e gi e lavarer emañ klañv. E-giz an Amerikaned e tegouezher en heksagon - klañv ma'z eo diwar lere'h ar brezel - gant ar *politically correct* kempredel nemetken, hep bout gouest da deurel ur sell ergorel war an hanez. Brav eo bet din e 'm bout bet Frañsez Marker da gelenner Istour. Hemañ en doa desket da 'm c'henseurted ha din "emlakaat" er mare a studier, kent barn an darvoudoù anezhañ. N'heller ket dezrann pezh a c'hoarvez en un amzer lakaet anez mont en askre unan o vevañ er grez-hont. Penaos kompren emzalc'h un den dindan ur roue pa vezer dindan ur republik ?

Ha ni o labourat evit sevenadur Breizh, petra hor be graet e-kerz ar brezel ? Sevel a-du gant an Alamaned, bout ma roent d'hon bro un tamm "avel a frankiz", bet nac'het da neuze - ha betek hiziv an deiz - gant ar galloudoù foran gall ? Mont a-enep d'an Nazied dre ma oa euzhus ar pezh a raent en o c'hampoù-bac'h hag e lec'h all - neoazh ned eo nemet pa voe fin d'ar brezel ma'z eo bet anavezet o zorfedoù ?

Pêr Denez a rebecher outañ ur bomm bennak o lakaat ar ouenn wenn dreist d'ar re all... e 1943. Ha me zo bet kelennet din er *skolioù gall* e oa ar re zu "kentionidion", tud dister hag izel, hogos loened, mat da vann. Egile all a vo abegat pennadoù digantañ lakaet da "enep-yuzev". Petra oa an enep-yuzevegezh avat e Breizh da vare ar brezel ha war-lerc'h ? En amzer-hont 'm eus klevet alies eus ar "*juiverie*", ar re a emvatae eus an Dalc'h-

OFERENNOÙ BREZHONEK

2/7 Lokoal Mendon 11 eur
2/7 Sant Mazhev Gwidel 10 e 30
16/7 Kistinid da 11 eur 15 e chapel St Matelin
Eus ar 16/7 d'an 18/7 : Retred e Kerien (22)
16/7 Sant Ave 10 e 30 (galleg ha brezhoneg)
13/7 Lokildud Sizun 10 e 30 hag Ar Releg Plouneour Menez 10 e 30 (galleg ha brezhoneg)
26/7 Branderion Santez Anna goh 8 e 30 ha 10 e 30 ha gousperou (galleg ha brezhoneg)
14/8 Rumengol 18 eur
15/8 Itron Varia Kelven 9 eur
15/8 Gwengamp (Penniliz)
20/8 Lokmaria Kistinid 11 eur 15
Eus ar 7/8 d'an 11/8 e Sant Loeciz An Oriant : Pedenn Noz da 19 eur bemdez
26/8 e Kampostal Rostren 17 eur : Oferenn dibenn Kamp Katekiz Emglev An Tiegezhioù (Banne war-lerc'h da glozañ).
27/8 Lokmaria ar C'hoad Landevan 10 e 30 (galleg ha brezhoneg)
Diglok eo ar roll-mañ ha faztoù a c'hell bezañ : ra skrivio deomp hol lennerien pa welont mankoù : evel-se e vo resisoc'h ar bloaz a zeu....

digezh, a rae ar'chant gant kement a c'hellent. Ha Yuzevion "a ouenn" e oant ? Den ne ouie na ne soñje en dra-se ha - c'hoazh hag adarre - ned eo nemet goude ar brezel ma'z eus gouezet e oa bet kaset Yuzevion d'ar forniou-deviñ gant an Nazied. Ha pa 'z eus kel a ouenn, e kavan mat degas da soñj ar pezh a oan bet skoet gantañ pa oan krennard, ar pezh a 'm boa lennet e 'm geriadur *gallek* : "*Hélène Jégado, empoisonneuse bretonne, née à Rennes (...) Laënnec, médecin français né à Quimper (...)*".

Hag evit a sell "paotred ar Strouezh", petra a lavared ? Pet ha pet gwech 'm eus bet klevet "nend eo ket forbaned razh ar *vakizarded*, razh ar forbaned ar zo er *makiz*". Eveljust n'emañ ket ma soñj lavarout e oa gwir bater kement a soñjed hag a lavared da neuze. Bremañ e ouzomp dre wir ar pezh a zo c'hoarvezet ; en amzer-hont ne ouied ket.

Roparz Hemon avat ne zere ket e garezin a enep-yuzevegezh, na pa roe ar Yuzevion hag adsav o yezh da skouer evit ar Vrezhoneg hag ar brezhoneg (kv. Da skouer *Ar Bed Keltiek*, mezheven 1960 p. 72).

Ha koulskoude, me bet ganet e-doug ar brezel zo

(Lenn pajenn 8)

NOTENNOÙ POLITIKEL gant Youenn Olier

GRIT HO TESTAMANT !

N'eo ket bourrus moarvat seurt trevell rak degas a ra da soñj da unan ez eo berr an amzer ha tost bepred ar beurbadelezh. Hogen bourrus-bras eo e rafe kement brogarour brezhon kemeret gantañ ur perzh bennak er stourm evit ar vro diogelñ an envor eus ar striv en deus renet evit adsevel hor yezh hag hor c'heneh.

Ne c'hell ket an emsaverion kendere'hel gant o stourm hep bezañ emouez ouzh an istor anezhañ.

Re wan ha re vresk eo c'hoazh ar c'hevredadoù a zo bodet e framm « Kuzul ar Brezhoneg » evit krouiñ adal bremañ ur greizenn evit dastum an dielloù hag al levrioù a zo bet e piaou stourmerion act da anaon. Ne ouzomp ket re vat, da skouer, pelec'h emañ levrageoù ha dielloù a bep seurt lezet war o lere'h gant skrivagnerion hag oberourion a seurt gant Maodez Glanndour, Armañs ar C'halvez, Gwilherm Dubourg, Yann-Vari Perrot. Klevout a ran emañ dornskridoù hemañ e Landevenneg, re egile en ur manati beneaded e Kergonan, re un trede en ul levrageg-kêr bennak, hag all...

Ar mank a zo gant an ensavadurioù-se avat eo, dreist-holl, n'emañ ket e dalc'h an emsav, hag ez eo diseblant ar re a zo er penn anezho ouzh ar stourm a zo renet gant ar vrogarourion vrezhon.

Meneget eo bet gant lod e tlefe en emsaverion legadif o levrioù hag o dornskridoù d'un ensavadur stadel a seurt gant « Levrageg Vroadel Kembre » e-lec'h emañ, a gav din, dielloù Taldir hag ar pep brasañ eus re Roparz Hemon.

Hogen, n'eo ket aes na stank an darempredoù evit ar mare etre ar broioù keltiek, ha dre-se eo diaes tennañ un implij spletus eus gladoù a seurt-se.

Bezot pe vezot, an emsaverion eo a zlefe termeniñ o-unan dre un testament pesurt tonkadur a vennont mirout d'al levrioù ha d'an dielloù a lezont war o lere'h.

Maz int kristen e c'hellont - hag e tlefeft zoken - o fiziout en un ensavadur relijiel brogar ma n'eo ket gouest an tiegezh d'ober o zro, da vihanañ e-pad ur mare. Pezh a zo a-bouez eo e vefe an ensavadur-se digor da vennadoù an emsav.

N'eus forzh penaos e tlefeft reiñ da c'houzout pesurt arver a c'heller lakaat diouzhtu en implij ar foran, hag evit pere e tle bezañ gourzezet an implij-

se. Pa vo Breizh keltiek ha kristen en-dro e c'hellfe levrageoù ha dielloù liessurt an emsaverion gristen bezañ daspignet en un ensavadur diazezet mat, broadel, breizhat ha kristen.

Arabat d'an emsaver enta gwallegañ ar preder da ziogetiñ dreistpadigeth ar c'hevaled brezhon en devo berniet a-hed e vuhez. Maz eo fur d'un emsaver kristen en em harpañ war un aozadur pe ur c'hevredad kristen start evit keriañ ar c'hevaled-se, ez eo arabat dezhañ disoñjal ez eo bresk an holl ensavadurioù denel. M'en deus goar enta - pe e hêred dihanterat, ma n'en deus ket bet - e tlefe astaoliñ da vihanañ e zornskridoù, lizhiri pe destennoù savet gantañ, a-benn o damaouiñ etre meur a greizenn deuret e stourm an emsav. An oberennou lakaet war zisketenn a zlefe ivez bezañ astalet diouzhtu e meur a skouerenn.

DORNSKRIDOÙ AN NOBLETZ

Ar soñjennou-mañ a zo savet d'am spered dre m'emaomp oc'h adembann « Buhez Mikael an Nobletz », skrivet gant ar chaloni Ugueni ha deuet er-maez evit ar wech kentañ ha nemeti e 1929. Evit klokaat avat va anaoudegezh eus ar misioner santel-mañ em boa ivez staget da lenn oberenn c'hallek gouestlet dezhañ gant ur skrivagner a zo e anv Ferdinand Renaud, deuet er-maez e 1954. Hag ouzh he lenn em eus gouezet ez eo bet kollet da vat oberennou zo, savet gant Mikael an Nobletz - ar buhezskrid gouestlet d'e c'hoar Marc'harid da skouer -, dielloù 'ta a oa bet lezet gant an Tad Maner e levrageg kedu-niez ar Jezuided e Kemper.

Pa voe divodet avat urzh ar Jezuided gant gouarnamant ar roue gall Loeiz XV e 1763 - araok an Dispac'h - e voe skignet en dornskridoù diwar levrageg-se hag en he ser an dornskridoù diwar bluenn ar misioner, a vije bet talvoudus evit anavezout preder ar beleg santel-mañ hag istor an oberenn en doa kaset da benn, a voe ken pouezus he levezon war ar diwan ar feiz kristen en hor bro.

DORNSKRID TROUDE

Ul litorienn a gontin deoc'h bremañ a-benn diskouez e tlefe un emsaver lakaat bepred e aked da saveteiñ ar c'hevaled brezhon dastumet gantañ. Da vare tremenvan va breur-kaer Albert Couée e deroù ar bloavezhioù nav-

(Lenn pajenn 4)

(diwar ar bajenn 3) gont, e oa bet lakaet em arver gant e intañvez ur voestad paperennoù dornskrivet ha dizoloet gant he gwaz en un c'hozhdiadi eus bannlev Pariz dalc'het gant leanezed. Oc'h ensellout ar paperennoù-se e vezis e oa anezho ul lodenn eus dornskrid geriadur brezhonek ar c'honorol Troud, kendalc'her Ar Gonideg. Un darn a oa chomet anterin tra ma oa bet troc'het an darn all e karzennoù prop ha kempenn, ha lakaet, prest d'an implij gant leanezed arboellus, e-barzh unan a brivezioù ar c'hozhdiadi.

Ma fell deoc'h espern ouzh ho tornskridoù prizius tonkadur mantrus dornskrid geriadur Troude, grit dillo ho testament !

HEKLEV DIWEZHAÑ AR C'HAVAILH

En em c'houlenn a c'heller atav ha c'hoarzhin pe leñvañ a ranker gant afer ar c'havaill o kenderec'hel bepred. En un doare e tlefe ar gabalerion, kentoc'h, kalonekaat an emsaverion, dreist-holl dre ma roont kement a bouez d'ar geriadur barrleaus, e-lec'h emañ meneget e rank ar brezhoneg bezañ erlec'hiet ouzh ar galleg e Breizh. Perak ket e Bro-C'hall ivez, goude holl ?! Me 'gav din betek-henn ne oa ar rakwel-se nemet ur « *veu pieux* », met ret eo krediñ n'eo ket gwir, rak seurt hetadenn he deus lakaet ur beleg-meur eus ar Republik Gall Santel e Breizh da ziregiñ e zilhag gant an euzh, ha da zrailhañ gant e zent, golo hag all, ur skouerenn eus an « *Dictionnaire Blasphématoire* » milliget-se.

Evelato, arabat e vefe soñjal evit kelou-se e vefe ar beleg-meur enebet a-grenn ouzh ar brezhoneg, rak klevet hon eus lavarout, lennerion ger, en defe he-mañ nevez diskleriet e oa prest da amsaviñ skouerrennoù an « *Dictionnaire Blasphématoire* » (a zo da vezañ devet emberr holl gwitibunan war leurgêr ar Marc'hallac'h e Kemper evel un « *Auto da Fe* » (1)) gant skouerrennoù ur geriadur brezhonek all, brezhonek-gallek hennezh, gwir eo, nemet n'eus enañ, se a zo sur, poz barrleaus ebet e-keñver Hor Mamm Santel ar Republik Gall.

Ar geriadur-se enta a zo e anv « Ar Baradoz Bihan ». An talbenn-se, a anzave ar Beleg-meur, a zo un tammig iskis evit ur geriadur, hogen bezit dinec'h, daoust d'e dalbenn, n'eus ket anezhañ e stumm ebet un oberenn gatolik. Se a vefe kontrol d'al « *Laitéité* » gall santel peurbadus ha muiañ karet ! Setu, grataet en deus ar Beleg-meur lakaat bepred Kuzul-departamant ar « *Finistère* » da vouezhiañ ur yalc'had evit pourchas mil skouerenn eus ar geriadur dereat-se a vo kinniget evit ur « bennozh

Douc » da holl vaerdiou Penn-ar-Bed, da vezañ lakaet e lec'h an « *Dictionnaire Blasphématoire* ».

Gouzout a reer a-hend-all e kendalc'her an enkeiserion hag enkeiserized dileuriet gant ar « *Saint-Office* » eus ar Republik gall - a zo e anv gwir « *La Libre Pensée* » - gant an 'enkask' o deus boulec'het un nebeut bloavezhioù 'zo. War hon eus klevet emaint o vont bremañ da lenn penn-da-benn holl niverennoù Al Liamm, Skol, Hor Yezh, Al Lanv, Emsav, Bremañ hag Imbourc'h evit diskuliañ kement bomm disivoudel a c'hellfe bezañ bet moulet enno ; diouzh ret e vo karget studierion eus Skol-Veur Vrest d'ober ar renabl eus an holl vrasfemoù enep-gall a c'hellfe bezañ en em silet er c'helaouennoù-se evit ma teufe da vezañ gwir ar sturienn estlammus a zo bet lakaet e pleustr e renadoù 'zo, a venne damantiñ da vad ar bobl : Université-police = même combat.

War hon eus klevet atav emañ e penn al labour ramzel-se ur « *Révérènde Mère* » a zo padus dreistkred evit difenn gwir feiz hor Republik gall santel, ezel moarvat ivez eus al « *Libre Pensée* », nemet a zo e chal da boursuñ betek ar penn ar fallakr a zo kiriek da zihentadur speredel kement a dud yaouank dinoazh. Ouzh ar fallakr-se - Pêr Denez, evit chom hep kuzhat e anv -, a garfe reiñ da greidiñ e c'hell unan en deus bet ar c'hras da vezañ badezet er wir feiz c'hall dilezel anezhi e-giz ma kar, n'he deus ar « *Révérènde Mère* » tamm truez ebet. An dibennerez c'hall santel a vo re zous evitañ. Ez vez e vo losket, e-giz Janed Ark war ur paou. « Me a strako an alumetezenn », eme ar « *Révérènde Mère* », en ur ouzhpennañ en he zrefoed a-viskoazh da viken, ar galleg, « *Ce sera le plus beau jour de ma vie !* ».

(1) « Auto da Fe » a dalvez « Akt a Feiz » e portugaleg

Gerioù nebeut anavezet : Emouezhañ ouzh : pendre consciencie de ; krieriañ : sauvegarder, conserver ; dihanterat : direct ; astaoñ : reproduire ; barrleaus : blasphématoire ; amsaviñ : remplacer.

A-ZIVOUT AN ESPERANTEG

Gant plijadur 'm eus lennet pennad Youenn Olier diwar-benn an esperanteg, ha me bet esperantour gwezhall-gozh. Desket 'm boa esperanteg pan edon oc'h ober va studioù e skol-veur Naoned. D'ar c'houlz-se ez teue brav ar yezh ganin, pezh zo diwir hiziv. Kemmet m eus va menoz abaoe an deizioù-hont hag a-du on bremañ gant dreistelez ar saozneg. Ret eo din displegañ. Da gentañ ez eo gwel displegañ peseurt yezh eo an esperanteg.

Ober a reer eus an esperanteg, pe Esperanto ma kavet gwel, ur « yezh danzenet », pe ur « yezh danzeadel pe un « etreyezh » c'hoazh. E 1887 e voe embannet levrenn gentañ an esperanteg gant ar Mezeg Esperanto, da lavarout eo gant L.L. Zamenhof. Ganet oa bet Zamenhof er bloavezh 1859 e Bialystok, e Polska. Fellout a rae dezhañ lakaat holl genelioù ar vro (poloniz, rusianed, alamaned, lithuaniz, juzevion) da vevañ e peoc'h ; sevel ur yezh nevro a oa un diskoulm d'ar gudenn-se hervezañ. E 1894 e voe embannet an « *Universala Vortato* » (ar Geriadur Hollvedel) hag e 1905 ar « *Fundamento de Esperanto* » (Diazevadur an esperanteg), da lavarout eo « *Bonreizh* » ar yezh nevez.

Displegañ a ra an Diazevadur ne vez aotreet kemm ebet d'ar yezh ; ret eo d'an esperantourion arveañ anezhi hep kemmañ an doare-mañ-doare er gomz pe er skritur. Ur prezeg sonnet eo an Esperanto. Hag ur gwir yezh hollvedel eo hi ? Dav e vez gouzout eo bet savet ar yezh-se gant 75% a c'herioù tennet eus ar yezhoù latinek, al latin hag ar galleg dreistholl ; gant 20% a c'herioù tennet eus ar yezhoù germanek, an alamaneg hag ar saozneg da gentañ. Ar 5% arall o tonet eus ar rusianeg hag un nebeut yezhoù arall. Ne weler roud ebet eus ur yezh keltiek bennak.

Laouen-tre on bet e 1977 pan deo bet kaset din levr Roparz Hemon " Geriadurig esperanteg-brezonk " gant Kelc'h Esperanto Roazhon (Levraoueg keltiek etrevroadel-Intemacia kelta biblioteko. Gwalarn. Brest 1930). Pezh a ziskouez spered digor R. Hemon hag an Emsav ivez. Goude-se e voe c'hoazh embannadur levrrennoù Erwan ar Menga (" Deskomp esperanteg ". Hor Yezh. 1976). Bez eus ul levrig da lenn ivez, bet skrivet gant Henri Masson : "la guerre des langues. Esperanto or English ? " (La

Juna Penso. 1976). En e levr e skriv H. Masson perak eo eñ a-enep d'ar saozneg evel prezeg etrevroadel; re hir e vefe displegañ emañ an abegoù yezhel ha politikel a zo mat evitañ da nac'hañ d'ar saozneg da gaout ul lec'h « brientek ». Ned eo ket faos pep tra er pezh a lavar met ned eo ket darboellus penn da benn avat.

Savet mat meurbet eo bet an esperanteg, gant ur den kreñv ha speredek-kenañ. Siwazh, emañ hiziv e raktres pell eus ar pal ha ne c'heller ket gortoz pelloc'h. Ret eo bevañ ar bed a-vremañ. Ne c'heller ar yezh na kemmañ na gwellaat ha mard eo « etrevroadel » ned eo ket « hollvedel ». Nag ar saozneg ?

Anat eo e vez ar saozneg liammet ouzh impalaerouriezh ar Stadoù-Unanet met diouzh ar c'hiz e oa endeo en Europa abalamour da zreistelez Bro-Saoz dre ar Reverzhi C'hreantel bet ganet enni. En XIXvet kantved e kredas ar c'hallaoued amprestiñ gerioù nevez (ha reoù arall ivez) digant ar saozneg, yezh an enebour hengouel. Astenned impalaeriezh trevadennel Breizh-Veur, sujerezh armerzhel an dollar US goude an daou vrezel-bed, aloubadenn ar steredor, en deus lakaet ar saozneg en e saviad nevez : himi ar yezh hollvedel.

Ne c'heller ket arveañ ar c'halvezouriezhoù blein nevez (ar stlenneg, internet ...)) hep mestroniañ yezh Bill Gates. Pan hoc'h eus c'hoant pe ezhomm da gas ur c'hennadenn da benn arall ar bed e vez gwel deoc'h henn ober e saozneg, pan ouzer e vez skrivet e saozneg dielloù kalvezoniel « *Chantiers de l'Atlantique* » a eskemmer bemdez etre An Oriant, Sant-Nazer ha Naoned (!) e veizer ervat pouez ar yezh bremañ. A-hed an ugent vlizenn ziwzehañ ez on aet hep bloaz pe dost da Vreizh-Veur pe da Iwerzhon ha bep tro 'm eus arveret ar saozneg, nemet e Kembre ma raen gant ar c'hembraeg. Setu perak e kredan e talv ar boan gouzout lenn, skrivañ ha komz saozneg, abalamour d'ar bed keltiek hag abalamour d'ar bed-holl. En Henamzer ez eus bet meur a yezh etrevroadel : an egipteg zo bet unan anezho, evel ar gresianeg hag al latin; yezhoù marv int bremañ (en o stummoù kozh) evel yezhoù darempredel. Den ne oar petra vo eus ar saozneg ur c'hantved pe mil vloaz a-hann, pezh a ouzon ez eo ar yezh-se himi ar bed a hiziv ha dav e vez dimp ober ganti.

Yvan Guehenec

HERITOURIEN HA SAVERIEN

Setu deuet ar bloavezh 2000. Daou vil bloavezh a levez hag a boanioù, met ivez daou vil bloavezh a Feiz hag a esperañs kristen. Evit merkañ ar bloaz-mañ en deus bet fellet hor pab Yann-Baol II e vefe anezhañ ur bloavezh santel, bloavezh ar Jubile. Ur bloavezh mat evit ober ur sell a-dreñv war hon istor, ha teurel ur sell en a-raok war hon dazont.

Evit an amzer dremenet e vennomp lavarout bennoz da Zoue, rak roet en deus tro da vab-den da seveniñ traoù kaer ha reizh, ha skuilhet en deus e vennoz a-leizh war an dud, ar broioù, ar sevenadurioù. Met rankout a reomp-ni, diouzh hon tu, goulnenn pardon digant Doue evit hor mankoù a-hed ar c'hantvedoù-se. An Iliz hec'h-unan n'eo ket didamall, rak mar deo santel dre ar Spered a gas anezhi war-raok, n'eo graet avat nemet gant ar bec'herien ma 'z omp holl.

Hag e Breizh hon eus ni ivez da c'houlenn pardon evit mankoù ar gristenien. Ha dreist-holl mankoù ar c'hantved diwezhañ-mañ : n'he deus ket gouezet hon Iliz doujañ da yezh ha sevenadur pobl ar vrezhonez, troet he deus kein outo e meur a geñver, pa n'eo ket bet disprizet ganti a-wechoù. Evit ar mankoù-se e tleomp goulnenn pardon digant an Aotrou Doue. Ha dres, e-pad bloavezh ar Jubile-mañ e c'houlenn ar pab diganimp kemm hor c'halonoù, hor mennozhioù, hon obererezhioù. Kemm diazezoù direizh ar gevredigezh ma vevomp enni ; pevar galv a gas dimp, ar re a veze kaset dija gant Doue e-touez pobl ar Juzevien, en Emglev Kentañ :

- diverkañ dileoù ar broioù paour ;
- dieubiñ ar sklaviidi ;
- diwall mat an douar ;
- addasparzhañ an douaroù.

Evidomp-ni amañ e Breizh e tesson kreñv ennomp ar galvadennoù-se. Galvet omp gant an Iliz da stourm evit reiñ o gwirioù d'an holl bobloù er bed, da oberiañ evit ma vo dieubet an holl dud a vev dindan ur yev bennak, da labourat evit ma vo miret glan ha disaotr hon douaroù, hor morioù, hon endro, da grouiñ traoù nevez ha kaer en hor yezhoù hag hor sevenadurioù, da ingaliñ ar madoù etre an dud evit m'en devo pep hini peadra da vevañ dereat. Mennet omp da gas kement-se war-raok peogwir e fell dimp bout heritourien ha saverien.

Heritourien e vennomp bezañ rak kement tra en deus fiziet Doue etre hon daouarn a rank bezañ diwallet, kresket, enoret, kaset da benn. Kement yezh en deus roet d'an dud evit E bediñ ha rentañ gloar

Dezhañ a zle bezañ prizet hag implijet. Heritourien omp eus ar Grasoù en deus skuilhet an Aotrou Krist war hor bro Vreizh a-hed ar pemzek kantved a vuhez kristen, abaoe avielerezh hor bro er pempvet kantved.

E-mesk holl binvidigezhioù an herezh-se hon eus karantez virvidik ha fiziañs vras ar vrezhonez evit ar Werc'hez Vari, Mamm da Zoue, mamm an holl dud.



Itron Varia Rostren

Er bloaz-mañ hon eus abegoù kreñvoc'h c'hoazh da veuliñ Doue evit bout roet Mari dimp da skouer ar gristenien, peogwir e lidomp kantvet Deiz-ha-bloaz kurunidigezh Itron Varia Rostren.

Tud bro-Rostren, abaoe 700 vloaz, gant o ger-stur "Oultre" - "Pelloc'h, dreistoc'h, uheloc'h, gant sikour Mari" - o deus roet

ur merk dibar d'o feiz. Gant Mari ha dre Vari e fell dezho bezañ feal da Jezuz-Krist hor Salver. Ad Jesum per Mariam.

Hag abaoe 1900 emañ ar Werc'hez kurunnennet o wareziñ poblañs ar geoded. Kement-se a fell da dud bro-Rostren anavezout en un doare lidel ha laouten en o gouel eus ar 16 a viz gouere, evit kantvet deiz-ha-bloaz he c'hurunidigezh.

N'eo ket hepken avat war-du an amzer dremenet e sellomp evel heritourien, met ivez war-du an dazont, rak saverien e fell dimp bout ivez.

Fellout a ra dimp bout saverien evit derec'hel bev ar Feiz amañ en hor bro, evit diazezañ ur gumuniezh kristen a vevo tostoc'h c'hoazh ouzh talvoudoù an Aviel, evit labourat gant ar bobl abezh, an dud a volentez vat, petra bennak ma ve o c'hredennoù, da sevel ur gevredigezh reizh ha yaç'h, m'en devo pep den enni e blas, e labour, e giriegezhioù, e enor.

Ar c'hantved da zont a vennomp reiñ dezhañ un dremm zenel, evit ma vo anavezet Doue evel an Hini a laka mab-den en e sav, Doue ar vuhez, Doue an Adsav.

Gant Mari, Mamm hor Salver, hon eus fiziañs e kasimp ar raktres-se war-raok.

*Roit nerzh ha souten
Dimp ivez e Breizh
Ha miri da viken
Ar Feiz vat 'n hon c'hreiz*

Yann-Talbot, Person Rostren

TRO BREIZH :

NAONED EN "TRO-BREIZH"

Gant an Aotrou 'n eskob eus an Naoned, en e iliz-veur, e oa bet kaset war-raok ur pirc'hirinaj war droad eus Kêr-an-Naoned da Wened d'al lun 17 a viz Ebrel evit diskouez eo mennet Naonediz da gemer o flas e pirc'hirinaj an holl Vretoned war vezioù ar Sent o deus degaset ar feiz kristen en o bro.

Tost da 300 a dud a oa bodet dirazañ ha dirak un ugent bennak a veleien eus ar parrezioù tro-dro evit an Oferenn hag al lid kas-en-hent. E brezhoneg e voe lennet an Aviel gant unan eus an daou veleg karget gant an aotrou 'n eskob da ambroug ar gerzherien e-doug ar sizhunvezh betek Gwened. Roet e oa bet da bep hini ur follennad kantikou e brezhoneg, hag e-pad an Oferenn e voe kaset ar c'han en-dro gant al laz-kanañ brudet "Anna Vreizh".



Banniell Sant Paol a Leon



Iliz-Veur St Kaourintin Kemper

PROSESION VRAS E KEMPER

Seizhvet tennad an Dro Vreizh a echuio a-benn ar sadom 5 a viz Eost e Kemper.

Ur brosesion vras a zo rak-welet, a loc'ho war-dro 15 eur diouzh Lokmaria evit mont war-du an iliz-veur.

Banniell E.A.T. a vo eno. Ma c'hoarvez ganec'h bezañ e Kemper en devezh-se e c'hellot kemer perzh ganecomp er brosesion. Un doare eo da lidañ derou an trede milveder evel kristenien ha brezhoned.

P.K.

UN OBERER
A DALV
KANT LAVARER

UNVANIEZH KOAD-KEV

10 Straed an Ti-Post

29410 PLOUNEOUR-MENEZ

RENTA-KONT LUN FASK 2000

An amzer ne oa ket a-du : e-giz e-kreiz ar goañv edo, yen ha glav diarsav. Da zek eur e oa mestra 25 den e chapel Sant Kaourintin Toull-ar-groaz, e-lec'h ma lidas an Aotrou Perrot e ofereñn ziwezhañ d'an 12 a viz Kerzu 1943, a-raok bezañ drouklazhet war hent e zistro war-zu bourk Skrigneg. Da zek eur hanter e oa an emgav dirak ar Groaz a verk al lec'h ma voe lazhet an Aotrou Perrot. Daoust d'ar glav bras e reas Youenn Craff ha Tepod Gwilhmod anv eus ar vrogarourien marv abaoe bloaz hag ivez eus ar plac'h a voe lazhet e Kever tri devezh a-raok. Kondaonet-krenn e voe ar muntr-se, ar feulster dre vras ivez, ha da gentañ hini ar Stad C'hall e-unan a-enep d'ar vretoned. Kanet e voe an "Dalc'h Soñj !" (war don kan broadel Iwerzhon). Kalkzik bannielloù a oa bet degaset gant ar vaniferien ha diskouezet e voe ur banniell eus Breizh bet prenet gant an Unvaniezh ha skrivet warnañ : "Bri d'ar re o deus hadet evit ar vro". Ar vrogarourien a gemero perzh e brosesion vras an Tro Breizh ar bloaz-mañ e Kemper a c'hello en em gavout en-dro d'ar banniell-se d'ar 5 a viz Eost war-dro teir eur e Lokmaria.

Da Unnek eur e voe an emvod meur ha dilennet pemzek ezel evit Kuzul-Ren ar gevredigezh.

Da Unnek eur hanter e voe lidet an Oferenn gant an Aotrouien Blanchard ha Kollo ha da echuñ e voe pedet ha kanet e-harz bez an Aotrou Perrot e-kichen Chapel Koad-Kez a-raok debrñ : lod a zebbras war al lec'h, hag ar re all a yeas da ostaleri Keneken.



Chapel Itron Varia Koad Kez

Un abadenn war "France Culture" a roas un heklek eus an darvoud a-drugarez d'ur c'hazetenner a orin russion a dremenas an devezh ganecomp.

Kenskrivit !

Kelaouenn diabarzh Emglev an Tiegezhioù, kevredet e Kuzul ar Brezhoneg, eo Imbourc'h.

250 lur (38 €, 38 \$) eo ar skodenn vloaz ordinal, a ro ar gwir da resev ar c'hannadig hag ar stagadennoù trimiziek. Sevel ar ra da 100 lur evit ar re a garfe resev ar c'hannadig nemetken.

Ar skridoù, kemennoù, lizhiri ha skodennoù a zo holl da gas da :
Imbourc'h, Kergreven, 29800 Trelevenez
Pgz : 02 98 25 10 72 cat@libertysurf.fr
Plr : 02 98 25 18 87 (gervel a-raok kas).
http://perso.libertysurf.fr/kannadig

Moulerezh prevez. Merour : T. Gwillmod
ISSN : 1144 357X CPPAP : 50015. Ar pennadoù ne enouestlont nemet o aozerien. Diskleriet hervez lezenn.

Ur gelaouenn lennegel nevez

Degemeret hon eus niverenn gentañ ur gelaouenn lennegel nevez, a zo hec'h anv "Aber".

Pellzo n'eo ket c'hoarvezet seurt darvoud e Breizh. Pevar skrivagner o deus kenlabouret da sevel an niverenn-mañ, hogen ar gendaoladenn bouezusañ a zo degaset gant Pierrette Kermaol, a ziskouez hec'h ampartiz amañ evel skridvarnerez, saverez kontadennoù, ha kevyezherez, hag hi oc'h ober gant ur yezh akedet, fraezh ha pinvidik, arnevez hep more'hed ebet.

Spi hon eus e ray berzh an arnod-mañ da zigeriñ un ervenn nevez el lennegezh vrezhonek. Soñjal a ra deomp a-hend-all e c'hello ar gelaouenn-mañ c'hoari ur roll abouez e par ar yezh hag an arz, pa ne ve nemet dre m'emañ skridaozet en ur brezhoneg unvan-rik, hep trefodadur ebet ; netra nemet evit an arbenn-se e tlefe ar gelaouenn-mañ bezañ harpet gant ar vrezhonegerion a zalc'h da unvanded ha da rikted ar yezh lennek. Priz ar c'houmanant : 200 lur.
Aber, 115 Kergareg, 29 870, Landeda.

A-berzh Cl. Lanchec : « *En em c'houlenn a raen e deroù ar bloaz hag eñ e kendalc'hfen da lenn Imbourc'h (...)* Kendalc'hoc'h eus da gas din ho kannadig memestra ha ret eo din anzav bremañ n'on ket dipitet gantañ (...) Setu perak e kasan deoc'h va adkoumanant gant kement a zalc'h (...).

Trugarekaat a reomp Cl. Lanchec evit e lizher kennerzhus : ra gaso o skodenn eta mar plij ar re n'o deus ket graet c'hoazh e-touez lennerien ar C'hannadig. N'hon eus kaset stagadenn ebet evit c'hoazh met dont a raio hep dale e-pad an hañv (gwelout p.1).

(diwar p.2) bet tamallet gant archerion Sant-Nikolaz ar Pelem, din koulz ha da re yaouank all lakaet gante ar BZH kentañ war hon c'harr, bout kenlabouret gant an Alamaned (*"on sait bien que vous avez collaboré avec les Allemands pendant la guerre"*). Ha karzet e vimp da viken... keit ha na vimp ket distrujet moarvat. Fent ganin avat : e dibenn ar brezel e 'm boa graet ma zammig *résistants*. Start oa errou d'ar soudarded alaman : daou anezhe o doa laeret bep a sac'had avaloù-douar da 'm moereb. Ha hi war o lerc'h, o gwintañ en traoñ, adaptout he zraoù ha d'ar gêr gante, me dalc'hmat da heul !... Brav d'ar Jakobined enebañ ! Dre o gwall eo deuet speread an "emrenerezh" hag an "dizalc'hiezh" e Breizh. Mezhekaet ma veze — ma vez — sevenadur Breizh gante (*"Pour l'unité de la France, la langue bretonne doit disparaître"*, A. de Monzie 1925) endra gelennet *le droit des peuples à disposer d'eux-mêmes*. Mitterand e-unan en doa anzavet ar *génocide* sevenet e Breizh.

Hag e lec'h all. Ra vo diverket ivez o anvioù da vaodiered an Trevadennou, Mitterand en o zouez, o deus bet un emzalc'h "gouennelour" en o amzer. Hag ar re zo kiriek eus an "torfedoù" sevenet en trevadennou, *fellghaed* "spazhet" hag all.

Neb en deus ker'h er fôrn a graz, gouez d'ar re gozh (kemeret evitañ neb a vo gouest da grompen e komzer anezhañ !)

Gant se 'ta ez en sur deoc'h ez eo fazi a-berzh Diwan plegañ da c'houlenn ar Jakobined. Goude lazhañ anv Roparz Hemon, petra vo graet c'hoazh enep da Vreizh, d'he yezh ha d'he sevenadur ? Roent ar skouer hon renerion da gentañ ha diverkent o anvioù da gement hini en deus graet droug da Vreizh. Turiaw Ar Menteg

Geriou nebeut anavezet : Kempredel ; Contemporain ; Hannez ; Histoire ; Kareziñ ; blâmer.

IMBOURC'H :

**400 LEVRENN ABAOE 30 VLOAZ :
KLOKAIT HO TASTUMADENN...**

**KANNADIG
IMBOURC'H****AET EO
GANIMP !**

Un nebeut mizioù 'zo hor boa kemeret perzh e stourmadeg « Ni Hon Unan » evit goulenñ groñs ouzh ar bankoù lakaat brezhoneg war o dorikelloù emgrefe. Act eo ar maout ganimp : ar « Banque de Bretagne » en deus asantet henn ober, hag ar « CMB » en deus staliet dorikelloù pederyezhek e Lesneven hag e Daoulaz, da c'hor-toz o stalioù e pep lec'h e Breizh « er mizioù da zont », a lavar dimp ar CMB en ul lizher resevet ar miz-mañ.

**DISOC'HOÙ DI-
WAN :**

100 % en tri skolañ evit ar breved (trede klas)
96 % e lise Karaez evit ar vachelouriezh, gant notennoù mat-kenañ e prederouriezh peurgent.

NEVEZ DEUET

ER-MAEZ : PEDENN
Ur CD gant Anne Aufret o kanañ dimp kanti-kou anavezet, gant Jean Baron ouzh ar bombard, e ti « Keltia-Music.

**TRO BREIZH :
E LINENN ISTOREL BREIZH**

Philippe Abjean, rener an "Dro Vreizh" bet diazezet gantañ ha daou vignon e 1994, a lavare din e 1995 e lec'hic e oberenn da heul hini ar Bleun-Brug. N'eo ket hep abeg eta m'en em gavas prosession vras an "Dro Vreizh" e Kemper, seizh vloaz goude bezañ aet kuit eus ar gêr-se, dres 50 vloaz, deiz evit deiz, d'ar bemp a viz Eost 2000, war-lerc'h Bleun-Brug Kastell-Paol 1950.



Truezus e voe al lidou d'am soñj e Kemper : goude ar brosession vut e voe ur gwir foar en iliz-veur, tu ebet da bediñ, an diskan evit pedenn ar fideled a voe e SAOZNEG, ya ! E SAOZNEG ! Ha ne voe nemet daou gantik brezhonek e-pad al lid. Ma ! Arabat deoc'h krediñ evit keloù-se eo bet ur c'hwitadenn an Dro Vreizh ar bloaz-mañ, namn : n'helle ket bezañ. Un akt a feiz e ragevezh Doue war hor bro eo krediñ e dazont an "Dro Vreizh", 500 e oamp e 1994 ha pevargementet e oa an niver ac'hanomp an deiz all e Kemper. Act eo ivez war greskiñ niver an emsaverion o deus kemeret perzh er gerzhadeg-hir-se, ha gwel a-se. Mat e vefe prederiañ avat war an abegoù o deus lakaet an Dro Vreizh 'giz nevez' da ober berzh, war ar frouezh a weler anezhi ha war ar pezh a vefe mat da ober en... ur pennad all.

BENNOZH AR PAB

E 1994 eta e tivizas tri faotr yaouank eus Kastell-Paol reiñ lañs en-dro d' "an Dro Vreizh". Gervel a rejont evit-se ur beleg a anavezet hag o doa fizians enañ, ur breizhad kar-e-vro bet beleget e Brussel un den troet ouzh an tisavouriezh a-gozh e Breizh, an Tad Keranforest, eus Karanteg. Dizale e voe bec'h e presbitalioù 'zo eus eskopti Kemper dre ma eo ezel Keranforest eus ar gumuniezh karismatek "Emmanuel" hag a zo, evel ar c'humuniezhoù all eus ar pezh a anver "an adnevezadur eus an Iliz", 'persona non grata' evit ul lodenn vras eus kloer eskopti Kemper. Traditionalisted, hervezo. Ur seurt kloerelouriezh kuzh a ra abaoe pell he reuz en eskopti-se, siwazh ! Ma oa sklaer an enebiezh a-raok an tennad kentañ, a-berzh lod, e rankas dizale cnebourion douet "Tro Breizh Kastell" kuzhat

(Lenn pajenn 2)

o itrikoù o vezañ ma kasas Yann-Baol II e-unan e vennoz war ar pemp kant " pirc'hirin " kentañ dre un Telegramm dic'hortoz e dibenn an tennad kentañ. Ur beleg anavezet-tre en eskopti a lavaras ne oa ket « an hentoù istorel » a veze kemeret gant " Paotred Kastell ". Brud fall a veze graet dezho dre zindan " L'Eglise triomphante ! ", " Ret e vo kofesaat adarre ! ", " Re a beddennoù hag abostolezhez ebet ! ", " Breizhatav-ed !! " hag all... A bep seurt a zo bet klevet... ha memez kanaouenn a glever ganto seizh vloaz war-lerc'h, siwazh !

Enebourion ar c'humuniezhoù nevez, enebourion ar Pab en Iliz e Breizh, enebourion ar Spered Broadel, a rank bezañ stag ouzh " an Dro Vreizh ", n'o deus ket disterniet : dre gasoni hag aheurtrezh o deus lakaet an Dro Vreizh da c'hwitañ un tamm ar bloaz-mañ, hel lavarout a ran didro.

DEVEZH DISPAR KERANNA-WENED

Ma ! A drugarez Doue, estreget ar veleion-se a zo e Breizh : kounañ a ranker an dro hon eus graet e eskopti Gwened, ha dreist-holl an degemer c'hwiek a reas dimp an Aotrou "n eskob Gourvez e Sant Padarn Gwened : e brezhoneg, -ha brezhoneg reizh, c'hwennet, nebeut a faziou ennañ- e komzas ouzhip da gentañ, hag e venegas " ar sent, diazezerion hor mammvro " (e galleg " Les saints fondateurs de notre patrie, la Bretagne " . E Keranna e komzas hirik e brezhoneg ivez ha dreist-holl e reas an Aotrou Poupard ur brezegenn a-bouez, am eus troet evit " Kannadig Imbourc'h " hag a gavot pelloc'h. Kentelius eo ar brezegenn-se war veur a boent ha peurgent, etre al linennoù daou dra da vihanañ da urzhaz an Iliz e Breizh :

1. RET eo harpañ adaviadur Europa war hec'h hengoun sevenadurel katolik
2. Ar C'humuniezhoù nevez o deus ur roll a-bouez-bras da c'hoari en adaviadur Breizh. Ra gompreno neb a lenno ! Da echuiñ e rankan menegiñ Caroline, Anne, Anne-Claire, Annick, Béatrice, Catherine, Céline, Christelle, Claire, Claude, Gaëlle, Gauthier, Gilles, Ifig, Isabelle, Laurence, Marie, Mariette, Maryvonne, Sabine, Armel, Elodie, Nolwenn, Olivier, Ronan, Armelle, Arnaud, François, Goulven, Romain, Samuel, Efflam, Visant, Etienne, Michel, Bruno ha Christian, holl paotred ha merc'hed yaouank eus eskopti Gwened o deus kinniget "ur veilhaded keltiek" dirak ar Sakramant, meulet ra vezo, e penniliz Kerrana, a oa leun. Se-

OFERENNOÙ BREZHONEK

Bemdez e vez lidet an oferenn da 7e e Chapel beileon gozh Keraodren e Brest ha bep sadorn da 20e30 e « Minihi » Trelevenez.

2/9 Derc'hent Pardon ar Folgoad. Oferenn da 18 eur. Kerzhadeg adalek chapel Landouzen da 16 eur (An Drenez). Ur gerzhadeg all a vrezhonegion a ya kuit eus Kergreiz Landerne da 4 eur vintin evit erruout er Folgoad da 7 eur (oferenn gentañ)

3/9 Sant Jili Henbont 10 e 30 (divyezhek)

3/9 Sant Jili ar C'hozhvarec'had (titour all ebet)

3/9 Langombrac'h Landaol 10 e 30 (Divyezhek)

3/9 Sant Mazhev Gwidel 10 e 30

10/9 Pluniav 10 eur


10/9 Santez Berc'hed Landevan 10 e 30 (divyezhek)

17/9 Kistinid da 11 eur 15 e chapel Lokunole – Devezh Breuric'h Sant Ildud.

17/9 Itron Varia Wir Sikour, Bourk Landaol da 10 e 30 (proseion).

24/9 Branseol Landaol 10 e 30

Kasit keloù dimp mar plij pa welit mankoù (pe faziou !) er roll-mañ, evel-se e vo klokoc'h ar bloaz a zeu !



Marc'heion Sant Yann Jeruzalem, kalzik emsaverion en o zouez, a roe dour bemdez war vord an hentoù

tu ar pezh a glevis : kantik gallek ebet, nav e brezhonek ha tri e latin, ur varzhoneg gant Yann-Bêr Kalloc'h ha sonioù ouzh an delenn, ar vombard, ar binioù, an ograou, ar gitar, hag all... Ha daou eus paotred ar strollad-se a zo mennet da vont da veleg. Meuleudi da Zoue ! Ra ouezint o-daou o lenn al linennoù-mañ – rak lenn Kannadig Imbourc'h a reont – e c'hellont kentañ war beddennoù ha skoazell Emglev an Tiegezhioù.

T. Gwillmoud

Appel de Carhaix

Collectif Breton pour la Démocratie
B.P 103 29270 Karaez

Constitué le samedi 28 Octobre 1999 à Karaez (Carhaix)

Ces dernières années se sont exprimées avec une certaine force, en Bretagne, des aspirations portant sur l'émancipation culturelle et linguistique, l'aménagement du territoire, le respect de la nature, le développement économique. Elles ont été exprimées, sans réserves, de manière nouvelle et forte par une large partie de la population, active ou non.

Celle-ci est en droit d'attendre des institutions et de la classe politique la satisfaction des demandes exprimées selon les règles de la démocratie en vigueur dans une République.

La force d'inertie, les promesses sans lendemain, les propos dilatoires ont tenu le plus souvent lieu de réponses. Parfois, même le mépris.

On peut parler de **déficit de démocratie**. Aux conséquences graves et qui risquent de l'être encore plus demain.

L'appel du collectif

Le collectif breton pour la démocratie s'est constitué le 28 octobre 1999 à Carhaix, à l'initiative d'un groupe de citoyens de l'ensemble de la Bretagne. Il propose que se joignent à son appel toutes celles et ceux qui font vivre la Bretagne d'aujourd'hui. En respectant les principes fondamentaux de la démocratie, des Droits de l'Homme et de l'attachement à la diversité et l'expression culturelle de tous les peuples. N'est donc pas concernée par cet appel toute personne dont les actes ou les propos relèvent du racisme et n'accepte pas la différence culturelle.

Nous n'admettons pas

- que la société bretonne soit enfermée dans un cycle de violences que nous refusons et dans un étouffement du débat politique par le processus classique provocation-répression,
- que ses aspirations légitimes se heurtent sans cesse à des murs.

Nous affirmons

- que la satisfaction de ces aspirations relève d'une nécessité urgente et vitale pour la vie démocratique,
- que ces aspirations, y compris l'émancipation de l'expression culturelle originale du peuple breton, vivante et ouverte à la diversité de l'humanité, relèvent d'un choix politique qui implique tous les acteurs de la vie sociale en Bretagne,
- que ces aspirations ne peuvent trouver de réponses politiques satisfaisantes que par un rejet sans ambiguïté, notamment par les élus bretons, de la logique d'affrontement voulue par l'Etat.

Nous exigeons

- la satisfaction sans nouveau délai des 5 aspirations suivantes indissociables les unes des autres, sans ordre de préséance :
- la mise en place d'un statut public régional pour les écoles Diwan, premier pas vers la reconnaissance de l'enseignement du / en breton comme relevant de la mission du service public d'enseignement en Bretagne,
 - la modification de la Constitution conformément aux engagements européens et internationaux de la France (Charte européenne des langues minoritaires, Convention internationale des droits de l'enfant - article 30 -...)
 - un pouvoir régional véritable par l'élargissement des compétences politiques et des moyens financiers du Conseil régional de Bretagne dans les domaines de l'aménagement du territoire, de la culture, de l'environnement, de l'économie,...
 - la réunification administrative de la Bretagne,
 - l'adoption d'un cadre structurel pour le développement maîtrisé de l'économie bretonne afin de faire face à la mondialisation des marchés.

Les premiers signataires :

- GRALL Charlie - LE BEC Loëz - JACQ Angèle - PERAZZI Jean-Charles - JAKEZ Fulup - KERNEIS Yann-Fañch - BERNARD Jakez - BOCCOU Pascal - ROBIN Jean-Dominique - RIWANON Kervella - GAUTIER Gérard - POIRIER Claudie - TROADEC Christian - KERNALEGENN Daniel - MELL Filip - LAVANANT André - BOCQUENET Louis - GRANVILLE Emile - MEVEL Jean-Yves

Je signe aussi

Nom Prénom Profession Adresse Signature

Galv Karaez

Emglev ar Vretoned evit an demokratelezh

Bet savet d'ar Sadorn 28 a viz Here 1999 e Karaez

Er bloavezhioù tremenet ez eus bet embannet sklaer a-walc'h e Breizh c'hoantoù diwar-benn an emrenerezh sevenadurel ha yezhel, terkerezh an tiriad, an doujañs ouzhañ natur, an diorroadur ekonomikel. Embannet int bet adarre, didro, ha gant pennegezh gant ul lodenn vras eus ar boblañs, pe e ve gant tud ul labour ganto pe e ve gant tud dilabour. N'eo ken reizh neuze e c'hortozje ar bobl digant an ensavadurioù hag ar renkad politikel e vefe roet respontoù asaz d'ar goulennoù eztaolet hervez reolennoù an demokratelezh zo o ren en un Republik. Lezober, promesaoù kaer, komzoù goulo eo zo bet taolet deomp evel respont purliesañ. Dismegañs a-wechoù zoken. Anat eo ez eus aze un **diouer a zemokratelezh** drastus e empledadennoù hiziv. Drastusoc'h c'hoazh e c'hellfent bezañ a-barzh pell.

Galv an Emglev

Bet eo bet savet an Emglev Breizhek evit an demokratelezh d'an 28 a viz Here 1999, e Karaez, diwar intrudu un nebeud keodedourien eus pep korn eus Breizh. Kinnig a ra d'an holl re, paotred pe verc'hed, a laka Breizh da vevañ war ar penbez d'en em unaniñ en-dro d'ar galv-mañ. Kement-se evit an holl re a zoug da bennaennoù diazez an demokratelezh, da wirioù Mabden, evit an holl re zo tomm o c'halon ouzhañ sevenadurioù liesseurt an holl bobloù. Ne sell ket ar galv-mañ eta ouzhañ neb a da denje e gonzoù d'ar ouennelouriezh, ouzhañ neb na zegemerje ket an diforc'h sevenadurel.

N'omp ket evit degemer

- e vefe bac'het kevredigezh Breizh e-barzh ur c'helc'hiad a feulster nac'het ganeomp, e vefe mouget ar breutadegoù politikel gant an argerzh klasel, provokiñ da gentañ, mac'hañ da c'houde.
- e skofe atav hor c'hoantoù reizh a-benn en ur voger.

Embann a reomp

- ez eo mallus-bras, hag hollret evit buhez an demokratelezh, e vefe gwalc'het d'ar c'hoantou-se,
- e tenn ar c'hoantou-se, hag en o zouez dizalc'hidigezh eztaoladur sevenadurel dibar pobl Breizh bev ha digor war liesseurted an Denelezh, d'un diabab politikel a sell ouzhañ holl aktourien ar vuhez kevredigezhel e Breizh.
- ne vo kavet respont politikel a-zoare ebet d'ar c'hoantou-se keit ha ne vo ket bet distaollet fraezh, ha gant an dilenniñ vreizhat peurgetiket, al logik brezel lakaet e plas gant ar Stad.

Goulenn groñs a reomp

- ma vo roet hor gwalc'h hep daleañ pelloc'h war ar pemp goulenn da heul, goulennoù dizastagadus an cil diouzh egile ha lakaet amañ hep urzh pouezusted :
- **Ur statud publik rannvroel d'ar skolioù Diwan**, pazennn gentañ war anaoudegezh ar c'helenn brezhonek hag e brezhoneg evel ur gefridi a servij publik evit an deskadurezh e Breizh.
- **Kemm ar Vonreizh** diouzh engouestadurioù europat hag etrebroadel Frañs (Karta Europa ar yezhoù rannvroel pe minorelaet, Kenemglev etrebroadel gwirioù ar vugale, h.a.).
- **Ur galloud rannvroel gwirion** a vo tizhet dre ledanaat kefredioù politikel ha peadra moneizhel Kuzul Rannvro Breizh war dachenn terkerezh an tiriad, ar sevenadur, an endro, an ekonomiezh,...
- **Adunanidigezh melestradurel Breizh**
- **Vot ur raktres-stur** evit ma c'hello ar Vretoned mestroniañ ekonomiezh Breizh a-dal da vedeladur ar marc'had.

Ar sinerien gentañ

- GRALL Charlie - LE BEC Loeiz - JACQ Angèle - PERAZZI Jean-Charles - JAKEZ Fulup - KERNEIS Yann-Fañch - BERNARD Jakez - BOCCOU Pascal - ROBIN Jean-Dominique - KERVELLA Riwanon - GAUTIER Gérard - POIRIER Claudie - TROADEC Christian - KERNALEGENN Daniel - MELL Filip - LAVANANT André - BOCQUENET Louis - GRANVILLE Emile - MEVEL Jean-Yves.

Sinañ a ran me ivez

Anv

Raganv

Micher

Sinadur

NIVERENN 8

KANNADIG IMBOURC'H

PAJENN 3

NOTENNOÙ POLITIKEL gant Youenn Olier

ABAFTE AN EMSAVERION

Dav eo din distreiñ atav war afer ar c'havaihl dre ma tiskouez an disoc'hoù anezhañ pegen gwan hag abaf eo chomet an emsaverion abaoe ar brezel diwezhañ, evel maz eo bet anat da gefver afer Skolaj ar Releg tennet prim-ha-prim anv Roparz Hemon diwar an talbenn anezhañ.

Lavaret hon eus meur a wech n'eo ket reizh tamall ur stourmer politikel evit bezañ heuliet an hent a hanvale dezhañ bezañ ar gwellañ evit tizhout ar pal en doa lakaet dezhañ. Dre-se, a gav din, n'eur ket evit kareziñ ar rener komunour gall Thorez dre ma oa act da Voskov da repuñ pa oa an Unvaniezh Soviedel kevredet gant ar riez alaman kenelwerinat. Evit an hevelep abeg, piv a gavfe abeg e Lenin a c'houlenne sikour an Alamaned – ur riez a oa o vrezeliñ ouzhañ hini maz aparchante outañ – evit treuziñ tiriegezh Alamagn hag urzhiñ an dispac'h komunour e Rusia e 1917 ? Ha petra soñjal – ma sellomp pelloc'h en tremened – eus emzalc'h ar veleion iwerzhonat en em ganne skoaz-ouzh-skoaz gant soudarded c'hall an dispac'h enepkristen dindan urzhioù Hoch, e skeud talañ ouzhañ ha galloud saoz mac'hom en o bro ? Daoust ha rebechet e vo ivez ouzhañ ar soudarded euskarat e-pad brezel Spagn, anezho katoliked evit an darn-vuiañ, bezañ kensourmet gant ar gomunourion enepkristen a oa e penn ar gouarnamant e Madrid ? Ha c'hoazh, en degouezhoù-mañ, ez eus kont a genstourm milourel-rik. E degouezh Roparz Hemon n'eus netra heñvel : disteroe'h kalz e oa ar bruderezh a-du gant an Alamaned, evit chom hep lavarout ne oa ket anezhañ er Skingomz brezhonek renet gantañ, eget e n'eus forzh peseurt kazetenn a veze embannet neuze en hor bro dindan evezhierenz an Alamaned. Ha c'hoazh, adarre, ne ran ket anv eus amezhiadurezhioù gall ar stad c'hall vichyat reolet gant an Alamaned, a genlaboure kalz a dostoc'h gant ar galloud alaman eget atebcion an arzoù, ar c'hultur pe ar skol-veur e Breizh. Evel m'hon eus lavaret, ret e vije bet barn neuze an holl o doa dalc'het ur roll er vuhez kevredigezhel, sevenadurel pe armerzhel en hor bro, ha se n'eo ket bet graet. E stumm ebet ne oa douget Roparz Hemon da dezennoù an damkanourion genelwez-

rinat, ha ken anat eo ar wirionez-se ma n'eus ket ezhomm d'he lakaat e goulou. Neuze eta, ne glasker louzañ Roparz Hemon nemet evit divrudañ an emsaverion. Mantrus eo bet avat laoskoni ar sañset emsaverion ha n'o deus ket kredet embann pennad ebet evit difenn rener "Gwalarn" er c'helaouennoù brezhonek.

Meven Mordiern pe Roparz Hemon ?

Gouzout a ran e lakaer ar bec'h war Roparz Hemon evit bezañ embannet un nebeut frazennoù o lavarout, da skouer, e tlee ar galleg mont da get e Breizh (forzh penaos e kav din ne oa, e soñj Roparz Hemon, nemet Kornog ar Vro – se a vefe da wiriekaat er frazenn meneget en "Dictionnaire Blasphématoire"). En dro-mañ adarre ne gomprenan ket mat ersav ar beleg meur en deus roget e zilhadrirak ar yoc'hstlenn goude bezañ he lennet. Da gentañ e resiz n'eo ket ar menoz-se piauvel da Roparz Hemon ; hen amprestet en deus digant Meven Mordiern, ur gall a ouenn rik, mignon da Frañsez Vallée, a zispleg en e oberenn penn-da-benn n'eo ket ar galleg – un trefodaj latin-german, gouez dezhañ – yezh ar c'hallaoued, hogen... ar c'heltieg kevandirel, da lavarout eo ar brezhoneg. Aes-kenañ e vefe kavout ar menegoù m'emañ displeget enno ar mennoz-se en oberenn ar skrivagner-se.

Ar brezhoneg : kevatal d'ar galleg er c'hwec'hkogn

E gwirionez, petra a zo barrletaus er soñj e tlefe ar brezhoneg bezañ erlec'hiet ouzhañ ar galleg e Breizh penn-da-benn ? Ha zoken er C'hwec'hkogn penn-da-benn ? Daoust hag ar brezhoneg n'eo ket ur yezh c'hwec'hkognat-rik ? Ma vefe anv eus an alamaneg, pe ar saozneg, pe ar spagnoleg, yezhoù riezoù bet o kevezañ ouzhañ riez c'hall santel, e komprenfen a-walc'h euzh ar beleg-meur. Hogen, e stumm ebet ned eo ar brezhoneg ur yezh enebourion er C'hwec'hkogn, na zoken ur yezh estrenion. Daoust ha ne zere'houez ket ar brezhoneg ar yezh a oa komzet penn-da-benn d'ar c'hwec'hkogn ha zoken en tu-hont dezhañ mil pemp kant vloaz 'zo ? Perak e vefe stag dazont ar pobloù c'hwec'hkognat ouzhañ ar galleg ? Daoust hag ar yuzevion n'o deus ket kemmet yezh e-kreiz an ugentvet kantved, o tizlezel an holl yezhoù a gomzent evit adkemer an hini a brezegent en o amzer-dremenet pellañ ? Daoust hag ar pobloù all, hini Vreizh (Lenn-pajenn 4)

(diwar ar bajenn 3) ha re Vro-C'hall, n'o deus ket ar gwir da zilezel ar yezh maz eo bet eztaolet enni ar c'hultur bourc'hiz en e euzhusañ, evit kemer ur yezh nevez a roy an tu dezho da zistreiñ d'o gwirinelezh-orin ha d'o gwerc'helezh-orin ? Ne gomprenan ket mat perak e toug an holl zevoded-se - genaouecion asotet a venn bezañ a-du gant ar werin ! - kement a vrii d'ur yezh tud-a-lez ha bourc'hizion, ha perak e tiskouezont kement a zispriz ouzh ar brezhoneg, a zo ur yezh werinel-rik.

Istor Bro-C'hall : un istor santel !

Setu ar pezh a gomprenan : n'heller ket diforc'hañ ar galleg diouzh istor Bro-C'hall, a zo un istor santel, na diouzh al lennegezh c'hallek, a zo ar Skriturioù Sakr anezhañ. Ne vefe ket mui ar vugale gaezh desavet e brezhoneg gouest da lenn er skriturioù santel-se, oferennoù Voltaire penn-dabenn, evit kregiñ ! Eveljust, gwir eo, n'eus ket anv, ne vern penaos, a lezel bugale gaezh "Diwan" hep gouzout galleg ! Ya 'vat, eme devoad an Iliz C'hall Santel, hogen ne vo ket mui ar galleg yezh ar spered, ha ne vo mui istor Bro-C'hall evito allas, an istor santel a roy dezho an tu d'en em stagañ ouzh ar wir feiz c'hall ! Kompren mat a ran e ve euzhet holl zevoded ha devozed an Iliz C'hall Santel !

Europa emeur o sevel

An dalc'h a zo aze adarre. Ma vennomp sevel Europa e gwirionez, un Europa werc'hel, ha n'eo ket ar spes anezhi, e vo ret, koulskoude, lezel agostez istorioù an holl riezvroadoù o deus rannet ha drailhiet ar c'hevandir-mañ, istorioù an holl riezvroadoù gwitibunan ha n'eo ket hini Bro-C'hall hepken eveljust (rak-se en deus displijet din atav an dibab eus Berlin evel kêrbenn Alamagn). Perak komz neuze eus an esevadenn c'hall nemeti ? Evel m'hon eus merket endeo, emdreiñ a ra ar riezioù breizhveuriat, spagnat, italian - hep komz eus Alamagn - war-du ur vonreizh kevreadel. Un tamm emrenezh a zo bet deroet da Gembre ha da Alba, da Gatalounia, ha da Euzkadi, a c'hello emdreiñ war-du kevatalded ar gwirioù stadal hag ur gevangereadelezh wirion e framm Europa en amzer da zont. Anat eo e chomo bresk kenreizhadur ha kenoazadur Europa, maz eus digempouez etre ur riez c'hall manet undedelour ha kreizennelour, ha riezioù all digreizennet ha kevreadel. M'en em aheurt ar "C'hallaoued" - ar re-se a zo e penn ar galloud

gall e Pariz - da virout an esevadenn-se e vo anat ez eus anezho adal bremañ hag ur wech ouzhpenn, herouezzerion vrezel-diabarzh etre europiz, ha n'o deus ken dezev nemet gouelediñ an Europa unanet kevreadel emeur o prientiñ gant furnez ha pasianted abaoe un hanter kantved endeo.

Istor arnevez Europa a zo da ziverkañ

E gwirionez, ha bepred e lavaran-se en-dro, istor nevez Europa a zo da ziverkañ, en e greiz, eveljust, hini Bro-C'hall, hogen, na mui na maez. N'eus da gavout en istor-se nemet gouloc'h an idolennoù, hag hirazhiñ a ran d'un amzer ma ne ouezzo mui Europiz piv oa Herri VIII ha Loeiz Pevarzek, Napoleon hag Hitler, Pêr Ar Meur ha Stalin. Keit ha ma vo anavezet o anvioù e chomint azeularrizhennoù ha patromoù evit ar reuzeudion a vo bet rediet da anavezout o anvioù. Ya, holl istor Europa abaoe ar 16vet kantved eo a zo da lemel kuit, un istor n'hon eus ket kemeret perzh ennañ evel Brezhoned, nemet a zo steuet a-grenn gant torfedoù, galanazoù ha lazhadegoù diniver.

An Dug de Chaulnes : torfedour-brezel e Breizh

E Breizh, pa ne ve ken, daoust ha n'eo ket bet merket ar seitekvet kantved gant gwastadegoù an Dug de Chaulnes er bloaz 1675, dindan urzhioù ar roue gall Loeiz XIV ? Klaouestre ne gredo biken ezel enorus ebet eus ar "PS" pe eus ar "PC" gall diskulian evel un torfedour-brezel an hini a zo bet kiriek d'ar moustrerezh en hor bro ouzhpenn tri c'hant vloaz 'zo. Peseurt saoz, a-hend-all, hiziv an deiz, a gredo diskulian "Penal Laws" a rae er c'hantved-se - hag evit daou gantved - ouzh iwerzhoniz katolik evel ouzh ur seurt yuzevion berzet outo kemer perzh e buhez ar Stad ?

Enebourion an emsav eo an « obskurantisted »

E gwirionez, kantmilionoù a reuzidi a zo bet abertzhet en Europa da lore'chentez wadec'hedik levierion ar riezvroadoù a zo hiziv c'hoazh kehelet gant ar vihanvourec'hizion enorus - a venn bezañ enorus - stummet gant skol ar Republik gall. Daoust hag an obskurantisted-se, azeulet ganto idolennoù leun-wad istor Bro-C'hall penn-dabenn - ha, gwashañ 'zo, n'eo ket hepken re ar republikoù - a garfe hor rediañ da azeuliñ 'harozed' an istor diaoulek-se betek fin ar bed ? Bezent kalonek a-walc'h evit henn lavarout a-c'houez d'an holl !

HOMELIENN

AN AOTROU KARDINAL PAUL POUPARD,
Kadoriad Kuzul ar Pab war ar Sevenadur,
da geñver devezh an Dro Vreizh e Keranna Wened,
d'al lun 31 a viz Gouere 2000

Aotrou 'n Eskob,
Aotrou Rektor Penniliz Santez Anna Wened
Breudeur ha c'hoarezed er C'hrist Jezuz,

I. Perzhidi ker an Dro Vreizh, kerzhadeg hir ar Vretoned, fellet eo bet deoc'h chom a-sav, amzer un oferenn, e Keranna, e-pad ho tennad-hent diwezhañ a Wened da Gemper. A galon laouen ho saludan hag a roan meuleudi deoc'h-c'hwï a zoug bri d'an hengoun-meur-se, bet savet er grenn-amzer, a arouez hag a fetisa e-touez ar rummadoù yaouank adc'handedigezh ar Sevenadur Vrezhon, gwirizennet er feiz en hor Salver abaoe daou vilved. Laouen ou pergant da gejañ ganeoc'h evel Kadoriad Kuzul ar Pab war ar Sevenadur, dre ma 'z eo dispar an intrudu hoc'h eus kemeret da lakaat da gejañ en ur gevuhuez frouezhus glad sevenadurel pinvidik Breizh hag an adsoubidigezh speredel er feiz. Da gement-se e vezomp galvet diehan, a-hed ar bloavezh-mañ, bloavezh a c'hrasoù Jubile bras ar bloaz daou vil, gant Hon Tad Santel ar Pab Yann-Baol II, ez on-me kenlabourer dezhañ.

II. Laouen omp, laouen o lidañ Jubile Bras ar bloaz 2000 gant hon Tad Santel ar Pab Yann-Baol II, gant an Iliz en he fezh. Rentañ gras a reomp evit ar road dispar a reas ar Werc'hez Vari dimp bremañ ez eus daou vil bloaz p'he doa roet dimp he mab Jezuz, mab Doue. Ha penaos e tisoñfemp an dra-se er Santual-mañ e Keranna-Wened ? Merc'h Santez Anna eo Mari. Mamm-gozh Doue eo Santez Anna ! Sed aze burzhud dibar Doue o tont dimp dre garantez e gwad hor rummadoù tud krouet, hon tiegezhioù douarel, evit o degas da diegezh Doue, bras-divent, a zo Tad, Mab ha Spered Glan, na baouez ket da gemenn e garantez dimp abaoe krouidigezh ar bed, daoust da bec'hed kentañ Adam hag Eva, hon tud kentañ, daoust da holl bec'hedoù an dud, daoust d'hor pec'hedoù-ni.

Diwar Levr Jeremia eo tennet al lennadenn gentañ a ginnig an Iliz dimp hiziv (Je 13, 1-11). Anv a zo eus arouez profedel ar Gouriz. Lakaet e oa bet ur bobl disparti gant Doue. He dibabet en doa da brientiñ donedigezh e Vab. Ha daoust d'e holl stri-

voù ha d'e holl garantez e voe breinet ar bobl-se, evel gouriz ar profed, gant he brasoni, gant he fec'hedoù.

Daoust da se, Doue ne goll ket kalon, nann, ne ra ket. A greizig-kreiz ar bobl-se e lakaio da zont Anna ha Joakim, a roio dimp ar vaouez burzhudus-se, e-keñver natur ha gras, maz eo ar Werc'hez Vari, Mamm Jezuz. Hag abaoe daou vilved emañ an istor oc'h ober hag oc'h adober he fazioù, dibaouez. Gwall ziaes eo dimp-ni, denion, heuliañ skouerioù santez Anna, ar Werc'hez Vari ha Jezuz, ha bevañ hervez kemennoù an Aviel, Keloù Mat karantez Doue evit pep hini ac'hanomp. Holl, gwazed pe maoeuzed, ez omp breudeur, krouet diouzh skeudenn ha diouzh heñvededigezh Doue, ha roet omp an eil re d'ar re all evit m'o c'harfemp, ni ivez, gant an hevelep karantez, diwar galon Doue, bevet gant Jezuz, bet marvet ha dasorc'het diwarni. Stank eo an amprouadennoù, a dra-sur, e buhez hon tiegezhioù hag e hini an embregerezhioù, e-diabarzh ar Geoded hag en Iliz zoken, a striv da drezkas ar feiz d'ar re yaouank ha da sevel beleion, evit ministrerezh ar parrezioù, evit embann Komz Doue hag evit gouiniñ (1) sakramantoù ar feiz.

III. Kinniget eo dimp gant an Iliz hiziv e-pad al lid hegaristiel-mañ parabolennou tennet eus an Aviel (Mzh 13, 31-45) a zo he fal kreñvaat hor feiz, adenaouiñ hon esperans hag advehezkaat hor c'harantez. Gant ur gwaz e vez hadet ur c'hreunenn sezo, gant ur vaouez e vez lakaet ur dornadig goell e-barzh ar bleud, diwar ar blantenn vihanañ e teu ur weznenn vras. Hag ar venajerez a c'hell reiñ da saouriñ he savarin (2), he gwastell a Vreizh aozet gant amann a zoare, gant vion, sukr ha bleud. Ne baouez ket Jezuz d'hor c'helenn eus a bell, daou vilved 'zo abaoe, dre ar c'hontadennoù bihan, skeudennek ha poblek, a zo splann ha n'hon eus ket ezhomm a addisplegoù. Oberiant, diastal e vez gras Doue. Lakaat a ra ar plant da ziwan, ar gwez da greskiñ, an toaz da vont e go. Ezhomm en deus avat eus hor c'henlabour. Hadañ o farkoù a rank al labourerion-douar ; mont da besketa a rank ar vartoloded hag ar menajerez a rank ober ar pezh a vez ezhomm, bezañ keginerezed mat ha gwastellerezed mat evit ma vo laouen an tiad a-bezh.

IV. Gouel sant Ignas a Loyola zo hiziv e liderezh an Iliz. Ur sant bras e voe hag a verkas don e roud en Iliz en ur ziazeañ Kompagnunezh Jezuz, a anvomp "ar Jezuisted". Lavarout a reomp a-walc'h ez eo fall an traoù er mare-mañ, ez a pep tra a-dreuz en tiegezhioù hag er parrezioù, gant ar politikerezh ha gant an Iliz. N'eo ket nevez an dra-se avat. D'e fideled a glemme ha d'e barrezianiz a hirvoud e ul lavarout "Fall eo ar mareoù-mañ !" e responte Sant Eosten, anezhañ un eskob meur eus ar pemp kantved. "Ar mareoù-mañ, ar mareoù-mañ, petra eo-se ? C'hwini an hini eo ar mareoù-mañ : kemmit, ha kaer e vo ar mareoù-mañ."

Setu aze ar pezh a reas sant Ignas, un denjentil yaouank a vro-Spagn na rae ken ruzañ bremañ ez eus pevar c'hant bloaz. Da heul ur c'hleñved e lennas buhez Jezuz ha buhez ar Sent hag e komprenas e oa gwelloc'h da ober eget chom da lugudiñ hag en em droas ouzh Doue. A soudard a vicher evit an dud e yeas da soudard an Aotrou Doue. Diazezañ a reas ur Gompagnunezh, ur gompagnunezh soudarded, soudarded Doue, ar Jezuisted. Ha gant spiswel-ded, dalc'husted hag emrotsted d'an Iliz e kasas anezho war holl hentoù an abostolerezh, evit brasañ klod an Aotrou Doue. D'ar bemzek a viz gwengolo 1534 ne oant c'hoazh nemet c'hwec'h kompagnun en-dro da Ignas e Montmartre e Pariz. Miliadoù a vo anezho neuze, strewet dre ar bed a-bezh : diorroerion ha misionerion, kelennerion ha kofesourion, gouzic'ion vras ha renerion spredel uvel. Ha ma 'z cont war zeriañ hiziv e Frañs e vleuniennont e bro Indez, ez int misionerion harozek e Tehad ha save- rion-Iliz souezhus e Siberia.

V. Ne baouez ket ar goell da lakaat an toaz da sevel hag ar c'hreunn vihan da zont da vezañ ur wezenn vras. Evit ar wech kentañ abaoe daou vilved e konter en tu all d'ur miliard a gatoliked : n'eo ket un dister dra. Ra vo levezet ha lore'h ennomp gant kement-se. Ne baouez ket hon Iliz, unan santel, katolik hag abostolek da vadeziñ bugale nevez. Kontañ a ran an dra-se e-barzh va levr diwezhañ "Ar gristeniezh war dreuzoù an trede milved"(3). Pa voen kaset gant ar Pab da Aodou an Olifant da gadoriañ en e anv Kantved kentañ avieladur ar vrose, kentañ tra a ris e iliz-veur Abidjan e voe urzhiañ pemont pevar beleg nevez evit servij an Iliz. Soñjal a rae ar reizhiad marksour-leninour kas an Iliz d'an traoù. Eñ eo a zo kouezhet, e-unan, gant gras Doue. Ouzhpenn daou-ugent beleg a vo urzhiet ar bloaz-

mañ e Roumania Ceausescu hag evit ar wech kentañ e Bro Albania, he doa embannet bezañ ar stad dizoue kentañ er bed, e vo urzhiet belec'h hag a zo bet stummet abaoe diskar sklokus Enver Hodja he rener. Pebezh dislav ar c'henep huñvre diboell ha foll ar gomunourion dizoue ! Pebezh levezet ha goanag ! Klevet hoc'h eus komz alies a-zivout Afrika ar C'hreisteiz ha disteurel an Apartheid e-barzh kolonennadoù hir kazetennoù niverus ha forzh abadennoù skingomz ha skinwel, Den ebet moarvat er bloavezh-mañ a c'hras eus ar Jubile bras n'en deus lavaret deoc'h ez eus ouzhpenn pemp kant kloareg oc'h en em brientiñ a-benn bezañ beleget. E pep lec'h en Afrika, en Azia, en Amerika latin, e kresk ar galvedigezhioù hag ez a oad ar gloer war yaouankañ. Ar sifrou a roan em levr. Deoc'h d'o c'havout ennañ eta.

E Frañs zoken, daoust ma kaver kumuniezhioù kozh o tielc'hat, ne baouez ket ar goell da lakaat an toaz e go : tiegezhioù relijiel nevez a zo oc'h en 'm ziskouez : Kumuniezh Sant Yann, Breudeuriezhoù Manac'hel Jeruzalem, ar Focolari, an Hent Nevez, An Emmanouel. Enno o deus al laiked o flas da vat. Lakaat a reont da vleuniñ pe da adveleñ ar galvedigezhioù belec'h ha lea- ned.

Ho pediñ hag hoc'h azpediñ a reomp, Santez Anna, en deiz-gouel-mañ. Rentañ a reomp gras ganeoc'h da vezañ roet dimp Mari, he deus roet dimp Jezuz. Rentañ a reomp gras ganeoc'h evit ar miliad a sent brezhon a zo bet roet dimp, an darn vrasañ anezho o tont diouzh Kernev-veur ha diouzh Bro Gembre. Rentañ a reomp gras ganeoc'h dreist-holl evit ar gerzhadeg a-stroll-mañ, awenet gant mammennoù ar feiz ha sevenadur Breizh, da geñver an tennad diwezhañ-mañ eus an Dro Vreizh en enor d'hor seizh sant, diazezerion ar gristeniezh en Arvorig : sant Samzun e Dol Breizh, sant Malo ha sant Brieg en o c'hèriou a vremañ, sant Padarn e Gwened, sant Kaourintin e Kemper, sant Tudual e Landreger ha sant Pol Aorelian e Kastell-Paol.

Santez Anna, ho pediñ a reomp evit ma vo roet dimp ar c'hras da grediñ, da esperout ha da garout eveldeoc'h, da ziazeañ tiegezhioù kristen ma vo brav bevañ ha karout, parrezioù lusket gant ho spred a garantez, a servij hag a beoc'h. Ma vo roet dimp ivez, dre hor pedennou, hor sa-

krifisoù, hor buhez kristen kinniget holl da Zoue, da lakaat da ziglorañ galvedigezhioù belec'h ha leaned hag he deus an Iliz ezhomm anezho, evel sant Ignas, ha ma vo roet da bep hini ac'hanomp da vezañ micherourion mat ha kalonek an Aviel, evit brasañ klod an Aotrou Doue. Amen.

- (1) Gouniñ gw. Jil Ewan, lexique complémentaire Français Breton, Imbourc'h 1996 326 p. (95 lur), a glask klokaat geriadur Ar Glev : 'reñt' ar sakaramantoù, ma karer, evel ma lavarer er yezh voutin. Hogen n'eo ket ar beleg eo 'a ro' met an Aotrou Doue. Ar beleg n'eo nemet dor Doue, ar sin anezhañ, hag ivez ur seurt amaeziad dezhañ da garg, e-touez traoù all, d'ober war-dro teñzor ar sakaramantoù bet fiziet en Iliz gant Hor Salver. Gg : Administrer.
- (2) Savarin : ger gallek a zeu diwar anv Anthelme Brillat-Savarin, a skrivas e 1826 ul levr "Bevedouriezh ar saourin" "Physiologie du goût" pe, evit skrivañ sklaeroc'h, penaos hon eus saourioù disheñvel pa dañvaomp bouedoù disheñvel. Ur ger dianav a-walc'h eo e-touez an dud, moarvat, met a ziskouez penaos ar gallek n'eo ket « poblek » e gwirionez en degouezh-mañ. An dro-lavar « Il y a du bruit à Landerneau » n'eo ket poblek kennebeut : dont a ra diwar ur pezh-c'hoari bet c'hoariet e Pariz (en 18 vet kantved, a gav din).
- (3) "Le christianisme à l'aube du troisième millénaire"

POLITIKEREZH E BREIZH : AN HOLL A ZO « A-DU » MET LOD A CHOM « A-ENEP » !!!

Da heul an arakadennoù war an dachenn lezennel e Korsika ne gaver den ebet « a-enep » astenn he galloudoù d'ar « Rannvro ». An holl a zo « a-du ». Met piv a raio ? Ar strolladoù gall a chomo gall a viskoazh da viken ha ned aint da heul « Europa Kevredel » nemet ma kavont nerzhioù politikel kreñv a-walc'h e-tal dezho. Kalz a chom a-enep, ha ret eo krediñ e chom ar muiañ niver ganto peogwir ne welomp ket an traoù o kemm da vat war an dachenn bolitikel. Met ne lavaront ket sklaer : setu aze !

Evel war dachenn ar skolioù e c'hell c'hoarvezout

an traoù war an dachenn bolitikel : ar skolioù stad hag ar skolioù kristen a zo aet da heul evit chom hep koll re a skolidi, ha setu holl. Emañ ar strolladoù politikel gall oc'h ober neuze da vezañ a-du dre ma ouzont mat emañ a-du ar c'hedveno, dre vras, e Breizh. Keit ha ma ne vimp ket derec'houezet mat war an dachenn bolitikel avat e chomo bresk ha dibad « ar bruzhunachoù » a c'hounezomp gwech-ha-gwech-all.


Met piv 'ta a raio an unvaniezh politikel en Emsav ? Pelec'h emañ « skourr politikel ar skolioù Diwan » ? Aze c'hoazh emañ an holl « a-du » en emsav. Leun a dud a volentez vat a gaver, met unvaniezh ebet. Emgann, UDB, POBL, Forum Bretagne, Galv Karaz, ha me 'oar-me !...

Piv a raio ? Reñt a ran amañ va soñj dichipot peogwir eo graet « Kannadig Imbourc'h » evit « imboure'hañ », « klask » a-gevret, deoc'h da lavarout ho soñj, ma fell deoc'h, o kenskrivañ. A-bouez eo e vefe emglev war un anv, da sachañ hor c'harr. Lod a seblant avat chom « a-enep » er fedoù. Daoust hag asantiñ a rafé paotred an UDB mont dindan banniel « Depute Diwan », J.Y. Cozan, kentoc'h eget dindan hini ar PS gall ? Daoust hag eñ, e seurt degouezh ez asantfe paotred Galv Karaz e c'hervel da vezañ o marc'h-blein ? Fur e vefe d'am soñj, zoken ma ouzomp mat n'eo na direbech na disi an den.

Prouet en deus e fealded d'an Emsav, kaset en deus 'teuliadoù' da benn mat ; skiant-prenet bras en deus a-fed politikerezh-politikel... Petra 'ri ? Gouzout a reer e vefe degemeret mat gant POBL a-hend-all hag Emgann, daoust d'e linenn bolitikel ruz-tan a zo pragmatek a-walc'h evit degemer un emglev (evel e 1992 gant an UDB da skouer). Bezet pe vezet ez eo tremen-poent sevel un emglev en Emsav p'emañ ar bloavezh-skol o vont da gregiñ hag an dilennadegoù evit ar c'huñzioù-kêr o tostaat.

Gwelet 'vo eta. Pezh a zo sur eo e kaver Jakobined a-gleiz koulz hag a-zehou ha tud a volentez vat e pep lec'h. Pa 'z eus anv a c'houmid ur dezvad politikel bennak evit ar vretonez eo fur lakaat a-gostez an troc'h kleiz/dehou ha komz eus an troc'h kreizennour/digreizennour hepken.

Y. Maneguen



Jean-Yves Cozan

Kenskrivit !

Kelaouenn Emglev an Tiegezhioù, kevredet e Kuzul ar Brezhoneg, eo Imbourc'h. Talvezout a ra « Imbourc'h » kement ha « klask ». Klask ar wirionez a-gevret, gant ur spered a vignoniez, doujus d'ar feiz kristen, hag e brezhoneg, setu aze hor pal.

250 lur (38 €, 38 \$) eo ar skodenn vloaz ordinal, a ro ar gwir da resev ar c'hannadig hag ar stagadennoù trimiziek. Sevel ar ra da 100 lur evit ar re a garfe resev ar c'hannadig nemetken.

Ar skridoù, kemennoù, lizhiri ha skodennoù a zo holl da gas da :

Imbourc'h, Kergreven, 29800 Trelevenez
Pgz : 02 98 25 10 72 eat@libertysurf.fr

http://perso.libertysurf.fr/kannadig
Moulererezh prevez. Merour : T. Gwillhmod

ISSN : 1144 357X CPPAP : 50015. Ar pennadoù ne enouestlont nemet o aozerien. Diskleriet hervez lezenn.

Geriou nebeut anavezet : Damkanourion : théoriciens ; Riez : Etat-puissance ; Esevadenn : exception ; Herouezzerion : ceux qui favorisent ; azeularrizhennoù : idoles

Reizhadennoù e Notennoù Politikel an niverenn diwezhañ :

P. 4 bann dehoù, trede dilinennad, eil linenn : « a zo padus dreistkred [he gred] » E traoñ an hevelep dilinennad e ranker lenn « goursavet » dres a-raok « Ce sera le plus beau jour de ma vie ! »

IMBOURC'H :
400 LEVRENN
ABAOE 30 VLOAZ :
KLOKAIT HO
TASTUMADENN...

MARVNAD D'AR PERSON gant J. Ker-mor.

Ur beleg, en hor bro, 'veze anvet 'Person',
Ha 'kure', pe mevel, en ur barrez breton.
Ur barrad amzer fall o trojota dre Vreizh,
En deus o skubet kuit gant un dro-gamm direizh.

Kas a rae, a dra sur, e dud evel ur mestr,
O sturiañ a rae mat, evel war vourzh ul lestr,
Rak fellout 'rae dezhañ o c'has d'ar Baradoz
E breder 'oa dalc'hmat, e drevell deiz ha noz.

Ur Person, evit gwir, a oa un den a bouez,
Ha sellet gant e dud evel den a furnez,
Doujet hag enoret, 'vitañ da chom uvel,
Ha tost da bep unan 'vel un tad d'e vogel.

Magañ 'rae e zeñved evel ar pastor mat,
Ha reiñ kentel dezho a rae ivez, dalc'hmat,
Kelenn bras ha bihan war Gel an Aviel,
Evit tizhout gantañ an curvad peurbadel.

N'eus ken a lec'h, siwazh, da virout ur Person
En ur barrez vihan, d'ober e damm sarmon,
Dirak un domadig kristenien war an oad :
Kement-se, d'ur beleg, 'zo ur gwir galonad.

Atantoù bras 'vo graet, ha neuze e vo tud
Da gas an traoù en-dro, ha c'hoazh e vo graet brud
'Vit diskouez n'eo ket marv ar feiz en hor bro
Ret mat eo evit-se dibab un hent hedro

Ne vo ken a barrez nemet en-dro d'ur gêr,
Re nebeut a dud 'zo en ul lec'h re zister,
Ha setu skarzhet kuit, dizamant, ar Person,
Sevenet 'vit hor bro un torfed dibardon.

Setu Breizh, ur wech c'hoazh, dre un taol dizenel,
Dibennet didruez eus he glad milvloazel
Siwazh, Aotrou Person, setu c'hwil forbannet
Gant an dispac'herien, a-douez ho tud karet.

Kouskit e peoc'h an noz, o c'hortoz an adsav,
En deiz ma venno Breizh teurel he dilhad sklav
D'ar blotoù, gant an heug ouzh an amzer deñval
Ma ruze, pennasket gant chadenn an hual.

'Mañ o tont buhanik, -digor da zaoulagad -
Beurevezh an dasorc'h evidout, Breizh peurbad
Sell mat ouzh an dremwel : ne welez ket o skleurin
Goulou-deiz ar vuhez o vont da lugermin ?

Dihun a ray da feiz, ur predig dilezet,
Hag adkavet ganit da ene, dieubet,
E savi a-nevez eus da greiz beleien
Da vezañ Personed e-touez ar gristenien.

KANNADIG IMBOURC'H

Niverenn 9

Here 2000

IMBOURC'H HAG EMGLEV AN TIEGEZHIOÙ

JMJ : Breizh o tibunañ evel pa vefe ur riezvroad !

Kalz a dud yaouank a
Vreizh a gemeras perzh
e gouelioù « Devezhioù-
Bed ar Yaouankizioù »
e Roma e-pad an hatv.
Ur bern « Gwenn-ha-
Du » ha « Kroazioù
Du » a voe gwelet er
straedoù hag e-pad an
dibunadeg vras e voe
anavezet Breizh evel pa
vije ur riezvroad : « Bro
Alamagn... Iwerzhon...
Breizh... »
Plijadur e-leizh o deus
bet ar vretoneg
yaouank - brezhonegerion
en o zouez - o vont
da welout ar Pab. Ur
fest-noz a voe aozet zoken
gant e kreiz-kêr
Roma.

NEVEZ DEIZLEVR YOUENN OLIER EVIT AR BLOAZ 1961 : « GOURLENN »

Priz : 121 lur franko
Ma fell deoc'h resev al
levr-er-maez-skodenn-
mañ, e rankit kas ar
sammad-se adalek bre-
mañ.

Kelaouenn Emglev an Tiegezhioù eo Imbourc'h abaoe un nebeut mizioù.
Bodañ ar vrezhonegerion gristen en-dro d'ar gelaouenn ha d'ar gevredigezh
"EAT" eo hor mennad.

Hag an tiegezhioù peurgent. Abaoe daou-ugent vloaz e vod EAT tiegezhioù
mennet da drezkas ar yezh hag ar feiz d'o bugale, ha kalz eus ar vugale-se
a gaver bremañ e-touez kerent ar skolioù "Diwan", lod anezho oberiant-tre
en emsav zoken, ha gwel a-se.

Pell-bras en em gav c'hoazh Yann diouzh e gazez ha mil boan o deus an
emsaverion gwiitibunan da ledanaat tachenn ar brezhoneg en o buhez pem-
deziek. Alies-bras ne vez nemet unan er c'houlpad a gement a oufe un
tamm brav a vrezhoneg ha kaer 'zo ober e vez lodenn ar paour gant hor
yezh er gêr.

Heñvel eo stourm ar brezhoneg ouzh ar stourm speredel

Ur stourm da gentañ-penn ez eo ar vuhez speredel evit ur c'hristen : stourm
ar garantez a-enep an droug. Goulenn a ra strivoù bras ha padus, bezañ be-
pred war evezh, ha dreist-holl skeiñ bepred war-zu ar pal, hep gortoz e diz-
hout dre hon nerzhioù hon-unan met gortoz pep tra digant Doue, a sikour E
vugale...

Heñvel a-walc'h eo ar stourm evit ar Vro hag ar brezhoneg. Stourm a re-
omp evit un dra a zo reizh, a-enep da nerzhioù a zo kalz brasoc'h eget hon
re. Rankout a reomp eta bezañ padus en hor stourm, bezañ poellek en hor
pengadouriezh, da lavarout eo skeiñ bepred war-zu ar pal hon eus merket
dimp.

Unan eus ar paliou-se, marteze an hini pleustrekañ hag efedusañ a-benn ar
fin, eo, evit lod ac'hanomp da vihanañ, sevel un tiegezh brezhonek.

Ha n'eo ket a-walc'h kas hor bugale d'ar skol Diwan : gouzout a reomp holl
e vez dreist-holl galleg e porzh ar skol. N'eo ket a-walc'h prenañ ur barabo-
lenn evit resev Tv Breizh er gêr. N'eo ket trawalc'h kas e skodenn da EAT
evit resev ho kannadig miziek pe c'hoazh da Al Liamm, Al Lanv, Louarnig,
Aber, Hor Yezh pe vBremañ. Nann. Ret eo ivez kejañ an eil gant ar re all,
krouiñ liammoù start a vignoniez hag a genskoazell, kas raktresoù war-
raok a-gevret dre ur c'hentlabour a daolo frouezh drezañ e-unan hag a lakaio
an dud da dostaat an eil diouzh ar re all.

Imbourc'h hag ar genrouedad

Kement-se a vez graet un tammig war ar genrouedad. Evel-se e c'hellou Im-
bourc'h embann a-benn bloaz spi am eus un dastumad pennadoù diwar

bluenn Langleiz bet embannet e-barzh LA BRETAGNE e-pad ar brezel. Betek daouzek den o deus kenlabouret dre ar genrouedad d'ar raktres-se.

Gant Imbourc'h e vez bodet tud all ivez, - re nebeut siwazh ! - evit reiñ buhez d'ar gumuniezh a stourmerion hag a vrezhonegerion gristen a glas-komp stummañ dre ur c'henlabour a zo bet frouzhus-dreist abaoe 30 vloaz, an dra-se ne vez ket meizet a-walc'h d'am soñj, p'eo bet embannet gant IMBOURC'H ouzhpenn 400 levr (da vihanañ pep a dri ugent pajennad) war a bep seurt danvezioù (politikerezh, prederouriezh, feizoniezh, istor, yezhoniezh, levraouegouriezh, armerzh, henlennegezh kristen, speredelezh, istor an Emsav, hag all hag all) en ur yezh arnevez, evit gellout dispakañ holl plegoù hor soñjoù e brezhoneg... ha sikour pep hini ac'hanomp da vrezhonekaat hor buhez keredel ha pemdeziek. Ur skouer bihan : pet a dud a oar ez eus bet embannet ur Bibl evit ar vugale ? Ha levrig Jil Ewan war "gKevrin ar vuhez", da zisplegañ en un doare reizh traoù ar rev d'hor bugale ?

Buhezioù Dom Mikael an Nobletz hag an Tad Maner, Deizlevr 1961, Geriadur Jil Ewan...

Setu aze daou levr a zo hogos prest da vezañ kaset da izili EAT. Kantadoù a bajennoù e brezhoneg yac'h, boued evit ar spered ha kentelius evit kompren istor Breizh hag an Iliz e Breizh. An oberennoù-se o tont er-maez en deizioù-mañ o deus goulenet strivoù bras a-berzh un nebeut tud o deus skridaozet, moulet, strobet ar follennoù, krafennet anezho, peget ar goloioù anezho, hag all hag all. Jedet am eus e ranker kontañ da vihanañ-holl un hanter curvezh labour evit PEP SKOUERENN a resev lennerion Imbourc'h etre o zaouarn. Un trede levr a zo peurechu : Deizlevr Youenn Olier evit ar bloaz 1961 : "Gourlenn". Hemañ a vo ret deoc'h prenañ a ziforc'h evit abegoù a deñzorezh (prenet hon eus mekanikou-moulañ, ha skridaozhañ hag un droc'herez) hag e kavot amañ-kevret ur baperenn da gas dimp en-dro evit-se.

Skipailh "Imbourc'h" ha "Kannadig Imbourc'h" a rank bezañ kresket niver an izili anezhi : ur c'halv a ran amañ eta evit ma vezo muioc'h a dud o kenskrivañ hag o kinnig ober labourioù pleustrek (skridaozerezh, moulañ, kas... da zibab a zo...). Diouzh un tu all, gouvezit e chom hogos holl niverennoù Imbourc'h ganimp evit ar re a garfe pourchas anezho : un drouez eo e chomfent da louediñ !

OFERENNOÙ BREZHONEK

Bemdez e vez lidet an oferenñ da 7e e Chapel beleion gozh Keraodren e Brest ha bep sadorn da 20e30 e « Minihi » Trelevenez.

1/10 Sant Mazhev Gwidel 10 e 30

8/10 Penniliz Santez Anna Wened, 10 eur

15/10 Kistinid da 11 eur 15 e chapel an Templ ha Devezh Breuriezh Sant Ildud.

22/10 Arradon, chapel ar Vincin da 18 eur (da heul ar staj war al liderezh e bro Wened. Titouroù : 02 97 96 15)



Kasit keloù dimp mar plij, p'hoc'h eus !...

En niverenn-mañ eus "Kannadig Imbourc'h" e ran anv Youenn Olier eus an enebiezh ouzh ar "brezhoneg arnevez", diouzh un tu, hag eus holl-veliegezh (totalitarisme) tud 'zo pa vez anv a c'hrouiñ gerioù. A-du on gant pezh a ziskleir hogen me garfe sachañ an evezh war ar gudenn vras maz eo an ARVER eus ar gerioù nevez : n'eo ket a-walc'h sevel geriadurioù nevez (hogen mat eo, ha dizale ivez ez embannimp eil lodenn geriadur Jil Ewan a gloka hini Ar Glev bet embannet e dek levrenn gant Al Liamm), ret eo ivez sevel oberennoù pe da vihanañ pennadoù war an danvezioù ma vez arveret ar gerioù-se enno.

Bodadegoù Emglev an Tiegezhioù

Ne rank ket Imbourc'h bezañ ar pep pennañ eus obererezh Emglev an Tiegezhioù. Ouzhpenn ar gelaouenn eta ez eus ivez bodadegoù ar gevredigezh : da geñver ar c'hamp katekiz a vez aozet bep bloaz e Rostren e vez graet unan ha plijadur a vez oc'h en em gavout evel-se e dibenn ar c'hamp... Hogen blaz re nebeut a zo gant an emgav-se. Unan all eta a zo kinniget ar bloaz-mañ : d'ar sul 10 a viz Kerzu e Rostren. Anv a vo eus an dra-se ar miz a zeu.

(sellout paj d'wezhañ)

BUHEZ HIR DA "TV BREIZH" !

Ugent vloaz 'zo e kroge Youenn Gwernig gant ar stourm o nac'h paeañ e daos skinwel hag o sevel "RTB" - Radio Tele Brezhoneg - hag abaoe ar c'hentañ a viz gwengolo e c'heller sellout ouzh Tv Breizh : anat eo an hent a zo bet graet eta. Un dre-c'hadenn a-bouez evit ar brezhoneg ez eo Tv Breizh. Tu a zo d'en em c'houleñ avat penaos eo deuet ar raktres-se da wir, penaos tud evel Pinault ha Berlusconi, paotred an arc'hant bras 'keta, en em laka da surfiñ war ar wagenn vrezhon hag da postañ kantmilionoù a lurioù nevez e-barzh ur chadenn brevez rannvroel, an hini gentañ e Frañs.

Kement-mañ ne blij ket d'an holl

Sklaer eo ez eus skignadeg dent 'kotez Pariz gant diazevadur ar chadenn-se. Lod o deus skrivet zoken e kazetennoù 'zo e lakae Tv Breizh bongoel Unded ar Frañs - hini he dizistrannused - en arvar ma savfe chadennoù prevez all a seurt-se e pep lec'h er C'hwec'hkogn. Ha diouzh un tu all eo sklaer ez eo deuet an arc'hant a Bariz, diouzh metou kelliadourion ar yoc'hstlenn e Frañs hag Europa : TF1, Berlusconi, Murdoch...

An intruda avat a zo hini bretoned evel PDG TF1, Patrick Le Lay, en deus kavet ur skoazell bennak gant e genvroad Patrick Poivre d'Arvor ('PPDA', a ginnig ar c'heleier diouzh an noz war TF1 hag a gaso en-dro un 'talk-show' s'zhuniek war Tv Breizh), mignonned pennoù embregerezh e-touez izili eus Ensavadur Lokarn, ha dreist-holl eveljust emsaverion brezhonegerion, a labour er gennad-se abaoe ur pennad-mat dija, Rozenn Milin ha Mikael Baudu peurgent, ha sur-mat re all c'hoazh.

Pa ne blij ket Tv Breizh da galz a dud ez eo sklaer e ranker bezañ war c'hed pakañ taolioù bzh diganto. Lod eta a damall ouzh Tv Breizh lakaat Bro C'hall en arvar (pegen bresk eo, ma Doue !) ha re all a zispleg dimp, evel em eus bet tro da welout e-kerzh un abadenn skinwel gouestlet da stad an Iliz e bro-C'hall, ned eo Tv Breizh nemet "lodenn gwelus ar skornegre'h", hini distro ar gatoliked-hengounelourion-tost-da-le-Pen !

Ensavadur Lokarn hag an Opus Dei o c'houleviañ Tv Breizh ?

N'eus ket da vezañ souezhet gant se. Evel evit afer

"Roparz Hemon" e ranker soñjal dreist-holl e vez taget an Emsav dre m'emañ hor brud o kreskiñ, zoken goude afer Kever. Henn diskouez splann a ra ar sondadurioù a gavot e dibenn an niverenn-mañ eus "Kannadig Imbourc'h". Hogen ret-mat eo respont d'an tagadennoù.

E dibenn an abadenn skinwel-se eta, bet savet gant ur c'hazetenn ar anavezet mat endeo evit e vennozhioù 'a zebrer-beleion', e oa anv eus Dom Le Gall, Tad abad Kergonan e-kichen Karnag, bet o vennigañ tiez Ensavadur Lokarn, un ensavadur ennañ kalz a dud, a-hervez, izili eus an Opus Dei.

Gouzout a reer ez eo bet lakaet nevez 'zo an Opus Dei war roll ar skarennoù pe an danvez-skarennoù gant 'enklakerion' entitlet gant ar Stad C'hall, daoust maz eo an aozadur-se kavet mat gant ar Pab Yann-Baol II, en deus lakaet an diazezer anezhañ war roll an dud evurus e



Rozenn Milin, renezer ar chadenn skinwel staliet en Oriant.

1992 : Josemaria. An den santel-mañ en deus skrivet ul levr, « El Camino » (« An Hent ») a zo bet troet e yezhoù niverus hag e vo embannet un droidigezh anezhañ e brezhoneg gant Imbourc'h ar bloaz a zeu, spi hon eus.

Tu 'zo atav da gavout abeg e doareoù an Opus Dei hogen mont re bell ganti eo reiñ da grediñ, evel ma reas kazetenn an abadenn a ran anv anezhi ez eo gouleviet Tv Breizh gant Ensavadur Lokarn a vije margodennet, a-hervez, gant an Opus Dei e-unan.

Seurt tezenn a zo faltaziek a-grenn. Daoust pegen divalav eo skeudenn an Opus Dei a zo bet fardet gant ar frankvasoned evit ar c'hedveno, notomp da gentañ e oa e touez izili an aozadur-se tud anavezet mat ha doujet eus an Emsav : Zavier Langleiz ha Yann-Vari Bouessel du Bourg, da skouer. Ne vo ket ur skouer a vertuz ar chadenn-se a-hent-all ha ne welan ket mat petra a rafe tud an Opus Dei oc'h emellout a-dost ouzh Tv Breizh eta.

Tv Breizh, un afer a arc'hant hepken ?

Gwir eo marvat n'eo ket sur a-grenn e tegaso

kement-se a arc'hant an embregaden-se d'ar re o deus lakaet anezhi en he flom. Ma soñj eo n'eo ket drouklouen tud a seurt gant Patrick Le Lay ha Patrick Poivre d'Arvor diskouez da vedig ar yoc'hstlenn e Pariz e oant gouest da sevel un dra a dalvoudegezh e Breizh, hep skoazell Pariz, endeeun. Ur seurt « Pied-de-nez », un doare d'ober van eus lod eus o c'henseurted... ha da abuziñ o amzer marteze, rak PPDa pe P. Le Lay n'o deus ket ezhomm eus Tv Breizh evit bevañ, anat eo ! Ur seurt c'hoariell eo etre o zaouarn kentoc'h, a guzh moarvat un doare romantel da sellout ouzh Breizh. Kalz ne vern ! Ar pezh a gont evidomp eo e chomfe e emsaverion e penn ar programmoù ha dre-se ma vefe kaset ar brezhoneg war-raok e-touez ar vretonek ... hag an daouzek million a dud e Frañs, a lavar bezañ stag o c'halon ouzh Breizh, hervez an enklask bet gouennet gant Patrick Le Lay a-raok dezhañ reiñ lañs da vat d'ar chadenn divyezhek prevez kentañ e Bro C'hall.



Daoust ha 'PPDA' a vo klevet e brezhoneg ?!

T. Gwilhmood

RENTAÑ-KONT KAMP KATEKIZ ROSTREN 2000

Naontek bugel a oa deuet da Rostren ar bloaz-mañ da dremen ur sizhunvezhig e skol an Itron Varia e Kamp « Breuriezh Sant Erwan » hag « Emlgev an Tiegezhioù », ur c'hamp a vez aozet ha renet ingal abaoe an hañv 1988 gant Yann Talbot, person Rostren, penn da benn e brezhoneg.

Diouzh ar mintin e veze katekizet ar vugale hervez o oad (etre 7 ha 14 vloaz e vez ar vugale). Tri strollad a oa ar bloaz-mañ : hini Jeanine hag Olier, hini Yann-Erwan hag hini Tepod.

Anv a vez dreist-holl eus buhez Jezuz, eus ar sakramantoù (ha peurgent sakramant an Aoter evit ar gomunion gentañ), eus ar Bibl ha studiet e vez testennoù 'zo eus ar Skritur Sakr.

Goude merenn eo aet ar vugale da neuial e meur a lec'h : Gwerledan, Priziag, Sant Nikolaz ar Pelem, Groñwel ha gwelet o deus abati an Diskuizh mat, peulvan ar C'houronk, koadeg Kenek, hent ar groaz Abati Langoned...

Diouzh an noz e veze beilhadeg : c'hoarioù, arvestoù bihan war vuhez Jezuz pe ur sant bennak, kanoù... hag ivez un ofrenn displeget dre ar munud hag ur veilhadeg-pedñ e chapel Lokmaria, hep disoñjal ar veilhadeg diwezhañ ma voe graet un tantad, evel boaz, un digarez da zañsal ha d'en em laouenaat goude bezañ tremenet ur sizhunvezh plijus evit an holl. A-drugarez da Yann, Jeanine, Olier, Yann-Erwan, Tepod, Vefa, Viviane, Kristian, Gabriella eo bet kaset ar c'hamp-se en-dro. Ra vezint trugarekaet amañ a greiz kalon a-berzh ar gerent hag ar vugale. Ken ar bloaz a zeu !

beut da : 1000 lur evit staliañ ar barabolenn ; 250 mizoù « teuliad » ha 500 lur arc'hant gouestl evit an digoderezh.

Espenn a c'hellit ar mil lur kentañ ma staliit ar barabolenn hoc'h-unan. N'ho pezo neuze nemet priz an neudenn da baeañ (50 lur bennak). Ar barabolenn a vez roet evit netra nemet ho pefe c'hoant kaout unan a vent vrasoc'h pe graet gant rousin. Hini voas a zo trawalc'h nemet e kornioù 'zo ha dreist-holl ma vez fall-du an amzer e vo tapet aesoc'h Tv Breizh diouzh al loarell gant ur barabolenn a vent vrasoc'h. Ha ma prenit unan graet gant rousin ez oc'h sur ne verglo ket gant ar gleber ez eur boaz da gaout e Breizh ! Ret 'vo deoc'h kentañ avat 500 lur ouzhpenn pe war-dro.

Gerioù nebeut anavezet : gouleviñ : manipuler, exercer une tutelle ; skarenn : sektenn ; kedveno : opinion publique.

EVIT KAOUT TV BREIZH ER GER : TPS PE CANAL SAT ?

Dre ar « fun » e c'heller kaout Tv Breizh m'hoc'h eus ar c'hañs da gaout anezhañ. A hend-all ez eus da zibab etre div embregerezh : TPS ha CANAL SATELLITE.

TPS a zo liammet start ouzh TF1 (a zo perc'henn war 27 % eus TV BREIZH) met ma staliit TPS n'hellot ket tapout ar chadenn gatolik « KTO », e galleg, na vez skignet nemet gant Canal Sat. E-keñver filmoù eo ret merkañ ivez ez eo founnusoc'h ar c'hinnig a ra Canal Sat e-keñver TPS, a zo dija founnus a-walc'h, ret eo anzañ.

Un diforc'h heverk a zo gant Canal Sat : n'heller ket kaout TF1 nag abadennoù rannvroel F3, nag ar bempvet hag ar c'hwec'hvet chadenn dre al loarell a ginnigont : ret e vo deoc'h derec'hel d'ar stign hoc'h eus betek vremañ... Ouzhpenn ar barabolenn.

HAG AR PRIZ ?

Ma paicit un artizan e teuo deoc'h, war-bouez ne-

NOTENNOÙ POLITIKEL gant Youenn Olier

KUDENN AR GERIADUR ARNEVEZ

Daoust hag ar c'hrouiñ-gerioù a zo neptu e par ar brederouriezh ? Tro am eus bet endeo da verat kraf an nevez-herioù e-barzh "Imbourc'h ke-laouenn a studi", en niverenn 335-336 eus an 28 a viz C'hwevrer 1998, en ur pennad hir a oa ur respont da vurutelladennoù kriz a-walc'h a oa bet graet diwar-benn al 'lexique complémentaire', ur geriadur a oa bet embannet gant ar gelaouenn dindan anv Jil Ewan. Bremañ avat e klevan lavarout ez eus stourmerion eus ar yezh a garfe disteurel ar geriadurioù arnevez goveliet gant izili KIS-SADED en abeg d'ar mennozioù prederouriezhel ha politikel a lakaer war o c'hont, e gwir pe e gaou, hag a vefe silet dre hent ar c'hrouiñ gerioù.

Tamaloù graet da c'herioù arnevez 'zo

Pellzo em boa klevet yezhourion vrogar all o kavout abeg e gerioù sadetek 'zo, evel 'ergorek' pe 'dangorel', war zigarez e ve entalet ganto n'ouzon peseurt prederouriezh ifernel. Evit gwir, evel maz on diehouzvez a-grenn eus an tebet prederouriezh-se n'em eus bet biskoazh an disterañ morc'hed oc'h ober ganto dre ma ne oan ket gouest da implijout ar gerioù 'objektivel' ha 'subjektivel', a oa arveret, da skouer, gant Maodez Glandour. Perak am boa difennet al 'Lexique Complémentaire' ? Peogwir eo dieub "Imbourc'h" e par ar c'hrouiñ-gerioù.

Komzomp eta eus labour izili KIS-SADED. Diaes eo din kavout un ali diwar e benn o vezañ ma n'em eus ket ezhomm, em skridoù pemdezic, eus un dekvedenn eus an termennoù ijinet ganto. Enebet em boa hepken ouzh pismigadennoù G. Pennaod dre ma oa anezho, dreist-holl, tagadennoù personel a-enep da aozer al 'Lexique' hag ivez dre ma n'oan ket evit degemer ar mennad re-vegus a oa ouzh o goustennañ, penaos ne oa nemet KIS-SADED a oa engwiriet da blediñ gant ar yezh arnevez. Kement-se a raen avat, dre ma soñje din ne oa ket ezhomm eus ur ouiziegezh arbennik evit goveliañ gerioù nevez, hag e c'helle n'eus forzh piv o fardañ evel ma kare, ha da harpañ va mennoz e kemeren skouerioù tennet eus un henyehz, ar gresianeg, hag eus ur yezh arne-

vez, an alamaneg, a anavezan a-walc'h.

N'eus abeg ebet avat da zisteurel a-ziaroak kement a zo bet krouet gant KIS-SADED, dreist-holl evit abegoù kealiadurezhel.

Evit kelou-se, ne felle ket din, a priori, disteurel kement a vefe kinniget gant izili KIS-SADED e skeud ma vefe douget ar yezhourion a zo e penn ar stroll-studi-se d'ur gelaodurezh a vefe c'hwec'h ar soufr ganti. Iskis e kavan ar brud-se a roer da GIS-SADED, a oa ur gevrenn eus Emsav Stadel Breizh d'ur mare ma oa frammet c'hoazh an aozadur hag amparet gant un toullad a izili. Pa lenner un dastumad eus ar gelaouenn Emsav etre 1968 ha 1975 ne verzer ket nemeur al liv eus ur gelaodurezh a vije bet disheñvel-bras diouzh ar gleizouriezh a oa diouzh ar c'hiz er strolloù breizhat a zo diwanet eus brizh-dispalc'h 1968. Dre vras an tezennoù en em ziskoueze e pajennoù an dastumadenn a ra dave d'ar brederouriezh a zo en em ziorreet e gwasked ar riezvroadour modern e-kerzh an 18-vet hag an 19-vet kantved, a zo bet deskrivet gant Maurice Clavel en e oberen "Deux siècles chez Lucifèr", deuet er-maez e 1978, ar gommouriezh koulz hag ar genelwerinelouriezh o vezañ argemmennoù anezhi. Dre vras e kred dalc'hidi ar brederouriezh arnevez ez eo tremenet ar wirionez diwar-benn an den gant ar gevredigezh ha n'eo ket gant Doue o rakvezout d'ar bed hag oc'h en em ziskuliañ e rez ur bobl emroet dezhañ. Er pleustr, hag hep gouzout dezho, peurvuiñ, diouzh ma n'int mui kristen, en em harp holl izili an emsav, an holl stourmerion vrezhon, war an hevelep prederouriezh. Eveljust e c'hellit soñjal ez eo gwel an argemmen sokialour pe gomunour eget an hini genelwerinelour, hogen d'am soñj ne c'hellont henn ober nemet evit abegoù trivialdiel ha dangorel-rik.

Arabat eo teurel an anoue war striv ebet da ziorren ar yezh

Dre-se ne welan ket mat petra a c'heller tamall ouzh aozerion ar geriadurioù savet gant izili KIS-SADED, seul-vui maz eo kalvezel-rik ar pep brasañ eus an termennoù goveliet ganto.

Evit un abeg dreist-holl e tifennan mennad KIS-SADED. Kenderc'hel a ra ar re a labour en e greiz gant an ervenn a zo bet boulc'het abaoe daou c'hant vloaz gant Ar Gonideg hag a zo bet kendalc'het gant F. Vallée, Meven Mordiern ha skrivagnerion Skol Walarn dre vras, hag a denn da vi-rouit d'ar yezh he galloud-krouiñ. Adal ma stager

da enbarzhañ enni gerioù sañset etrevroadel evel 'geografiezh' pe 'ekonomiezh' e reer dezhi chom gaonac'h a-grenn. Da lavarout eo, a-benn ar fin, e lazher anaezhi evel ardivink-meizañ diforc'h diouzh ar galleg hag ar yezhoù all. D'ar c'houlz-se peseurt ster a zo d'ar stourm a renomp eviti ?

An arver eo a zivizo stumm ar yezh arnevez
Eveljust e ouzon mat-tre ne vo miret er yezh, adouez ar gerioù nevez, nemet ar re a vo arveret hag ez eo an arver-se end-eeun a ziuzo an termenoù a vo darn eus glad ar brezhoneg. Ar geriadurioù, eveljust, ne vint morse a-walc'h da grouñ ur yezh, drezo o-unan, se a rankomp kounañ atav.

Evit klozañ e tistroan da graf an dañjer kealiadur-rezhel. Dister-tre eo o vezañ ma ne glask ar skrivagner peurluviañ er geriadurioù arnevez, nemet an termenoù a anavez end-eeun er yezhoù a sevenadur a zo en e gerz endeo. Ma te'hfed avat diouzh reolennezh 'geltiegezh', ne c'hellfe ket un danvez prederour oc'h ober gant hor yezh dioren ur reizhiad-soñjal piaouel diouzh ma rankfe amprestañ diouzh ur yezh a sevenadur anavezet endeo, ar galleg evidomp er mare-mañ, an termenoù en defe ezhomme anezho.

Gerioù nebeut anavezet : Entalañ : impliquer ; revegus ; goustennañ : sous-tendre ;

UR VAOUEZ HE DEUS GANET UR VERC'H DIWAR SPER HE GWAZ AET DA ANAON

Nevez 'zo he deus ganet Gaby Vernoff, ugent vloaz, e Los Angeles, ur plac'hig 3,7 kg, war aked ar mezeg Rothman, en doa graet war dro an ensperiadur danzeel gant sper Bruce Vernoff. Ar mezeg-se a gemeras sper e kelloù an Aotrou Vernoff un tregont eurvezh bennak war-lerc'h e varv e 1995. Bev oa c'hoazh ar sper dre ma oa bet lakaet ar c'helan en un arkuz yen. Goude-se e voe skornet ar sper e-pad tri bloaz ha lakaet neuze e kof an intañvez a c'hanas ar plac'hig.
« Kavout a ra din e roio an darvoud-mañ muioc'h a c'hoanag hag a levenez d'an tiegezh-se » a ziklerias ar mezeg Rothman. Diouzh e du an tiegezh Vernoff a zisklerias « eo deuet da wir huñvre ha c'hoant an tad hag ar vamm » ha « Ganet eo bet ur plac'hig diwar goanag he zud ». Ar mezeg Rothman a zisklerias a-hend

« LAVARET O DEUS » gant Pol Kalvez

BEVAÑ KRISTEN

« Mar beve an holl gristenion evel kristenion ne vije mui hindouad ebet en Indez »
Gandhi

JOA

« Pedit atav, betek ma teuiio ar bedenn da vezañ joa evidoc'h »
An Itron Varia 25 03 2000 (ouzh bugale)

CHEÑCHIT BUHEZ

« Cheñchit buhez dre cheñch ho sellad war ar vuhez. Re brederiet e vezit gant an traoù douarel ha re nebeut gant an traoù speredel. Divizit bemdez reiñ ur pennad amzer da Zoue ha d'ar bedenn »
An Itron Varia da Viaka 25 04 2000

all e voe evitañ un dra vurzhudus da gas da benn, daoust ma savo moarvat tabutoù divezel diwar-se. »

N'ouzomp ket petra a soñj lennerion Imbourc'h diwar-benn an dra-se (ra skrivint !). Evidon-me e lavarin hepken ez on sabatuet gant an istorig-se a zo c'hoarvezet hep na vije komzet kalz diwar he fenn a-benn ar fin.

Me 'gav din ne vez ket doujet ouzh ar gwir o deus ar vugale da gaout un tad bev evit ober war o zro. N'eus ket ar gwir eta da lakaat a youl-gaer bugale da zont er bed o c'houzout ervat n'o devo ket a dad (pe a vamm).

Unan bennak a c'hellfe arguziñ o lavarout ez eus emzivaded a-berzh tad pe vamm a vil vern. Gwir eo hogen al linenn dispartiañ etre ar pezh a ranker disteurel hag ar pezh a ranker degemer eo daoust ha c'hoarvezet eo an dra a youl-gaer pe get. Setu aze d'am soñj ivez un arguzenn a ro ur banne sklerijenn war ar pezh a lavar an Iliz a-enep d'an torr-dimeziñ : ar vugale a rank mirout o zad hag o mamm. Gwan eo ar vugale, dizifenn. N'eo ket natur divizout n'o devo ket a dad pe a vamm. Heñvel kudenn a weler gant al lezenn nevez marilhet en Izelvroioù : ar gwir o deus bremañ an heñvelre-voirion da zimeziñ, da lavarout eo da gaout bugale pe advabañ.

T.G.

Gerioù nebeut anavezet : Arkuz : morgue (o komz eus un ospital ; ensperiadur danzeel : insémination artificielle.

PARABOLENN AR BERLEZEN BRIZIUS-MEURBET

"Heñvel eo c'hoazh Rouantelezh an Neñvoù ouzh ur marc'hadour o klask perlez kaer, Kavet gantañ ur berlezenn brizius-meurbet, ez a da werzhañ kemenn en deus hag e pren anezhi."

(Aviel Sant-Mazhev 13: 45-46)

E-barzh pennad 13 Aviel Mazhev, e komz Jezuz diwar-benn Rouantelezh Doue (pe Rouantelezh an Neñvoù). Evel kustum, e tiskleir traoù speredel gant parabolennoù. Displegañ a ra Jezuz perak e komz dre barabolennoù er gwerzadoù 11-17 eus ar memes pennad (13).

Eizh parabolenn a zo kontet gant Jezuz er pennad trizek-mañ. Teir anezho a zo displeget gantañ; er pemp anezho neuze, hon eus da glask ar ster gwirion, ar pezh a zo d'ober e parabolenn ar berlezenn brizius-meurbet. Ur barabolenn verr eo (div frazenn) a ro tro deomp da gaout daou ster enni. Ar ster kentañ a laka an den e kreizig-kreiz an istor. Hogen, ur ster diwar-c'horre eo, d'hor soñj. Dono-c'h eo an eil ster, ha tostoc'h ouzh ar wirionez, dre m'emañ Jezuz en e greiz. Setu an daou ster hon eus kavet :

Kentañ ster

Aes-tre eo, Mab-den eo ar marc'hadour, da lavarout eo, c'hwil, me, eñ, hi, ... Eienenn eürusted mab-den eo ar perlez kaer. Ar berlezenn brizius-meurbet eo an eienenn uhelañ, Rouantelezh Doue, emañ Jezuz-Krist o ren warni. Pep hini ac'hanomp a glask an eürusted. Pa glevomp keloù-mat ar Salud e Jezuz (= an Aviel), e kavomp un eürusted dispar: ar vuhez peurbadus e Rouantelezh Doue. Prest omp neuze da zilezel hon holl beadra evit chom feal d'hor feiz ha kemer perzh e Rouantelezh Doue.


Eil ster

Jezuz eo ar marc'hadour. Eienenn al levenez eo ar perlez kaer. An Iliz eo ar berlezenn brizius-meurbet, da lavarout eo emvod ar gristenien, bodadeg ar re a zo glanaet dirak Doue dre e wad. Jezuz en deus gwelet an Iliz da zont (pe an Iliz "da vezañ") strewet e-touez an dud. Hep termal, e tilezas e holl beadra evit paeañ priz dasprenadur an Iliz. Dilezel a reas e stad klodus e-kichen Doue an

Tad, evit dont er bed, evel un den ordinal. Eno e tilezas e vuhez evit paeañ priz pec'hedoù ar re a gredfe ennañ, da lavarout eo, an Iliz da zont.

Setu, deoc'h da zibab penaos e komprenit ar barabolenne-se. Marteze e kavot un trede ster?

Lukaz Bernikod



E iliz Kommana

Lizhiri : a-berzh M.B., eus Karnag, diwar-benn armerzhouriezh : "Gouzout a reomp e vez diaes prederiañ diwar-benn doareoù da gas hor sevenadur war raok hep na 'z afe bep taol hor soñjoù war-du ar politikerezh. Ha koulskoude e klask alies stourmerien ar sevenadur lakaat ur voger etrezo hag ar politikerezh, evit ma vefe nebeutoc'h a drubuilh evit an holl ha na vefe pellaet den ebet diouzh ar sevenadur abalamour d'ar politikerezh.

Met kemend-all a c'hoarvez war veur a dachenn, estreget hini ar sevenadur. Ar skouer a zo em fenn a zo an doare ma vez keletnet skiant an armerzhouriezh er skolioù-meur.

Ha n'eo ket die'hallus studiañ an armerzhouriezh hep ober van penaos ha gant piv e vez kemeret an divizoù a-bouez evit hor bro ? Gwir eo ez eus reolennoù armerzhel a ya en-dro en hevelep doare e pep lec'h. Met ret e vefe ivez lakaat ar studierien da brederiañ diwar-benn ar c'holloù hag ar gouidoù en em gav e Breizh dre ma 'z eo-hi edan galloud politikel Bro-C'hall. An danvez-se avat a zo berzhet. N'eus ket anv anezhañ er c'hazetennoù pe er skol-veur nemet evit farsal. Risklus e vefe d'ur c'helenner skol-veur kas an diviz war an tu-se. Koulskoude hon eus ezhomme eus alioù tud desket war an armerzhouriezh. Ha moarvat e vefe dennet an holl studierien gant ar preder-se...

Kenskrivit !

Kelaouenn Emglev an Tiegezhioù, kevredet e Kuzul ar Brezhoneg, eo Imbourc'h. Talvezout a ra « Imbourc'h » kement ha « klask ». Klask ar wirionez a-gevret, gant ur spered a vignoniezh, doujus d'ar feiz kristen, hag e brezhoneg, setu aze hor pal.

250 lur (38 €, 38 \$) eo ar skodenn vloaz ordinal, a ro ar gwir da resev ar c'hannadig hag ar stagadennoù trimiziek. Sevel ar ra da 100 lur evit ar re a garfe resev ar c'hannadig nemetken.

Ar skridoù, kemennoù, lizhiri ha skodennoù a zo holl da gas da :

Imbourc'h, Kergreven, 29800 Trelevenez
Pgz : 02 98 25 10 72 eat@libertysurf.fr
http://perso.libertysurf.fr/kannadig
Moulerzh prevez. Merour : T. Gwilhmod
ISSN : 1144 357X CPPAP : 50015. Ar pennadoù ne enouestlont nemet o aozerien. Diskleriet hervez lezenn.

(diver ar bajenn 7) Distro-skol mat d'an holl ha bec'h d'al labour... ha d'ar c'henlabour !

T. Gwilhmod

IMBOURC'H :
400 LEVRENN
ABAOE 30 VLOAZ :
KLOKAIT HO
TASTUMADENN...

A-berzh E. de Saint Laurent, Plistin : " Gwall drist - ha souezhet - on bet o lenn pennad Ivan Guehenec diwar-benn an esperanteg. Ma n'eo ket a-du gant ar yezh-se e kav din e skriv traoù faos diwar he fenn.

An esperanteg n'eo ket ur " prezeg sonnet ", tamm ebet. Ne vez ket aotreet kemm ebet da ziazezoù ar yezhadur, gwir eo, ha fin an anvioù-kadarn a chomo atav " -o ", evel hini an anv-verb a chomo " -i ". Met ar geriadur a zo bet puvudikaet ken-kenañ. E mare ZAMENHOF ne oa nemet war-dro 7000 ger ha bremañ ez eus 250000 da vihanañ.

En tu-hont da se o deus krouet an esperantegerion meur a genger nevez, tamm-ha-tamm, evit arlivañ ar yezh. Abalamour da se emañ c'hoazh an esperanteg ur yezh vev-tre hag o vont war-raok.

Ma n'eo ket posubl hiziv ober hep ar saozneg war meur a dacheñno posubl evelkent deskiñ *vez* an esperanteg ! Gant an esperanteg ez eus tu da gaout - buan hag aes - darempredoù don ha sklaer gant esperantegerien eus ar bed-holl.

(...) Mat e vefe deoc'h lenn levr talvoudus Claude Piron " Le défi des langues. Du gâchis au bon sens " e ti L'Harmattan. An den-se a zo bet jubemour en A.B.U. (Aozadur ar Broadoù Unanet - O.N.U.) war ar saozneg e-pad pell ha soñjal a ra dezhañ ez eo ar saozneg " re ziaes, leun a zibarderioù pe a droioù-lavar, hag ouzhpenn-se alies displann " e gwirionez.

Ha me a soñj din emañ ar saozneg o lazhañ goustadik meur a yezh deut da vezañ didaivoud evit an estranjourien.

Er c'hontrol an esperanteg a zo ur yezh " ouzhpenn " nemetken, hag evel-se ez eo ar gwellañ mignon evit an holl yezhoù " bihan " (evel ma vez lavaret !). (...)

SONDADURIOÙ...

Daou sondadur a zo bet graet nevez 'zo e Breizh ha setu ar pep pennañ eus an disoc'hoù anezho :

- 78 % eus bretoned rannbarzh Breizh ('B4') o deus fiziañs e dazont o 'rannbarzh' (6 poent muioe'h eget er rannbarzhioù all) ha 65 % a lavar bezañ « stag da vat » ouzh o 'rannbarzh' (sondadur OIP-CSA).

- 23 % eus ar vreizhiz a zo a-du gant frankiz Breizh (5 % a-du a-grenn)

- 71 % eus tud bro-Naoned a zo a-du gant Breizh pemp departamant (65 % e Breizh a-bezh)

- 65 % eus ar vreizhiz a c'houlenn muioe'h a c'halloud gant ar 'rannbarzh'.

- 49 % eus ar vreizhiz a zo « a-du gant kelennadurezh rediek ar brezhoneg ... nemet kontrol e vefe da c'hoant ar gerent ». Uhel a-walc'h eo an dregantad-mañ met ma ran-ker derc'hel kont eus c'hoant ar gerent n'eo ket tre eus ur gelennadurezh « rediek » eo ez eus anv neuze !...

KANNADIG IMBOURC'H

Niverenn 10

Du-Kerzu 2000

LEVRIOÙ IMBOURC'H :

NEVEZ DEUET ER-MAEZ :

Daou vuhezskrid gant J.M. Uguen, bet kenlabourer « Feiz-ha-Breiz » : hini Mikael an Nobletz hag hini an Tad Maner.

O dibabet hon eus dre maz eo bet emsav ar misonoù e Breizh er 17vet kd ken pouezus evit istor Breizh hag istor ar Vetodisted evit Kembre en 18vet kantved. 125 lur franko eo priz pep oberenn ma n'hoc'h ket kaset ho skodenn evit ar bloaz 2000. D'ar re o deus kaset ar skodenn klok evit ar bloaz 2000 e kasimp dizale Deizlevr Youenn Olier evit ar bloaz 1961, « Gourlenn ». An oberenn-se, enni 370 pajennad, a gont eta evit eil c'hwec'hmizad ar bloaz 2000. Ho pezet ar vadelezh da gas dimp ho skodenn evit ar bloaz 2001 adal bremañ eta (250 lur). Trugarez deoc'h.

ENKADENN E DIWAN



Pevar ezel eus Burev Diwan war seizh o deus roet o dilez eus ar Burev dre ma fell dezho kemer anzer evit ober « un Emglev mat » gant an Deskadurezh Stad.

Ur wech ouzhpenn e reer anv er wask eus un enkadenn o tagañ an aozadur-keleñn broadel nemetañ hon eus e Breizh. Ar wech-mañ n'eo ket un enkadenn gellidel, evel maz eo c'hoarvezet peurvuiañ betek-hen, hogen anv ez eus a bennañnoù ha diazezoù an aozadur-keleñn e-unan.

E berr-gomzoù, prest e vefe an Deskadurezh Vroadel C'hall da harpañ an aozadur, oc'h enframmañ anezhañ e stumm pe stumm e reizhiad ar skoliezh stadal e Bro-C'hall, gant ma tilezfe Diwan hentenn an "ensouberezh" er yezh adal ar skol-vamm, a zo bet pleustret ganti adal 1978, pa voe krouet, hag a zo bet e-fedus kement ha ma c'helle bezañ, er plegennoù m'emañ ar yezh enno abaoe un ugent vloaz bennak.

Un dañjer all a zo eveljust, mar bez kevaret Diwan ouzh an 'Deskadurezh Vroadel'. Bez e c'helle ar galloud gall dibab ar skolaerion, stummañ anezho pe chom hep hen ober, divizout peseurt steuñ-keleñn a vo lakaet e talvoud, digeriñ pe serrañ skolioù pa gavo mat hen ober, hervez e did hag e imor, ha lakaat un termen zoken d'an aozadur p'en devo digalonekaet koulz kerent, skolaerion ha skolidi.

Arvarus-kenañ eo enta sinañ un emglev hep bezañ sur e vo miret ar pep brasañ eus emrenerezh ha dibarelezh ar skol vrezhonek. Reolenn ar brezhoneg unyezh ar c'helenn, da vihanañ a zo pennadalc'hel, rak ne vo tu biken da adober eus ar brezhoneg ur yezh vev ma pleger war ar c'hraf-se, ha seul pendalc'heloc'h eo ar reolenn maz eo kollet an danvez brezhoneger yaouank e meurvor ar galleg. Maz asanter da ginnigoù ha da wisiadoù an Deskadurezh Vroadel c'hall e varmor ar brezhoneg da chom ur yezh varv, a vo a-barzh pell disoñjet a-grenn evel al latin e-unan. Ma lezer ar

(Lenn pajenn 8)

DA HEUL AN « DRO VREIZH »

D'ar sadorn 28 a viz Du e oa bet bodet pirc'hirined eus an Dro Vreizh e Sal ar Gouelioù Trelevenez evit sellout ouzh luc'hvanoù bet kemeret e-pad an tennad diwezhañ e-pad an hañv ; Gwened-Kemper, da lavarout eo 170 kilometrad bennak.



E sal ar gouelioù Trelevenez

D a o u
c'hant lu-
c'hvann a
voe kinni-
get gant
N a d i n e
Gwilhmod
d'un han-
ter-kant
bennak a-
dud. Plijet-
tre e voe

an holl gant an emgav-se a voe klozet gant ur banne kafe tomm... ha marvailhoù forzh pegement eveljust !

An holl avat a oa nec'het oc'h en em c'houlenn pe tra a vo graet ar bloaz a zeu hag ar bloavezhioù war-lerc'h : meur a hini a fell dezhañ kenderc'hel d'en em gavout evel-se, ur wech ar bloaz, war hentoù Breizh, hag adkavout an aergelc'h dispar a ren etre an dud, daoust pegen disheñvel ez int e gwirionez an aergelc'h a vignoniezh hag a zoujañs e-keñver ar mennozhioù (e-keñver ar feiz kristen hag ar brezhoneg da skouer).

N'ouzomp ket petra a vo graet gant renerien ar gevredigezh "Hentoù an Dro Vreizh" a zo kabestret gant tud eus Kastell-Paol, o deus labouret a-zevri e-pad seizh vloaz hag en em gav skuiñz an tamm, ret eo lavarout, goude ur striv ken hir, hag evit ur "Bennozh Doue", evel-just ! Ober war-dro ouzhpenn daou vil den e-pad ur sizhunvezh, evel n'eo bet graet ar bloaz-mañ, n'eo ket un dister-dra...

Moarvat ez aio pirc'hirined an Dro Vreizh da Vro Gembre e-pad an hañv a zeu. War roudoù hor sent kozh. Hogen, diaesterioù a sav : Kembre n'eo ket ur vro c'halleger ha protestant eo, dre vras. Kous-tus e vo ivez rak treizhañ ar mor a vo ranket ober ha moarvat ne vo ket ken aes skoulmañ emglevioù gant ar c'humunioù evit lojañ an dud evit netra pe gavout tud a-youl vat a-walc'h evit ober war-dro karavanenn an Dro Vreizh ('Breizh o vale', 'La Bretagne en marche', evel ma lavar Philippe Abjean rener an Dro Vreizh). Sellet e vo ouzh ar vretoned eno evel touristed 'm eus aon, ha reizh a-walc'h e vo, goude-holl.

OFERENNOÙ BREZHONEK

26/11 Plouizi, 10 e 30
3/12 Sant Mazhev Gwidel 10 e 30
10/12 Penniliz Santez Anna Wened, 10 eur
10/12 Plougerne 10 eur 45 (Yann-Vari Perrot)
10/12 Rostren 15 e 30. Evit envor Y.V. Perrot ha drezañ holl dud varv an Emsav. Ur banne tomm a vo servijet war-lerc'h an oferenn.
12/12 Koad-Kev 11 eur (Yann-Vari Perrot)
17/12 Sant Tomaz Landerne, 9e 45 (trede sul ar mizioù par)
17/12 Kistinid da 11 eur 15
17/12 Pañvrid ar Beskont 10 e 30
24/12 Sant Kristof An Oriant (Pellgent)
24/12 Trelevenez (Pellgent da 20 e 30)

Ha goude-se ? Petra a vo graet a-benn ar bloaz 2002 ? Moarvat e vo graet un dra bennak e Breizh adarre. Hogen chom a ra kudenn an dud a youl-vat evit ober war-dro : prientiñ pep tra a empleg ul labour tenn hag ul labour a-stroll n'eo ket aes kas da benn pa ne c'heller kontañ nemet war youl-vat an dud war bouez ur sekretour, a vez paecet evelkent.

Setu perak o deus divizet un nebeut tud aozañ emgavioù bihan e-pad ar bloaz : emgavioù un devezh hepken, d'ar sul. Kregiñ a ra an devezh d'ar sul gant oferenn ar barrez ha war-lerc'h ez eer en hent gant e voued evit debrñ "e ti Mari Glazur" hag an droiad a echu war-dro peder pe bemp eur. Aozet eo an devezhioù-se gant "Breurezhioù" le-c'hel. Setu amañ da heul ar roll evit ar mizioù da zont : 10 a viz Kerzu : Plougoumen, 11 eur 02 97 44 74 63 ; 21 a viz Genver : Lokeltaz-Ruiz, 10 eur 30 02 97 40 59 25 ; 4 a viz Meurzh : Gouareg, 10 eur 30 02 96 79 69 82 ; 10 a viz Mezheven : Lanvejenn (Lanvegen) 9 eur 45 02 97 31 30 13

Galleg eo yezh an dud peurvuiañ hogen tu a zo da blantañ brezhoneg e-barzh... da c'hortoz kavout unan bennak da aozañ traoù evel-se evit an tiegezhioù brezhonek... N'eo ket diaes-bras da aozañ hag a-bouez e c'hellfe bezañ evit hon tiegezhioù.
Da skouer, bep bloaz on boaz da ober an hent etre chapel Landouzn An Dreneg ha Penniliz ar Folgoad, dere'hent ar pardon. Seizh kilometrad a zo d'ober war un hent a oa gwechall hini an "Tren patatez", a-raok en em gavout d'an Oferenn vrezhonek. Un digarez da ober 'un troc'h' a-raok kregiñ en-dro gant ur bloavezh-skol nevez,

(sellout paj. 7)

**NOTENNOÙ POLITIKEL
gant Youenn Olier****KARAVANENN AN EMSAV**

Ur pennad bet embannet war « Breizh Info » n'eus ket pell zo, war an niverenn 193 eus an 10 a viz Here, en deus dedennet va evezh. Skrivet eo bet gant Loeiz Ar Beg, ur stourmer eus derou ar strollad UDB, a grog da gozhañ evel an holl eta, ret eo merkañ.

An UDB hag an Emsav

Talbenn ar pennad a zo « L'UDB est un interface entre la gauche française et l'Emsav ». Talvoudus eo moarvat ur seurt chemedenn, rak dres, diskouez a ra ned eo gweredus ar strollad-se nemet diouzh maz eo kengred gant ar c'hostezennou gall kleizad, ha kevarzhet outo. Neuze en em c'houlenner peseurt ster a oa d'an arnodou renet gant ar strollad-mañ a-hed ar bloavezhioù seikont dreist-holl evit reoliñ an emsav sevenadurel broadel, dre ijinañ, da skouer, ur skritur arbennik, hini ar brezhoneg etrerannyezhezhel, maz eus chomet dilec'hioù anezhi er peurunvan a hiziv (*gwelet* e-lec'h *gwelet*, hag all, a laka droukvesk er furmou-verbou, 'ma' e-lec'h 'va' a zo er yezh lennek a-c'houde ar Gonideg ha Vallée hag a dosta ar yezh ouzh ar c'hembraeg.

Heverk eo a-hend-all un diskleriadenn all graet gant argomzer an UDB. Goude bezañ bet ur strollad marksour en derou – pa oa ar c'hiz – ne rafe mui UDB dave da nep kelennadurezh diwar-vremañ, hogen fellout a rafe dezhañ en em lec'hiañ a gleiz d'ar c'hreiz. Pleustrek-rik e vefe n-derezh an UDB evel hini ur gallouduniad rik, a seurt gant hini n'eus forzh peseurt mafia.

Lezel a reomp da UDB he diskleriadennoù. Ne lavaromp ket e vefe didalvez ur strollad a garfe bezañ mudur en etre an emsav politikel hag ar strolladoù gall kleizad. Hogen n'eo ket ar roll-se a zo bet c'hoariet gantañ er pleustr betek nevez 'zo. Pezh en deus fellet da grouerion ha stourmerion ar strollad-mañ ez eo bet bezañ en emsav, hag er pleustr o deus miret ouzh ur strollad broadelour breizhat d'en em ziorren a-hed ar bloavezhioù, hep bezañ gouest, dre abafed speredel, da zifenn keal un danvez broad vrezhon o tennañ he reizh-wiriegezh eus un istor lieskantvedel, hag o tiar-hañ dre-se evit hor bro dezvad ur vroad diles. Hogen n'eus ket da souezhiñ gant an dra-se,

peogwir e venne ar strollad en em harpañ war ge-liadurezh Marks evit kas e stourm war-raok, o klask en armerzh ur ster d'ar stourm-se.

Moarvat e lavar argomzer an UDB hiziv, evel m'hon eus meneget, n'eo ket mui marksour e strollad, hogen ne ro a-hend-all reizhabegadur ebet – nag armerzhel, nag istorel, na sevenadurel – d'ar stourm renet ganto diwar vremañ. N'eo ket souezhus dre-se ne zedennfe ket kalz a zanvez stourmerion.

Moarvat e chom an dave da istor Breizh kalvezadel, ma karer, dre maz eo bet distrujet, dre wall-nerzh, diwezhañ aspadennoù an istor-se da vare an Dispac'h Gall. Hogen seurt drouzwezh a zo c'hoarvezet, pep kenfur en e reizh, gant ar vroad poloniat, a oa bet rannet etre meur a riez, ha na oa mui dezhi enta dezvad stadal ebet a nep seurt, a-raok dezhi bezañ adsavet ; ha se a zo bet gwir ivez e ser lwerzhon.

Mennozhioù Brud Nevez hag ar PCF

Koulskoude e kendalc'h izili ar PCF e Breizh, ar re a zo a-du gant ar brezhoneg – evel yezh poblek nemetken – zoken, da zinae'hañ nep reizh-wiriegezh d'an emsav dre ma ne vefe istor broadel Breizh nemet ur vojenn dreist-holl er grennamzer. Dave a ran amañ d'un dilennad am eus lennet dindan sinadur rener ar gelaouenn « Brud Nevez » en niverenn diwezhañ, a viz Gwengolo-Here : emgann Sant Albin an Hiliberronn ne vefe ket hini div vroad o vrezeliñ kenetrezo, hogen un emgann etre priñsed mennet da virout pe da skrapañ ur glad bennak ! Hogen diwar-benn istor Bro-C'hall e c'hellent lavarout kemend-all, ha gwech ebet ne reont...

Notomp, diwar-dremen, e klot ar ger glad e brezhoneg gant 'gwlad' e kembraeg, hag e talvez ar ger kembraek kement ha 'bro'. Ma tistaal izili ar PCF e Brest, war an digarez-se, istor Breizh ar grennamzer, daoust hag adarre e tistaolont ken-koulz istor krennamzerel Bro C'hall ? Gouzout a reer a-walc'h e fell da izili ar PCF bezañ brogarourion c'hall, ha penaos e oufent bezañ hep desammañ istor Bro C'hall penn-da-benn, peogwir – evel Breizh – ez eo bet krouet Bro-C'hall dre hec'h istor er grennamzer. Penaos bezañ brogarour gall, a-hend-all, hep degemer penn-da-benn istor Bro-C'hall, ha peurgent Bro-C'hall ar rouaned ? Daoust ha n'eo ket lennegezh klasek Bro-C'hall hini kantved ar roue Loeiz XIV, ha daoust ha n'eo ket ar sevenadur gall ur sevenadur bourc'hiz penn-da-benn, adal an derou betek bremañ ? Daoust ha

n'eo ket bet graet brezelioù an Dispac'h gall gant arme ar rouaned c'hall ? Breizh a c'hell bezañ ur vroad werinek peogwir n'he deus bet istor arnevez ebet. Evel istor arnevez, n'he deus bet Breizh nemet hini ar feiz kristen a oa gwerinek dre natur. Bro C'hall avat n'eo bet ha ne vezo biken ur vroad werinek drebenn d'hec'h istor arnevez peurgent : hi eo he deus kendaolet ar muiañ da grouiñ ar sevenadur bourc'hiz war ar c'hevandir-mañ.

Breizh-Info

Evit gwir, ma lakaer a-ziforc'h an UDB pe izili ar PCF a ra war-dro ar brezhoneg, pe izili kleizelour all eus kostezennoù gall evel ar "Parti Ouvrier" hag all, ez eo difennet mennad ar vroadeouriezh istorel - a ra dave da istor an emsav penn-da-benn adal *Breizh Atao*, gant an holl strolladoù breizhek, zoken ar re a venn bezañ eus an "tu kleiz", ma lakaont da bal d'o stourm tizhout an dizalc'hded evit o bro. "Emgann" da skouer, ha dre vras ar c'hostezennoù a embann o mennozhioù - liesseurt - e-barzh ar gazetenn « Breizh Info ». An holl c'hronnadoù -se, mennet d'en em zigemmañ diouzh an UDB, dreist-holl, a fell dezho chom gwerinelour, demokratik, dreist-holl evit enebñ ouzh Le Pen e Bro-C'hall, hep embann kelennadurezh ebet, nemet, evelkent - ha se a zo nevez - oc'h en em glenkañ e framm an emsav istorel evel m'emañ, en ur argarzhñ war-un-dro dibabou hiniennou 'zo eus an izili anezhañ, o tifenn, da skouer, eñvor Roparz Hemon. Un dra nevez eo kement-se, hag a rofe da soñjal en deus an emsav, a-benn ar fin, adskoulmet gant e istor, war-lerc'h tri-ugent vloaz tremenet.

Heñveladra a zo c'hoarvezet en istor ar gostezenn gleiz e Bro C'hall a oa bet diskaret goude emsavadeg ar Gumun e 1871, hag he doa gortozet meur a zek vloaz a-raok gellout adsevel, hep galdal keit hag an emsav evelato.

Ar MOB

En un doare iskis a-walc'h, ha daoust ma oa holl izili an emsav, e stumm pe stumm, eus ar gostezenn dehou etre an daou vrezel hag e-pad ar brezel, n'eus bet diorreet da vat strollad ebet eus an tu dehou. Gwir eo eo padet ar MOB e-pad un toullad bloavezhioù. Hogen n'en doa kealiadurezh ebet, daoust ma oa brizh-youlet reoù 'zo eus an izili da fardañ unan evit ar strollad (Pol an Dore, da skouer). Hogen un diskleriadur a c'heller reiñ d'ar c'hwitadenn-se. Bez e oa ar

gostezenn dehou e Breizh abaoe maz eo bet diazezet an trede republik, unan eus an Iliz. O vezañ maz eo aet houmañ war an diskar a-c'houde kreiz ar bloavezhioù hanter-kant dreist-holl, hag o vezañ maz eo troet ar frammou anezhi war-du ur meni kleizelouriezh abaoe ar Goursened diwezhañ, o deus kollet ivez ar c'hostezennou dehouat ar c'hreñvelc'h a roe nerzh ha lañs dezho. Ouzhpennomp e pourchase an Iliz ivez d'ar strolladoù-se ur bedvezadur a roe d'o c'heleennadurezh ha d'o amkanioù un diabell-weled speredel ha na c'hell ket bezañ gant ur gelennadurezh denel a-grenn ha politikel-rik.

Ar POBL

Ar mank-se eo a ziskleir ivez c'hwitadenn POBL, a oa broadelour rik hag a venne amsaññ ar MOB. Ar perzh amat nemetañ anezhañ a oa en em ziforc'h diouzh an UDB, o heuliañ ur politikerezh eus ar c'hreiz a seurt gant hini ar MOB, ma felle dezhañ dispenn e roudoù, nemet o pouezañ war bal hengounel an dizalc'hded e framm Europa ; kevanadur Europa, e soñj Yann Fouere, a oa unan eus ar renerion, o vezañ un ampegad ret da sevenidigezh mennad ar strollad ; en em lec'hiañ a rae avat POBL, a gav din, e framm al luskad a oa bet deraouet e sell da grouiñ un Europa gevreadel a penn-kentañ ar bloavezhioù hanter-kant, awenet dreist-holl gant tezennoù Yann Fouere, da skouer, en e levr « L'Europe aux cent drapeaux ». War-un-dro e oa al luskad-se diforc'h diouzh an emsav sevenadurel broadel, diouzh ne gaver ennañ nemet gallegion tost da vat : dija izili ar MOB ne oant ket evit deskiñ ervat ar yezh.

« Gwenn-Ha-Du »

Tu a vefe ivez da venegiñ ur gonnad evel an hini a zo bodet en-dro d'ar gelaouenn « Gwenn-Ha-Du », e-lec'h ma kaver broadelourion eus ar remziadoù kent, miret ganto spered *Breizh Atao*, ha mennozhioù dehouat, tost d'ar re a oa diouzh ar c'hiz etre an daou vrezel, daoust maz eus oc'h embann testennoù er gelaouenn-se skrivagnerion a zo bet ganet goude ar brezel. O vezañ ma n'eus oberezh ebet stag ouzh an dastumadenn-se, n'eo ket gwall vras he levezon en emsav, seul vui ma ne ro lec'h ebet d'ar yezh en he bannoù. Dere'houezañ a ra "Gwenn-Ha-Du", e gwirionez, ur gealiadurezh istorelour broadelour a oa diouzh ar c'hiz en hanterenn gentañ ar c'hantved-mañ oc'h echuiñ.

« Adsav »

Erouesoc'h eo, moarvat, danvez hag amkanioù ar strollad « *Adsav* », nevez diazezet gant stourme-

rion bet oberiant e-barzh POBL, hag a embann ur gelaouenn a zo he zalbenn « War-raok », nevez deuet er-maez e miz Gwengolo. E-touez ar re a zo e penn al luskad nevez en em gav, da skouer, Montauzier, a zo bet unan a aozerion ar gwalldaol a-enep da Gastell Versailhez un ugent vloaz bennak a zo. Hini pe hini eus krourion ar strollad-se, evel m'hon eus merket, o deus kemeret perzh e oberezh POBL.

War a seblant eta e fell da herouzerion al luskad-se kemer un emzalc'h politikel a-zehou, fraezh ha krenn, gant mennozhioù resis e par ar gealiadurezh hag ar politikerezh. Er pleustr, o lenn pajennoù ar gelaouenn embannet gant *Adsav*, e kaver dave da vodadoù-studi evel ar *GRECE*, o deus levezonet ar strollad *FN* gant Le Pen, koulz hag hini ar strollad nevez diwanet dioutañ, hini Mégrét. Diskleriañ a ra renerion *Adsav* e fell dezho enebñ ouzh hollvedeladur ar galloud armerzhel ha politikel, da lavarout eo, ouzh gourheiz ar Riez Amerikan er bed. Evit gwir e kaver war an tu kleiz ivez un hevelep eneberezh ouzh an hollvedeladur, hogen seurt genejezezh ne c'hoarvez ket pa laka *Adsav* an emsaverion war ziwall ouzh tezennoù ar c'hendeuzerezh stuzegezhioù ha sevenadurioù, a zlefe bezañ, gouez dezho, « frouezh un envroerezh direol ha divent ».

An envroerezh n'eo ket ur gudenn vallus

Ne gav ket din ez eo mallus reiñ un diskoulm d'an envroerezh e Breizh. Kalz dañjerusoc'h eo ar renad gall e-unan hag an amaezhiezh stadel gall evit dazont hor broadelezh hag hor sevenadur. Moarvat ez eo faziet stourmerion *Emgann* - reoù anezho - o reiñ da grediñ e vefe kevarzh ar stuzegezhioù poblek kenetrezo penn-da-benn d'ar voull-douar. N'eus keñver ebet eveljust etre stuzegezh an India-ned eus Amerika, lakaomp, pe veuriadoù Nevez-Gwinea, hag ar stuzegezh vrezhon henvoazel, a zo hini ur bobl politikel europat a hengoun kristen abaoe 1500 vloaz. An divroidi n'int ket arvarus evit hor broadelezh evel divroidi o terc'hel d'ur stuzegezh orin bennak, hogen Gallaoued distuz ha diwizienn, ha n'int mui perzhidi e nep sevenadur, nemet hini ar yoc'hstlenn reolet, evit ar pep pennañ, gant an Amerikaned, ur wech klevet ne vefe mui a Vreizh en deiz ma tizhfe niver an envroidi diwizienn-se en tu all da 50 % eus ar boblañs.

Tud diwizienn a zo tud diistor, ha kaer a vo lavarout, bez ez eo ur bobl frouezh un istor, goude ma vefe dezhi hec'h istor hec'h-unan. Hogen war ar c'hraf-se ne c'heller ket breutaat nemeur, dre maz eo hudverzet gant stuzegezh ar Stadoù sujet d'ar

"politically correct".

Evel kristenion e c'hellomp lavarout evelkent ne c'heller ket implijout hentennou direizh da gemm ar gevredigezh. Diharzus eo, d'am soñj, an envroerezh, hag ar Stadoù-Unanet o-unan ne zeuont ket a-benn da reoliñ hini ar spagnamerikaned a zo oc'h aloubiñ o riez gwazh-ouzh-gwazh bemdez. Ret e vije bet da Europiz ha d'an Amerikaned diorren broioù an Trede Bed, evit aotren dezho dont da vezañ dizalc'h ha bastañ d'o ezhommoù o-unan. O prestañ arc'hant dezho - e-lec'h reiñ evel da geñver ar Raktun Marshall en Europa da goulz ar goudevezh brezel diwezhañ - o deus serrat kennez armerzhel ar broioù-se, ha dre-se int bet kiriek da lanvez an divroerezh, a vo kiriek en amzer da zont emchañs, da lizadur ar stuzegezh europat kantvedel, dre maz ay war greskiñ, dreist-holl, niver Musulmiz gouest da zerc'hel o c'hultur orin (eno emañ an dalc'h).

N'eus mui a sevenadur poblek e Breizh abaoe meur a zek vloaz

Forzh penaos ez eo ret anzav n'eus ket da spiañ e vo tu da adsevel, a-barzh pell, ur stuzegezh unvan en Europa, nag e Bro-C'hall, nag e Breizh zoken. Trellet eo an emsaverion atav gant adsked ur stuzegezh poblek unvan ma oa lodek enni 90 % eus ar boblañs e derou an ugentvet kantved. Komz a reer c'hoazh hiziv eus sevenadur poblek e Breizh pa n'eus mui a sevenadur a seurt-se abaoe meur a zek vloaz. A-benn ar fin ne zrestpad koun ar sevenadur-se nemet dre an Emsav, a zo bet deraouet d'ur mare ma oa ar sevenadur-se en e greñ en hor bro. Hogen aner eo, moarvat, an dave a ra dezhañ an emsaverion, eus an tu dehou koulz hag eus an tu kleiz, dre ma oa kristen ar boblañs en he fezh er mare-hont, ken e oa kristen ivez ar stuzegezh hag ar sevenadur (e par an adiladurezh, da skouer) ma oant perzhiek enno. A-benn ar fin ar stuzegezh kemeret war o c'hont gant an emsaverion a zo dinodet diwar an argemmenn eus prederouriezh kantved ar "Sklerijennoù". Ar "Grece", bet meneget gant *Adsav*, a zo digristen he diazezoù kefredel. Setu, n'eus sklaerder ebet ha ne c'hell bezañ sklaerder ebet, e-keñver feiz kristen, en tezennoù diogelet gant an emsav nevez.

Moarvat e c'hello *Adsav* bezañ talvoudus evit taliñ ouzh droukvesk ar mennozhioù a zo oc'h ober o reuz en emsav devoudel a hiziv, a venn

bout renket en tu kleiz, en ur gevredigezh gall ha kornogat a fell dezhi bezañ araogelour. Hogen dre ma n'eus diskoulm ebet evit ar mare da lod kudennoù stignet ganto – evel gant ar strolladoù dehouelour all e Bro-C'hall hag en Europa (anat eo ne c'hello ket Haider en Aostria lakaat e talvoud ar steuñv kinniget gant e strollad) – n'eus ket da c'hortoz e c'hellfe kemm saviad politikel Breizh en amzer-da-zont tost.

Geriou nebeut anavezet : gweredus : efficace ; kevarzhañ : rendre solidaire ; argomez : porte-parole ; niderezh : pratique (de la praxis) ; kalvezadel : technique ; pep kenfeur en e reizh : toutes choses égales par ailleurs ; toutes proportions gardées ; reizhviriegezh : légitimité ; kevandir : continent ; gwernelour : démocrate ; kevanadur : intégration ; anlegad : condition ; dere'houezañ : représenter ; hudverzañ : interdire par un tabou ; kennez : expansion ; lizadur : corruption ; stuzegezh : façon de vivre et de se comporter collectivement (culture) ; adelladerezh : le bâtiment (industrie) ; argemenn : (une) variable ; devoudel : réel, de fait, factuel, effectif (e stal Imbourc'h e c'heller prenañ geriadur Galleg-brezhoneg Jil Ewan - 326 p. a gloka geriadur ar Gleau bet embannet e ti Al Liamm, 120 lur franko hag ar geriadur Arnevez, galleg-brezhoneg ivez, 242 p. 80 lur franko)

UN DARVOUD BEDEL HEP E BAR : BEAJ RELEGOÙ SANTEZ TEREZA AR MABIG JEZUZ

Bemdez en em gav e Liseux testenioù souezhus a-zivout beaj relegoù santez Tereza Liseux dre ar bed-holl, a bado betek ar bloaz 2003. Un dra zo sur emañ an Doktor eus an Iliz-mañ o tont war-wel mui-ouzh-mui ha c'hoari a raio ur roll a-bouez e aviadur ar bed e penn-kentañ ar bloavezhioù 2000.

D'ar 14 a viz here 1994, he deus pignet torgenn Fourvière e Lyon. Ha war lerc'h e voe tro Marsilha ha Pariz da zegemer cilvet patromez Bro C'hall, araok dezhi kregiñ gant ur gwir « Tro Bro Frañs. » Kalz a dud zo aet da drugarekaat dezhi, da zigeriñ o c'halonou leun a joa, a boanioù hag a c'hoanag. E pep lec'h e rene an hevelep birvidigezh hag an hevelep levezeg. Un darvoud sperdel eus ar re gentañ eo ar veaj-se : adalek an abati brasañ betek ar barrez vihanañ he deus lakaet speredoù ha kalonoù da zigeriñ ha da dañva Komz Doue.

« **Me garfe mont dre ar bed** »
E 1995 ha 1996 e Belgia, Luksambourg, Alamagn hag Italia, e oa bet gouletennet a bep tu. E 1997 e pad ar J.M.J. e Pariz miliadoù a dud yaouank oa deuet da bediñ anezhi noz ha deiz e Itron Varia an Trec'hioù e Roma pa voe lakaet war roll an Doktored eus

DOMINUS JESUS gant Pol Kalvez

Dominus Jesus eo anv an diskleriadenn diwezhañ bet sinet gant ar Pab a-zivout an darepredoù etre ar gatoliked ha feizidi ar relijionoù all. Embann a ra dreist-holl ez eo ar relijion gatolik "ar relijion gwirion nemeti". Respont a ra an diskleriadenn-se, a-unan gant diskleriadurioù Vatikano II, da zouconiourion 'zo a lavar "ez eo kenkoulz an holl relijionoù evit bezañ salvet". Hervez an teul-se ar relijionoù all "a ra c'hoazh diouer dezho an emouezadur ouzh Doue oc'h en em ziskuliañ".

E-keñver ar c'hredennoù kristen all e lavar ar Pab n'eus nemet un Iliz ha dre-se n'heller ket komz eus an "Ilizoù Protestant". Daoust ma n'eo ket nevez tamm ebet e-keñver doueoniezh eo bet bet degemeret fall-tre gant ar pennadurezhioù protestant.

Emouezadur : prise de conscience

an Iliz d'an 19 a viz here 1997 gant Yann Baol II. War-lerc'h gouelioù ar c'hantveder e Liseux e voe kaset he relegoù da vro-Suis, Aostria ha Slovenia. E 1998 int bet kaset da vro Brazil evit bloaz.

E penn kentañ ar bloaz 1999 eo aet Tereza d'an Izelvroioù, da Rusia ha d'ar Stadoù Unanet. Er Bloaz 2000 eo bet degemeret er Filipinez, Taiwan, Hong Kong hag en Itali. Evit echuiñ bez e vo en Iwerzhon, Liban ha Kanada, e 2002. Aostria ha Nevez Kaledonia, e 2003 hag e broioù Afrika ivez. Evel-se e vo deuet da wir hetoù ha gouestloù Santez Tereza Ar Mabig Jezuz :

« Hogen ma aelz vihan, me a garfe sklerijennañ aneoù evel m'o deus graet an diougane-rien, hag an doktored. Galvet on da vezañ abostol.

Me 'garfe ergerzhout ar bed-holl, kemenn an Aviel e pemp lodenn ar bed, betek an enczenn bellañ.

Me 'garfe bezañ misionerez »

Brigitte GELEOC.

(Emvuezhskrid Santez Tereza a c'heller pourchas e stal Imbourc'h evit 95 lur franko)



ER PEOC'H HAG ER FIZIAÑS E VO HO NERZH

Ha lennet hoc'h eus levr an Ermaeziadeg a gont penaos e kuitas an Israeliz Bro-Egipt dindan renerezh Moizez ? Mar n'hoc'h eus ket lennet anezhañ, moarvat hoc'h eus gwelet ar film "An Dek Gourc'hemenn" (Les Dix Commandements e galleg, the Ten Commandments e saozneg), hag e ouzoec'h neuze penaos e c'hoarvezas an traoù. Ar bobl a de'has kuit hag a zeuas da vezañ ehanet en he zec'hadeg gant ar mor Ruz na c'helle ket bezañ treuzet. En ur sellout tro-kein dezho e welas an Israeliz en diabell arme ar faraon kaset war o lerc'h. Ar Bibl a gont ar pezh a lavaras neuze pobl Israel: *Hag e savas mibien Israel o daoulagad, hag e oa an Egiptianed o tont war o lerc'h ! Hag aon dezho meurbet e krias mibien Israel war-zu an Aotrou Doue. Hag e lavarjont da Voizez: "Ne oa ket beziou en Egipt, perak ac'h eus kaset ac'hanomp da vervel er gouelec'h? Perak ac'h eus tapet ac'hanomp er-maez eus Bro-Egipt? Ha n'eo ket se ar pezh a gontemp dit en Egipt pa lavaremp: Paouez ganeomp, hag e servijimp an Egiptianed, rak gwelloc'h eo ganeomp servijañ an Egiptianed eget mervel er gouelec'h?"* (Ermaeziadeg 14:10-12)

Dibabet o deus an Israeliz an disterañ droug a zaou : ar sklaverezh pe ar beuzadeg, setu o deus dibabet ar sklaverezh. Koulskoude, ret eo eveshaat pizh ouz ar pezh o deus graet da gentañ: araok plegañ d'an dibab-se, ar bobl "a grias war-zu an Aotrou Doue". O c'homzoù kentañ e oa ar re wellañ. Ne voent ket habask a-walc'h evit gortoz respont Doue, hag an dispi a lakaas anezho da lavarout diataoù da Voizez. Hogen, evel kustum, Doue a glevas kriadennoù ar re a c'haly anezhañ. Ha dont a reas respont Doue dre Voizez, an hini a anavezze an Aotrou gwelloc'h eget den all ebet. Moizez a respontas d'ar bobl: *"N'ho pet ket aon ! Chomit aze hag e welot ar silvidigezh roet deoc'h hiziv gant an Aotrou Doue ; gwelout a rit an Egiptianed hiziv, ha n'advelot ket anezho ken ! Biken ! An Aotrou a vrezelo evidoc'h, ha bezit-c'hwistoul !" (Ermaeziadeg 14:13-14)*

Anavezout a rit dilerec'h an istor. An Israeliz a sentas ouzh Moizez. Daouhanteret ha disrannet e voe ar mor e doare ma teuas un hent sec'h war wel dirak mibien Israel. Treuzet o doa evel-se ar mor

Ruz war ar sec'h, ha, pa fellas da lu ar faraon mont war-lerc'h an Israeliz, e tistroas hag e serras war ar soudarded.

Pouezus meurbet eo evit ar gristenien teurel evezh ouzh an darvoudenn-mañ: ha pa ne wele ket an dud petra ober e wele Doue penaos diskoulmañ an traoù, ha den ne c'helle ijinañ an diskoulm ijinet gant Doue. Ouzhpenn-se e welomp en deus Doue oberiet en un doare dispar ha peurglok evit e bobl. Ha petra e oa ret d'ar bobl ober ? Adlennomp komzoù Moizez: *"N'ho pet ket aon, Chomit aze, Gwelit silvidigezh Doue, Bezit sioul"*, da lavarout eo, lakait ho fiziañs ennañ, tra ken. Mar he dije ar bobl diskouezet un emlusk bennak, e vije bet un harz ouzh oberenn Doue. Da skouer, mar n'o dije ket an Israeliz selaout ouzh Moizez, e vijent aet etrezek lu ar faraon evit en em zaskoñ da brizonidi. Bez' e vefe neuze un disoc'h nemetañ evito: mont d'ar sklaverezh en-dro, evit an holl. Kompen a reomp perak en deus skrivet ar profed Izaia : *Er sioulder hag en diskuizh e vo ho silvidigezh, er peoc'h hag er fiziañs e vo ho nerzh.* (Izaia 30:15)

Deomp-ni ivez, mar gwelomp kudennoù o verniañ, mar deu da vezañ tenvaloc'h-tenvalañ an dremmwel, mar en em gavomp paket etre ar mor Ruz ha soudarded ar faraon, ha mar n'eus disentez ebet, arabat deomp disoñjal e chom atav ur rouedenn da vont ganti : krial war-zu Doue hag e lezel da labourat ennomp.

Lukaz Bernikod

(diver ar bajenn 2) oc'h en em erbediñ ouzh ar Werc'hez Vari. An emgav a zo da 16 eur rik er chapel a zo, hervez an hengoun al lec'h m'en em gavas Sant Houarnvian ha santez Riwanon, tad ha mamm sant Herve. Na kaer ar lec'h evit emgavioù Emglev An Tiegezhioù ! Ho pezet soñj eta ar bloaz a zeu ! Da c'hortoz pardon ar Folgoad hon eus un emgav all dizale e Rostren d'an 10 a viz Kerzu : da 14 eur vo Emvod meur E.A.T. e lec'h e vo graet ar poent war stad "Imbourc'h" ha "Kamp Katekiz Rostren", a zo hon div obererezh pennañ.

Ur gudenn a sav avat evit kas an erv pelloc'h : lennit pennadig Yann Talbot amañ da heul !

T. Gwilhmod

RE NEBUT A VICHEROURIEN...

Kevredet eo bremañ hon holl obererezhioù kristen dindan an anv « Emglev an Tiegezhioù » : (leuz pajenn 8)

Kenskrivit !

Kelaouenn Emglev an Tiegezhioù, kevredet e Kuzul ar Brezhoneg, eo Imbourc'h. Talvezout a ra « Imbourc'h » kement ha « klask ». Klask ar wirionez a-gevret, gant ur spered a vignoniczh, doujus d'ar feiz kristen, hag e brezhoneg, setu aze hor pal.

250 lur (39 C, 39 \$) eo ar skodenn vloaz ordinal, a ro ar gwir da resev ar c'hannadig hag ar stagadennoù. Sevel ar ra da 100 lur evit ar re a garfe resev ar c'hannadig nemetken.

Ar skridoù, kemennoù, lizhiri ha skodennoù a zo holl da gas da :

Imbourc'h, Kergreven, 29800 Trelevenez
Pgz : 02 98 25 10 72 eat@libertysurf.fr
http://perso.libertysurf.fr/kannadig
Moulerrezh prevez, Merour : T. Gwilhmod
ISSN : 1144 357X CPPAP : 50015. Ar pennadoù ne enouestont nemet o aozerien. Diskleriet hervez lezenn.

(diwar ar bajenn 7)

ar gelaouenn *Imbourc'h*, boda-
degoù miziek *Kristenien Vreizh*, Kamp
Katekiz *Breuziezh Sant Erwan*. Moarvat e
vefe mat reiñ muioc'h a lañs d'hon obere-
rezhioù hogen evit se e ve ret kavout da
gentañ **Kristenien**, pezh a zo rouez a-
walc'h er bed danvezelour a vremañ, d'an
eil **brezhonegerien** (ken rouez all pe
dost...), d'an trede **en oad da vont ha da
zont**, d'ar pevare **dieub a-walc'h** evit
ober labour, ha d'ar pempvet **troet o
c'halon gant Breizh hag he vezh**. Mar
kavit istrogetlled a seurt-se, ho pet ar vade-
lezh da gas din o anvioù, ma n'int ket
c'hoazh en ur sirk evel Yeti an Himalaya !
Da c'hortoz ho pedan da zont d'an Em-
vod meur d'an 10 a viz Kerzu ! Y. Talbot
EMVOD MEUR E.A.T. : 14 eur e pres-
bital Rostren. Oferenn da 15 e 30. (ur
banne a vo kinniget war-lerc'h an oferenn
er presbital)

galleg da gemer e greñv e Diwan e vo koulz divodañ an aozadur rak diwar neuze en devo kollet e awen hag e reiz-habeg. Da lavarout eo, c'hoarvezout a raio gant Diwan ar pezh a zo c'hoarvezet gant ar skolioù kristen e deroù ar bloavezhioù '60 p'int deuet da vezañ, war-bouez nebeut, skolioù laik prevez, hep doare arbennik ebet.

Kompren a ran e vo start ar c'hrogad a zo o c'hortoz ar vrogarourion vrezhon o deus da enbourion n'eo ket hepken ar Stad C'hall hag hec'h amaezidi eus an Deskadurezh Vroadel hec'h-unan, hogen ivez rannvroelourion a bep seurt o deus asantet a-viskoazh da ober eus ar brezhoneg ur seurt latin ha na ve miret nemet d'un nebeut istrogetlled a selfe ouzh ar galleg evel ouzh o yezh vroadel nemeti. Rak an dalc'h a zo aze : daoust hag ar brezhoneg a zo hor yezh vroadel, hag hor yezh vroadel nemeti, pe hepken ur seurt trefoedaj, aet da get, forzh penaos, evel ar gallaoueg e-unan ? Daoust hag ar brezhoneg a zo hon araez pennañ da adsevel ur bobl nevez a vrezhoneg mennet da zisteurel da vat istor ar vroad vourc'hiz c'hall a zo bet sammet war-no, pe ez eo an emsaverion rannvroiz c'hall hep dezho ster piaoel ebet biskoazh, en ur ger gallaoued, a-vec'h un toullad oristaled a chom itik d'an traoù kozh, koefoù, dañsoù ha ... trefoedajoù, a reont anezho gallaoueg ha brezhoneg ?

Emañ ar gudenn aze, hag aze hepken. Hogen evel ma tammverken uheloc'hik, bez o deus ar vroadelourion en hor bro da ziwall da gentañ ouzh al led-emsaverion a seurt gant re an UDB - a zispleg deomp bremañ n'emaint ket en Emsav - pe izili strolladoù gall a bep seurt, PCF ha PSF, a ra van da vezañ a-du gant ar yezh evit mougañ anezhi surc'h, anezho azeulerion ar Stad C'hall, ma n'eus ket, en o soñj, er-maez anezhi, silvidigezh ebet; tud a ra, e gwirionez, eus ar stad-se un liz ha dezhi un istor santel. An idolenourion c'hall o deus klasket a-viskoazh distrujañ Breizh hag hec'h Emsav.

Youenn Olier

DIZUNVANDED N'EO KET DIZUNANDED

« Asantiñ d'al liescortiezh ne zegas ket disranniezh ; he nac'hañ eo a zegas disranniezh ». (Kardinal Gouyon, bet arc'heskob Roazhon (1964-1985), sebeliet e Sant-Pern d'an 30 a viz Gwengolo.

KANV : An Dimezell Gwenn de Parceveaux a zo aet d'anaoñ d'an 13 a viz Gwengolo. E bered Lokornan-Leon eo bet beziet ar vrogarourer ha skoazellouez feal da « Imbourc'h ». Doue d'he fardono !

KANNADIG IMBOURC'H

Niverenn 11

Genver 2001

11 A VIZ DU...

Evel pep blez e vez lidet e Gwened hag e lec'hioù all, d'an 11 a viz Du, fin ar Brezel Bed kentañ. Bokedet e vez monumant ar re varv, ar re bet falc'het en o yaouankiz, gant strolladoù emgannerion gozh, dilennidi, bugale ar skolioù (O man Doue, kalz ne vern da relijion, soudard, kae da zifenn da Vamm-vro, a lare ar Republik) ha soudarded Bro-C'hall fichet en o bravañ, binvioù sonerezh kouevr lufret mat ganto ! Lufret mat saxo ha trombon. Hag abaoe un nebeut blezioù e c'heller gwelout ganto biniou ha bombard. E Lann-Bihoue, pell zo dija !

Met e Gwened ivez e porzh ur rejimant modern-tre e c'heller gwelout ar Gwenn ha Du e beg ur wern ha klevout ar biniou bras Hag her c'hlevout evit lidañ ar re varv, hini, 11 a viz Du ! 11 a viz Du, ar biniou bras gant soudarded Bro-C'hall...! Te a glev tad-kozh ! Laeret eo bet benveg hor bagadoù ha seniñ a reont evit enoriñ ar re varv, o re... hor re... Laeret hor yezh ganto ivez, se o deus graet, evit ober ganti... se ne reont ket.

Renaut LORCY

NEDELEG LAOUEN D'AN HOLL HA ... MILVED MAT EVIT BREIZH !

Gwall vuan eo tremenet ar bloaz-mañ, gant e aridennad darvoudoù er bed, e Breizh, en Emsav ... hag en hor buhezioù personel. Atav ken bras ar bern labour a chom dirazomp a-benn gounid evit ar Vro ar frankiz a c'houlennomp eviti.

Ur sell a-dreñv a ziskouez dimp memestra emaoamp o vont war-raok ha diazevadur « TV Breizh » a zo un dra heverk er c'heñver-se, daoust ma chom atav ken bresk emsav ar brezhoneg a-hend all ha ken galloudek hon enebourion : istor divadevadur Skolaj Roparz Hemon ar Releg ha kudennoù diabarzh Diwan a zo arouezius a-walc'h.

Istor Kever ivez, un istor n'eo ket dirouestlet tamm ebet. Ar varmerion a zalc'h bepred un dek bennak a stourmerion vrezhon en toull hep barnedigezh ha pell eus o ziegezh, ken ez eo ur vezh, met den ebet ne fiñv, war a seblant, 'kosteze Pariz, Amnesty International ne ra ket meneg eus an dra-se zoken en e vloazlevr.

Emglev an Tiegezhioù a venn bodañ en e greiz ar stourmerion vrezhon a zo mennet da ren o buhez keñredel ha speredel e brezhoneg : displegan kement o deus c'hoant ha ren o stourm e brezhoneg. Implij hor yezh e deroù ar milveder-mañ a zo un dra dispac'hel, un akt a feiz e dazont ar Vro-mañ, ur skouer a roomp d'ar vretioned all ivez.

EAT n'eo ket un ti kenwerzh : un aozadur-stourm ne lavaromp ket. Unan eus hon tachennoù-stourm pennañ eo en em sikour da vrezhonekaat hor buhezioù : er par tiegezhel (Kamp Katekiz, Oferennnoù), a-benn krouiñ darempredoù padus hag a vignoniczh etre hon tiegezhioù, e paf an Emsav e-unan o kemer perzh er stourmoù (Diwan), hag o kas ur preder en-dro ivez, unan dimp hon-unan e brezhoneg. Abalamour da se e kavomp a-bouez ma vefe kenskrivet muioc'h gant lennerion ar C'hannadig.

Ra gasot dimp eta, a-gevret gant ...hoc'h'ho hetoù hag ho skodenn vloaz, ur pennad bennak da vouetañ HO kannadig, kannadig hon emglev.

T. Gwilhmod

EMVOD-MEUR**« EMGLEV AN TIEGEZHIOÙ »**

Ar sul dek a viz Kerzu a oa bet merket, e niverenn diwezhañ « Kannadig Imbourc'h » evit Emvod Bloaz ordinal « Emglev an Tiegezhioù ».

E Presbital Rostren an hini eo e vo taolet ur sell eta war obererezh EAT, ha daou boent dreist-holl : doare embannadurioù « Imbourc'h » hag ar C'hamp Katekiz.

IMBOURC'H

N'eo ket bet kollet re a goumananterion gant « Imbourc'h » doare nevez, da lavarout eo ur c'hannadig muziek (10 niverenn) hag embannadurioù trimiziek war anv « Imbourc'h kelaouenn a studi ». Koumanterion « a-gozh » n'eus ket fellet dezho adkoumanantiñ hag a-drugarez Doue, re all, yaouankoc'h peurvuiñ, o deus kaset o skodenn. Re izel e chom avat niver izili EAT : klask tud all da lenn ar « C'hannadig » hag an embannadurioù a zo ret-mat ober dalc'hmat, ha kement-mañ a zo ur preder a-bouez. Dibabet e oa bet kas ar c'hannadig d'un niver isañ a dud e-ser ober bruderezh hogen peurvuiñ ne gas ket an dud o skodenn evit kelouese.

Goullou-mik eo ar c'hef. Dleoù bras a-walc'h a zo zoken peogwir ez eus bet prenet mekanikoù moulañ evit 92 000 lur. Diouzh un tu all e kroger da brenañ niverennoù kozh hag oberennoù a ziforc'h bet moulet gant Imbourc'h e-pad an tregont bloaz diwezhañ. Daoust da se ez eus ur c'holl a 16728 lur.

Yaouankaet eo bet un tamm ar skipailh skridaozañ (a chom re skort, ret eo lavarout) ha re izel e chom niver an dud o deus kaset o skodenn. E gwirionez e vefe ret kaout muioc'h a amzer da ouestiañ d'ar bruderezh : mont e darempred gant ar stalioù, gant Skol Uhel ar Vro, gant Coop Breizh, ha skrivañ d'an dud en un doare hinennel.

Evit 2001 eo bet divizet gwerzhañ geriadur Jil Ewan : ne vo ket kaset d'an holl izili. « Imbourc'h, kelaouenn a studi a embanno peder levrenn ar bloaz-mañ : Henlennegezh kristen Klerg (Azvent), ar C'horaziz (troet gant Job Lec'hvien) ha un niverenn a bennadoù liesseurt a 150 pajennad. N'eo ket bet divizet c'hoazh evit ar pevare levrenn : marteze dastumadenn Langleiz « Ar Seizh Avel », a zo prest da voulañ ivez.

Oberennoù all a zo war ar stern hag a rank bezañ moulet ivez dizale (er-maez skodenn) : « Poanioù Spred an Tad Gwazdoue » ha deizlevrioù Youenn Olier evit 1962 ha 1963.

OFERENNOÙ BREZHONEK

7/1 Chapel a-dreñv iliz veur Kemper, 8 e 30

7/1 Sant Mazhev Gwidel 10 e 30

21/1 Kistinid da 11 eur 15 Emvod B.S.I.

Bep Sadorn da 20 e 30 e Trelevenez

Bemdez e Ti ar veleion gozh Keraodren, 7eur

N'eus ket ken a oferennoù brezhonek e Treogad.

Den ne vo souezhet eta ma pedomp start hol lennerion ha skoazellerion da gas dimp dillo o skodenn !

AR C'HAMP KATEKIZ

Ur renta-kont evit ar bloaz-mañ a oa bet embannet endeo er C'hannadig. Kudenn al lojeiz, un tamm mat re vrav evit bugale o vakañsiñ, hon oa bet ar bloaz-mañ e skolaj Itron Varia Rostren. Ober bruderezh abretoc'h a vo ret ober evit ar c'hamp a zeu. Ha war-un-dro tutañ animatourion d'ober war-dro. Kudenn ar galleg e-pad ar c'hamp a zo bet komzet diwar he fenn ivez : war a seblant n'eo ket kresket niver an tiegezhioù ma vez ar brezhoneg yezh ar gêr daoust da gresk niver ar vugale skoliataet e brezhoneg.

Bezef pe vezef, n'eo ket al labour a vank eta evit aesaat d'an tiegezhioù ober gant ar brezhoneg !

T. Gwilhmod

TIEGEZHIOÙ

Gant Poellgor gall Deskadurezh ar Yec'hed eo bet studiet doareoù-bevañ 4175 krennard adod etre 12 ha 19 vloaz, bet dibabet e pep metoù ar gevredigezh. Lakaet eo bet anat gant an enklask-se ez eo ar vugale desavet hep tad, pe a-wechoù hep mamm, a vez en arvar da vezañ tev pe da nac'hañ debriñ, pe da orgediñ, da lonkañ alkol, da vezeziñ butun ha drammoù, da vezañ feuls, pe d'en em lazhañ.

EMDROADUR YEZHEL E FRAÑS :

Er bloaz 1789 ne gonted nemet 30 million a dud e Frañs ha 3 million hepken o komz galleg, hag ur million gouest da lenn. (O.F. 15 11 99)

Er bloaz 1900 e oa c'hoazh 85 % eus ar Frañsien na gomzent ket galleg. Ar brezel bras an hini eo, o veskañ ar wazed, a redio an dud da gomz « yezh ar Republik ».

Er bloaz 2000 e varv ar c'hantved, hag ar galleg gantañ. (O.F. 16 11 99)

NOTENNOÙ POLITIKEL**gant Youenn Olier****AR BOBLELEZH****Chemenn ar bobl vrezhon**

Dont a ran ar miz-mañ d'ur c'hraf a soñjan ez eo pouezus e verat, hag am eus meret mui pe vuie e-barzh 'Imbourc'h kelaouenn a studi', kraf ar bobl dre vras. Petra a c'heller intent dre chemenn ar bobl vrezhon ? Pellzo en doa Maodez Glanndour meret ar gudenn-se en e bennad « Dremm ar spe-redegezh vrezhon ». Gawain ivez – cleze Roparz Hemon – er rumm pennadoù embannet gantañ e derou ar brezel diwezhañ. E galleg eo bet meret an dodenn n'eus ket pellzo gant Ronan Koadig en un oberenn ha n'am eus ket lennet nemet a bled ivez gant hennadelezh ar bobl vrezhon.

Roparz Hemon

Arnodoù all a zo bet da dermeniñ an hennadelezh-se diwar an emsav e-unan, gant meizourion ESB, hogen a-ziaroak gant Roparz Hemon e-unan p'en doa bet da gemplegañ ouzh ur patrom henvoazel bennak eus ar vrezhonelezh : dre ma oa ur Brezhon e-unan e oa brezhon kement a skrive. Da lavarout eo, n'eo ket mui luniet ar « boblelezh » a-ziv ar dragouzelezh, gant ur werin eorizhel, hogen gant kement hini a gemer perzh er stourm a-benn sevel pe adsevel ur bobl. Evelt just e c'heller burutellañ ar menozioù-se.

Maodez Glanndour

Marteze, moarvat, e oa ar wirionez gant Maodez Glanndour pa glasker er werin patrom ar vrezhonelezh. Bez e oa c'hoazh ur werin er prantad-hont ha gwir eo e oa patrom ar vrezhonelezh da glask en he speredegzh. Hogen daoust ha dremm speredel ar bobl vrezhon treset gantañ a hanveze drez hec'h-unan ? E gwirionez oa doareet an speredegzh-se diouzh patrom an Aviel kelennet aviskoañ gant an Iliz d'ar bobl vrezhon, evit darn da vihanañ. Rak anzav a rae Maodez Glanndour e oa perzhioù fall da skarzhañ dre striv ar bobl hec'h-unan, kelennet gant an emsav. Neuze en doa hemañ ur roll a-bouez e stuziadur ar bobl hag an doareoù anezhi, nemet pezh a ranker meizañ neuze eo ne hanvez ket ar bobl drezi hec'h-unan, hogen dre an Iliz pe ar Stad a vez ouzh he fram-mañ.

ESB

Menez Roparz Hemon a zo hanter hent etre hini Maodez Glanndour ha dreist-holl hini Ronan Koadig, Iakaomp, a gred e 'naturelezh' ar bobl vrezhon, hag hini ESB (Emsav Stadel Breizh), a ziazez ar bobl vrezhon war un 'emsv stad'. Kredañ a ra emañ ar vrezhonelezh gant kement Breizhad a stourm evit Breizh, ha n'eo ket e tud ar werin e-giz m'emaint hepken. Ha diouzh un tu all e vo doareet ar bobl vrezhon nevez gant an emsaverion e-unan, evel emsaverion, diouzh ma tivizint piaouañ war o c'hont lennegezh ha se-venadur ar broioù keltiek tramor, ha peurgent al lennegezhioù keltiek kozh, hini Iwerzhon, da skouer. Krouet e vo ivez ar boblelezh vrezhon dre zisteurel patromoù stuzegezhel ar c'hallaoued evel m'en em ziskouez en o lennegezh c'hallek vroadel a-hed ar c'hantvedoù, bet kefridiataet dre an amaezhierzh gall end-eeun, hini an Deskadurezh Vroadel, peurgent... ha kemer patromoù nevez evel m'en em ziskouezont e lennegezhioù pobloù a bep seurt.

Groñsoc'h eo meizadur ar boblelezh gant soñjerion ESB eta. War veno ar re-se, evel gant ar c'hallaoued, e oa houmañ unan gant ar stadelezh. Eleze : egin ar boblelezh nevez, ar boblelezh vrezhon nevez, a oa gant an emsav ; dre en em ziorren ha war-bouez krouiñ frammoù stad, a stigne o roued a nebeudoù war ar boblañs a-bezh, e kroue an emsav enta ur bobl nevez, a oa stuziet diwar ar c'hevala istorek, lennegel hag arzel anezhañ.

Ret eo lavarout ez eo empennet an damkaniezh-mañ e dibenn ar bloavezhioù 1940, d'ur mare ma oa deuet anat ne oa chañs ebet d'ar brezhoneg ha d'ar stuzegezh poblek plouezat henvoazel da zrestpadout e Breizh.

Ur seurt damkaniezh a oa bet ijinet evit termeniñ an darempred a zlee bezañ etre an aotrouniezh speredel, ar skrivagner pe an arzour, hag ar fram politikel brezhon, an danvez stad vrezhon, an eil, hemañ 'ta, endalc'het da glask e awen e oberennoù an aotrouniezh speredel, hag houmañ, ar c'hefredour pe ar gefredourez, endalc'het da vezañ leal a bep hent ouzh ar veliczh politikel, evel ma oa Gorki ouzh Stalin.

Dres, ar patrom-se a oa ivez an hini e talvoud er strolladoù komunour, ha peurgent er PCF, ha n'eus ket da souezhiñ ma vije bet darbennet ivez gant UDB. Klask a rae ar strollad-mañ enta en em

harpañ war skrivagnerion a vije bet emezelet ennañ. N'eus ket bet kalz morse, nemet ur barzh, « Ar Meur », ma 'm eus soñj mat eus e anv, a oa brudet dreist-holl er bloavezhioù 70, a gav din.

An diforc'h etre ESB hag UDB

Div evezhiadenn evit klokaat ar rannbennadmañ. An UDB ne rae ket nemeur dave da istor Breizh, diouzh ma oa anezhañ un istor gladdalc'hel dreist-holl. Hep disteurel groñs hag a-grenn labour hag oberennoù Skol Walarn hag Al Liamm, da lavarout eo al lennegezh vrezhonek peurunvan, ne zesamme ket anezho evel he c'hevala istorek, ar pezh a rae ESB er c'hontrol.

Breizh a oa doareet eviti hepken gant he sujedi-gezh armerzhel d'ar galloud kreiz gall, dre hec'h isdioreadur hag he zrevadennadur. Hep mont pelloc'h, ar pezh a oa berr, evlken !

Ar PCF hag ar 'Boblelezh'vrezhon

Evit ar PCF, e-giz ma ouzer, e tinac'h e ve tu da empennañ ur boblelezh vrezhon dre ma n'o deus ket ar vrezhonek kemeret perzh en istor arnevez evel Brezhoned, evel Galloued, pezh a zo gwir, hag a lavaromp bepred en-dro eo o deus kemeret perzh ennañ. Ar gudenn avat eo gouzout ha mat eo an istor arnevez-se, pezh a nac'himp dres (ha forzh penaos, hiniennoù ha strolloù a vir atav o reziid klok dirak an dirvoud : Roparz Hemon en deus diskleriet ar menoz-se ivez.).

Poblelezh ha roueelouriezh reizhwirielour

Eveljust ez eus meizadurioù all eus ar boblelezh. Ur ger a c'hellfen rannañ diwar-benn an hini a zo e diazez ar roueelouriezh reizhwirielour, a zo lec'hiet ganti ar reizhveliezh e nouez ur roue dileuriet ganti an Iliz m'emañ en he dalc'h mamenn pep aotrouniezh. Ar bobl, neuze, ne c'hell ket bezañ diforc'hel diouzh an hini a embreg ar veliezh a-berzh Doue, er pleustr a-berzh an Iliz. Difennet eo ar menozioù-se e Breizh da skouer gant ar « Fédération Bretonne Légitimiste », a embann ur gelaouenn daouvi-ziek e galleg a zo he zalbenn « La Blanche Hermine », a zo enebet-krenn a-hend-all ouzh Le Pen hag e strollad ma tiskreder warno bezañ demokrat. E devoud en deus graet rener an FN diskleriadurioù o reiñ da soñjal emañ lec'hiet ar veliezh a c'hellfe tizhout e penn ar Stad C'hall er bobl c'hall... O vouezhiañ evit e zilenn, hag a-du ivez gant al laikelezh, hep dere'hel kont eus diskleriadennoù

all tuet da baganouriezh ur stroll evel ar GRECE hon eus meneget dija en niverenn diwezhañ.

N'hon eus c'hoant ebet da vurutellañ menozioù ar gronnad-se, enket en ur metoù 'zo e Breizh. Er pleustr e kaver tezennoù o harpañ keal an digreizennerezh, ar rannvroelouriezh, ar yezh zoken, diazezet war bennañ ar gouezadoù, nemet o tinac'h ar gevreadelezh e Bro-C'hall dre ma ne glot ket gant istor ar galloud gall (pezh a zo gwir, forzh penaos), hep evezhiañ eo istor ar galloud-se, koulz hag hini emzispieg ar sevenadur krouet dindan e aked, estren a-grenn ouzh lazou ar feiz kristen hag an Iliz, un istor a zo darbennet ganto evel m'emañ, pa gav e wrizienn zoken e pennvon an demokratelezh evel maz eo c'hoarvezet paz eo bet staget 'rannvroioù' zo ouzh Bro C'hall diwarbouez ur boblvoueziadeg, evel e degouezh Savoia da skouer.

Gerioù nebeut anavezet : hennadelezh : identité ; kemplegañ : se conformer (da/à) ; henvoazel : traditionnel ; luniañ : construire, formuler ; tragouzelezh : peurbadel ; eorizhel : idéal ; hanvout : exister ; damkaniezh : théorie ; rezid : liberté ; dirvoud : réel 'inévitable' ; nouez : personne, gouezadoù : subsidiarité.

LEVRIOÙ

« Lavar 13 » a zo nevez deuet er-maez gant Preder. Un drederenn a zo gouestlet da brientadur « Geriadar ar Mediaoù », nevez deuet er-maez, hag ar peurrest da imboure'hiou liessurt-tre, evel boas, ha deroñ ur rummad a notennoù gramadeg.

« Marcheurs du Tro Breiz 1994 - 2000 », un teskad luc'hskeudennoù gant Noel Le Quement, 82 p., 35 str. O. Klison 29260 Lesneven, 180 lur. Daoust m'emañ talbenn al levr e galleg e kaver dindan pep luc'hskeudenn ur ger bennak e brezhoneg. Mat he deus graet an droourez chom pell-mat diouzh ar galleg a-wechoù ha reiñ deomp dre se div wech muioc'h a blijadur o sellout ouzh al luc'hskeudennoù : gant ul levr a seurt-se e veizer mat talvoudusted ar brezhoneg ha na « servij da netra », sañset, « peogwir e oar an holl galleg ». Evel daou vanne sklerijenn disheñvel war an hevelep tra eo bet evidon eta lenn an addisplegoù berr a gaver e galleg hag e brezhoneg dindan an holl luc'hskeudennoù a gaver el levr kaer-se, a roio c'hoant da veur a hini, 'm eus aon ober ur pennad-hent war hentoù an Dro Vreizh. Nadine Gwiltmod

AIME LE BRETON

Martez n'ho'eus ket anavezet ar breizhad taer, ar brezhoneger mat, difenner Breizh hag ar vretennoù a oa anezhañ. Ur broadelour e oa en e stumm. En toullbac'h e oa bet un nebeut mizioù e Pariz (ar « Santé »!), er bloavezhioù 70-73, gant aferioù an FLB kentañ. Goude-se en doa difennet ar brizonidi bolitikel ha kemeret perzh e meur a strollad, Skoazel Vreizh ha strolladoù all. Er bloavezhioù 80-90 e voe ivez oberiant e-touez hor strolladig « Beleien e Breizh ». Kinnig a ran an testennoù-mañ da heul, bet distaget ganin da geñver e obidoù, evit ma chomo an eñvor anezhañ.

Ma breudeur ha ma c'hoarezed kristen,

Kanañ a reomp alies evit an obidoù "Salud deoc'h iliz ma farrouz".

A-dra sur ne oa ket hor breur beleg Aimé Le Breton eus Ar Sklaerder nag eus Perroz. Genidik e oa eus Prad. Met evit ur c'hristen pep parrez war an douar-mañ a c'hell bezañ e barrez rak er gêr en em gavomp e pep lec'h. Bep tro ma vez bodet daou pe dri en anv Jezuz en em gav ar Salver en o zouez, hag ar c'hristen a gav e familh e pep kumuniezh. Seul vuioe'h ma n'eus ket evidomp ur plas da viken war an douar-mañ, N'eo nemet ur plas da c'hortoz., N'omp ket amañ war an douar evit chom da viken. N'omp nemet beajourien o tremen, pirc'hirined oc'h ober un tamm hent diouzh hon gwellañ, o klask ober eus hon buhez douarel ur servij evit Doue hag an nesañ.

Hag ur beleg a oar muioc'h c'hoazh evit n'eus forzh piv n'hon eus ket da vezañ re stag ouzh an douar. Rak un deiz e vo ret dimp distagañ ha lavarout kenavo da gement tra, da gement hini, hor bo karet.

Ar vuhez zo un dra brizius, ur prof kaer digant Doue. Hon dever eo he diwall, he difenn betek an termen.

Met n'eus forzh penaos n'omp amañ nemet evit tremen. "Tremen ra pep tra : nerzh, madoù, yec'hed, yaouankiz ha kened" eme ar c'hantik anavezet.

Ha krediñ a reomp emamp gortozet en tu all da voger ar marv gant an Aotrou Doue e-unan, gant ar Werc'hez Vari hag an holl sent.

Gouzañv a reomp pa gollomp ur mignon hon eus karet. (Aimé Le Breton) a oa ur mignon dimp. Neuze

hon eus poan ha glac'har. Met n'omp ket diskaeret gant se. Rak esperañs hon eus e vo un Adsav evit pep hini ac'hanomp. Ar marv n'ao ket an trec'h gantañ. Evel beleg Jezuz Krist en deus bevet Aimé Le Breton, karet en deus Doue, e vro, e yezh hag e bobl. Ra gavo eta an digoll, prometet da servijer mat an Aviel.

HOMELIENN

Mignonned vat,

Emaon o paouez lenn an Evurustedoù. Reolenn diazez ar vuhez kristen eo. Met piv zo barrek da ren e vuhez hervez ar reolenn-se ? Den ebet n'en deus gallet hen ober nemet Jezuz Krist e-unan, Mab Doue. Ar Werc'hez Vari ivez sur-mat. An holl sent a zo bremañ er Baradoz zo chomet an tostañ ouzh ar reolenn-se, daoust ma oant ivez pee'herien.

Hon breur beleg Aimé Le Breton ne oa ket moarvat ur sant. Ur pee'her e oa evel pep hini ac'hanomp. Met galvet e oa da vezañ santel evel maz omp galvet holl gant Doue. Evel kristen ha beleg en deus klasket lakaat da ren an Evurustedoù a-hed e vuhez. Ha spi hon eus eta e vo roet dezhañ gant Doue an digoll prometet d'ar servijer mat ha feal.

Sur on en deus bet prederiet Aimé Le Breton war bep hini eus an eizh Evurusted a gaver en Aviel Sant Mazhev. Ha da gentañ marteze war hini ar baourentez : "Evurus ar re o deus ur spred a baourentez rak d'ar re-se eo Rouantelezh an Neñvoù", rak ar ster-se en doa bet c'hoant da gentañ da reiñ d'e vuhez pa oa aet e-barzh breuriezh an Tadoù kabusin war-lerc'h e studioù er skolañ. Soñjet en doa moarvat ren ar vuhez-se a baourentez hag a izelegezh evit bezañ an tostañ ar gwellañ ouzh pezh en deus graet Jezuz e-unan. Ganet e Prad e 1913 e voe urzhiet evel beleg e diabarzh urzh an Tadoù kabusin gant an Aotrou'n Eskob Villepelet e Naoned e 1940. Alese moarvat e teue e zonezon evit prezeg en Iliz hag ober prezegennoù, rak gouzout a ouzo-c'h e vez stummet ar Gapusined evit komz d'an dud ha deskiñ dezhe o relijion.

Met ur c'halvidigezh all a oa ouzh e c'hortoz : dont en-dro da vezañ beleg an eskopti. Goude ar brezel diwezhañ, e 1945, e voe anvet de evezh-hier ha skolaer e skolañ Kampostal e Rostren, ha

daou goude, e 1947, kure e parrez Groñwel. Un tregeriad ouzhpenn kaset da Gernev. Digarez en devoe eta da zizoleñ ivez teñzorioù danvezel, sevenadurel ha speredel ar c'horn-bro-se ha da ober kalz a vad da ene, korf ha spered an dud a bep seurt, met dreist-holl d'ar re yaouank, rak troet-kaer eo bet dalc'hamat d'ober traoù a dalvoudegezh evit ar yaouankizoù. Ha sur-mat aze, e bro-Gernev evel skolaer ha kure goude en deus gallet lakaat da dalvezout an evurusted-mañ : "Evurus ar re a ouel rak int a vo frealzet. Evurus ar re a zo dous rak int-i o devo da lod an douar prometet." Hag-eñ n'eo ket labour ur beleg, e-touez kargoù all, reiñ konfort, nerzh, d'ar re a zo diskaret, klask kompren diaesterioù an dud ? N'eo ket evel-just o barn hag o c'has er-maez.

Goude-se pa voe anvet da berson en doe tro da seveniñ ivez an Evurustedoù all : anvet da gentañ, e 1951, da berson e Tremargad, ur barrez vihan a 200 a dud, e-kichen Kergrist-Moelou, e voe anvet da c'houde da berson e Plougras e 1956. Eno eo em eus anavezet anezhañ evit ar wech kentañ tro-dro d'ar bloavezhioù tri-ugent. Hag abaoe omp chomet mignonned vat, feal an eil d'egile.

Pa vezer person e tleer bezañ ur pastor mat, da lavarout eo soursial ouzh pep hini, degemer pep hini, mont da welet pep hini, mont da welet ar re a zo pell diouzh feiz an Iliz, mont da glask an dañvad kollet, dianket. Setu pezh a reas Aimé gant aked. Strivañ a reas evit bezañ trugarezus e-keñver pep hini. Kalz a istim en devoa evit tud eeun ar bobl, evit o yezh hag o sevenadur. Ne oa ket dallet gant galloud ha pinvidigezh ar bed danvezelour.

Ne oa ket trubuilhet e ene gant klask enorioù pe plasoù uhel. Glan hag eeun e oa a galon. Ha setu perak n'en deus kemeret e karg nemet parrezioù bihan. E 1968 e kemeras eta karg an div barrez vihan etre Bro-Dreger ha bro-Oueloù : Gouanae'h ha Trevereg. 27 vloaz e chomas eno. N'eo ket ret lavarout e anavezaz mat-tre e holl barrezianiz war-bouez nebeut. Tro en deus bet e-kerz ar c'hard kantved-se da lidañ levezonioù ha glac'haroù ar familhoù, da gelenn o feiz d'an dud vras ha d'ar vugale, da rentañ servij da gement hini a c'halle sikour, ha da reiñ un testenñ bev eus an nerzhioù a lakae anezhañ da vont war-raok : e Feiz e Jezuz Krist, Doue ha den, e esperañs en ur bed gwelloc'h ha reishoc'h, e Garantez o tont eus Gras dreistnaturel Doue.

N'eo ket hepken person e oa Aimé le Breton. Met ivez ur stourmer. N'asante ket d'an direizhder na d'an dispriz a gouezh war choug e genvroiz hag o laka da dreiñ kein ouzh o sevenadur ha da zina-c'h o gwirizioù. Un difenner eo bet eus gwirioù ar Vretoned da vevañ evel Bretoned en o bro, gant o yezh, gant o frankiz, gant an teñzorioù berniet a-hed an Istor, Hag evit ar stourm-se eo bet alies e-unan gwall-gaset ha heskinet. Neuze en deus komprenet c'hoazh gwelloc'h an div evurusted-mañ : "Evurus ar re o deus naon ha sec'hed eus ar Justis rak int-i e vo roet o gwalc'h dezhe. "Evurus ar re a lak ar peoc'h da ren rak int-i a welo Doue".

Un den a reizhder a oa anezhañ, un den a beoc'h ivez. Hag en ur vro, e Breizh evel e lec'h all, ne c'hell ket an eil mont hep egile, hep ma ve roet he gwirioù hag he frankiz d'ur vro ne c'hell bezañ peoc'h gwirion ebet.

Dont a reas evit Aimé mare ar retred, pemp bloaz 'zo. Kavout a reas amañ goudor, diskuizh, e skeud Itron Varia ar Sklaerder. Pemp bloavezh c'hoazh evit rentañ servij diouzh ma c'helle, rak e karg ur beleg emañ an dra-se : rentañ servij betek ar fin. A-hend-all ur vuhez beleg, evel buhez n'eus forzh piv, ne dalv ket kalz tra.

War betra e vimp barnet, pouezet, er bed all, ma n'eo ket war ar garantez wirion ?

Aze emañ hon esperañs, an hini he deus heñchet Aimé a-hed e vuhez. Ret dimp ober diouzh hon gwellañ er bed-mañ. Met arabat eo stagañ betek re. Rak an douar-mañ n'eo ket tout. Ur vuhez all a zo, war-lec'h ar marv. Da betra servijfe dimp gounit ur bern traoù ma ne vije netra en tu all ? Da betra berniañ madoù hag enorioù ? Ar pezh a gont eo berniañ karantez. Aze emañ ar gwir teñzor.

Ma klaskomp reiñ ar ster-se d'hon buhez, neuze, evel ma lavar Sant Paol "e vezimp da viken gant an Aotrou" hag evurus e vezimp e palez an Dreinded

Yann Talbot
Chapel Itron Varia Ar Sklaerder,
Perroz-Gireg, d'ar Merc'her 29 a viz Du 2000.

KANTVED DEIZ-HA-BLOAZ GANEDIGEZH ROPARZ HEMON

Pennad-kaoz gant Pierrette Kermaol da geñver ar pred en enor da Roparz Hemon, d'an 18 a viz Du 2000, er Mercure-Colombier e Roazhon.

Trugarekaat a ran an holl re a zo deuet an noz-mañ, daoust d'ar pellder a-wechoù, ha daoust d'an traoù bezañ bet aozet un tammig war ar prim. Tud all n'o deus ket gallet bezañ en hon touez evit abeg pe abeg. Per Denez ha Guy Etienne da skouer, re all c'hoazh, hogen gouzout a ran emaint a galon ganimp.

D'an 18 a viz Du 1900, kant vloaz zo hiziv, e voe ganet e Brest Louis Nemo, a zeuas da vezañ, un 23 bloaz bennak diwezhatoc'h Roparz Hemon, an anv pluen a zibabas evit sinañ e bennadoù kentañ e-barzh Breiz Atao, a-raok krouiñ Gwalarn e 1925. N'emañ ket o vont da gontañ deoc'h buhez Roparz Hemon, na da zanevellañ e oberenn, pa anavezit se kenkouz ha me - pe gwelloc'h a-wechoù zoken. Me fell din gouverkañ hepken un nebeud traoù ez on kizidik outo.

Kant vloaz zo kalz e-keñver buhez un den, nebeut a-walc'h e buhez ur bobl. Koulskoude, pa soñjan a Roparz Hemon, e kavan ez eo ar c'hontrol : ar skrivagner hag e oberenn a santan tost tre din. Evit Breizh padal, an tri c'hard kantved tremenet abaoe krouidigezh Gwalarn o deus degaset ur re-veulzi hep he far en istor hor bro. N'eus ket pell, e-veur labourat war al lennegezh rusian e lennen, diwar bluenn Gide a gav din, ar varmadenn-mañ azivout Pouchkin : en ur ober a-boan ur remziad, en deus ar barzh rusian roet d'e vro ul lennegezh par d'ar re uhelañ er bed, ha graet eus ar rusianeg ar benveg he doa al lennegezh-se ezhomm anezhañ, eleze, eme Gide bepred, en deus degaset e berr-amzer treuzfurmadoù a c'houlenn alies ur c'hantved bennak Roparz Hemon en deus troet Pouchkin : An Damez a bikez. Ar barrad ere'h, skridoù all c'hoazh. N'eo ket dre zegouezh : eñ ivez, e 19 vloaz, eus 1925 ma krouas Gwalarn, da 1944 ma rankas paouez gant embannadur ar ge-laouenn, en doa roet da Vreizh ar yezh hag al lennegezh he doa ezhomm evit tizhout ar par etrevoadal.

Met muioc'h c'hoazh en deus graet. Hon yezh eo

hon nerzh, setu pezh en deus desket dimp. Dre e oberennoù, zoken ar re savet en amveziadoù krisañ, Mari Vorgan da skouer, met ivez An Tri Boulomig kalon aour, hag e oberennoù all, en deus diogetet nerzh al lavar dieub, nerzh dreist al lavar dieubus na c'haller ket kabestrañ. Ha setu ma tigor dirazomp ur bed a frankiz.

N'omp nemet un dornad tud an noz-mañ ; n'eus ket kalz ac'hanomp, 'm eus aon, a c'hallo gwelout pezh a c'hoarvezo a-benn kant vloaz ... Hogen spi am eus, fiziañs am eus, e vo neuze meurdezusoc'h al lid, hag e vo gwir evit Roparz Hemon ar pezh a skrive eñ evit Kouc'houlin e Lazhadenn unmbab Aife :

"Ur bobl a-bezh az ambroug hag az heuilh".

UL LEVR KEMBRAEK EVIT AR VUGALE DIWAR-BENN BUHEZ HA BEAJ MARI JONES

E Kembre ez eus bet ur gerzhadeg arbennik evit lidañ daou gantved-ha-bloaz beaj vojennel Mari Jones betek ar Bala da brenañ ur Bibl kembraek ; embannet ez eus bet da geñver an darvoud-se ul levr evit bugale a gont he buhez. Evit prenañ ur skouerenn eus bibl kembraek William Morgan ez arboellas Mari Jones gwenneion e-pad c'hwec'h vloaz. Ne oa nemet pemzek vloaz pa gerzhas hec'h unan-penn betek ar 'Bala' - en hanternoz Kembre - e-lec'h edo klerdiñ metodistiz a-benn dont da c'houzout evit he brasañ kerse ne chome mui eno Bibl ebet da werzhañ. Goude klevout diwar-benn Mari e roas thomas Charles, blenier methodistiz, e skouerenn bersonel d'ar plac'hig yaouank hag e kontas an istor diwezhatoc'h e Lunden en un emvod. Da heul an emvod-se e voe diazezet "Kevredigezh ar Bibloù". Kengor ar Skol-Sul ha Kelemdurezh Kristen Kembre o deus aozet ar gerzhadeg-se - un tri-ugent kilometrad bale bennak - evit kounañ kur brudet ar gembreadez vihan, daou c'hant vloaz 'zo.

« AR PEZH A ZO MAT EVIT UN DEN N'HELL
KET BEZAÑ GRAET ER-MAEZ EUS AR PEZH
A ZO MAT EVIT AR GUMUNIEZH MAZ EO
STAG OUTI »

Kuzul ar Pab evit ar yoc'hstlenn



Kenskrivit !

Kelaouenn Emglev an Tiegezhioù, kevredet e Kuzul ar Brezhoneg, eo Imbourc'h. Talvezout a ra « Imbourc'h » kement ha « klask ». Klask ar wirionez agevret, gant ur spered a vignoniezh, doujus d'ar feiz kristen, hag e brezhoneg, setu aze hor pal.

250 lur (39 €, 39 \$) eo ar skodenn vloaz ordinal, a ro ar gwir da resev ar c'hannadig hag ar stagadennoù. Sevel ar ra da 100 lur evit ar re a garfe resev ar c'hannadig nemetken.

Ar skridoù, kemennoù, lizhiri ha skodennoù a zo holl da gas da :

Imbourc'h, Kergreven, 29800 Trelevenez

Pgz : 02 98 25 10 72 eat@libertysurf.fr

<http://perso.libertysurf.fr/kannadig>

Moulerezh prevez. Merour : T. Gwilhmod
ISSN : 1144 357X CPPAP : 50015. Ar pennadoù ne enouestlont nemet o aozerien. Diskleriet hervez lezenn.

DROUG...

**An arvesterezh
ouzh ar Mad
zo ar gwellañ remed
ouzh an Droug.**

**Kalz gwelloc'h eo
eget an arvesterezh
ouzh an Droug,
war zigarez heugñ outañ.**

P.K.

DIV SANTEZ NEVEZ A VREIZH

E-touez ar c'hant ugent merzher a zo bet lazhadeg e Bro-Sina er bloaz 1900 e kaver div leanez a Vreizh. En ur mision frañsezad edont : Anna-Frañseza Moreau, leanez Marie a Sant Just he anv relijiel, genidik eus Rodent (Rouans) e bro-Raez ha Janed-Mari Guerguin, leanez Mari Santez Natali, eus Plûned e-kichen Bear, bro-Dreger.

Kantvloaz war-lerc'h o merzherenti int bet lakaet war an aoterioù gant Yann-Baol II.

BRO-C'HALL VIHAN

War un daolenn c'hoari Damez a gant karrezenn, ne c'holloje poblañs Bro-C'hall nemet ur garrezenn. Unan diwar kant. Kemend-all e-barzh an Iliz.

SKOAZELL D'AR WASK E GALLEG

Ar « Journal Officiel » en deus nevez embannet an doare ma vo jedet ar skoazelloù-arc'hant d'ar c'hazetennoù pemdeziek n'o deus ket kalz a c'hounidoù diwar ar bruderezh a embannont en o fajennoù. « La Croix » ha « l'Humanité » a zo vont da resev 15 million a lurioù (50 % kresk evit an hini kentañ ha 120 % kresk evit an eil). Ha netra ebet evit ar c'hazetennoù pemdeziek na zeuont ket er-maez e galleg, evel ar gazetenn gatalanek « El Punt » da skouer.

E FRANÑS...

40 % eus ar vugale e Bro-C'hall a vez ganet gant tud dizi-mez (17 % en Alamagn, 8 % en Italia).

Torr dimeziñ a ra 40 % eus an dud a zimez hag 20 % eus an tiegezhioù a zo « adgraet ». 30 % eus an SDF n'o deus ket bet a vuhez-tiegezh en o bugaleaj.

AR YEZHOU KELTIEK EN EUROPA

Gouzout a ra an holl vrezhonegerion diwar-vremañ ez eus o skrivañ en hor yezh tud a bep bro, a-wechoù japaniz, evel unan a voe anavezet d'ur mare er bloavezhioù '70 dreist-holl. Abaoe he deus ar rusianez yaouank Anna Mouranova gounezet un tamm brud o sevel troidigezhioù diwar ar rusianeg end-eeun en hor yezh, hep kontañ kontadennoù ha danevelloù hir, m'hon eus bet tro da rentañ kont anezho e-barzh « Imbourc'h kelaouenn a studi ».

Ar c'hembraeg e-unan a zo anavezet mat e Polonia (marteze dre maz eus bet poloniz oc'h en em staliañ e Kembre e-pad ar brezel diwezhañ) ; kelenn a reer ar c'hembraeg ha studiañ a reer al lennegezh kembraek e meur a skol-veur eus ar vro-se, e Lublin peurgent.

Hogen piv a oar en deus ar c'hernaoueg gounezet un tamm brud e Tchekia ? Un dchekiadez yaouank desket ganti ar c'hernaoueg a embann bep an amzer kontadennoù eus he bro e-barzh An Gannas e Kernaoueg.